

Belieion Vreizh

Gwengolo 1971

Strollad Beleion Vreizh a zo bet savet evit difenn gwirioù ar Vretoned. Degaset eo hor Strollad da gemer un emzalc'h resis da heul un afer a zo ur skouer eus gwaskerezh ar Stad C'hall war Vreizh.

Pep hini a oar ez eo gwasket al labour-douar e Breizh en un doare kempennet a-ratozh-kaer evit se : ar Stad C'hall, dre he c'har-gidi hag o c'henlabourerion evel ar S.B.A.F.E.R., eo a zo o tistrujañ hag o rivinañ al labour-douar-se.

An afer mantrus a lakaomp war-wel hiziv n'eo nemet ur skouer eus an argerzh-distrujañ. Un tiegezh kouerion vihan vrezhon eus Cornillé, e korn-bro Roazhon, ar re Souvestre, a zo da vezañ skarzhet en deizioù-mañ, goude un heuliad hir a heskinadurioù a-enep lezenn a zisoc'h bremañ da lakaat ar seziz war o zi-feurm.

D'ur mare o deus enebet ar re Souvestre ouzh mennadoù renerion al Labour-Douar en Il-ha-Gwilun. Ar renerion-mañ o deus dibabet kas da benn raktresoù ar Stad C'hall e Breizh, da lavarout eo diskar an atantoù bihan evit mad un nebeut aotrounez.

Adalek m'o deus ar re Souvestre, a oa d'ar c'houlz-se e touez ar renerion Labour-Douar, nac'het skoazellañ ar raktresoù-se, eo kroget ar Stad C'hall hag e vevelion d'o heskinañ dibaouez. Savet e oa bet an atant gant an tiegezh Souvestre e-unan, ha daoust d'o labour diehan evit derc'hel war sav an ti-feurm ez eo tennet diganto bremañ, ha kement-mañ gant skoazell an aozadurioù meradurel.

Gouzout a reomp avat ne c'hell ket un den stourm e-unan penn ouzh heskinerezh ar Stad C'hall hag he mevelion, setu perak, evel beleion Vreizh, e tivizomp skoazellañ ar re Souvestre en ur vrudañ an afer-mañ hag en ur stourm a-gevret ganto, gant ar sindikalourion, gant beleion ar c'horn-bro hag an amezeion, evit mirout outo da vezañ skarzhet.

Strollad Beleion Vreizh.

" EMGLEO BELEIEN VREIZH "

Cher confrère,

Une extraordinaire solidarité avec les prisonniers du FLB, dont le jugement va commencer le 3 octobre à la Cour de Sécurité de L'Etat, se manifeste à travers le pays par la création de nombreux et ardents " groupes de solidarité".

Ce jugement, tel que les avocats le préparent et par les témoignages de témoins très nombreux et de grand poids, sera en fait le procès de la situation sociale en Bretagne, du manque d'emplois, du sous-équipement, des salaires insuffisants, de l'inadaptation scolaire, de l'émigration forcée.

Or jusqu'ici, il ne semble qu'aucun groupe chrétien ou aucune personnalité chrétienne (en tant que chrétien) ait affirmé publiquement la solidarité de l'Eglise avec ceux qui souffrent et sont victimes de ces injustices sociales, germes de haine.

Nous ne vous proposons évidemment pas d'approuver la pensée ni l'action des prisonniers du FLB (Ce n'est pas non plus l'intention des groupes de solidarité) Mais seulement de prier publiquement pour

||| la PAIX SOCIALE en Bretagne
||| par la JUSTICE économique, sociale et
culturelle en récitant à la prière universelle, le 2ème dimanche d'octobre, le texte suivant ou tout autre que vous jugerez plus adapté.

" Pour que les prisonniers Bretons qui passent en jugement ces jours-ci soient jugés avec équité;
Pour que chacun de nous se consacre à faire régner en tout la justice condition de la paix sociale;
Pour que les responsables chrétiens, par la création d'emplois et les justes salaires, mettent fin à l'émigration forcée à laquelle les jeunes Bretons sont condamnés,

Prions le Seigneur.... "

Avec nos remerciements, veuillez agréer, cher confrère, nos salutations fraternelles.

" EMGLEO BELEIEN VREIZH "

BELEION BREIZH

da . . . *Arzhur*

Kenvreur ha keneil mat,

Pedet oc'h da zont d'un EMVOD LEDAN a vo graet é KISTINID (Bro-Gwened) er porzh-person, d'al LUN 11 a viz KERZU, evit beleion brogarourion eus ar 5 departamant.

Pal en emvod :

- a) ober anaoudegezh kenetrezomp ;
- b) kaout keloù war dachenn : an Iliz ha Breizh ;
- c) studiañ ar gudenn : Ar GRISTENION E BREIZH HAG AN EMSAV.
Setu amañ da heul un destenn savet gant re yaouank Breuriezh Sant-Erwan, a c'hellimp studiañ ha burutellañ.
- d) ha marteze, divizout ober emvodoù all, div pe teir gwech ar bloaz (deveziou-studi, retredoù hag all...)

Roll an eurioù :

- 11 eur : PEDENN ha BODADENN gentañ.
- 12 eur 30 : MERENN (skañv ha berr) ; kendivizoù ;
- 14 eur : Eilved BODADENN - PEDENN ;
- 16 eur : DISPARTI.

Evit ar pred, bezit ar vadelezh da skrivañ da : M. BLANCHARD
pe da bellgomz : 121 QUISTINIC. Person KISTINID
56310 Bubry

Beleion Breizh

DISKLERIADUR : AR GRISTENION E BREIZH HAG EN EMZAV

1. Dirak an enkadennoù hag an darvoudoù en em gav enno ar boblañs e Breizh, ar Gristenion, hag a zo kenlodek anezhi, a dle resisaat penaos ha perak e kemeront perzh en Istor, en un doare oberiat pe c'houzañvat ; ret eo dezho ivez diskleriañ pehini eo kretegezh ha kelennadurezh an Iliz er stourmoù a ren ar stolloù liesseurt evit difenn o buhez-den. Rak hor Feiz n'hon distag ket diouzh emgannoù ar bed-mañ, peogwir Rouantelezh Doue a zo da vezañ ragaozet adalek an douar-mañ dre hol labour sevel, unaniñ, diorren hag urzhiañ.

Gouzañ : a ra ar boblañs e Breizh ur gwaskerezh trevadennel, war dachenn an armerh, ar vuhez kevredigezhel, sevenadurel, ha politikel. Alese, an arallekadur, an isdiorreadur, an dilabour, an divroañ. Alese ivez an harzoù-labour, an dibunadegoù, an tarzhadennoù. Ar boblañs a vez renet en un doare direizh, hep ma c'hellfe bezañ selaouet gant ar mererezh hag ar galloud. Rediet e vez eta da implijout ar gwallnerzh evit en em zifenn.

Labour ar Gristenion a zo stourm a-gevred gant ar stourmerion all evit adreiñ d'ar bobl emskiant a-walc'h evit bezañ a nevez atebek eus hec'h istor ; rak reizh eo hervez ar gwir naturel hag ar sklerijenn a gavomp dre Jezuz-Krist, e c'hellfe pep pobl bezañ mestr war he dazont, evit ma kreskfe Rouantelezh Doue a-gevret gant diorreadur ar riezoù hep en em veskañ gantañ.

2. Prederiet en em gavomp avat o welout muioc'h-mui ar re a lavar komz hag oberiañ en anv an Iliz e Breizh, o reiñ d'an dud kelennadurezh ha skouerioù a zo pell-tre diouzh ar pezh a dlefe bezañ graet evit enframmañ ar Feiz kristen e gwir vuhez ar vro. Dihenchadur an Iliz a rankomp tamall peogwir en abeg d'he emzalc'h ne vez ken an Iliz o henchañ an dud davit o silvidigezh klok. Ne vez neuze nag avielet e gwirionez, na sevenet ar gefridi gristen : bezañ Breizhiz gant Breizhiz.

51.06.21.

3. Ar pezh a zo en hor c'harg evel kristonion e Breizh ne deo ket ren ur stourm politikel na kevredigezhel na sevenadurel dimp-ni hon-unan, rak n'eus ket ur "politikerezh kristen" a c'hellfe bezañ tennet diwar an Aviel. Met en abeg d'hor Feiz hag hor broud da vezañ stourmerion gant ar re a stourm, hon eus ur sklerijenn hag ur skoazell dibar da ginnig d'ar re a gemer preder gant dazont ar vro, ha gant hini an denelezh o klask hec'h unaniezh er peoc'h dre ar reizhded.

Peogwir ne c'hellomp ket bevañ ur wir vuhez a Feiz er maez eus an darvoudoù a bouez war choug ar bobl arallekaet maz omp izili anezhi, ne c'hell hon emzalc'h nag hon obererezh dianavezout abegoù an enkadennoù douarel ha speredel ma vev ar bobl enno. Anez da se e vefe diwirion hor Feiz dre ma vefe distag diouzh ar gwirvoud istorel.

4. Peogwir e kredomp e tle ar Grouadelezh a-bezh bezañ salvet, ha peogwir e klaskomp chom sentus ouzh lusk ar Spered Santel ennom, kenteliet ouzhpenn gant kelennadurezh an Iliz hollvedel, e tiskleriomp ez omp mennet da sevel gant an holl Vrezhoned a youl vat ur gevredigezh dizarallekaet, emren ha digor, doujus ouzh personelezh pep hini, atebek eus he dazont, hag e kenlabour gant ar pobloù all. Kement-se a dalvez evidomp seveniñ ar gwir a zo anzavet d'an holl gumuniezhoù gant ar gwir naturel hag an ensavadurioù etre-vroadel, d'en em ren o-unan, ha d'en em ziorren eus an diabarzh, hap ma teufe ar c'humuniezhoù all da waskañ warno.

5. Ur vuhez kristen gwirion hon eus da adsevel e Breizh, en doare ma c'hello an holl Vrezhoned, hag an emsaverion pergen, adkavout en o feiz un nerzh-krouiñ hag ur goanag evit o labour douarel. Setu perak ez omp mennet da sevel, da astenn ha da greñvaat ur greizenn vreizhat a vuhez kristen emskiantek, liammet ouzh lusk ha kerzhadeg an Iliz hollvedel.

Bez e vo anezhi ur greizenn avielel, evit pediñ, studiañ, ha labourat, hag a vo war un dro e servij ar bobl ez eo hon dever servijañ, hag e servij ar bed, dre ar frouezh a glasko degas da Rouantelezh Doue.

BREURIEZH SANT ERWAN.

DEVEZHIOU-STUDI BULAT.
2 aviz Gwengolo 1972.

An destenn-mañ a zo bet savet gant paotred ha merc'hed yaouank Breuriezh Sant Erwan epad kamp studi Bulat (Bro-Dreger) d'ar 1añ ha d'an 2 a viz Gwengolo 1972.

He fal a zo klask termeniñ war beseurt pazenn ha war du peseurt pal, gant peseurt abegoù, e labour ar Gristenion en Emsav Brezhon, ha peseurt kenlabour a c'hellont hag a dleont kas war-raok gant ar re na gemeront ket perzh en o feiz kristen.

Klask a ra an destenn ivez displegañ pchini eo karg an Iliz, e kenver ar Gristenion hag an holl dud a zo o klask ar wirionez e Breizh, har ar mennad a zo gant yaouankizoù Breuriezh Sant Erwan da sevel en o bro ur wir vuhez kristen stag ouzh ar strivoù a-vremañ hag ouzh lusk an Iliz hollvedel.

Tu a zo da wellaat an destenn-mañ, ha n'hon eus ket anezhi un diskleriadur a feiz mat evit an holl vroù hag an holl amzerioù. N'eo bet graet nemet evit klask sklerijennañ ar gristenion hag an holl dud a youl vat, war abegoù ha doareoù hor stourm breizhat e-keñver Rouantelezh Doue a zo oc'h en em astenn, gwelus ha diwelus, adalek emdroadur ar bed-mañ.

(Notenn gant Yann TALBOT)

Kenvreur ker,

plijet on bet an deiz all gant ar pezh a zo bet displeget e Pederneg. D'am soñj eo ret adsevel en un doare efedusoc'h ar gevredigezh "Beleion Vreizh".

Mont a ra an Emsav war-raok e Breizh en un doare souezhus abaoe ur pennad amzer. Ur bern tud a zo bremañ o labourat en un doare youlek hag emskiantek evit adsevel ar vro. E penn an Emsav ~~hac~~ e kaver un toullad ~~or c'h~~ ~~adsevel~~ ^{herve} tud speredek o deus evel-just diaesterioù bras evit meizañ o stourm ~~ad~~ kristen. Ar pezh a zo ankenius eo gwelout pegen gwan e chom striv ar veleion er mare-mañ. Ma ne zeuomp ket a-benn da labourat, ha zoken da genlabourat en un doare efedusoc'h e vo savet a-benn ar fin e Breizh un doare sevenadur na vo ~~ad~~ awenet tamm ebet gant ar gristeniezh.

Gouzout a ouzon peseurt labour ramzel a zo dirazomp, met ne c'hellomp ket kilañ dirak hor c'hefredi. Ni hon eus un dra bennak da zegas d'an Emsav e Breizh, met n'eo ket anat deomp petra, evit ~~ad~~ ar mare d'an nebeutañ, nag ivez penaos e vo tu deomp da emellout en istor ar Vro.

~~Ar pezh a zo ankenius eo gwelout pegen gwan e chom striv ar veleion er mare-mañ. Ma ne zeuomp ket a-benn da labourat, ha zoken da genlabourat en un doare efedusoc'h e vo savet a-benn ar fin e Breizh un doare sevenadur na vo awenet tamm ebet gant ar gristeniezh.~~

Daou rummad skoiloù a gavomp dirazomp :

1°) Hon dianaoudegezh eus an Emsav da gentañ. Moarvat ez omp brezhoned, hogen alies brezhoned dizesk diwar-benn istor gwirion hor bro, diwar-benn istor ar brezhoneg hag al lennegezh vrezhon arnevez, ha zoken, en un doare grevusoc'h marteze eus an hengoun keltiek.

Pet ac'hanomp ouzhpenn-se a zo gouest da lenn kement tra a vez skrivet bremañ e brezhoneg, da ziluzhiañ ar c'hadannoù speredel ha meizel a vez pleustret warno?

2°) Ouzhpenn-se emañ an Iliz en ur prantas diaes en hon bro, evel e meur a vro all, siwazh. Amañ ivez ez omp gwan, peogwir abaoe kantvedoù n'hon eus ket bet e Breizh ar renerion speredel hor boa ezhomm. A-walc'h e vo din degas ur skouer : Pet skolveur kristen a zo e Breizh, p'emañ ar ouiziegezh e kreñskiñ en un doare anat e-touez ar yaouankizoù? Goulonderet eo an deskadurezh kristen e Breizh. Re hir e vefe amañ displegañ an abegoù, met un dra grevus-tre a zo aze, ha ret mat e vo deomp arbenniñ ouzh an devoud-se. An diskoulm ne vo ket evel-just blejal evit ma vo roet deskadurezh deomp, met labourat a-lazh-korf evit adperc'h-ennañ gouiziegezh an Iliz.

3°) D'an trede hor da glask penaos emellout en istor Breizh pe en istor an Emsav. Amañ ivez hon eus c'hoazh pep tra da zeskiñ. N'eus abeg ebet na zeufemp ket a-benn da gemer un emzalc'h oberiant er c'heñver-se

Ar 15 a viz Kerzu 1975

Kenvreur ker,

un emvod a vo dalc'het al Lun 29 a viz Kerzu 1975
e Presbital Duod, evit ar veleion vrezhon.

Setu roll an devezh :

- 10h00 Engav e Presbital Duod, e-kichen Kallag.
10h15 ~~Marc'h~~ ^{Marsel} BLANCHARD : Petra eo Beleion Vreizh. Petra a
zo bet graet betevremañ. Petra a zo tu da ober.
11h15 Oferenn vrezhonek en iliz : Degasit ganeoc'h ur gamz,
ur staol, hag all ... evit kenoferennañ.
12h00 Pred a-gevret : Priz : 20,00 F.
14h00 Displeget e vo aviel ar sul da zont.
Deskiñ kanoù evit al lidoù sakr.
15h00 Divizoù evit an amzer da zont.

Kement-mañ a zo ur bedadenn bersonel evidoc'h hoc'h-unan.
Ma 'z anavezit beleion all a vefe dedennet gant an devezh-mañ,
kasit kelou en araok da Arzhur AR BARZH.

Gant hor gwellañ gourc'hemennañ kalonek.

Beleion Vreizh.

Emvod Deleion Vreizh, al Lun 29 a viz Kerzu 1975, e Duod.

An Aotrou

- a zeuio d'an emvod.
- ne c'hell ket dont d'an emvod.

Respont da gas ar c'hentañ gwellañ da :

Arzhur AR BARZH
Le Presbytère
DUAULT
22310 C A L L A C.

Ar 15 a viz Kerzu 1975

Kenvreur ker,

un emvod a vo dalc'het al Lun 29 a viz Kerzu 1975
e Presbital Duod, evit ar veleion vrezhon.

Setu roll an devezh :

- 10h00 Emgav e Presbital Duod, e-kichen Kallag.
- 10h15 Charles BLANCHARD : Petra eo Beleion Vreizh. Petra a zo bet graet betevremañ. Petra a zo tu da ober.
- 11h15 Oferenn vrezhonek en iliz : Degasit ganeoc'h ur gamz, ur staol, hag all ... evit kenoferennañ.
- 12h00 Pred a-gevret : Priz : 20,00 F.
- 14h00 Displeget e vo aviel ar sul da zont.
Deskiñ kanoù evit al lidoù sakr.
- 15h00 Divizoù evit an amzer da zont.

Kement-mañ a zo ur bedadenn bersonel evidoc'h hoc'h-unan.
Ma 'z anavezit beleion all a vefe dedennet gant an devezh-mañ,
kasit kelou en araok da Arzhur AR BARZH.

Gant hor gwellañ gourc'hemenoù kalonek.

Beleion Vreizh.

Emvod Deleion Vreizh, al Lun 29 a viz Kerzu 1975, e Duod.

An Aotrou

- a zeuio d'an emvod.
- ne c'hell ket dont d'an emvod.

Respont da gas ar c'hentañ gwellañ da :

Arzhur AR BARZH
Le Presbytère
DUAULT
22310 C A L L A C.

29-12-75

e Duod



Petra eo Belegion Vreizh. M. Blanchard.

Derezhioù Muz - Kerseet, 1973.

Beleg ha breizhad.

- Hag-eñ e vo belegion Vreizh a-berm eo vlsaz?

Eskibien Bro-c'hall e ven dirizet ez eo echn

an velegiezh Kozh.

lakaat laiked, finvezin ar velegion. ^{Flozh}

diarezant an Iliz da zont war gumuniezhia

Se a zo dirizet gant al loden masant eus an

eskibien (Horizon 85).

cf. sekretour an eskibien.

an diram e Bro-c'hall, war-du ez eomp.

Paolvi - hagoude?

Danvoude bras er bed?

Dipitus gwelout an tu Kleiz o ven e Breizh.

Koller. Ne vo ket belegion en un bobl n'es ket
mager e-Keniver a feiz.

Fl. Petra Kemunan e lreber a velegion?

Ni Kesterion a zo echn gamimp ar viber-

Re vras an eskoptioù - Hag eber eris

a relijvon hag an danvez.

Breuziezhon belegion a zo o sevel a bep tu.

lizher ar Ao. Bowdelle.

- Petra ober en dazout.

Da Jarl Blanchard

Souezhet ou bet evelato gant men a dro
bo'k eus lavant an deiz all e Peberneg

10.) An Iliz a zo o Kouezhan, ha ne
gout ken ... Ne vo ket eskoptiañ ...

N'eo ket va soñj tamm ebet. Anat eo
din emañ an Iliz oc'h adkemer he larig
er bed a-vremañ, oc'h adwelout he
doareoù da arvelañ an pobloù, o
vuntellañ he gwanderioù haq o tibradan-
dionzh an euzal'ik gouzavvat a zo
bet he'k hini die vras abare an
Dispac'h gall.

20.) N'eo ket sklaer ho menozioù a-zivout
Sevenademoù an Eusav abare deou
e c'hantred. Un Eusav gwirion a zo
e Breizh, plijet pe get, ha n'hou eus
abeg ebet da lakaat an Eusav-se
en arvan : Da skouer ar Skitir urvan.

Kudennoù an hengoun Kristen :

Penaos e c'hellit lavarout ez oc'h
hengounedour, ha lavarout war-un dro
n'ho'k eus netra da ~~se~~ welout ~~gant an~~
Iliz Roma ?

1°) Petra eo Beleion Vreizh ? Kement-mañ a zo bet displeget da gentañ gant an Aotrou Marsel Blanchard, Person Kistinid. Bodet e oa bet e 1975 un toullad beleion e Mur, e-pad un devezh, evit komz eus kudennoù ar vro. Divizet e oa bet ivez kenderc'hel gant an emvodoù-se, met ur gerseenn eo bet gwelout n'eus bet graet netra goude-se.

Ankeniet e vezer gant dazont ar velegiezh e Breizh. Petra a vo a-benn ugent vloaz ac'hann? Hag-eñ e vo beleion c'hoazh e Breizh, ha beleion troet gant ar vro.

Dre vras o deus divizet al lodenn vrasañ eus an eskibion e Bro-C'hall ez eo echu gant ar velegiezh kozh hon eus anavezet, daoust ma ne vez ket embannet kement-se en un doare sklaer a-walc'h bepred. Evit-se e klasker diskar doareoù-bevañ ar veleion e-keñver arc'hant; klask a reer sevel kumuniezhoù diazez na vint ket harpet war ar parrezioù, met war al laiked. Aes e vo neuze urzhiañ pe belegañ al laiked-se dibabet gant strolladoù bihan hag o lakaat tamm ha tamm da gemer plas ar veleion gozh. Al laiked-se a vo dimezet a-raok bezañ beleget, hag evel-se hor bo beleion dimezet ha netra ken. Tamm ha tamm ivez e c'hell ar c'hudennoù arc'hant bezañ diskoulmet gant ar stad, hag evel-se e vo an iliz e Bro-C'hall penn da benn dindan ar stad. Gwelout ar skrid embannet gant eskopti Sant-Brieg : "Horizon 85"

N'ouzer ket ~~pev~~^{o ren} a vo ~~goude~~^{o ren} an Iliz goude marv Paol VI. Moarvat e vo diaesterioù bras en Iliz, met ivez dre ar bed a-bezh.

E Breizh ez eo dipitus gwelout an tu kleiz o ren pe o klask ren pep tra.

Evel-just e vo ret kemañ meur a dra e buhez ar veleion, met n'eo ket er velegiezh. Un dra da skouer ne c'hell ken padout : doare-bevañ ar veleion a zo ret dezho bezañ atav o kestal. Ouzhpenn-se ez eo re vras an eskoptioù e Breizh evit gellout kaout darempredoù aes gant an eskibion. Ar veleion n'o deus harp danvezel ebet na harp

KENVREURIEZH SAINT ERWAN.

BELIEN BREIZH.

Yann Talbot. Presbital. 22 110 Rostren.

6.8.87.

Kenvroad ha Kenvreur mat,

D'ar Sul 31 a viz Mae 87 ez ae da Anaon Marc'harid Gourlaouen e Douarnenez. E-pad 50 bloaz e oa bet **keleñnerez** an aozadur ken pouezus : SKOL OBER.

A-hed he buhez he deus labourer ha stourmet evit ar brezhoneg, yezh he buhez.

En he zestamañt he doa goulennet evit hec'h obidoù un oferenn e brezhoneg hag e latin.

D'ar vaouez-se avat, zo bet gellet nac'h he goulenn diwezhañ - hi ha na c'houlenne morse netra - nac'het un oferenn e yezh he buhez en iliz he badeziant" (Al Alamm, nenn 242-243 p 230).

Enzalc'h person Douarnenez o nac'h un oferenn-gañv e brezhoneg evit M. Gourlaouen a ya a-enep da wirioù Mab-den, ha da wirioù ar c'hristen en Iliz.

A-enep-krenn eo da gelennadurezh an Iliz hag ar Pab Yann-Baol II diwar-benn gwirioù Mab-den ha gwirioù ar sevenadurioù en arvar, ar minorelezhioù broadel.

A-bouez-bras eo dimp enebif ouzh seurt oberoù direizh. Ma ne reomp netra e vo gellet aes-kaer ha muioc'h-mui e Breizh kenderc'hel da nac'hañ hor gwirioù ha da lazhañ hor sevenadur gant ar veleien o-unan !.

Goulenn a ran ouzh an holl veleien o deus doujañs ouzh gwirioù Mab-den, doujañs evit kelennadurezh an Iliz hag hon Pab a-vremañ Yann-Baol II, sinañ ha lakaat da sinañ ar glemmadeg-mañ, hag he c'has da berson Douarnenez, hag an doubl da Eskob Kemper.

War-un-dro e kinnigan d'ar veleien a gar o bro adsevel ur seurt kenvreuriezh etrezomp evit en em harpañ ha difenn ar Vretoned hag ar vrezhonegerien en Iliz e Breizh.

A greiz kalon.

Yann Talbot.

NAC'HEG GWIRIOU MAB-DEN E DOUARNENEZ : UR VEZH !

D'ar Sul 31 a viz Mae 87 e varve e Douarnenez, ho farrez c'honidik, an Dinezell Marc'harid Gourlaouen, oadet a 85 bloaz.

E-pad tost da 50 vloaz e oa bet oc'h ober war-dro "SKOL OBER", o lakaat he c'halon hag e holl nerzh o kelenn brezhoneg. A-hed he buhez he deus labourer sioul evit hor yezh, yezh he buhez, hag evit hor Bro-Vreizh.

Roet he deus tu da vilieroù a vrezhoneg da addeksiañ yezh o bro, a zo bet lenet diganto gant ar stad c'hall a glask nougañ hor sevenadur abaoe kantvedoù.

An holl ensaverien o devoa kalz a zoujafs eviti, evit al labour dreist kaset da benn ganti. Graet e veze anezhi gant nignoniezh ha grad-vat : "Santez Marc'harid ar Brezhoneg" !

Bez e oa ivez ezel eus Trede Urzh Sant Frañsez, ha renet he devoa ur vuhez a feiz, a zeolieg, alies er baourentez danvezel, gant a bep seurt diaesterioù.

En he zestamant he devoa goulennet ma vefe lidet eviti un oferenn interamant e brezhoneg hag e latin (hervez reoliadurioù Sened Nour Vatikan II), en hec'h iliz parrez, hini he badeziañt.

" D'ar vaouez-se avat, zo bet gallet nac'h he goulenn diwezhañ - hi ha na c'houlenne nourse netra - nac'het un oferenn o yezh he buhez en iliz he badeziañt" ! (Al Liamm, nenn 242-243, p 230). "

D'an 2 a viz Mezheven 87 e voe douaret e Douarnenez (eskopti Kemper). Daoust d'he goulenn sklaer ha reizh, hag hini he zud-nes, en o zouez Per DENEZ, kelennar war ar brezhoneg e skol-veur Roazhon ha kadoriad "Kuzul ar Brezhoneg", eo bet nac'het gant person Douarnenez lidañ un oferenn e brezhoneg hag e latin evit renoz hec'h ene. Eñ e-unan en deus divizet lidañ an ofis o galleg, enep youl diwezhañ an hini varo, gant un nebeur lodennoù hepken e brezhoneg (al lennadenn gentañ, diskan pedenn ar fideled, ur c'hantik) hag un tamm latin.

Er vered ivez en deus lavaret ar pedennoù e galleg, daoust da volonteaz an hini varo hag he zud-nes.

Enalc'h person Douarnenez, o nac'h lidañ un oferenn-gañv e brezhoneg a ya a-enep groñs da wirioù Mab-den evel n'int bet enbannet gant an disklariadurioù etrevroadel, hag ivez a-enep da wirioù ar c'hristen en Iliz. Seurt doareoù-ober a zo kontrol ouzh kelennadurezh an Iliz ha peurgetket hini ar Pap Yann Baol II war wirioù Mab-den, gwirioù ar pobloù, gwirioù ar sevenadurioù, ar yezhoù, ar broadoù.

O tivizout evel-se e-unan da lidañ un oferenn e galleg evit un ensaverer he deus gouestlet he buhez a-bezh da zifenn ar brezhoneg en deus graet ur gaou hag un disnegañs bras dezhi ha d'an holl Vretoned. So a oa koulz hag ober goap ouzh an hini varo, disprizout al labour he doa graet, ha, ledanoc'h c'hoazh, ober fae war dalvoudegezh buhez Mab-den. Den ebet, dezhañ un tamm istin evit ar re a ouestl o byhez d'ur stourm reizh, ne c'hell gouzpañv e ve disprizet ken gwazh ster ur vuhez.

An disnegañs-se graet dezhi a gouezh ivez war he zud-nes ha war an holl vrezhonegerien.

Person Douarnenez, o nac'h doujañ da youl diwezhañ an Dinezell Gourlaouen. a ro ur skouer splann eus an dispriz a vez taolet war ar vrezhonegerien. Nac'het o gwirioù dezho, nouget o sevenadur, brevet o yezh. Ne vez ket dalc'het kont anezho, n'int nemet disterachoù. Peogwir n'o deus ket galloud bras, peogwir ne c'hellont ket sevel uhel o nouezh, ne vez ket taolet pled outo. Daoust hag e vije neuze skarzhet da vat o yezh eus an Iliz e Breizh ? Daoust hag e vefe hor yezh "eskuunuet" e Douarnenez ?

KELC'HLIZHER Nenn 3.

Kenvreur nat,

Kenvreuriezh Sant Erwan - Beleien Breizh - a zo bet savot e presbital Rostren, d'an 18 a viz Here 1987. 8 beleg o dous en en votet en deiz-se, ha divizet o deus dinzeññ ar genvreuriezh evit nat.

Setu anañ roll ar berzhidi gentañ :

- A6 G. Dubourg, person Bulien.
- Ao F. Tonaz , perzon Mael-Karaez.
- Ao A. Breton, person Gwanac'h.
- Ao J. Lec'hvien, person Kergrist-Moelou.
- Ao. Y. Ar Sant, person an Treou.
- Ao. A. Piriou, bet kelenner e skolaj Kanpostal.
- Ao. Y. Talbot, kure Rostren.
- Ao. M. Derrien, person Boulviag.

Beleien all o devoa goulennet o digarozññ. A-du enaint ivez evit kemer perzh en aozadur, hervez o galloud :

- Ao. P. Ar Gall, Ti retred ar C'harnel e Sant Brieg.
- Ao. Pabic, aluzenner e Pondi.
- Tad Medard Dournap, kabusin, e Sant Laorañs.
- Ao. M. Ar C'hollo, Ti-retred Keraouren e Brest.
- Ao. J. Peron, person Pont Melvez.
- Ao. Y. Motreff, person Groñvel.
- Ao. P. Bourdelles, Ti-retred Gwareg.

Digor eo ar genvreuriezh d'an holl veleien war o goulenn. Ne vo nemet kas ur ger pe bellgonz d'ar sekretour-da-c'hortoz, Yann Talbot.

Goude bezañ goulennet warnomp sklerijenn ar Spored santel en ur ganañ ar Veni Creator, ez eus bet kaset war-raok al labour-mañ :

Studiet eo bet ar reoliadur diazez ha kavet eo bet nat. Un nebout kennadurioù a zo bet graet enni. Anañ d'heul e kavet ar skrid adkempennet, hag a dalvezo evit nat.

Konzet ez eus bet diwar-benn afer Marc'harid Gourlaouen. An embregerezh-se evit difenn gwirioù ar gristenien en Iliz a zle bezañ kondalc'het.

Divizet ez eus bet bodañ an holl veleien a zo a-du gant ar reoliadur, d'al Lun 16 a viz Du e presbital Bulien da 10 eur. Pedet eur da gas keloù da berson Bulien, an A6 G. Dubourg, a-raok an 12 a viz Du, rak merennañ a rainp a-gevret (Pellgonz : 96. 37.64.37.) En envod-se e vo votet evit envel ur priol hag un is-priol evel n'eo merket er reoliadur.

Studiet e vo en deiz-se kudenn al levr oferenn e brezhoneg. Klasket e vo sevel unan moulet, berr ha sklaer, evit ar fidoled, an abretañ 'r gwellañ, gant testennoù klok an oferenn ordinal, un dibab kantikoù, kanennoù ha salnoù.

Goude se e lakainp war ar stern Kudenn ar c'han ol lidorezh brezhonek, kudenn al levrig katekiz da sevel evit ar vugale brezhonegerien, (eus skolioù Diwan hag all). Studiet e vo ivez penaos astenn niver an oferenoù e brezhoneg.

War ar stern e vo lakaet ivez goude al levrig evit an obidoù, hag unan evit ar badeziantoù.

Echuet eo bet an envod gant Gousperoù ar Sul.

A greiz kalon evit Doue hag ar bobl. Yann Talbot.

FOLENN RESPONT.

ANO : Ragano :
chonlec'h :

a genero perzh e bodadeg Bulien d'an 18 a viz DU.	YA.	MAÑH.
a genero perzh er pred.	YA.	MAÑH.
ne genero ket perzh er vodadeg, net c'hoant en deus bezañ esel eus ar genvreuriezh.	YA.	MAÑH.
ha rosev ar c'helc'hliheroù		

Kas ar respontoù da berson Bulien, G. Dubourg, pe da Yann Talbot

REOLIADUR.

1. Kenvreuriezh Sant Erwan a stroll ar veleien a gar ar Vrezhoneg hag ar brezhoneg.
2. Ober a ra ar genvreuriezh gant ar brezhoneg en he labourioù hag en hec'h envodoù.
3. He falioù a zo :
 - astenn etrezomp ur vuhez speredel e brezhoneg.
 - studiañ ar c'hudennoù a sav diwar-hol labour e Breizh.
 - sevel oberennoù e brezhoneg evit nad ar bobl kristen.
 - lakaat kenlabour etre ar veleien a bell dezho difenn gwirioù ar vrezhonegerien ha gwirioù Nab-den.
4. Ar bodadegoù a vez dalc'het ur wech ar niz e parrez-nañ parrez.
5. Anvet e vez gant an holl izili ur priol hag un is-priol evit ober war-dro ar genvreuriezh e-pad daou vloaz.
6. Pep ezel a bae ur skodenn vloaziek evit plaenat buhez danvezel ar genvreuriezh.
7. Diwar eo ar genvreuriezh, war o goulemm, d'an holl veleien, gant na asantont d'ar reoliadur.
8. Aketus eo ar genvreuriezh da heuliañ pizh kolonnañ arzh an Iliz katolik, ha peurgetket hini ar Pab.
9. Beleien divrezhoneg 'a c'hell bezañ kenlodek er genvreuriezh hep bezañ izili wirion.
10. Kenlabouret e vez gant leoned, leanezed ha laiked, diouzh na vez ezhomm evit nad an dud.

Reoliadur degeneret e Rostren d'an 18 a viz Here 87.

Kenvreudus vat,

Konzet en boa deoc'h en c'helic'hlizher diwezhañ eus ur vodadeg evit ar veleien a gar ar brezhoneg ha sevenadur ar vro.

Ezhonn ez eus, a soñj din, muioc'h-nui eus un aozadur gwirion evit ar veleien a fell dezho labourat evit nad speredel ha danvezel ar Vrotoned. Muioc'h-nui omp beuzet gant nor ar galleg ha gant ar nenoziou a zeu eus Bro-c'hall evit pezh a sell ouzh ar Feiz hag an Iliz. Darn eus an doareoù-soñjal hag eus an doareoù-ober-se he glotont ket gant ar pezh a zo d'ober e Breizh evit adsevel ar vro ha derc'hel bev ar spered kristen.

Ouzhpenn-se, beleien 'zo e Breizh a ra ul labour kontrol ouzh ar pezh a zo goulennet gant an Iliz hollvedel hag ar Pab. Labour distruj a-wechoù, o nac'hañ gwirioù Mab-den ha gwirioù ar vrezhonegerien.

Ha n'eo ket poent bras dimp neuze sevel hor nouezh, prouiñ hon eus nerzh ni-ivez, ha diskouez n'omp ket prest da asantiñ e vo disloberet kelenadurezh Hor Salver ?.

En tu all da se c'hoazh, ez eus kalz labour da ober e Breizh evit reiñ d'ar Vrotoned nagadur spered en o yezh.

- Pet oferenn a vez lavaret e brezhoneg e Breizh ?
perak ne reomp ket muioc'h ?
petra a vank dimp ? (levrioù, testennoù, kantikoù nevez ?)
petra a vije eta ret enbann an abretañ 'r gwellañ ?
- petra a reomp evit an nevez-vrezhonegerien ? Kalz anezho o deus troet kein ouzh an Iliz peogwir e soñj dezho int bet dilezet.
- petra a reomp evit ar c'hatekiz ? Ha tu a vefe da gatekizañ bugale'zo e brezhoneg ? Peseurt levr implij neuze ? Pe sevel unan nevez ?
- piv a ra euredoù, interanantoù, badeziantoù, hag all, e brezhoneg ? peseurt diaesterioù hon eus ?

Setu kudennoù a dalvez ar boan studiañ.

Evit pleustriñ war se e kinnigan deoc'h ur vodadeg e presbital ROSTREN (4 rue de Reins), d'ar SUL 18 a viz Here da 14 e 30.

Studiet e vo ivez ar raktres evit sevel ur scourt kenvreurezh evit ar veleien kar-o-yezh. Kas a ran deoc'h ar raktres en eus savet. Pep hini a lavaro e soñj evit kerm ennañ ar pezh a zo da vezañ kennet.

Pediñ a ran ar re na c'hellfent ket dont da gas din o evezhiadennoù hag o c'hinnigoù war an holl boentoù-se.

A breiz kalon evit Doue ha Breizh.

Yann Talbot.

ROLL-LABOUR AN EMDERVEZH (18 a viz Here 87).

14 e 30 : studiañ ar reoliadur.

15 e 30 : kudenñ an ofisoù e brezhoneg.

16 e 30 : adverenn.

17 e : kudenñ an embannadurioù war al liderezh hag ar gelennadurezh kristen.
kudennoù all.

18 e : Gousperoù.

18 e 15 : diwezh.

RAKTRES REOLIADUR.

1. Kenvreurezh Sant Erwan a stroll ar veleien a gar ar brezhoneg hag ar Vretoned.
 2. Ober a ra ar genvreurezh gant ar brezhoneg en he labourioù hag en hec'h envodoù.
 3. Ha falioù a zo :
 - lakaat kenlabour etre ar veleien a fell dezho difenn gwirioù ar vrezhonegerien ha gwirioù Mab-den.
 - studiañ ar c'hudennoù a sav diwar hol labour e Breizh.
 - astenn etrezomp ur vuhez speredel e brezhoneg.
 - sevel oberennoù e brezhoneg evit mad ar bobl kristen.
 4. Ar bodadegoù a vez dalc'het ur wech ar miz e parrez-mañ parrez.
 5. Anvet e vez gant an holl izili ur priol hag un is-priol evit ober war-dro ar genvreurezh e-pad daou vloaz.
 6. Pep ezel a bae ur skodenn vloaziek evit plaenaat buhez danvezel ar genvreurezh.
 7. Digor eo ar genvreurezh, war o goulenn, d'an holl veleien, gant na asantont d'ar reoliadur.
 8. Aketus eo ar genvreurezh da heuliañ pizh kelennadurezh an Iliz hollvedel ha peurgetket hini ar Pab.
 9. Beleien divrezhonek a c'hell bezañ kenlodek er genvreurezh hep bezañ izili gwirion.
 10. Kenlabouret e vez gant leoned, leanezed ha laiked, diouzh na vez ezhomm evit mad an dud.
-

PEDEMM DIGERIN : VENI CREATOR.

Veni Creator Spiritus,
Mentes tuorum visita :
Imple superna gratia
Quae tu creasti pectora.

Qui diceris Paraclitus,
Altissimi donum Dei,
Fons vivus, ignis, caritas,
Et spiritualis unctio.

Tu septiformis munere,
Digitus Paternae dexteræ,
Tu rite pronissum Patris,
Sermone ditans guttura.

Accende lumen sensibus,
Infunde anorem cordibus,
Infirma nostri corporis
Virtute firmans perpeti.

Hostem repellas longius,
Pacemque dones protinus ;
Ductore sic te praevio,
Vitemus omne noxium.

Per te sciamus de Patren,
Noscamus atque Filium :
Teque utriusque Spiritum
Credamus omni tempore.

Deo Patri sit gloria,
Et Filio, qui a mortuis
Surrexit, ac Paraclito,
In saeculorum saecula. Amen.

Pater. Ave.

Pédomp : Doue, c'hwi ho peus kenteliet eneoù an dud fidel gant Sklerijenn
ar Spered Santel, roit deomp ar c'hras dre an hovelep Spered da d'ava
ar pezh a zo nat, ha da vezañ bepred frealsèt gantañ.
Dre Hor Salver Jezuz Krist, ho nab hag hon Aotrou, a vev hag a ren
ganeoc'h en unaniezh ar Spered Glan, brenañ ha da holl viken. Amen.

G O U S P E R O U .

Kanenn : SPERED SANTEL.

1. Spered Santel, holl nerzh ar bed kristen, 2 An ebestel, en ur sal unanot,
Plijet ganeoc'h ennonp brenañ diskenn : A dan ho kras hoc'h eus gwechall ner-
A sklerijenn karget hon sperejoù, Bet evidomp ar mones madelezh, zhot
A garantez tonnet hon c'halonoù. Nan enp hepdoc'h nonet sempladurezh.
Gwerc'hez Vari, esperañs ar pec'her,
Pedet Jezuz, ho Mab hag hon Salver ;
Obtenet dinp kompren konzoù Doue,
Ha da viken o nirout goude-se.

Saln 109. Ant : Setañs Doue d'an Aotrou : azez en tu dehou din.

Diouganet en deus an Aotrou d'an Aotrou :

"Azez a-zehou din,

ken n'an bo graet eus da enebourion ur skabell evit da droid".

Bazh da c'halloud a gaso an Aotrou war-raok adalek Sion :
nestroniañ a ri e-touez da enebourion !

Ur bobl a enouestlidi az po da zevezh an engann,
gant gwiskanañtoù santel ;
a-greiz ar goulou-deiz
az po ur c'hlizhenn a vugale.

Touet en deus se an Aotrou, ha n'en devo ket a geuz :
"Te a zo beleg da viken e-giz Malki-Sedek".

An Aotrou a zo a-zehou dit-te ;
frouzañ a ra, en deiz e gonnar, ar rouaned.

Barn a ra e-touez ar broadoù,
ha bernañ ar c'horfoù-narv ;
flastrañ a ra ar pennoù war an douar, da galz ;

Eus ar froud, gant e hent, ec'h ev,
ha diwar-se ec'h adsav e benn.

Klod d'an Tad ha d'ar Mab ha d'ar Spered Glan
Evel na oa er penn kentañ, ha brenañ ha da virviken. Amen.

Saln 113.A. Ant : Dirak drem an Aotroù e strinko an dour bev.

Pa yeas Israel er-naez eus an Ejipt,
tiegezh Yaakov a-douez pobl ar valbouzerion-se,

E voe Yehouda e santual,
Israel e zonani.

Ar nor a velas hag a dec'has,
ar Yarden a souzas en a-dreñv,

Ar nenezioù a lannas evel tourzed,
an torgennoù evel nenned deñved.

Petra hoc'h eus, o nor, o tec'hout,
Yarden, o kilañ en a-dreñv ?

Menezioù, o lannat evel tourzed,
torgennoù, evel nenned deñved ?

Dirak an Aotroù, kren, o douar,
dirak drem Doue Yaakov,

Enn hag a dro ar roc'hell e stankad dour,
ar c'hailhastr e stivelloù dour.

Klod d'an Tad ha d'ar Mab ha d'ar Spered Glan
Evel na oa er penn kentañ, ha bremañ ha da virviden. Amen.

Kantik diskant (Levr an Diskuliadur, 19, 1, 2, 5, 7).

Ant : Doue a ren, ra drido an douar, alleluia !

R/ Alleluia, alleluia !

Ar silvidigezh, ar c'hloar hag ar galloud d'hon Doue, alleluia !
Gwirion ha reizh e varnedigezhioù. R/

Heñlit hon Doue, servijerion an Aotroù, alleluia !
C'hvi holl hag a zouj anezhañ, bihan ha bras. R/

Setu na ren evel Roue, an Aotroù hon Doue,
nestr an hollved, alleluia !
Bezomp laouen ha tridomp, roomp gloar dezhañ. R./

Rak setu deuet eured an Oan, alleluia !
Hag e bried a zo en em genpennet. R./

Konz Doue 2 Kor, 1, 3-4 • Ra vo benniget Doue, Tad hon Aotroù Jezuz Krist, ~~Tad an~~
trugarezioù ha Doue pep frealzidigezh, enn hag a ro frealz en hon holl drubuilhoù,
evit na c'hellimp ni ivez, dre ar frealzidigezh a resevomp hon-unan digant Doue,
frealziñ ar re all e kenent trubuilh n'en em gavont ennañ.

Ra vo benniget anv an Aotroù, alleluia, alleluia !

V/ - Bremañ ha da virviken, alleluia, alleluia !

V/ - Klod d'an Tad, ha d'ar Mab, ha d'ar Spered Glan,
evel na oa er penn kentañ, ha bremañ ha da virviken. Amen.

Kantik ar Merc'hez. Ant : Tridal a rin e Doue, va Salver ha va nerzh.

Kanañ laouen ' ra va c'halon
Da Zoue, va Salver.

Rak taolet en deus warnon ur sell,
warnon e servijerez izel.

Hag a-vremañ an holl renziadoù
evurus-dreist va anvo.

An Helle'halloudek evidon traoù neur en deus graet,
santel E anv evit bepred.

E drugarez a rumm da rumm en em led,
war an dud doujus dre ar bed.

Nerzh e vrec'h en deus dispaket,
Ar re lorc'hus en deus pell gwentet.

Kiskaret ar pennoù bras diwar o zron,
d'ar re zister en deus graet ton.

D'ar re naoniek en deus roet o gwalc'h,
ar re binvidik skarzhet kuit goull o yalc'h.

Adsevel a ra Israel E servijour,
en e vadelezh deuet soñj dezhañ d'hen sikour.

Evel n'en devoa d'hon tadoù prometet,
E-keñver Abraham hag e lignez a gantved da gantved.

D'an Tad ha d'ar Mab ha d'ar Spered Santel,
A holl viskoazh da viken glour beurbadel.

Peñenn evit an holl :

Aspedomp a galon isol an Tad hollc'halloudek da selaou hor goulennoù ha lavaronp dezhañ :

R/ - Grit na teuo ho Rouantelezh, Aotroù.

1. Doue, nignon an dud, grit d'hoc'h Iliz enbann ha degas d'ar bed-holl an unaniezh, dezhi da vezañ sin a silvidigezh evit an holl bobloù. R/.
2. Kemmerhit er feiz, ar Pab hag an holl eskibien, roit dezho unander, karantez ha peoc'h. R/
3. Ra vo unanet donoc'h ar Gristenien gant o Fenn santel, dezho da enbann dre desteni o buhez donedigezh ho Rouantelezh. R/
4. Roit ar peoc'h d'an hollved, na reno e pep lec'h ar justis hag ar sioulded. R/.
5. D'an holl Anaon roit an adsav diwezhañ hoc'h eus prometet dinp er C'hrist Jezuz. R/.

Kempenn ar Sul :

Doue hollc'halloudek ha peurbadel, roit dinp ar c'hras da ouestlañ deoc'h bopred hor bolontez, ha da servijañ ho kloc'h gant ur galon leal. Dre Jezuz Krist, ho Mab hag hon Aotroù, a vev hag a ren ganeoc'h en unaniezh ar Spered Glan a gantvedoù da gantvedoù. Amen.

Ra vo bennozh an Aotroù Doue warnomp,
Ra vimp diwallet a bep droug,
ha kaset d'ar vuhez peurbadel. Amen.

Bennozh da Zoue.
Ganimp eo kanneulet.

Kantik da echuif : KANOMP A VOUEZH UHEL.

Kanomp a vouezh uhel
Mari Mamm Doue,
Rouanez Breizh Izel
Hag hon Mamm ivez.

Diskan : DA VARI, MEULEUDI !
E PEVAR C'HORN AR VRO !
HON BREIZH-NI 'ZO DEZHI,
HA DALC'HMAT A VEZO.

Evit plijout dezhi
Hag obten grasoù,
Heuilhonp ecun evelti
Hent ar vertuzioù.

En o holl bedennoù,
Gwerc'hez venniget,
e vec'h e kalonoù
An holl Vretoned.

A PROPOS DE NOTRE INTERROGATION SUR LES PAUVRETES.
APPORT POUR LA REFLEXION DU CONSEIL PRESBYTERAL.

I. Il existe de multiples formes de pauvretés autour de nous, plus ou moins graves, plus ou moins visibles :

- pauvretés économiques : ce sont les plus criantes (faibles revenus, chômage, loyers impayés, jeunes sans ressources, familles très endettées etc).
- pauvretés culturelles, intellectuelles : peu de savoir, faible scolarisation, peu d'accès aux moyens d'information.
- pauvretés sociales et politiques : manque de relations, de participation aux décisions, manque d'audience dans la société.
- pauvreté spirituelle : personnes sans espérance, sans but dans la vie, jeunes sans avenir, drogue, alcool.
pauvreté de foi : indifférence religieuse, athéisme pratique.
pauvreté de culture religieuse.

II. Parmi toutes ces pauvretés diverses il convient de distinguer dans notre diocèse une pauvreté spécifique qui se cumule souvent à toutes les autres :

LA PAUVRETE DES BRETONNANTS.

C'est en effet à la fois une pauvreté culturelle, sociale, spirituelle, et économique.

Cette pauvreté spécifique des bretonnants a des effets :

- dans la société civile.
- dans l'Eglise.

A. Dans la société civile :

- leur nombre décroît. De 1,2 millions dans toute la Bretagne, ils sont passés à 500.000 environ.
- ils sont en majorité âgés : les plus de 50 ans.
- ils ont été relativement peu scolarisés.
- la langue qu'ils parlent quotidiennement n'a pas de reconnaissance officielle. Elle est bannie de presque toute la vie publique.

En conséquence :

- ils n'ont pas de pouvoir : ni économique (ce sont les couches les moins riches en général), ni social (ils ne sont pas reconnus comme communauté), ni politique (les autorités politiques ne tiennent pas compte d'eux).
- ils n'ont pas de savoir : ce sont le plus souvent les moins instruits, ils ne savent même pas lire leur propre langue, les moyens de communication sociale (radio télé etc) font peu cas d'eux.
- ils n'ont pas d'avoir : les moyens de production économique leur échappent, et leurs revenus sont en général inférieurs à la moyenne.

On constate donc :

- ils sont marginalisés dans la société civile.
- leurs droits culturels sont niés.
- ils sont le plus souvent ignorés, quelque fois méprisés ou moqués.

Leur pauvreté est donc à la fois matérielle et morale.

B. Dans l'Eglise :

- ils constituent souvent une grande partie de la population pratiquante dans les paroisses rurales. Pourtant la liturgie se fait presque entièrement en français.
- dans les villes ils sont minoritaires.

Mais dans les 2 cas :

- ils n'ont pas de pouvoir. Ils ne sont pas pris en considération :
 - ni dans les mouvements d'action catholique.
 - ni dans la catéchèse, ni dans la liturgie.
 - même pas dans la Vie Montante !

Ils sont toujours en dehors des instances de décision (recteurs, religieuses, ou militants laïcs "engagés", considérés comme seuls "représentatifs" de la "base".

- Peu de place dans la presse paroissiale (articles en breton)
- Peu de place dans la liturgie (messes en breton quasi inexistantes, baptêmes, mariages, enterrements de même).
- Ils ont droit à la portion congrue : quelques cantiques.

En conclusion : la négation que subissent les bretonnants dans la société civile est vécue de la même manière dans l'Eglise.
Leur existence, et la question même sont étouffées : c'est la pauvreté à l'état absolu quand l'existence même est niée.

III. Le Problème des néo-bretonnants :

Le nombre des néo-bretonnants s'élève : jeunes qui ont réappris la langue, jeunes foyers qui utilisent le breton dans leur vie quotidienne, militants culturels engagés, étudiants, élèves des écoles Diwan, etc.

Or la plupart de ces néo-bretonnants sont étrangers à l'Eglise ; ils considèrent que l'Eglise en Bretagne les a trahis, les a abandonnés. Ils ont coupé les ponts avec l'institution ; souvent ils s'affirment totalement étrangers à la foi elle-même, incroyants, athées, parce que l'Eglise "officielle" les a déçus. Beaucoup de leurs enfants ne sont ni baptisés, ni catéchisés. Plusieurs, qui se reconnaissent encore catholiques, se disent prêts à demander des cérémonies civiles (enterrements, baptêmes etc) plutôt que de se voir imposer contre leur gré des liturgies en français.

IV. Pourquoi ce silence de l'Eglise sur le problème des bretonnants, pourquoi cette indifférence massive par rapport à la question ?

- par solution de facilité. C'est plus facile en français.... ?
- par peur de se nouiller, de prendre des risques, de s'engager?
- par manque d'espérance ? On ne serait pas soutenu, suivi ?
- par manque de moyens ? On n' a pas le matériel (livres etc) ?
- par "suivisme" : tout le monde fait comme ça ?
- parce que tout simplement on s'en fiche ?

V. Des questions à notre Eglise diocésaine :

1°. Pourquoi cette passivité alors qu'elle est en contradiction avec l'enseignement de Jean-Paul II sur les droits de l'Homme, le respect dû aux cultures et aux langues, quelle que soit leur importance ?

(voir discours de Jean-Paul II à l'Unesco. 1980.
discours aux minorités indiennes. 1987.
voir enseignement de Vatican II.
de Pacem in Terris.)

2°. Que faudrait-il faire, courageusement, pour prendre en compte cette pauvreté spécifique des bretonnants ?
Comment l'Eglise diocésaine peut-elle être pour les bretonnants, comme le dit Jean-Paul II " la voix des sans voix" ?

3°. Comment devrions-nous sur ce problème rendre notre Eglise diocésaine plus prophétique et plus crédible ?

En espérant que ces considérations pourront faire progresser la réflexion sur les pauvretés et la mission de l'Eglise.

Yann Talbot.

KBLIC'HLIZHER Nenn 4.

Kenvreur nat,

Degas a ran deoc'h da soñj eo bet lakaet hon envod da zont e presbital BULIEN (tost da gêr Lannuon, Bro-Dreger), d'al Lun 16 a viz Du 87.

Kregiñ a raio ar vodadeg da 10 eur!

Da 12 eur e kaninp a-gevret ofis kreiz an deiz!

Da greisteiz e tebrinp a-gevret. Lavarit eta dre skrid pe dre gonz da berson Bulien, an Ao. G. Dubourg, (Pg, 96.37.64.37.), a benn an 12 a viz Du hag enaoc'h e soñj dont da vodadeg pe get ha da verennañ!

Ma ne c'hellit ket dont, e pedan ac'hanoc'h evelkent da gas dinp hoc'h evezhiadennoù war programm an devezh:

Da 14.30 e vo bannet war skramm ar skinwel, gant ar magnetoskop, ur film video savet gant J.L. Le Tacon (eus Pontrev, bet skoliad e Sant Josef, Lannuon) war vuhez an Ao Per Bourdelles, beleg ha stourner, hag a zo bet diskouezet e festival ar ninorelezhioù e Douarnenez (Miz Eost 87).

Programm an devezh :

War ar stern e vo aozadur ul levr oferenn klok evit ar fideled hag ar veleien gant testennoù ofisiel an oferenn, un nebeut kantikoù ha psalnoù. Mat e vefe da bep hini ac'hanomp ober ur raktres eus ar pezh en dije c'hoant e vefe lakaet e-barzh al levrig-še: (peseurt pedennoù, peseurt kantikoù, peseurt psalnoù hag all):

War un dro e vo ivez votet evit envel ur priol hag un ispriol evit ober war-dro ar genvreuriezh. A-bouez-bras eo na fell dinp labourat en un doare efedus hag urzhiet, ha padout...

Kas a ran deoc'h ivez war-un-dro un destenn c'hallek an eus savet evit Kuzul beleien Eskopti Sant Brieg ha Landreger, hag en devo un dalc'h a-benn penzetez diwar-benn ar paourenteziou endro dinp! Spi an eus e c'helle an destenn-nañ servijout deoc'h evit ho preder hag evit ho labour pastorel!

A grêiz kalon deoc'h e karantez Doue hag ar bobl.

Yann Talbot. Sekretour da c'hortoz!

N.B. Echu e vo an envod da beder eur gant ur banne kafe!

Kelc'hlizher niverenn 5.

Kenvreuzeur vat,

Dalc'het eo bet eil emvod Beleien Breizh - Kenvreuriezh Sant Erwan e presbital Bulien (Bro-Dreger) d'al Lun 16 a viz Du 87.

12 beleg hag ul laik o deus kemeret perzh er vodadeg :

- Gwilherm Dubourg, person Bulien.
- Job Lec'hvien, person Kergrist Moelou.
- Yann Talbot, kure e Rostren.
- Marsel Derrien, person Boulvriag.
- Jul Peron, person Pont Melvez.
- Aine Breton, person Gwanac'h.
- Erwan ar Sant, person an Treo.
- Fañch Thomas, person Mael-Karâez.
- Tad Pleiber, OMI, nisioner e Sri Lanka.
- Youenn Troal, person Plouneour Menez.
- M. Ar C'hollo, ti-retred Keraudren, Brest.

Prientet eo bet al labour evit aozañ al levr oferenn moulet.

Lakaet e vo ennañ :

Kentañ lodenn :

- Ordinal klok an oferenn (evit ar fideléd hag ar beleg).
- Ar beder bedenn eukaristiel aotreet.
- ar Prefasoù a vez implijet an aliesañ.

Eil lodenn : Kanennoù eus ar Skritur sakr :

Testanant kozh : De profundis. Salm 130 (129) : testenn an Ao ⁴r Floc'h.
Miserere. Salm 50 (49) : iden.

Testanant nevez : Magnificat (neur astum : Ao. Floc'h, Jo b Lec'hvien, Mab Sulon ?).

Nunc Dinittis.
Benedictus.
Himn d'ar Filipianed, 2, 6-11.

Trede Lodenn : Pedennoù Kunun.

Pater - Ave.
Sub tuum . Salve Regina. An Anjeluz.
Deuit Spered Santel.
An aktoù (Aktoù a Feiz, a Esperañs, a Garantez, a Goñtrision)
Gourc'henennoù Doue.

Pevare Lodenn : Kantikoù ha kanennoù.

A. Diwar al latin :

Veni Creator.
Veni Sancte Spiritus.
Tantum ergo.
Stabat Mater.
Adoro Te.

B. Kantikoù hengounel :

Un dibab a zo bet graet, lodan a-walc'h. An testennoù a vo da adwelout : reizhañ an geriadueg, hag an doare-skrivañ!

C. Kantikoù nevez.

Dibabet e vo e-touez an troidigezhioù graet gant Job Lec'hvien ha tud all (Yann Desbordes, hag all), hag ivez e-nesk ar c'hantikoù nevez savet abaoe un ugent vloaz bennak gant hen-nañ-hen.

Evit ober al labour-se e vije nat luc'hskeudenniñ an testennoù hor bize c'hoant lakaat e-barzh al levr, evit na vo tu d'o beurreizhañ a-gevret.

E-doug ar vodadeg eo bet anvet an Ao. Per Bourdellès, bet kelenner e Sant Josef, Lannuon, hag aluzenner e Gwareg, da briol a enor ar kenvreuriezh.

O'vezafi 12a oa aet kuit un darn mat eus ar berzhidi a-raok peder eur, n'eus ket bet tu da votifi evit envel ur priol hag un is-priol. Graet e vo er vodadeg da zont.

Ar film video war vuhez an Ao. Bourdelles n'eus ket bet tu konnebeut d'hen diskouez, rak ar magnetoskop a rae diouer en deiz-se. Graet e vo ivez er vodadeg da zont.

TREDE BODADeg AR GENVREURIEZH.

Dalc'het e vo an envod da zont e presbital KERGRIST MOELOU, (Kerne Uhel, e-kichen Rostren), e ti an Ao. Job Lec'hvien, d'al Lun 21 a viz Kerzu.

L U N 2 1 A V I Z K E R Z U. KERGRIST MOELOU.

Kregiñ a raio da 10 eur, hag e echuo da beder eur. Heronniñ a raimp a-gevret. Pedet eur eta da gas keloù da Job Lec'hvien a-raok ar Yaou 17 a viz Kerzu (Job Lechvien, presbital, 22 110. Kergrist-Moeloù, Rostren) (Pg, 96. 36. 50. 38) evit lavarout hag-eñ enaoc'h e soñj mont.

Degas a ran da soñj d'an holl genvreudeur, eo digor ar genvreuriez d'an holl veleien, hag e vo degeneret pep hini gant grad vat, zoken ma ne c'hellont dont nemet ur wech an anzer.

A greiz kalon evit Doue hag ar bobl.

Yann Talbot.

Sekretour-da-c'hortoz.

Kelc'hlizher niverenn 6.

Kenvreudeur vat,

Degas a ran deoc'h da soñj hon eus hon envod da zont e presbital KERGRIST MOELOU, d'al LUN 21 a viz KERZU, evel na oa bet divizet e bodadeg Buien:

Kregiñ a raio an envod da 10 eur. Echuet e vo a-benn peder eur.

Roll al labour d'ober :

- A. Studiañ pizh an testennoù evit embann al levr oferenn.
 Advelout an doare-skrivañ, gerioù 'zo.
 Dibab etre an troidigezhioù evit ar Skritur Sakr hag ar c'hanennoù.
 Gwelout kudenn an embannadur.
- B. Urzhiañ da vat buhez ar genvreuriezh :
 - envel ur priol hag un ispriol.
 - diazezañ ar sekretouriezh hag an tezerer.
- K. Gwelout kudenn an oferennoù e brezhoneg. Penaos en en sikour ha labourat gant al larked evit na vefe nuioc'h a oferennoù e brezhoneg er parrezioù.

Sed arañ an implij-anzer evit an devezh :

- 10 eur : pèdenn verr a-raok kregiñ.
 10.15 - 11 h 15 : labour studiañ.
 11.15 - 11 h 30 : votadegoù hag aozadur ar genvreuriezh.
 11.30 - 12 h. : Film video gant ar magnetoskop diwar-benn buhez an Ao.
 Bourdelles.
 12. : Ofis kreisteiz.
 12 h 15 : pred. ("nerenn" pe "lein" hervez an dud !!!).
 14 eur- 16 eur : labour studiañ.
 16 eur : banne kafe. Diwezh an envod.

Pedet oc'h da gas keloù da Job Lec'hvien, person Kergrist Moelou (pollgoz : 96. 36. 50. 38.), a-benn ar Sadorn 19.12. evit kenenn dezhañ hag enaoch e soñj mont d'an envod, rak ar pred a vo da brepariñ.

A greiz kalon ganeoc'h evit Doue ha Breizh.

Yann Talbot. Sekretour-da-c'hoztoz.

Kelc'hlizher niverenn 7.

Kenvreudeur vat,

Dalc'het eo bet trede emvod ar genvreuriezh e presbital Kergrist-
Hoelou, d'al Lun 21 a viz Kerzu 87, eus 10 eur da 16 eur.

9 beleg o deus kemeret perzh ennañ :

Job Lec'hvien, person Kergrist;
Yann Talbot, kure e Rostren.
Marcel Derrien, person Boulvriag.
Fañch Thomas, person Mael-Karaez.
Tad Pleiber, OMI, misioner e Sri Lanka.
Youenn Troal, person Plouneour Menez.
M. Ar C'hollo, ti-retred Keraudren, Brest.
Ao. Y.V. Pabic, aluzenner e Pondi.
G. Dubourg, person Bulien.

hag ul laik : Gilbert Philippe, eus Gwengamp.

3 beleg o devoa goulennet o digareziñ :

- J. Peron, person Pont Melvez.
- A. Breton, person Gwanac'h.
- Erwan Ar Sant, person an Treo.

Kendalc'het eo bet gant al labour war al levr oferenn.

Diw gudenn a zo bet savet :

§) testennoù eskoptioù Kemper ha Gwenod a zo disheñvel evit
meur a gantik diouzh reoù Sant Brieg-Landreger. Ret e vo dibab un destenn gumun
n'eus forzh penaos. Ha lakaat ivez kantikoù eus an daou eskopti-se, na gaver ket
e levrioù eskopti Sant Brieg-Landreger.

2) Daoust hag e vo lakaet an testennoù gallek kein ha kein gant
ar brezhoneg evit ordinal an oferenn ? Ret eo prederiañ war ar poent-se. An
darnvuiañ n'emaint ket a-du, war a seblant, rak soñjal a ra dezho ne servijo ket da
galz tra, peogwir an dud a c'hell kavout aes-tre levrioù e galleg. Het marteze e
vefe aezetoc'h evit ar barrezianiz a ya d'an oferennoù e galleg hag e brezhoneg.
Gant ul levr hepken e c'hellfent ober.

Kudenn an embanndadur a zo bet savet ivez : pelec'h kas an tes-
tennoù da embann, peseurt ment reiñ d'al levr ? Divizet eo bet gwelout Divi Kervelle
evit ar c'hudennoù-se, dre ma ra war-dro an embann.

Gwelet eo bet ar film video savet gant J.L. Le Tacon (eus Pontreo)
war vuhez an Ao. Bourdellez. N'eo ket bet kavet dreist, ne gomprenet ket mat petra
en deus bet c'hoant ar filmour diskleriañ.

N'eo ket bet anvet c'hoazh ar priol hag an is-priol dre ziuver e
berzhidi en emvod d'an eur-se. Ret e vo avat hen ober er vodadeg da zont, anez da
se ne c'hell ket ar genvreuriezh bevañ en un doare ingal.

Emvod da zont ar genvreuriezh a zo bet lakaet d'al Lun 18 a viz
Genver 88 e presbital Boulvriag.

Sellit en tu all eus ar follenn ar bedadenn evit ar vodadeg
da zont.

13.1.88.

Kelc'hlizher niverenn 7.

Kenvreudeur vat,

Pevare ennod Beleien Breizh a vo dalc'het e presbital
BOULVRIAG (2o rue de l'Armor), d'al Lun 18 a viz Genver 88, eus 10 eur da 16 eur.

Pedet oc'h da gas keloù d'ar person II. Derrien (Pg 96.43.40.61)
a-raok ar Sadorn 16, n'emape'h e soñj dont, rak merenniñ a raimp a-gevret.

Soñjet em eus e vefe mat ober traoù all en hon emvodoù estreget
labourat war an embannadurioù, rak n'eus ket tu da gas labourioù evel-se war-raok
pa vez kalz a dud asambles. Un tamm mat eus al labour a zo da vezañ graet gant un
den e-unan dirak e damm paper. Setu perak e kinnigan un tamm labour studiañ en
taol-mañ :

- 10 eur : pedenn digeriñ.

10.15 : labour studiañ betek 11.30. Kinnig a ran deoc'h ur studia-
denn war dekred Sened-meur Vatikan II "Presbyterorum Ordinis" (Karg ha buhez ar
veleien) : pennad I ha II (rannbennadoù 1 da 11).

11.30 -12 eur : buhez ar genvreuriezh.
skodennoù evit ar bloavezh 88
votadegoù evit envel ur priol hag un is-priol.

12. : Ofis kreisteiz.

12.15 - 13.30 : mcrenn.

14 : pelec'h emaeomp gant al levr oferenn ?

15 eur : prepariñ al levr katekiz.
Pep hini a c'hellfe Rija soñjal en doare na wel al levr

katekiz-se:

- evit piv : bugale, krennarded, tud en oad ?
- peseurt urzh ? : krediñ, ober, ha resev ?
- peseurt doare ? :
 - goulenn ha respont (stum kozh) ?
 - pennadoù displegañ ?
 - testennoù dibabet eus ar Skritur
 - sakr gant displegadennoù ?
- penaos lakaat Spered ar Sened-meur Vatikan II e-barzh ?

16 eur : banne kafe. Diwezh ar vodadeg.

P.S. Ar genvreudeur ha n'int ket deuet d'ar bodadegoù c'hoazh hag a zo dedennet gant
hol labour a c'hell dont dinoc'h d'hon emvodoù. Degeneret e vo laouen kenent
hini a zeuio, rak digor eo frank ar strollad d'an holl.
Darn o deus aon narteze ne ouzont ket brezhoneg "uhel" a-walc'h evit kener
perzh el labour. Arabat bezañ nec'het koulskoude. Ober a reomp gant brezhoneg
ar vuhez pemdeziek. Ha neuze, a-wechoù, un nebeut gerioù diaesoc'h. Evel-se
en em stumomp an eil egile. Pa n'eus ket bet a skol brezhonek evidomp eo
ret-mat dinp ober eus ar genvreuriezh ur seurt "adskol evit tud en oad".

A greiz kalon evit Doue ha Breizh.

Yann Talbot,
Sekretour-da-c'hortoz.

Kenvreudeur vat,

Hon emvod divezhañ a zo bet dalc'het e presbital Boulvriag, d'al Lun 18 a viz Genver 88. 8 beleg o doa en em vodet en deiz-se : M. Derrien, person Boulvriag, F. Tonaz, person Iael-Karaez, Y. Troal person Plouneour-Menez, M. ar C'hollo, ti-retred Brest, Job Lec'hvien person Kergrist Meleou, Yann Talbot lure Rostren, G. Dubourg person Bulien. Bertrand Bonniec, person Kerien, en doa kenoret perzh ivez er pred ganimp. Ar re all o doa gouennet o digareziñ.

Evit ur wech e oa bet brav an anzer e niz Genver, hag hon eus gallet evel-se gweladenniñ kreiz kêr hag iliz kaer Boulvriag, gant he chapelig dindan douar.

Ar pezh a zo talvoudus ivez en hon emvodoù eo ar vignoniezh kristen nerzhus ha tom a zo etrezomp, ni beleien entanet hor c'halon evit hor bro hor yezh hag hor pobl, hervez bolontez Doue : Da dad, da vamm (da vro) a oneri evit pell anzer na vevi. Pa zeu ar veleien da vezañ rouesoc'h eo pouezus-tre evito en em welout an aliesañ ' r gwelañ evit en em sikour.

Studiet hon eus ul lodenn eus testenn ar Sened-neur Vatikan II : "Presbyterorum ordinis" (pennadoù I ha II), ha kendivizet en un doare frouezhus war ar gudenn-nañ : buhez ha labour ar veleien er bed a-vremañ.

Goude merem hon eus labouret war al levr oferenn ha war al levr Katekiz. Gw. Dubourg en deus diskouezet dinp ar pezh a ra evit katekizañ ar vugale brezhonegerien. Ret eo soñjal ez aio o niver war greskiñ : skolioù Diwan, skolioù publik divyezhek hag all. Graet hon eus un dansell eus ar pezh a zlefe bezañ lakaet al levr katekiz-se.

Keloù a zo bet digant beleien all (eus Breizh uhel, pe eus Breizh izel) hag a zo dedennet gant hol labour. Marteze e vije talvoudus aozañ ivez ur strollad evit beleien Breizh uhel a gar o bro hag o fobl.

Krog omp ivez da gaout darenpredoù gant beleien all eus ar broioù bihan all gasket (Euskadi, Iwerzhon, Katalunia, Kembre, Okitania). Ha ne vefe ket poent klask sevel ur gevredigezh evit beleien ar broioù gwasket en Europa ?

Echuet eo bet ar vodadeg gant ur banno kafe da bodor eur.

BELEIEN BREIZH.

EMVOD PLOUNEOUR-MENEZ :

Bodadeg da zont Beleien Breizh a vo dalc'het e presbital Plouneour-Menez (eskopti Kenper) e ti Ao. Youenn Troal, en e presbital (rue Jean Moulin), d'al LUN 22 A VIZ C'HVEVRER.

Setu anañ ar roll labour :

- 10. 30 : pedenn digeriñ.
- 10. 45 : studiadenn war Presbyterorum Ordinis (rambonnadoù 12 da 22).
- 12 : Ofis kreisteiz.
- 12.15 : pred a-gevret.
- 13.30 : pourmenadig a-gevret na vez brav an anzer...
- 14.30 : buhez ar genvreuriezh.

- al levr oferenn.

- al levr katekiz.

- aozañ liannoù gant beleien ar broioù all en arvar.

- ur c'hinnig : ur gouel kristen evit ar fideled gant an

holl veleien eus ar genvreuriezh ur Sul bennak war dro 16 eur, gant un oferenn da 17 eur, e niz Mac pe Mezheven. Daoust ha ne vije ket ur nenez nat evit degas brezhonegerien nevez war-du an Iliz hag ar Feiz. Hag ivez evit reiñ un testeni ez eo bev c'hoazh ar brezhoneg e diabarzh an Iliz katolik e Breizh.

Respontit eta nar plij da berson Plouneour Menez, Youenn Troal, (pollgoz : 98. 78. 01.30), evit lavarout dezhañ hag-eñ enoec'h e sell dont d'an emvod.

A greiz kalon evit Doue ha Breizh.

Yann Talbot

Kenvreudeur vat,

Hon envod diwezhañ a zo bet dalc'het e presbital Plouneour-Menez, d'al Lun 22 a viz C'hwevrer 88. 6 beleg a zo deuet d'an envod-se.

Diouzh ar beure hon eus kendalc'het gant studi testenn ar Sened-meur Vatikan II war vuhez ar veleien "Presbyterorum Ordinis". Goude lein, pa oa ken brav an anzer, hon eus gweladennet abatti kozh ar Releg emeur oc'h adsevel, 5 km diouzh Plouneour ; da c'houde hon eus sellet ouzh kasedig video FR 3 diwar-bonn korventenn ar 15 a viz Here 87. Labaret hon eus ivez war an embannadurioù ha war buhez ar genvreuriezh. Echuet eo bet ar votadeg da 16 eur gant ur banne kafe.

O F E R E N N E K A R A E Z :

Kemenn a ran deoc'h e vo un oferenn vrezhonek en iliz-parrez KARAEZ d'ar Sul 20 a viz Meurzh da 14 eur, da gefiver Gouel broadel ar Brezhoneg aozet fant Conseo (Stourm ar brezhoneg, Engann hag all). Spi an eus e vo un toullad nat a gristenien eus an ensav en oferenn-se. Pediañ a ran ar veleien a vefe dioub da zont da genoferennañ. Kemennit d'ho mignoned bbezhonegerien ar c'heloù eus an oferenn-se. Bennozh Doue d'an holl.

E M V O D R O S T R E N .

Bodadeg da zont Beleien Breizh a vo dalc'het e presbital Rostren (4 rue de Reims) d'al Lun 21 a viz Meurzh.

Setu amañ ar roll-labour :

- 10. 30 : pedenn digerif.
- 10. 45 : studiadenn war pennadoù diwezhañ Presbyterorum Ordinis (rann-bennadoù 17 da 22).
- 12 : ofis Kreisteiz.
- 12. 15 : pred a-gevret en ostaleri.
- 13. 30 : pourmenadig a-gevret na vez brav a-walc'h an anzer.
- 14. 30 : ur skouer a gatekizerezh gant diapositivoù war ar sakranantoù hag ar vuhez kristen.
- 15. : buhez ar genvreuriezh, Kaoz a zo da aozañ ur " gouel kristen"

e niz Ebrellevit an holl gristenien a gar ar brezhoneg. An deiz a vefe ar Sul 17 a viz Ebrel (soñjet e oa bet lakaat ar 24 net deiz ar votadegoù eo...) ; hag al lec'h a vefe ROSTREN (skolaj Kampostal.)

Kregiñ a rafe da 14.30 (Pik-nik a-raok evit ar re a garfo)

Prezegenn war un danvez bennak ha diviz.

Labour war ar c'han hag al liderezh eus 16 da 17 eur.

17 eur : oferenn e chapel ar skolaj.

Diwezh an devezh da 18 eur.

Ar vugale hag ar grennarded a c'hellfe ddont ivez gant o zud ; ur skolaerez vrezhoneger e rafe war o zro e-pad ar brezegenn.

Respontit nar plij da Yann Talbot, presbital Rostren, 22 110 (Polligon : 96. 29. 01. 55), a-benn digwener (18.3.), evit lavarout dezhañ hag-eñ ennoc'h e sell da zont d'an envod d'an 21, rak ret e vo gouzout an niver evit pred kreisteiz.

A greiz kalon ganeoc'h-holl.

Ar sekretour da c'hoztoz. Yann Talbot.

Kenvreudeur vat,

War wel e teu tam-tam hor c'henvreuriezh. Da geñver Gouel broadel ar brezhoneg e Karaez, d'ar Sul 20 a viz Meurzh, eo bet kenlidet un oferenn e brezhoneg en iliz-parrez Karaez, da 14 eur, dirak un hanter kant hennak a fideled, darn anezho eus parrez Karaez end-eeun. Lavaret ez eus bet dimp gant tud eus ar bobl o devoa bet plijadur o kener perzh en oferenn-se. Ret eo dimp eta mont war-raok.

Ervod diwezhañ Beleien Breizh a zo bet dalc'het e presbital Rostren d'al Lun 21 a viz Meurzh 88. '6 beleg o deus keneret perzh ennañ: 4 all o devoa goulennet o digareziañ dre na oa fallik o yec'hed ganto, pe dre na oant ket dieub. Meur a hini en deus lavaret a-hend-all e teuo d'an envodoù da zont.

Labourer hon eus diouzh ar beure war destenn ar Soned-Meur "Presbyterorum Ordinis". N'eo ket bet pouechuet ar studiadenn. Al lodenn zivezhañ a vo c'hoazh da studiañ diwezhatoc'h.

Goude bezañ pedet a-gevret gant Ofis Kreisteiz hon eus merennet e ti-debrif "Eole" e Rostren.

Da c'houde hon eus gweladennet Chapel Itron Varia Kampostal (savet gant an ti-savour James Bouillé) hag ar skolaj, dreist-holl ar maner kozh; neuze omp aet betek chapelig Lokmaria (Itron Varia Gaoudin), un hanter lev diouzh kreiz kêr.

War-lerc'h ar valeadenn hon eus gwelet ur c'henaoadur diapositivou war ar Sakramantoù evel ur skouer eus ar pezh a c'heller ober gant bugale katekizet e klas ar CM2.

Echuet hon eus gant buhez ar genvreuriezh. Dambrest eo al labour war al levr oferenn. Skoet e vo an destenn gant Mivi Kervella, ha kaset neuze d'ar mouler. Met diouer a ra dimp kantikoù Kemper ha Gwened. Etrus o vefen o laout un dibab anezho.

Krog omp ivez da gaout darenpredoù gant Beleien eus Breizh Uhel.

Marteze e vo tu da c'houde da skoulmañ muioc'h a liannoù gant beleien ar broioù keltiek all, hag er broioù all gwasket en Europa.

Ar vodadeg da zont a vo dalc'het e SKOLAJ KAMPOSTAL e ROSTREN, d'ar Sul 17 a viz EBREL, adalek 14 eur 30 betek 18 eur.

Digor e vo d'an holl veleien ha d'al laiked e gar Breizh hag he yezh. Spi hon eus e teuo ar muioc'h gwellañ a veleien, d'an nebeutañ d'an oferenn a vo lidet da 17 eur.

Evit ar "GOUEL KRISTEN"-se, gwelit ar bajenn en tu all eus ar bajenn.

Gant va holl vignoniezh.

Ar sekretour-da-c'hortoz.

Yann Talbot.

N.B. Ne vo ket a vodadeg all e miz Ebrel. An envod evit Muz Mae a vo d'al Lun 16.5. e presbital Hael-Karaez da 10.30.

Yann Talbot, Presbital, 22 110. ROSTREN.
Pollgonz : 96. 29.01.55.

Kelc'hlizher nenn 10.Bis.

----- G O U E L K R I S T E N .-----

Keneiled vat,

Pedet oc'h da gener perzh er GOUEL KRISTEN a vo aozet e skolaj
Itron Varia KAIPOSTAL, e ROSTREN, d'ar SUL 17 a viz EBREL 88.

Ar pal a zo bodañ ar muiañ 'r gwellañ a Gristenien brezhonegerien,
laïked, beleien, leaned, tiegezhioù, yaouankizoù, evit bevañ o feiz o yezh o c'halon,
yezh o buhez hag o bro.

Soñjal a ra'dimp e rankomp en en unaniñ evit kaout muioù 'h a nerzh
hag a esperañs, ha diskouez evel-se n'emañ ket an Iliz e Breizh estren ouzh ar stourm
a ren ar Vrezhonek evit savetoiñ o sevenadurezh.

Setu anañ roll an devezh :

- 13 eur : pik-nik a-gevret er skolaj evit ar re a zegouezho d'an eur-se.
Baleadennig da c'houde na vez anzer ganimp.
- 14.30 : Prezegenn war un danvez istorel pe lennegel pe relijiel. Da
choaz e vo.
- 16 eur : Bodad labour war ar c'han evit al liderezh.
Bodad labour all war ar sevel kanennoù nevez.
- 17 eur : Oferenn kenlidet gant neur a veleg.
- 18 : Diwezh ar Gouel.

N.B. Ar vugale a c'hello dont gant o zud. Ur skolaerez vrezhonegerezh a raio war o
zro, e keit na vo an dud en oad er prezegenoù hag er bodadoù labour.

Pedit ho keneiled, izili ho strolladoù sevenadurel, an holl dud a
anavezit da zont d'ar Gouel-se.

Diouzh na vo tu e vo gwelet ivez penaos kenderc'hel da gas war-raok
ar c'henlabour etre holl gristenien vrezhoneger ar Vro.

Gant hon holl geneilded.

Yann Talbot, sekretour-da-c'hortoz.

Evit BELEIEN BREIZH - KEMVREURIEZH SANT ERWAN.

G.S. : Ar pennad-nañ a gasomp ivez d'ar c'helaouennoù brezhonek evit na embannint
ar c'heloù eus ar Gouel-se.

Keneiled vat,

D'an holl ensaverien e kasomp ar c'heleier-mañ diwar-benn bihez hor strollad hag emroadur an Emsav abaoe miz Meurzh divezhañ.

1°. Gant glac'har hon eus lidet deiz Lun Fask (4 a viz Ebrel) e Rospez obidoù hor breur beleg Gwilherm Dubourg, person Bulien-Kaouenneg, marvet dic'hortoz deiz Yaou Gamblit. Ezel feal e oa eus hor c'henvreuriezh. Unan eus hor bodadegoù kentañ hor boa dalc'het en e bresbital e Bulien, d'al lun 16 a viz Du 87. Seblantout a rae bezañ yac'h, ha laouen-tre e oa ouzh hon degemer, prest da adkregiñ gant ar labour ensavel peogwir e vele un esperañs nevez o tiwanañ. Met taget e oa da vat gant ur c'hleved direned ha mervel a reas war an daol oberata, tri devezh war-lerc'h emvod Kristeniez Breizh e Plouneour-Ar-Menez, m'ar devoa kemeret perzh ennañ. Marvet deiz diazevidigezh ar velegiezh gant hor Salver, ha douaret deiz emsavadeg an Iwerzhoniz e Dulenn e 1916... Eus rummad ar veleien feal d'o feiz ha d'o bro e oa, war-lerc'h Yann-Vari Perrôt, P.M. Lec'hvien, M. Klerg, ha L ar Flaoc'h... hag ar re all... D'e obidoù e oa deredet ur c'hant-bennak a veleien ha kantadoù a fideled. Fiziet e oa bet e obidoù e strollad Beleien Breizh. Graet e voe pep tra hervez e youl divezhañ. Ra vo bremañ e peoc'h an Aotrou Doue. Ni a gendalc'h gant ar stourm.

2°. D'ar 16 a viz Ebrel eo bet dalc'het e skolaj Kanpostal e Rostren Gouel Kristen ar vrezhonegerien. Un taol esa e oa. Daou ugent a gristenien a oa deuet d'ar brezegenn displeget goude m'ar gant Yann Talbot diwar-benn dasorc'hidigezh Jezuz Krist. Goude ar stal-labour war ar c'han e voe kenlidet an oferenn e chapel ar skolaj gant nav beleg. Emsaverien a oa deuet (ouzhpenn 50, ha tud eus ar rannvro ivez) a bep lec'h, ha darn anezho distag diouzh an Emsav abaoe ur pennad. Ar pozh a ziskouez e rankomp kenderc'hel: Sklaer eo bremañ an traoù : AR BREZHONEG A ZO TRA AN EMSAV BROADEL.
AR FEIZ E BREIZH NE C'HELL ADSEVEL NEMET DRE AN EMSAV BROADEL MA Z OIP KENLODEK ERWAN.

Un devdzh all a vo aezet e miz Gwengolo. Menegomp e oa deuet 5 bugel brezhonoger, gant ur skolaerez eus Diwan. Poent eo plêdiñ da vat gant kudenn ar c'hatikeze-rozh e brezhonag evit ar vugale.

3°. Afer Marc'harid Gourlaouen.

Betek-hen hon eus bet ouzhpenn 500 sinadur enep enalc'h frañskilhon person Douarnenez. An holl glem adenoù a zo bet kaset ivez da Eskob Kemper. Eus ar broioù keltiek ez eus deuet kalz, 60 ouzhpenn, nevez 'zo, eus Kerne-Veur, ha tregont eus Iwerzhon. Met chom a ra mut an iliz ofisiel e Kemper, hag e Douarnenez. Evito n'eus ket ac'hanomp, ne gontomp ket evit ur gweneg toull...

D'ar Sul 5 a viz Mezheven e vo lidet ur gouel e Douarnenez en enor da Vac'harid Gourlaouen. Person Douarnenez a nac'h e ve lidet un oferenn eviti en deiz-se en iliz-parrez. Kinnig a ra al lun, pe neuze mont da Kemper... !!!

Sklaer eo bremañ eo lakaet ar vrezhonegerien er-maez eus an iliz ofisiel en eskopti Kemper. N'o deus ken a blas en eskopti-se. Koulz eo dezho dilezel an iliz c'hallikan-se.

M'en en gav lañked kristen, er gouel-se, e pedan anezho, da lidañ o-unan ul lid kristen er vered evit Mac'harid (Doue d'ho fardono), gant ul lennadenn, ur c'hantik hag ur bodenn. Ne c'hellomp mui kontañ war ar veleien c'hallikan-se evit silvidigezh hon eneoù. Ar gristenien vrezhoneger a vev en eskopti Kemper a rank tremen hep ar veleien ofisiel. Met gallout a reont en en harpañ war Beleien Breizh:

Setu perak o kinnigan kement-mañ d'ar gristenien a gar o yezh hag o bro :
- na fell deoc'h kaout lidoù e brezhonag (douaridigezh, badeziant, eured), lakaet sklaer ho youl war baperoù, ha goulennit diganimp, diouzh ret, o seveniñ.
- na ne fell ket deoc'h kaout obidoù e gallek daoust d'ho polontez, goulennit groñs war ho testanant un interamanant sivil. Ur beleg eus Beleien Breizh a yelo da lavarout ar pedennoù war ho poz er vered, hag e vo lavarout un oferenn vrezhonek divezhatoc'h e lec'h all.

4°. D'ar Gwener 6 a viz Mae eo bet lidet obidoù an Tañ Nedard Dournap, Kabusin, en iliz Gwengamp, Karout a reas e vro, e yezh, hag e vredeur hervez Aviel hor Salver. Kencil e oa d'ar genvreuriezh, met gant e gleaved n'en devoa ket gallet komer perzh er bodadegoù. Podiñ a reomp evit renoz e ene.

5°. Emvod da zont Beleien Breizh a vo dalc'het e presbital Macl-Karaez d'al Lun 16 a viz Mae 88, eus 10.30 da 16 eur.

Yann Talbot, Sekretour da c'hortoz.

NB. : Ar pennad-skrid-mañ a so nat evit an embannerezh en holl gelaouennoù brezhonek.

Kelc'hlizher niverenn 11.

Kenvreudeur vat,

Envod da zont ar genvreuriezh a vo dalc'het e presbital
MAEL-KARAEZ, d'al Lun 16 a viz Mae adalek 10.30.

Sed amañ roll-labour an devezh.

- 10 . 30 : pedenn digeriñ.
10. 45 : studiadenn war lizher-meur ar Pab "sollicitudo rei socialis".
Iat e vefe d'an holl genvreudeur lenn an destenn (pe un diverrañ d'an nebeutañ)
a-raok an envod. Un destenn bouezus eo evit kompren kudennoù ar bed a-vremañ.
12. : pedenn greisteiz.
22 15 : pred a gevret en un ti-debriñ.
13. 30 : pourmenadenn : ur weladenn da Iliz Mael-Karaez, ha da hini
Lokarn, gant teñzor an Iliz
14.30 : Buhez ar genvreuriezh.
stad an traoù evit al levr oforenn.
studi war ar c'hatekizerezh e brezhoneg evit ar vugale
vrozhonegerien (skolidi Diwan ha re ar skolioù publik divyezhek).
Kudenn enzalc'h ar skolioù "kristen" (?) e-keñver yezh ha
sevenadur Breizh.
Petra a c'hellomp ober evit derc'hel e stad vat levranoegou
ar veleien aet nevez : zo da Anaon (M. Klerg, L Ar Floc'h, G. Dubourg).
16 : banne kafe. Diwezhañ an envod.

Respontit, nar plij, a-benn ar Sadorn 14.5. evit lavarout hag-eñ
emaoc'h e soñj dont d'an envod, rak ret e vo reiñ niver ar gouvidi d'an ti-debriñ.
Presbital Mael-Karaez (F. Thomas, person) : 96.24 63 04.

A gr eiz kalon.

Ar sekretour-da-c'hortoz.

Yann Talbot.

Keneiled ker,

Poent-bras eo reiñ keloù diwar-benn buhez ar genvreuriezh... An envod diwezhañ a oa bet dalc'het e presbital Kergrist-Moeloù, d'al Lun 13 a viz Mezheven. Dalc'het e oa bet gant al labour war lizher-meur ar Pap Yann-Baol II "Sollicitudo rei socialis". Start a-walc'h eo an danvez met deskiñ kalz a raer gant ar studi-se.

War-lerc'h ar pred, hor boa gweladennet chapel gaer Itron Varia 'n Encz, a zo bet adsavet tamm-ha-tamm gant Job Lec'hvien hag ur strollad oberiant eus diwar-dro. Bremañ eo kempenn ar chapelig ha prest evit azculiñ Doue hag emoriñ hor Sent.

E-diwezh hon envod hor boa studiet kudenn al levr katekiz. Al levr oferenn a zeuiocr-mac hep dale, spi hon eus.

Kristenien Breizh ha Beleien Breizh en Iwerzhon.

E miz Eost diwezhañ, eus ar 24 d'an 31, o deus pemp belog eus Beleien Breizh, ha lañked eus Kristenien Breizh kemeret perzh en devezhioù-studi etrekeltiek a zo bet dalc'het e manatti beneadad Gleann Stailte e-kichen Luimneach (Limerick), e kornog Iwerzhon. 25 bennak e oamp, Breizhiz (ar re niverusañ), Iwerzhoniz, ha kembreiz (2 hepken...). An danvez a oa : "Ar Feiz, hag ar re yaouank er broioù keltiek". Kejet hon eus gant kristenien all tramor, en o zouez an Tad beneadad Sean o Duinn a ra war-dro an iwerzhoneg (emañ o paouez embann ul levr barzhoniezh relijiel war vuhez ar C'hrist), an tad iwerzhonat D. O' Laoghaire, S.J., brezhoneger ha kembraeger mat, un tad iwerzhonat all diazezet e Kembre ha deuet da vezañ kembraeger anpart. Lidet e veze an sfisoù benvez er yezhoù keltiek, dreist-holl e brezhoneg, hag ar prezegennoù a veze troet ivez er yezhoù all. Enoret omp bet o kaout un diviz gant unan eus renerien Conradh ha Gailge, en Ensav pouezusañ evit an iwerzhoneg. Tro hon eus bet ivez da gweladenniñ lec'hioù dudius evel Lough Gul gant e roudoù rakistorel, santualioù brudet evel hini Holy Cross (Ar Groaz santel), ha kastell Cashel, pouezus en istor Iwerzhon. Darn eus ar berzhidi o deus gweladennet en hanternoz Kador Sant Padraig ha santual hollvruget Itron Varia Knock n'ek en em ziskouezhet ar Merc'hez ouzhpenn kant vloaz 'zo.

Ar veaj-se eta a zo bet frouezhus ha dudius evit an holl, dreist-holl gant an darempredoù a vez skoulmet etre kristenien ar broioù keltiek.

BODADeg LIZ HERE.

Lakaet e oa bet war ar stern ur vodadeg e miz Gwengolo, d'an 19. Met gant deroù ar bloavezh skol n'en eus ket bet tu d'ober war he zro.

Neuze e vo lakaet an envod da zont d' al Lun 17 a viz Here da 10.30. Kaset e vo ur baperenn d'an holl izili evit reiñ daskleriadurioù resisoc'h a-zivout roll an devezh hag e pelec'h e vo dalc'het.

A greiz kalon evit Doue ha Breizh.

Ar sekretour : Yann Talbot.

Kelc'hlizher nivoren 13.bis.

Kenvreudeur vat,

Dalc'het e vo hor bodadeg nizek d'al Lun 17 a viz Here e presbital Rostren, adalek 10.30.

Setu anaf ar roll-labour :

- 10.30 : pedenn .
- 10.45 : echuiñ gant ar studiadenn war lizher-mour ar Pap Yann-Baol II : "sollicitudo rei socialis".
- 12.45 : nerenn a-bevret en un ti-debriñ.
- 14. : baleadenn.
- 15. : buhez ar genvreuriezh ha kudennoù a bep seurt.
aozañ an oferenn a vo **lidet e** Bulion e koun an A6 Klerg
ha G. Dubourg, d'an 23 a viz Here da 15 eur.
- 16 eur : diwezh an envod.

O vezañ na 'n eus ur gentel er skolaj d'an eur-se, ne zegouezhin nemet da 11.30. Goulenn a ran ouzh ar re a vo degouezhot d'an eur kregiñ gant ar studi diouzhtu.

N.B. : Na zisoñjit ket lavarout din hag-eñ enoc'h e soñj dont d'an envod. Respontit din a-benn ar 15.10. Bennozh Doue.

Pellgomz : 96. 29. 01. 55.

A gfeiz kalon.

Yann Talbot.

Keneiled vat,

Setu anañ ur rentañ-kont eus ar vodadeg diwezhañ, hag eus an obererzh kaset da benn er niz-mañ.

A.) Bodadeg niz Here a zo bet dalc'het e presbital Rostren, d'ar 17.10. 8 beleg a oa deuet, ha daou o doa en em zigarezet. Diouzh ar beure e oa bet labourret war "Sollicitudo rei socialis", ha goude merenn omp bet o saludiñ an Aotrou beleg P. Bourdellez e ti-retred Gwareg. Laouen-tre e oa oc'h adkavout beleien vro-garour, ha brezhonegañ ganto, rak en ti-retred ne wel ket kalz a dud eus an diavez a-hod ar sizhun. War-lerc'h un ehan e Roñ Avel e labourjomp evit prientiñ an oferenn e koun an Ao. Klerg e Bulien d'an 23.10.

B). Keneret o deus ^{perzh} izili 'zo eus ar genvreuriezh e div oferenn e brezhoneg e niz Here : - D'an 22 a viz Here e voe douaret e Lokarn (e kichen Nacl-Karaez) Jakez de Quelen, genidik eus ar parrez-se. Unan eus stourmerien an Ensav e oa bet a-raok hag e-pad ar brezel diwezhañ. Rener ar PNB evit departanant Aodoñ-an-Hanternoz en devoa ranket en em repuiñ e Paris e 1944 ha da c'houde en Iverzhon na chonas eno ur penzek vloaz bennak. Distroet da Vreizh e voe kelenner saozneg, ha sikour a reas kalz an Ensav. Kristen feal d'e vro ha d'e yezh, en deus roet un testiñ a galonegezh hag a eeunded. Deuet e oa d'ar gouel kristen e Rostren e niz Ebrel 88, ha laouen e oa bet oc'h en em gavout gant kristenien all na gejer ket ganto alies... Ezel e oa eus Urzh marc'heien Valta, ha deuet e oa dilouridi eus Prioldi Breizh d'e obidoù. Konlidet eo bet an oferenn gant un daouzek bennak a veleien, ur bobladig mat a dud o kener perzh en ofis. Douaret eo bet e bered Lokarn. Ra gavo Levenez pourbad e Paradoz an Aotrou.

- D'an 23 eus ar niz , da 3 eur, ez eus bet bodet e Bulien beleien ha lañhed evit un oferenn e koun an Ao. Klerg. Ur c'hant bennak a dud a oa deuet, en o zouez un taullad parrezianiz. 11 beleg a oa o kenoferenniñ, ha graet ar sarnon ganin daoust n'en boa disañjet va faperennoù e Rostren ~~11~~ War-lerc'h an oferenn e voe un envod e sal ar gumun evit divizout diwar-benn ar savadur e naon da vezañ savet e kichen bez an Ao. Klerg. Ur ~~11~~ c'hizeller a zo bet graet kaoz gantañ dija diwar-benn se. Skrivet e vo an enskrivadurioù e brezhoneg hag e kenbraeg. Soñjet ez eus bet sevel ur groaz keltiek. Petra a soñjit-hu ? Na fell deoc'h sikour sevel ar groaz-se, e c'hellit kas arc'hant da Irena Mordellez, Traon ar ru, 22 300 Bulien-Lannuon.

BODADeg MIZ DU.

Dalc'het e vo e presbital KERGRIST-MOELOU, d'al Lun 21 a viz Du , adalek 10.30 (Krogit hepdon, rak ne a vo diwezhat, eurvezhioù skol an eus), betek 16 eur.

Roll-labour : 10.30 : evit ar wech diwezhañ, "sollicitudo rei socialis", Yann-Baol II. Rannbennadoù 35 da 40.

12 : ofis kreisteiz. 12.15 : pred a-gevret.

13.30 : baleadenn.

15 : buhez ar genvreuriezh ; kudennoù a bep seurt.

16 : diwezh ar vodadeg. Banne kafe.

Respontit da Job Lec'hvien n'enaoc'h e soñj dont (a-benn an 19.11) : 96.36.50.38.

NKB. : Indañ Job Lec'hvien o paouez enbann ul levrig kaer-neurbet " Kanennoù santel", anezhañ ur c'hempenn e doare gwerzennoù eus ar Psalmoù, aes da ganañ war an "tonioù anavezet". Hastit prenañ anezhañ digantañ na n'ho pous ket graet c'hoazh. Aes-tre eo implijout ar c'hanennoù-se evel hinnoù e derou an ofis, pe e-doug an oferenn.

Ar sekretour : Yann Talbot.

Kelc'hlizher niverenn 15.

Keneiled vat,

Kas à ran deoc'h keleier diwar-benn hon emvod diwezhañ ha diwar-benn an darvoudoù tostañ e Breizh hag e lec'h all...

A. Emvod niz Du a zo bet dalc'het e presbital Kergrist-Loelou e ti Job Lec'hvien, d'al Lun 21 a viz Du ; ne oa deuet nemet 6 beleg en taol-mañ. 4 o doa goulenet o digareziñ, daou abalamour d'o yec'hed, unan all a oa o veajiñ en Ejipt pe en Douar santel..., unan all dalc'het gant lid an obidoù en e barrez. Labouret hon eus war ur pennad start eus "sollicitudo rei socialis", a-drugarez da studi pervezh Maouis Ar C'hollo ha d'e vrezhoneg skiantel... Desket hon eus troiennoù nevez ha prederiet war gudennoù ar bed a-vremañ.

Goude hon merenn en ti-debriñ e bourk Kergrist, hon eus graet un droiad vras evit gweladenniñ ar vro a zo ken kaer dre aze. Da gentañ hon eus gwelet iliz Tremargat gant he hent-Ar-Groaz brudet livet gant Langleiz (Xavier de Langlais) (dipitus eo eo krog da zislivañ e plasoù 'zo gant ar glebot) ; da c'houde hon eus graet tro kalvar bered Laruen, unan eus ar re vravañ e Kerne uhel, gant hini Kergrist. Neuze hon eus keneret hent Peurit-Kintin, o tremen 'kreiz-tre lenn nevez Kerne uhel aozet evit degas dour-red d'ar c'horn-bro a-bezh ; brav-kenañ eo ar gwelva eno. Evit kenderc'hel hon eus gweladennet iliz parrez Peurit, bet an alc'hwez ha digoret an nor gant an Aotrou-Maer e-unan, hag a zo war-un-dro sakrist ha danvez-diagon lañk er barrez koulz lavarout... !!! Bet hon eus tro da variañ dirak ar starn-aoter e mein kizellet, hag a oa gwechall e chapel al Lok. Hag evit echuiñ hon eus graet tro chapel Itron Varia al Lok emeur oc'h adsevel a-drugarez d'ur skipailh oberiant. Francine, unan eus izili ar strollad adsevel he deus diskouezet dimp al labourioù a zo bet graet dija (gant skoazell Breizh Santel ha binvioù skipailh Itron Varia 'n Enez e Kergrist), hag ar pezh a chon da ober c'hoazh. Mennet-mat int da gas al labour da benn. Gwelout-mat a raer bremañ peseurt stumm a oa d'ar chapel en a-raok, ha penaos e vo ur wech echuet a-vonez. Evit klozañ hon eus tapet ur banne kafe tomm en he zi e Kerbargain, gant he fried, kelenner e Kampostal. Bennozh Doue da Ao Maer Peurit, da Francine ha d'he fried !!

Goude bezañ deuet en dro da Gergrist hon eus graet ur sell war tuhez ar genvreuriezh. Pemp eur hanter bennak e oa pa gimiadjomp an eil diouzh egile.

B. Emañ hon Tad santel ar Pap Yann Baol II o paouez embann un destenn a-bouez-bras diwar-benn gwirioù broadel ha sevenadurel ar minorelezhioù (sellit e-barzh ar gelaouenn "La Croix", 10.12.88, pajenn 19). Lavaret an boa dija un nebeut mizioù 'zo e oa an destenn o tont er maez... Pouezañ a ra ar Pab war an doujañs a dle kout ar stadoù hag ar galloudoù evit ar minorelezhioù a zo en o dalc'h, hag an dever o deus int ivez d'o zro d'en em zigeriñ war ar bed a-bezh. Ar pezh a lavar ar Pab eo dreist ar pezh a reomp-ni, Beleien Breizh. Net n'omp ket sclauet. Vox clamantis in deserto... An diaesañ a vo lakaat ar veleien a zo e Breizh da deurel evezh ouzh konzoù ar Pab ha da sentiñ outo. An darnvuiañ a soñjo noarvat ur wech ouzhpenn : "Se n'eo ket evidomp, se 'zo mat evit Armenia pe ar C'hebeg !...". Ar pezh a zispleg ar Pab an boa dija diskleriet en ul lizher digor da holl izili Kuzul beleien eskopti Sant-Brieg ha Landreger warlenc e niz Du, net hini ebet n'en doa taolet an disterañ evezh ouzh va faperenn. Konzoù toull o doa soñjet noarvat... Da grediñ eo e soñjint heñvel dra diwar-benn konzoù ar Pab e-unan...

...//... Troit ar bajenn.

ENVOD NIZ KERZU.

Envod niz Kerzu a vo dalc'het d'ar YAOU 22 A VIZ KERZU (ne oa ket dieub an trede Lun evit darn ac'hanomp) e presbital AN TREOU (Trevou-Treguignec), war vord ar nor e Bro -Dreger, otre Perwenan ha Trelevèrn, e-ti Erwan Ar Sant a zo laouen-tre ouzh hon degoner.

Setu anañ roll an devezh :

- 10.30 : pedenn digeriñ.
- 10.45 : studiadem ziwezhañ diwar-benn "sollicitudo rei socialis" (rannben-
nadoù 38 da 40).
Evit an envodoù da zont e kinnigan studiañ lizher nevez ar Pab
da gefver devezh hollvedel ar peoc'h diwar-benn an doujañs ouzh
ar minorelezhioù.
- 12 : Ofis kreisteiz.
- 12.15 : pred a-gevret.
- 14. : baleadenn en tro-war-droioù (Itron Varia ar Porzh Guenn, chapel
Sant Goneri hag all...)
- 15.30 : buhez ar genvreuriezh.
- 16 : banne kafe ; diwezh an envod.

Pellgonzit da Erwan Ar Sant (96.23.74.66.) po skrivit dezhañ evit degonenn dezhañ hag-eñ enaoc'h e soñj dont, a-benn ar neurzh 20.12 d'an diwezhañ-holl.

Laouen-tre e vimp e kaout ganimp konvrouder ha n'int ket deuet betek-hen d'hor bodadegoù. Digor-tre eo hor c'henvreuriezh da genont hini en devez un tamm doujañs evit yezh ar vro. N'eo ket ret bezañ ur mailh war ar brezhonag evit se ; Bezañ b arrek da gonz a zo a-walc'h.

A greiz kalon ganec'h-holl evit Doue hag ar bobl.

Ar sekretour.

Yann Talbot.

BELEIEN BREIZH..KENVREURIOZH SANT ERWAN..

Yann Talbot, Presbital, Rostren, 22 110.

Pellgouz : 96. 29. 01. 55.

Kelc'hlizher niverenn 16.

Kenvreudeur vat, ..

Emvod diwezhañ Beleien Breizh-Kenvreuriozh Sant Erwan, a zo bet dalc'het e presbital an Troou, e ti Erwan Ar Sant, d'ar Yaou 22 a viz Du 88. 12 a dud a oa deuet en taol-nañ, er vodadeg, setu etajo kreskiñ niver ar berzhidi ; kaldaokaus-tre eo. Spi'hon eus e kendalc'ho evel-se.

Diouzh ar beure, goude ar bedenn digeriñ, hon eus studiet evit ar wech diwezhañ ur ponnad eus lizher-meur ar Pab, "Sollicitudo rei socialis". War-lerc'h ofis Eriosteiz, hon eus bet ur verenn lipous er presbital. O vezañ na oa ket vil an anner, plijus a-walc'h e oa zoken en derou, hor boa divizet ober un droiad tras gant h_or gweturioù.

Da gentañ hon eus hedet an eod betek chapel Itron Varia ar Porzh Gwenn war barrez Berwenan. Ur chapelig eus ar re gaerañ eo, savet er XVIvet kantved, izel, an doenn e tiskenn tost betek an douar. En diabarzh e weler delvennoù talvoudus, dreist-holl unan eus Sant Erwan etre ar pinvidig hag ar paour, ur gador-brezeg eus 1634, bigi a bep scurt logadet d'an ilizig gant nartoloded ar gériadenn. E dievez, e kloc ar chapel e weler ur c'halvar dedennus.

Goude se hon eus graet hent, adarre, war-du Plougoustan. Ha neuze hon eus gweladennet chapel Sant Goneri. Ur savadur iskis-kenañ eo, savet er XVvet ha XVIvet kantved, gant ur porched roman eus an IX vet (unan eus ar re goshañ e Breizh, a-raok an Normaned). A-us, ez eus bet savet un tog begok e plon, war c'houlenn "gouarnour" ar chapel, e 1612. Deuet eo da vezañ tort da vat, ar beg plon-se, evel Tour Pizza en Italia, gannt pouezh ar metal, ken e voe ranket e adroadañ un tamm e 1962. Hervez an Istor e teuas Sant Goneri (o t'chout diouzh Hoial-Pondi e lec'h na oa e vanatti) da chon da Blouvoustan er VI vet kantved, tost d'an heberc'hti e lec'h na oa rpuet e vann Santez Elibouana, en enezenn Loaven, e beg s'or Lanndreger.

E diabarzh ar chapel e kaver bez ar sant adsavet e 1614, an arc'h-relegoù gant klopenn ar sant, maen-bez meurdeus (lorc'hus ?) eskob Lanndreger Gwilhern an dilegeot marvet e 1602 (ar savadur a oa bet savet endeo e 1599 !). Ket ar pep bravañ er chapel a zo sur-mat an delvenn en alabastr eus ar Merc'hoz (XVI vet) (deuet eus Bro-Saoz ?), ar pres bras e koad kizellet eus diwezhañ ar XV vet, ha neuze dreist-holl ar c'headlivadurioù a c'holo an doenn a-bezh (adlivet 15 bloaz ' zo gant an Arzoù kaer) o taolenniñ krouidigezh ar bed (an eabl, al loened, Adam hag Eva, ar pec'hed kentañ hag all) ha buhez hor Salver. Kaer-dreist eo an taolenniñ-se, o tiskouez feiz hag anpartiz an arzourien. E kloc ar chapelig e c'heller herzhout braventez ar c'halvar gant ur gador brezeg e mein a servije evit ar samoniñ da zeiz ar pardon.

Distreiñ a rejomp neuze da presbital an Troou, evit kanañ magnificat Pab Gulon, koner ur banne kafe, ha kimiadiñ goude un devezh leuniet-mat ha koffortus.

BELEIEN.

1. E diwezhañ miz Kerzu eo bet lidet en Iliz Sant Lociz e Brest obidoù ar medisin jeneral a vor, Charlez Laurent, brezhoneger ha brogerour. (Breur e oa da Ber Laurent, bet rener Kêr-Vreizh e Paris). Goulennet en devoa en o destanant un oferenn-gañv e brezhoneg, hop ger gallek ebet, evit diskouez e zoujañs e-keñver ar brezhonegerien disprizet ha gwasket gant an holl e'hallouoù. Ha ne vefe ket asantet d'e youl gant an aotrouniezhioù relijiel e c'houlenn e vefe kaset e gorf war-coun d'ar vered ha lavaret pedennoù war ar bez. N'ho dous ket gallet ar familh kaout an oferenn e brezhoneg en iliz Sant Lociz Brest, evel na c'houlenn ar medisin jeneral. Kavout a rae diaes avat a n tiegezh kas ur c'hristen nat eveltañ d'ar vered hop oferenn ebet. Neuze ez eus bet asantet d'un treuzvarc'had. An aviel a zo bet lannet e brezhoneg, ha lavaret ar bedenn eukaristiel en hor yezh ivez.

troit ar bajenn. .../...

A drugarez da Zoue, bez hon eus bremañ evit hon harpañ, lizher-nour ar Pab diwar-benn ar minorelezhioù broadel (isdarniadoù) hag an doujañs evit ar sevenadurioù hag ar pobloù distad. Met ret e vo dinp strivañ kalet evit ma vo anavezet ha sevenet ar gelennadurezh-se a berzh hor Pab Yann-Baol II gant ar veleien hag al lañvod kristen e Breizh. Betek-hen n'en eus gwelet neneg ebet eus an destenn-se e kannadigoù hon eskoptioù.

2°. Gouel broadel ar brezhoneg, aozet gant CONSECO, a vo dalc'het e Karaez d'an 28-29-30 a viz Ebrel 89. E soñj emeon da lidañ evel warlene un oferenn en iliz-parrez Karaez d'ar Sul 30 war-dro 14 eur. Hat e vefe d'ar veleien libr d'an eur-se kenoforenniñ ganin hag ober bruderezh en holl strolladoù kristen evit an oferenn-se.

A greiz kalon ganeoc'h.

Ar sekretour. Yann Talbot.

BODADeg MIZ GENVER.

Dalc'het e vo d'al Lun 23 a viz Genver e presbital BOULVRIAG, e ti Marsel Derrien (rue d'Arnor, pellgonz 96. 42. 40. 61.) adalek 10.30. (Krogit hepdon, rak ne n'eus un eurvezh skol d'ober betek 11.30)

Roll an devezh :

- 10.30 : pedenn digeriñ.
- 10.45 : studi testenn ar Pab war an isdarniadoù ("minorités").
- 12. : Ofis kreisteiz.
- 14- 15 30 : baleadenn en tro-war-droioù. (namenn ar Blañvezh ?, rivinoù abatti Coat Malouen ?)
- 15.30 : buhez ar genvreuriezh.
- 16. : adverenn, banne-kafe. Diwezh an envod.
- 16.30 - 18 : evit ar re o devefe anzer : studiadenn war an danvez bonnak o tennañ d'ar Feiz pe d'an istor.

Konennit da Varsel Derrien hag-efi emeoc'h soñj dont d'an envod (a-benn ar Sadorn 21 d'an diwezhañ-holl.)

Gant ar blijad ur d'hoc'h advelout a-benn nebeut.

Yann Talbot.

BELEIEN BREIZH.
KENVREURIEZH SANT ERWAN.

Yann Talbot, Presbital, Rostren, 22 110.
 Pellgomz : 96. 29. 01. 55.

Kelc'hlizher nivorenn 17.

Kenvreudeur vat,

Envod diwezhañ Beleien Breizh- Kenvreuriezh Sant Erwan, a voe dalc'het e presbital Boulvriag, e ti Marsel Derrien, d'al Lun 23 a viz Genver 89. Er wech-mañ edomp 11 ouzh taol, pezh a ziskouez e talc'homp start breñañ gant an envodoù hag al labour. Da bep hini da gouviañ kenvreudeur all da zont ivez evit kreskiñ c'hoazh hon nerzh hag hol levezon.

Diouzh ar beure, war-lerc'h ar bedenn digeriñ, hon eus studiet ur pennad eus Diskleriadur ar Pab evit devezh bedel ar peoc'h diwar-benn gwirioù ar minorelezhioù. Studiet eo bet ar geriadur brezhonek evit ar gwirvoud-se (ul labour tenn eo !), ha neuze ar menzioù displeget gant ar Pab. Ur skoazell a dalvoudegezh vras eo an destenn-se dimp evit hor stourm. Merzout a raer ez eus e Roma ur weledigezh sklæroc'h ha reishoc'h eus kudennoù bras ar bed eget en iliz c'hall, hag e-vez dielfennet (analizet) pizh ar gwirvoud hervez spered an Aviel. Muioc'h-mui eta e rankomp en en stagañ ouzh Roma evit difenn hor gwirioù a bobl vreizhek hag a vrezhonegorien.

Goude hor merenn tapet ganimp a galon vat er presbital (2 veleg a oa deuet neuze da greskiñ niver ar berzhidi) hon eus graet un dro-vale vras en dro da Voulvriag.

Da gentañ hon eus klasket kavout namenoù an div stêr a grog o reñ war zouar parrez Voulvriag, ar Blañvezh hag al Leger. War un dosenn enañ ar rann dour, merket e-nesk ar reier hag an drez gant ur naen-rann. Diouzh an tu, e-kreiz ar broenn hag ar noudad e krog ar Blañvezh e hent war-du ar c'hreisteiz. Ul lev bennak izeloc'h ez eus Rijsa ul lenn vihan (lenn ar Blañvezh). Met er penn kentañ n'eo nemet ur wazhig-dour. Pa soñjer e ledander ar stêr er beg, en Oriant, pebezh diforc'h ! An uholder aze, er vannenn, a zo war dro 280-300 m, unan eus tosennoù uhelañ ar c'horn-bto. Diouzh an tu all, 500 metrad alese a denn askell, (gant ar c'hirri eo ret traññ ha distreiñ) e krog neuze al Liger, o vont war-du an hanternoz, e-nesk ar broenn ivez hag ar poullou-dour. An anvioù-lec'h a ziskouez nat. eneur war dachenn ar vannenn (Benn Leger). Eus an dosenn-se e weler Bro-Dreger hag ul lodenn eus Kerne-uhel, ar nenez Bre, kloc'hdiou ilizoù Troglañviz, Gurunhel, tour Kerien, diouzh an tu all.

War hent an distro hon eus graet un ehan (kaer e oa an anzer !) e chapel Sant Herve (?) (e galleg Saint Houarneau), hag a zo bet adreset un tam, daoust na z eus kalzik traoù c'hoazh d'ober enni evit na vefe kenponnet a zoare evit al liderezh, rak stumm ar chapel a zo dedennus : an dorjoù a zo d'ober, lakaat un aoter, adjuntrañ ar nogerioù, ha maetaat. Dont a ra ar c'haouenned (pennoù-kazh ez int marteze ?) d'ober o neizh e-barzh, ha lezel a reont war o lerc'h ur bern lous-tonioù...

Distroet omp da 3.30, ha neuze hon eus adkroget gant ar studi betek 4.30, ha gwelet buhez ar genvreuriezh. Divizet eo bet derc'hel an envod da zont e presbital Prat, e-ti Anton Ar Barzh.

KELEIER : 1. Ouzhpenn testenn ar Pab Yann Baol II war ar minorelezhioù hon eus resevet un nebeut devezhioù ' zò ur skrid all a-berzh " Commissio Pontificalis "Justicia et Pax" e Roma, renet gant ar c'hardinal Etchegaray (un euskarad !), ur studiañ hir ha talvoudus war " an Iliz dirak ar ouennelouriezh" (L'Eglise face au racisme), gant an istalbenn : "Evit ur gevredigezh vreurekoc'h" (Pour une société plus fraternelle). En destenn-se e alian ouzhoù lenn ar rannbennadoù (e galleg) diwar-benn :

- ← L'ethnocentrisme qui néprise les autres cultures.
- Conséquences morales de la doctrine : respect des différences, fraternité solidarité.

Setu aze ur skor ouzhpenn eus Roma evit harpañ hol labour ensavel. Ar pezh a zo d'ober eo lakaat ar gelennadurezh-se da vezañ anavezet ha lakaet da dalvezout e Breizh. Tenn e vo al labour, gant an arallekaet n'eo an enpennoù e-touez hor c'hen-vroidi.

2. D'nañ Job an Irien (Manatti Minihi Levenez, 29 220. Treflevenez, Landerne) o paouez enbann ul levr pedañ evit ar veleien hag al laiked "Pedonn an deiz". Ul levr kaer eo, 610 a bajennadoù ennañ, war baper bibl, gant ur brezhoneg aes, reizh. Kavout ar raer ar pezh a zo ret evit an div bedenn vrasañ eus an devezh : neuleudiou ar heu-ze ha gousperou. An diaester nemetañ a gavan eo an doare-skrivañ. Ret eo din reizhañ en fenn an doare-skrivañ evit na yafe mat ennon ar c'honzou... O vezañ na 'n eus ur ger war zaoz da reizhañ e kollan an hanter eus donder va fedonn gant kudennou a reizhskrivadur...!! Met na c'heller trec'hiñ war ar skoilh-se e c'hello bezañ ur sikour kreñv evit pedenn ar gristenien a ra gant ar yezh. Bennozh Doue da Job an Irien evit o labour talvoudus ha berzh mat a hetomp d'e vanatti.

3. Er mizioù-mañ e vo dalc'het e pevar c'horn ar yro bodadegoù rannvroel Kan Ar Bobl. Hini Kreiz Breizh a vo dalc'het e Duod d'ar 4 ha 5 a viz Meurzh. Mat e vefe d'ar veleien ha d'al laiked kristen keñer perzh er gouelioù-se, hervez o galloud, evit diskouez n'eo ket an iliz diseblant ouzh ar stourm sevenadurel. Ma vefe tu da lidañ oferonnoù e brezhoneg en deiz-se er parrezioù na vo "Kan ar Bobl" enno e vefe un sin a adsav evit ar spered kristep.

4. Dalc'hit soñj e vo dalc'het Gouel broadel ar Brezhoneg e Karaez d'an 28-29-30 a viz Ebrel. Ar strolladoù kristen a glasko derc'hel ur stand kunun etrezo. En en glevout 'a rainj evit-se. Aozet eo ar Gouel-se gant Conseo, ur strollad europat evit difonn ar broioù-suj distad. "Stourm ar Brezhoneg" hag "Engañ" a zo ezel eus Conseo evit Breizh, ha sikouret e vo aozidigezh ar gouel-se gant Skol Diwan Karaez hag ar strolladoù sevenadurel "Egin" (Karaez) ha "Kan an Douar" (Landelo).

BODADeg NIZ C'HWEVRER.

Dalc'het e vo envod niz C'hwevrer d'al Lun 20 a viz C'hwevrer e presbital Prat (4 km eus an hent D 167, etre Gannanp ha Lannuon, 7 km eus Bear, war-du an hanternoz), e ti Anton Ar Barzh.

Setu anañ roll an devezh (krogit hepdon, rak ne n'eus un eurvezh skol betek 11.30).

- 10.30 : podenn digerifi.
- 11.45 : studi testenn ar Pab war ar ninorelezhioù.
- 12 : Ofis kreisteiz.
- 12.30 : pred a-gevret.
- 14-15.30 : baleadenn en tro-wardroioù (Iliz Brat, kastell Fontanella, sel-
lit e-barzh ar Barzhaz Breizh, hag all)
- 15.30 : adkrog gant ar studi.
buhez ar genvreuriezh.
- 16.30 : Kan ar Magnificat ; banne kafe. Diwezh ar vodadeg.
- 17-18 : Evit ar re o deus anzer c'hoazh, ur pennad studi all :
"Plas al laiked en iliz hervez testenn nevez ar Pab "Christifideles
laici" (Me a raio an displegadenn-se.)

N.B. : Pellgomzit da Anton Ar Barzh (96. 47. 00. 93) pe skrivit dezhañ (presbital Prat, 22 140, Bear) a-benn ar Sadorn 18.2. evit lavarout dezhañ hag-eñ enno c'h e soñj dont d'an envod.

A greiz kalon : ar sekretour :

Yann Talbot.

Kenvreudeur vat,

Va digarezit evit an dale. Dleet e oa din kas deoc'h ar baperenn-mañ e derou ar sizhun d'an nebeutañ ; met re zalc'het on bet gant va labour er skol...

Bodadeg diwezhañ Beleien Breizh a zo bet da'alc'hét d'al Lun 20 a viz C'hwevrer 89 e presbital Prat e Bro-Dreger e ti Anton Ar Barzh. Daouzek bennak a berzhidi a oa deuet en envod, ha seitek e oamp ouzh taol e sal vras ar presbital, kouviet ma oa bet nignoned all gant ar person. Ur presbital meurdeus eo hini parrez Prat, kalz a gumbroù ennañ, uhel ha ledan, peadra da lojañ ur bagad a dud ; n'eo ket kozh ouzhpenn-se, eus dibenn an XIXvet kantved, peogwir e weler war ar woger-dal ardaneziou an Ao.'n Eskob Bouché a voe eskob Sant Brieg ha Landreger war-dro ar bloavezhioù 1880.

Diouzh ar beure hon eus studiet pennad ar Pab diwar-benn gwirioù an isdarnadoù (minorelezhioù) ha gwelet pishoc'h troidigezh M. Ar C'hollo a zo reizh ha resis, mat da vezañ embannet hepdale. Kalz a zanvez a zo da gavout en destenn-se evit hor stummadur hag hon abostolerezh.

War-lerc'h pedenn-kreiz an deiz (krog omp da ganañ reizh a-walc'h ar psalnoù war donioù M. Ar C'hollo !...) ha pred kreisteiz kemeret er presbital, en un aergelc'h birvidik ha laouen, peadra da laouenaat kenent ar c'horf hag ar spered..., hon eus kemeret an hent evit ober un dro-vale vras er c'horn-bro.

Da gentañ hon eus gweladennet Kastell Koadelan war barrez Prat. Devet eo bet nevez ! zo un tamm korn anezhañ, siwazh, gant un tangwall. Met chonet eo en e sav neostre, nebeut a zo bet distrujet. Ur c'hastell (ur maner kentoc'h) istorel eo peogwir ez eo degouezhet ennañ darvoudoù kontet er "Barzhaz Breizh", er c'han "Fontanella" Sed anañ derou ar werz :

"Fontanellañ a barrez Prat,
Bravañ mab a wiskas dilhad
En deus lamet ur bennhêrez
Diwar barlenn he magerez."

Hag e kreiz ar werz e lenner :

" Da Sant Malo 'n eus he c'haset
El leandi 'n eus he laket
Ha pa voe pevarzek vloaz naet
'n deus he c'heneret da bried."

Gi Eder de la Fontanelle a oa ur forbann bras eus ar XVIvet kantved, da vare ar Re Unanet ha dug Mercoeur, brudet evit e laeroñsioù hag e walldaolioù a bep seurt. Kastell Koadelan a seblant bezañ eus an anzer-se, stum an azginivelezh vreizhek gantañ.

Bleniet gant Ainé Breton, genidik eus ar barrez, hon eus kendal c'het gant traonienn ar Yeodi, peoc'hus ha geotek, ha paouezet ur pennadig dirak chapel Sant Yann e Trewezan, a oa rivinet penn-da-benn koulz lavarout hag a zo bet adsavet gant labour ur bagad tud kalonek ha sikour ar gevredigezh "Breizh Santel". Ur chapel eus narc'heien an Temp (an denplourien) e oa, hir ha ledan ; gwelout a raer mat merkoù an denplourien ar ar nogerioù (Sant Yann, An Drinded, ar Werc'hez Vari, Sant Jakez. Se a oa devoñsioù pennañ an denplourien).

Evit echuiñ ez omp distroet dre iliz Runan a zo unan eus ar re vrayañ er c'horn-bro-se, gant ar c'halvar kizellet en diavez, ar porched, an tour, hag en diabarzh un tisaverezh kempenn, kempouez, hestum, ur skouer vat eus ilizoù Bro-Dreger, d'ur mare na oa bev an ekonomiezh ha don ar feiz e kalonoù an dud.

Distroet d'ar presbital hon eus studiet buhez ar genvreuriezh ha gwelet al labour a vefe da ober er sizhunvezhioù da zont.

.../... Troit ar bajenn.

ENVOD MIZ MEURZH.

Envod Miz Meurzh a vo dalc'het d'al Lun 20 (dilun a zeu) adalek 10.30 e presbital PLOUNEOUR-MENEZ (straed Jean-Moulin) e ti Youenn Troal. Enañ Plouneour-Menez war an hent a ya eus Roc'h Tredudon er nenezioù Arre da Vontroulez, dres e troad ar nenez.

Sed enañ ar roll-labour :

- 10.30 : pedenn digeriñ.
- 10.45 : labour studi. Pennad ar Pab diwar-benn an isdarnadoù-tud a zo da echuiñ.
- 12.15 : pedenn kreisteiz.
- 12.30 : pred a-gevret.
- 14 : baleadenn en trowardroioù.
- 15.30 : buhez ar genvreuriezh.
keleier.
- 16.30 : banne kafe. Dibenn an envod.

Ar re o deus anzer a c'hello chom pelloc'h evit studiañ ur gudenn istor, doueoniezh, pastorelezh pe sevenadurezh.

Pellgonzit da Youenn Troal evit lavarout dezhañ hag-efñ enaoc'h e soñj nont d'an envod (Pg 98. 78. 01. 30).

Krogit al labour studi hepdon, ne ne zegouezhin nenet war-dro 12.15.

A greiz kalon evit Doue ha Breizh.

Ar sekretour : Yann Talbot.

BELEIEN BREIZH.

Rostren, 21.3.89.

KENVREURIEZH SANT ERVAN.

Yann Talbot, Presbital.
22 Rostren (Pg, 96.29.01.55.)

Kelc'hlizher niverenn 18 bis.

Kenennadur da holl
gristenien hor bro.

Keneiled vat,

Kenenn a ra BELEIEN BREIZH - KENVREURIEZH SANT ERVAN, e vo lidet un oferenn deiz-ha-bloaz evit diskuizh peurbadel ene o c'honvreur

GWILHERN DUBOURG.

act da anaon ur bloaz 'zo, ha douaret deiz Lun Fask 88.

An oferenn deiz-ha-bloaz a vo lidet deiz Lun Fask 27 a viz Meurzh 89, da 11 eur en iliz ROSPEZ (Bro-Dreger).

Pedif a reomp an holl gristenien o deus e anavezet ha konent hini a gar Breizh d'en en unanif er bedenn ganimp ; trugarekaat a reomp an holl re a c'hello kemer perzh en oferenn-se.

Ar veleien a zeuio da genofereñ a zo pedet gant an Itron Dubourg, namn Gwilherm (Doue d'e bardono !à da chon gant o merenn en ti-debrif).

N.B : Degas a reomp da soñj deoc'h e vo un oferenn lidet gant BELEIEN BREIZH evit GOUEL BROADEL AR BREZHONEG, en iliz-parrez KARAEZ, d'ar Sul 30 a viz EBREL 89 da 14.15.

. A greiz kalon evit Doue ha Breizh. Yann Talbot, sekretour.

Yann Talbot, Presbital 22 110 Rostren.
Pg : 96 29 01 55.

Kelc'hlizher niverenn 19.

Kenvreudeur vat,

Dalc'het eo bet hon emvod diwezhañ, d'an 20 a viz Meurzh 89 e presbital Plouneour-Menez, e ti Youenn Troal. 8 a dud o deus kemeret perzh er voda-deg-se. Hour a hini en devoa goulennet e zigareziñ.

Diouzh ar boure, war-lerc'h ar bedenn digeriñ ez eus bet studiet ul lodenn all c'hoazh eus danevell ar Pab Yann Baol II war wirioù an indarna-doù-tud (ninozelezhioù). War un dro e tesker gerioù ha troioù-lavar nevez e brezhoneg, hag ivez nenoziou a bouez evit kompren kudennoù ar bed a-vremañ ha ren hor c'harg pastorel e Breizh.

- Da greisteiz hon eus kanet ofis kreisteiz gant kanennoù santel Job Lec'hvien, Pedenn an Iliz, hag ar psalmoù troet gant L'Ar Floc'h.

Merennet hon eus mat, gant birvilh ha keneilded laouen a-gevret, er presbital, ha goude se hon eus graet un dro-vale er c'horn-bro.

- Da gentañ hon eus gweladennet iliz kaer Komanna, 7 km diouzh Plouneour. Dudius eo ar bourk, savet war ur grec'hiennanet weler sklaer tro-dro (pe vez brav an anzer, pezh ne oa ket an deiz-se !...). Taliskiut a ra ar boan gwelout ar vered gant an holl savadurioù : un nor-antre neurdeuzus, arni tri begig mein ; div groaz gozh (unan eus 1742), hag ar chapelig o servijout da garmel. An iliz a zo bet savet er XVIIvet kantved. Tev ar mogerioù, gant harpelloù kreñv. Pinvidik an dud, ha lorc'hus, d'ar c'houiz-se... Talbenn an iliz a zo a-us dezhañ ur c'holc'hdi uhel, karrezek, gant ur bir mein eus 1592, heñvel ouzh hini Plouneour. War tu ar c'kreisteiz e weler ur porched hollgaer eus an azginivelezh vreizhek (1645-1653), gant daouzek logig kizellet o lein ; siwazh eo bet kollet ganto delwenoù an ebestel. Taolioù kaer an dispac'h gall noarvat... En diabarzh e weler dreist-holl an daou stern-oter e koad kizellet ha livet dreist. A gleiz, hini Santez Anna (1682) nevez adlivet gant an Arzoù-kaer, 6,20 m a ledander dezhañ war 8 m a uhelder. An hini bravañ-holl eus Bro-Leon eo marteze. El logig kreiz e weler delwennoù eus ar Werc'hez gant ar nabig Jezuz ha Santez Anna, o div aezet. A-us e weler an Tad peurbadel, hag er penn uhelañ an Drinded. A-gleiz e kaver stern-oter ar Rozera, ha dreist-holl hini ar Pemp Gouli (1682), gant ar C'hrist skourjezet e kreiz. A bep tu, Santez Varc'harid ha Sant Sebastian. An aoter-se a oa hini kenvreuriezh ar pemp gouli gwechall (pe an Trenenvan santel). Er c'heur e weler delwenoù Sant Derrien (n'eo ket person Boulvriag!!) patron ar barrez ha Sant Pol Autelañ. Ar foñs vadeziant, savet e 1682, a zo diazezet war 5 delwenn e stumm pilerioù o skeudenniñ ar vertuzioù ; ar Feiz, an Esperañs, ar Gwarant, ar Reizhded (an Justis), hag ar C'hempouezelezh.

War-lerc'h Komanna hon eus graet hent war-du abatti kozh ar Releg, savet war vorc'geunioù fall sec'het gant ar venec'h er grennamzer, tost da varmenn ar C'heffleut (stêr Montroulez). Ar Releg eomp, bet savet gant Sant Tangi. Distrujet eo bet gant an Normaned, hag adsavet e 1744 gant ar sistersianed. An iliz abadel a zo anzhi ur savadur heverk eus an XIIvet kantved, divolz, e stumm rondek, gant un nebout adkompennadennoù (XV-XVIvet (prenestroù) ha XVIIIvet. Adc'hraet eo bet an talbenn e 1785. E diabarzh, ur skalier bras e mein, a servije gwechall evit sevel betek kanbroù ar venec'h, hag un dremm-orolaj, stumm Loeiz XIV. En unan eus ar chapelioùigoù, a-zehou, un delwenn gaer ha kozh-tre eus Itron Varia ar Releg, enlakaet en ur stern-oter klinket-brav, eus ar XVIIvet. Distrujet, serret, ha dilezet eo bet an abatti gant an dispac'h gall e 1789. Bremañ eo perc'hennet gant departanant Penn-ar-Bed. Graet e vez en iliz abadel sonadegoù ha kanadegoù. Ur pardon bloaziek a vez lidet ivez, hag a sach kalzig tud. Emañ an departanant o klask adsevel an abatti en e gernañ, met seblantout a ra al labourioù bezañ sac'het er mare-mañ. Salv na teuo an departanant a-benn da adreiñ e gened d'ar savadur istorel-se.

Distroet war-dro 15.30 da Blouneour, e studijomp neuze buhez ar genvreuriezh, an traoù d'ober er sizhunvezhioù da zont ; goude bezañ kanet ar Magnificat, ec'h evjomp ur banne kafe tomm, ha pep hini diouzh e du neuze "en anzer fall, en anzer yen, petra vern ! kanañ 'rainp atav"...!!! (Roparz Henon).

KELEIER :

Priz Langleiz : Gant plijadur vras hon eus klevet en deus Job Lec'hvien, person Kergrist, gounezet priz lennegel Langleiz ar bloaz 89 evite holl oberoù

(Ar Bibl) ha dreist-holl e zastunad "kanennoù santel", kempennet dinet da Psalmoù hag enbannet gantañ warlene. Hor gwellañ gourc'henennoù dezhañ.

Deiz-ha-bloaz narv Gwilherm Dubourg. Lun Fask 27 a viz Meurzh.

Lidet eo bet an ofereñ deiz-ha-bloaz en iliz Rospez da 11 eur. Un daou c'hant bennak a dud a oa deuet, tud eus ar barrez, ha tud a bep korn a Vreizh, Bro-Dreger dreist-holl evel just. 12 beleg a oa o kenofereñ : 2 vikel vras (Roger Even, ha Yves Bonniec genidik eus ar barrez), Louis Hanel person Rospez, Anton Ar Barzh person Prat-Kawan, Fr. Tonaz person Mael-Karaz, Job Lec'hvien person Kergrist Moelou, J. Gouéz eus Lannuon, Briec Boterel eus Rostren, Yves Donès eus Kawan, F. Le Gall eus Bulien, M. Ar C'hollo eus Brest, hag ho servijer, en deus graet an homelienn ha kanet an Agnus Dei war un ton dianav d'an holl... !! Goude an ofereñ ez omp aet da lavarout ur bedenn er vered. Savet ez eus bet ur savadur breizhek e greunvaen war ar bez, gant un enskrivadur e brezhoneg penn-da-benn.

Gouel Broadel ar Brezhoneg : Evit ar gouel-se, azet gant Conseo-Breizh, e vo lidet un ofereñ en iliz-parrez KARAEZ, d'ar Sul 30 a viz Ebrel da 14.15. Grit bruderezh en dro deoc'h evit na teuo ar nuañ 'r gwellañ a fideleñ.

Devezh Kristen : Un devezh kristen evit ar gerent hag ar vugale a vo dalc'het evel warlene, hag en taol-nañ e BOULVRIA kan skol kentañ derez Sant Briag, d'ar Sul 7 a viz Mae. Kregiñ a raio da grei. Iaz gant ar pred a-gevret e ti Mari C'hlaziou. N'it ket da glask ar chomlec'h e levr ar Pellgonz : se a sinifi pik-nik.!! Echuñ e vo gant an ofereñ da 5 eur. En abardaez kaozadennoù ha c'hoarioù evit ar vugale.

Kendalc'h Keltiek : Dalc'het e vo e Breizh e 89. E Lesneven e vo, eus ar 24 d'an 29 a viz Gouhere. Mat e vefe deoc'h en en enskrivañ adalek brenañ n'hoc'h eus c'hoant kenor perzh enañ (750 lur, boued, lojeiz, abadennoù). Skrivañ da :

Kendalc'h Keltiek. c/o Yann Desbordes.

Kreizenn sosio-sevenadurel. 29 260. LESNEVEN.

Hanpig ar vugale : Ur c'hanpig berr vo dalc'het e Rostren eus an 2 d'ar 5 a viz Eost, e Rostren, evit reiñ un tamm stumadur kristen d'ar vugale brezhonegerien ha n'o devez ket katekiz a-hend-all a-hed ar bloaz. Dija en eus bet keloù eus 4 tiegezh dedemet.

Displegadur ar Pab : Enañ an destenn (galleg ha brezhoneg) e ti ar nouler, Moullet e vo er sizhun-nañ. 3000 skouerenn a vo tennet. Graet eo bet an droidigezh gant Hgoris Ar C'hollo. Paet e vo ar frejoù-noulan ha kas etre Kristenien Breizh ha Baloien Breizh. Kaset e vo ar skrid d'ar parrezioù er 5 eskopti.

An DEUG brezhoneg : N'eo bet roet dinp gant Ministrerezh gall an deskadurezh nemet un hanter z/deug brezhoneg. Tu a zo deoc'h c'hoazh da skrivañ da V/M. Rocard, kentañ ministr, evit goulenñ unan klok. R. Denez kelenner e skol-veur Roazhon en deus lakaet da denañ follennoù evit-se. ejom

An niveradeg : Un niveradeg seto e 1990. Goulenñet ez eus bet gant neur a strollad e vefe graet goulennoù ouzh an dud e Breizh evit niveriñ ar re a oar pe a gonpron brezhoneg, ar re a zo barrek da lenn pe da skrivañ. Nac'het eo bet gant an Ao. Beregovoy, ministr an arc'hant. Heur a hini e Breizh en deus klemet dija enep an nac'hadenn-se, ha lavaret zoken ne respontint ket d'an niveradeg na vez kont evel-se.

ENVOD NIZ EBREL.

Ealc'het e vo envod niz Ebrel e presbital KISTINI (Quistinic) e Bro-Wened, e ti Marsel Blanchard. Enañ Kistinid 1 km hanter e tu kornog eus an hent a ya eus Baod da Vubri (D 3). Sed anañ ar roll-labour :

- 10 30 : pedenn digeriñ. Krogit hepdon, skol an eus betek 11.30.
- 10.45 : labour studi : diskleriadur ar Pab war an isnardadoù-tud.
- 12.15 : Ofis kreisteiz.
- 12.30 : pred a-gevret.
- 14. : baleadenn en tro-war-droioù.
- 15.30 : buhez ar genvreuriezh.
- 16 : Kan ar Magnificat - banne kafe - diwezh an envod.
- 16 30 : studiadenn ouzhpenn evit ar re o deus anzer.

Pellgonzit da Marsel Blanchard evit lavarout ha dont a rit pe get : 97 39 71 15.

N.B. : Envod niz Mae : 22 a viz Mae e ti Gwiaz Turizy ar Minteg. Lebrikel-an-trevezh

Keneiled vat,

D'al lun 10 a viz Ebrel e voe dalc'het hon emvod diwezhañ e presbital KISTINID, e ti Marsel Blanchard, person ar barrez, degemeret mat gantañ, gant Benead, ar garabasenn hag an Dell I. Martin. Ur pevarzek bennak a dud a oa en em gavet en dro d'an daol, ha muioc'h a laked en taol-mañ peogwir e oa da gaozeal war aferoù kumun (Gouel ar Brezhoneg, e Karaez, diskleriadur ar gristenien hag all).

Diouzh ar beure hon eus labouret war gemennadenn ar Pab diwar-benn an isdar-nadoù-tud, studiet ar menozioù hag ar c'heriaoueg. N'ez eer ket buan-tre gant ar studiadenne-se, rak start a-walc'h eo ar meizadoù a gaver en destenn, ha talvezout a ra ar boan pouezañ mat pep tra.

Da 12.15 hon eus kanet ofis kreisteiz. Evel boaz ez implijomp Kanennoù santel Job Lec'hvien hag ar Psalmoù troet gant Maodez Glanndour, aes da ganañ war donioù M. Ar C'hollo. En taol-mañ hon eus kanet e chapelig Sant Vatin a zo dres e-kichen an iliz parrez, e kreiz ar vourc'h. Iskis-tre kaout div iliz evel-se hed-hed war an hevelep plasenn. Sant Vatin a vez enoret-dreist e Kistinid hag ivez en tro-war-droioù.

Debrñ a rejomp neuze er presbital, ur pred aozet a-zoare gant ar garabasenn Mari-Jo ha gant Ivona a oa deuet ivez da sikour.

Ha diouzhtu en hent, da welout an tro-war-droioù, bleniet gant ar person a anavez mat-tre e barrez, hag o klask gomz gwenedeg diouzh hon gwellañ...

Da gentañ e weladenjomp keriadenn adnevesaet "Poull Fetan" (Poull ar Feunteun), un toullad kilometradoù eus ar vourc'h. Bez ez eus anezhi ur geriadenn a oa difezet gant an annezidi, adsavet an tiz er stumm a-wechall (XV - XVI vet kantved) gant toennoù soul, mogerioù tev, mein-benerezh, prenestroù bihan. Lakaet ez eus bet dindan zouar an holl orjalennoù (tredan, pellgomz) evit ma chomfe gant ar c'harter-se neuz ar XVIIvet kantved. An holl savajurioù a zo war an hevelep patrom, ar pezh a zegas unvaniezh, kempouez ha heneuziadur sebezus d'ar geriadenn a-bezh, un dek ti bennak enni. Servijout a ra dreist-holl en hañv, rak ur gevredigezh a zo bet savet evit degemer hañvourien, derc'hel devezhioù-studi hag all. Tu a zo da lojañ ha da bredañ. Aliañ a ran ar re a gar tisaverezh hor bro da vont da welout ar geriadenn-se. Merket-mat eo war ar panelloù hent.

War-lerc'h-se hon eus gweladennet ur c'hastell eus ar XVII-XVIIIvet kantved, stumm an azginivelezh breizhek gantañ, dalc'het bremañ gant un tiegezh nobl ha pinvidik a Vro-C'hall evel-just. Ur merk ouzhpenn eus diframmadur ar broioù-suj ha kammziorroet evel Breizh....

O kenderc'hel gant hon hent e rejomp un arsav en ur vereuri ma kaver enni ~~war~~ eus koshañ ti-feurm ar c'horn-bro, miret gantañ stumm ar seitekvet kantved, gant un doenn soul, ur viñs gant derezioù mein, hag arrebeuri eus an hevelep mare. Degemeret kalonek gant ar berc'henez, gwenedeg flour ganti. Evit echuiñ e chomjomp ur pennad oc'h arvesti ouzh chapel an Dreindedourien (Sant Yann, a gredan ??); savet gant an urzh relijiel-se evit ezhommoù o izili hag ar fideled. An Dreindedourien a oa relijiuzet un urzh savet e 1198 evit ober war-dro ar parrezioù, ar veajourien, ar re glañv, ar birc'hirindourien. En e splannañ e oa bet etre an XIII hag ar XV vet kantved. Goude-se ez eas war an diskar hag e steuzias. N'eus mui anezhañ.

Distroet da presbital Kistinid e adkrogjomp gant al labour, prientiñ an oberiantizoù da zont, ha kanañ ar Magnificat evit goulenn evidomp skoazell speredel ar Werc'hez Vari. Goude ur banne kafe tomm e kimiadjomp an eil ouzh egale, o c'hortoz gant mall an emvod da zont....

KELEIER.

1. Gouel broadel ar Brezhoneg e Karaez.

Etire 5000 ha 6000 a dud a deus kemeret perzh er gouel, pe war an deiz, pe en noz (muioc'h en noz marteze...!!).

zevezh, a-drugarez dreist-holl da Depot Guillemot a oa aze adalek ar Sadorn. Diskouezet ez eus bet hon embannadurioù, graet kaoz gant an dremenidi, skignet paperennoù, roet keleier, ha diskouezet emamp ni-ivez war dachenn ar stourm.

Un oferenn a oa bet lidet en iliz parrez Karaez da 14.15. 70 bennak a dud o devoa kemeret perzh enni, ha 4 beleg o deus kenoferennet.

2. Kemennadur ar Pap war ar broioù-suj :

3000 skouerenn a zo bet moulet, brezhoneg ha galleg kein-ouzh-kein. 2000 a vo miret evit ar parrezioù, ha 1000 strewet a-hend-all. 500 a yelo gant an UFCE renet gant Per Lemoine.

3. Emvod ar Gristenien e Boulvriag (8 aviz Mae).

Moarvat e oa re vray an amzer ha dibabet fall an devezh. Dre va faot, dre va brasañ faot... Setu perak ne oa d'euet nemet 6 a dud diouzh ar beure evit ar gaozedenn diwar-benn Sant Paol, ha 12 e oamp evit an oferenn e fin an abardaez. N'eo ket bet displijus koulskoude, ha keneilded don etre ar berzhidi. Ret e vo asañ an devezhioù-se gwelloc'h, ober unan all e miz Gwen-golo, hag ober bruderezh spishoc'h evit an tiegezhioù kristen.

4. Kamp Katekiz miz Eost.

9 bugel a zo enskrivet bete vremañ. Spi hon eus da gaout etre 12 ha 15. Ne vo nemet un taol esa er blaaz-mañ. Da vloaz e vo graet gant muioc'h a vugale ma kav d'ar familhoù ez eus un ezhomm aze.

B O D A D E G M I Z M A E .

Emvod miz Mae a vo dalc'het d'al Lun 22 e ti Gwion-Turiaw ar Menteg, 4 alez ar Baelan, Lokmikael-an-Traezh (Saint Michel en Grèves) e kichen Plistin. Gelout a rit ar gartenn amañ e-kichen. Kregiñ a raio da 10.30. Gwion en deus bet ur

gwall-zarvoud karr n'eus ket pell ha ne ouie ket hag-eñ e c'hellfe hon degemer. A-drugarez Doue ne oa ket re c'hrevus, ha laouen e vo ouzh hor resev en e di.


Roll an devezh :

- 10.30 : pedenn digeriñ.
- 10.45-12-15 : labour studiañ. Echuñ gant diskleriadur ar Pap war ar minorelezhioù. Ar rannbennadoù 10 da 15. Pe traoù all hervez c'hoant ar berzhidi. Krogit hepdon. Ne vin erru nemet da 12.15.
- 12.15 : ofis kraigsteiz.
- 12.30 : pred a-gevret.
- 14. : Baleadenn. Tu a vo da welout iliz Lannvelleg, hini Eredrez marteze, kastell Rozambo (an diavez), la lec'hioù all hervez ijin hon ostiz...
- 15.30 : buhez ar genvreuriezh.
- 16.30 : banne kafe.
- 16.45 : Kantik diwezhañ. Ewezh an emvod. Tu a vo da studiañ traoù all goude ma z eus tud dieub gant o amzer.

Pellgomzit. ~~20~~ a-benn ar Sadorn 20 m'emaoc'h e soñj mont : 96. 35. 72. 66.

A greiz kalon. Ar sekretour : Yann Talbot.

Pellgomzit da Duriaw a-benn ar Sadorn 20 m'emaoc'h e soñj mont 96.35.72.66.



Kenvreudeur vat,

Ur rentañ-kont a gavoc'h amañ, da gentañ diwar-benn hon emvod diwezhañ a zo bet dalc'het d'al Lun 22 a viz Mae e ti Gwion-Turiaw Ar Menteg e Lokmikael-an-Traczh. (Bro-Dreger). Gwion-Turiaw a zo o chom e Lokmikael abaoe un nebeut mizioù. Kroget e oa bet diwezhat al labour-studi, rak, daoust d'am zresadenn war an niverenn 20 bezañ bet sklaer-tre ha kempenn... (den ne gredo va dislavarout !!!), ne da ket bet kavet an ti gant ar berzhidi... Darn zoken a oa aet d'en em goll 'kostez Louargad, Plounerin pe me oar... !! Un abeg ouzhpenn da labourat start evit anavezout Breizh gwelloc'h...

Goude ar studiadenn war destenn ar Pab diwar-benn an isdarnadoù-tud e kanjomp ofis kreisteiz er sal a servij ivez da lidva evit an oferenoù hag ar pedenoù. Neuze e krogjomp gant hor merenn. Gwion en devoa fardet evidomp ur pezh fourmaj-logumaj, div bodoad, gant a bep seurt danvezioù, darn eus ar vro ha darn all a-ziavez-bro, hag a oa lipous-kenañ da lipat, ken e voe tost peurlipet... Unan eus ar baotredigoù en devoa ivez keginet ur wastell evidomp. Un degemer c'hwek eta.

Echu merenn ganimp (un dek bennak e oamp ouzh taol), e kenerjomp an hent evit gweladenniñ an tro-war-droioù. Da gentañ iliz Tredrez, e-loc'h m'eo bet Sant Erwan person e-pad un nebeut bloavezhioù. Un iliz eus ar XVIvet kantved eo, adkempennet diwezhatoc'h, gant ur penn-chantele gotek, dezhañ teiz zalbenn, hag ur c'hoc'hdi dezhañ un tourig hoant dantelezh. En tu all, er vered, ur garmel gant prenestrohigoù gotek. Dindan porched ar c'hreisteiz e kaver delwennoù koad an Ebestel hag hor Salver. E diabarzh an iliz e weler treustoù-diazez kizellet. En tu dehoù d'ar d'heur, e vamer dirak un aoter kelc'hiet gant un daolenn eus ar Basion, ha dreist-holl ur wezenn Jesse eus ar vravañ. E traon an iliz ez eus ivez ur foñs-vadeziant vras e koad, stumm gotek flammek ganti.

O tistreiñ war hor c'hiz e rejomp un arsav en iliz parrez Lokmikael. Ur bourk hoant eo hini Lokmikael, ur barrez vihan a 400 a dud er goañv, met milieroù en hañv. Siyazh abaoe bloavezhioù eo mastaret an draezhenn vras gant felu-mor gwer flaerius, deuet noarvat diwar saotradur an douaroù hag an doureier gant danvezioù kiniek... Eus ar XVIvet ha XVIIvet kantved eo an iliz parrez, en dro dezhi ur vered o'n em astenn war-du an nod. E penn anezhi ur c'holc'hdi savet e 1614 gant ur beg e mein dantelezh.

Eus ar bourk e rejomp hent neuze betek iliz Plouselan (Plouzelambre e galleg) Piv eo ar sant-se ? Peseurt reizhskrivadur eo an hini dereat evit ar barrez-se ? Dihan-tre eo ar bourk, ha tost didud, kenwerzh digor ebet ennañ diouzh a weler. Ouzhpenn-se e oa serret an iliz, n'hon eus ket gallet gwelout an diabarzh. Savet eo bet er XVvet kantved, mare ar savadurioù bravañ e Breizh, p'edo hor bro en he frankiz... Unan eus an ilizoù kaerañ el lodenn-se eus bro-Dreger, gant hini Dreduder, n'hon eus ket gweladennet, ul lev alese, kuzhet en ur c'harrezad gwez pin. Hini Blouselan (??), a zo ur stumm isklis dezhi, gant un doenn izel. Porched ar c'hreisteiz a zo a-us dezhañ ur sal uhel gant talbennoù etre div vogerenn-harpell a-veskell e stumm touriohigoù. Er vered e kaver ur c'halvar dudius gant tudennoù kizellet, hag ur garmel hirgarrezek dantelezh, dezhi digorenoù gotek trirangelc'hiek.

C'hoant hor boa bet neuze gweladenniñ kastell Rozambo e Lannvelleg, met serr e oa, ne oa ket digor c'hoazh mare ar gweladennegoù. Eus a-bell hon eus merzet e vraventez. Ur maner bras eo kentoc'h, krefvaet, e greunvaen, savet er XVvet kantved gant tiegozh ar Goskered ; kresket e dibenn ar XVIIvet gant ar prezidant Le Peletier, mab unan eus ministred Loeiz XIV, hag adkempennet en XIXvet. En dro dezhañ, e c'heller pourmon e-barzh al liozhoù bras, dezho leurennoù liesderezek o tiskenn betek ar sterig, ar Bo. E diabarzh ar c'hastell ez eus, a lavarer, arrebeuri, tabezerezh, hag ul levraoueg a dalvoudegezh dastumet gant Claude Le Peletier a gemeras plas Colbert e Versailles.

Distroet da Lokmikael e voe echuet an emvod gant un tamm pediñ ha kanañ. Per Even en deus troet kanennoù latin ha kempennet-kaer anezho war an tonioù gregorian. Degouezhout a reas neuze tri c'hrennard Gwion, disoc'h ganto o devezh skol.

N'em eus ket gouezet hag-efñ e oa bet kollet c'hoazh e hent gant unan bennak en ur zistreiñ d'ar gêr !!.

KELEIER.

1. TESTENN AR PAB.

Kaset eo bet ganin testenn brezhonek-gallek Yann-Baol II diwar-benn an isdarnadoù-tud da gannad ar Pab e Paris, Monsignore Lorenzo Antonetti. Bet em eus digant e sekretour ul lizherig hegarat o trugarekaat ac'hanomp evit an droidigezh hag ar gasadenn-se.

2. An Aotrou Bourdellez.

Ar re o defe c'hoant ober un tamm plijadur d'an Ao. Bourdellez a c'hellfe skrivañ dezhañ ur gerig berr ur wech an anzer. Ne c'hell na lemm na skrivañ, na sevel e-unan diouzh e wele, ha mil vat a ra dezhañ kaout keleier. Evel-se e wel n'eo ket bet disofjet gant e genvreudeur. (e chomlec'h : ti-tetred Sant Josef, 22570. GWAREG.)

3. Kendalc'h Keltiek Lesneven (24-29 a viz Gouhere).

Dont a raio beleien eus Iwerzhon ha Bro-Gembre. Ha sur-mat pastored protestant, ha marteze beleien anglikan (e Kembre : Yr Eglwys yng Nghymru). Kinnig a ran lidañ un ofis ekumenek etrezomp, ennañ marteze un oferen, a vefe kenlidet neuze gant ar veleien gatolik hepken. Kaoz a zo ivez da sevel e Lesneven ur vreuriezh speredel etre holl veleien ha pastored ar broioù keltiek. Petra a soñjit ? Darempredoù am eus dija gant beleien eus Kembre evit-se.

4. Kampig katekiz ar vugale, e miz Eost.

12 bugel a zo enskrivet. Marteze e vo muioc'h c'hoazh. Ma anavezit familhoù dedennet grit bruderezh evit an devezhioù-se (e Rostren e vo, eus ar merc'her 2 a viz Eost d'ar sadorn 5, evit bugale ha krennarded, 7-14 vloaz.)

oo

EMVOD MIZ MEZHEVEN.

Dalc'het e vo d'an 19 a viz Mezheven e Manatti MINIC'HI LEVENEZ dalc'het gant Job an Irien, e presbital adkempennet TREVLENEZ 29, 220, e-kichen Landerne, 8 km e gevred da Landerne. Ar re a zo o tont eus Treger pe eus Kerne a c'hello tremen dre Sizun, kemer an D 33 (Sizun-Daoulaz), ha treiñ war an tu dehou e kroazhent an Trehou.

N.B : lakaet eo bet an emvod d'al lun 19, daoust ma oa bet divizet an 12.6. da gentañ, p'ogwir e soñje dimp (beleien 'kostez Rostren) e oamp dalc'het d'an 19. Met libr e oamp e gwirionez, ha gwelloc'h eo mirout neuze an trede Lun evel kustum.

Roll an devezh :

- 10.00 : pedenn digeriñ.
- 10.45 : klozadur war an isdarnadoù-tud.
- 11.15 - 12.15 : displegadenn gant Yann Talbot war deologiezh ar bedenn eukaristiel.
(me a vo en eur en taol-mañ, rak n'em eus ken a gentelioù, emañ va skolidi vras o prientiñ o bac...)
- 12.15 : ofis kreisteiz.
- 12.30 : pred a-gevret.
- 14. : baleadenn. Job an Irien a ziskouezo dimp ar pezh a zo da welout en tro-war-droioù.
- 15.45 : distro. Buhez ar genvreuriezh.
- 16.30 : pedenn evit echuiñ. Banne kafe. Diwezh ar vodadeg.

Pedet oc'h da gellgomz da Job an Irien a-raok ar 17 a viz Mezheven m'emaoc'h e soñj mont d'an emvod (pellgomz : 98 85 15 66).

A greiz kalon. Yann Talbot. sekretour.

BELEIEN E BREIZH.

Rostren, d'an 10 a viz Gouhere 89.

KENVREURINZH SANT ERWAN.

Yann Talbot.

Presbital 22 110. Rostren.

Pg : 96. 29. 01. 55.

KELC'HLIZHER Niverenn 22.

Kenvreudeur vat,

Er follenn-mañ e kavoc'h un danevell diwar-benn hon emvod diwezhañ e manatti "Minic'hi Levenez", war barrez Trevlevenez, e-kichen Landerne, dalc'het d'al Lun 19 a viz Mezheven. 9 a dud a zo en em gavet eno, degemeret c'hwek gant Job An Irien, a zo e penn ar greizenn speredel-se.

Aliañ a reomp ar gristenien o devefe c'hoant da fremen un nebeut devezhioù en ur aergelc'h kristen ha breizhat da c'houlenn bod digant hor breur Job an Irien. Erru-mat e vezint. Ni, kristenien e Breizh a rank reiñ un testiñ a gengarantez wirion hag a gonlabour. Ma lezomp a gostez evit ur pennad ar pezh hon disparti war draoù 'zo, e roomp ur skouer dreist a gengomprenusted.

Diouzh ar beure hon eus studiet kelennadurezh doueoniezhel ar bedenn eukaristiel, en ur labourat war an testennoù a implijomp evit an oferenoù. Merzet hon eus ez eus ur frammadur damheñvel gant an holl bedenoù-meur, hag hon eus aze un teñzor speredel evit hol labour abostolel e Breizh, awenet gant ar Spered Santel.

Kanañ a rejomp goude-se Ofis kreisteiz e chapelig ar manatti, aozet a-ratre evit ar strolladoù evel hon hini. Merenn a gemerjomp neuze a-gevret, gant kalz a levenez speredel en hor c'halonoù, o varvailhat hag o fentigellat eeun ha didro.

Graet ganimp ar skaotadenn e kinnigas dimp Job An Irien hof blenian en tro-war-droioù. Neur a savadur relijiel dibar a vez kavet er c'hornad-bro-se.

Da gentañ-holl e weljomp keriadenn hag iliz brudet Ar Merzher (La Martyre) dediet da Sant Salatin, roue Breizh. Ur geriadenn vrudet e oa er grenn-amzer abalamour d'ar foarioù. Gwechall e veze dalc'het aze unan eus foarioù brasañ Europa ar c'hornog, ur foar etrevroadel en ur stumm. Ur blasenn vras a oa, hag e-kichen, an iliz, savet er XVvet kantved, dediet d'ar roue merzher Salatin, rak eno, hervez an istor, e voe merzheriet ar roue Salatin en IXvet kantved. Re a draoù a zo en iliz-se evit hen displegañ amañ. Gwelloc'h eo deoc'h mont war al lec'h evit gwelout ! Ur skouer eo eus savadurezh ilizoù Bro-Leon, war harzoù Kerne, etre an XIIIvet hag ar XVIvet kantved. D'ar c'houlz-se e oa pinvidik-mor ar c'horn-bro-se hag o devoa c'hoant ar barrezianiz da ziskouez nerzh o feiz gant ar pezh e oant barrek da sevel.

Boude-se e rejomp un arsav en iliz Ar Roc'h Morvan (La Roche Maurice), bleniet gant person ar barrez. Bemnoz Doue dezhañ. Savet er XVIvet kantved e-kichen an Elorn hag ar c'hastell, ez eo brudet abalamour d'ar garnel a zo eor vered gant un enskrivadur a laka an nen da brederiañ : " Je vous tue tous !" (Mouezh an Ankoù !). Ar peurrest eus an iliz a zo ganti merk an azginivelezh breizhek (XVI-XVIIvet), gant sternaoter, gweronoù-liv, delwenoù, a dalvez bezañ gwelet. Kit d'ober un tamm tro dre eno e-pad an hañv, plijadur a gavoc'h.

Evit echuiñ hon eus gweladennet iliz parrez Dirinonn, degemeret ivez gant ar person. Bemnoz Doue dezhañ ivez. Dediet eo an iliz-se evel-just da Santez Nonn, a vez sellet evel mamm Sant Dewi, patron bras Bro-Gembre (Ty Ddewi e Kembre, e-lec'h m'emañ unan eus kaerañ ilizoù-meur Breizh-Veur) N'eo ket bet morse Sant Dewi e Breizh, da'm soñj-me da vihanañ, ha ne ouzon ket ha peursur eo e vefe bet Santez Nonn lennebet en hoñ bro. Met sa a ziskouez e oa darempredoù stank gwechall etre an holl vroioù keñtiek. E-kichen an iliz ez eus ur chapelig dediet da Santez Nonn, gant bez-maen ar santez, hag un diskouezadeg diwar-benn istor ar barrez.

Adkempennet eo bet penn-da-benn an iliz-parrez ur pemzek bloavezh bennak 'zo hag adlivet an holl daolenoù aoter. Bremañ o deus ur stumm estlammus, peadra da reiñ lorc'h da Zirinonniz.

War hent an distro hon eus gwelet, evel-just, al labourioù kaset da-benn gant hor mignon Job hag e geneiled en iliz Trevlevenez. Un ilizig izel, stumm ar vro dezhi, a oa war var da vont d'an traon, hag a zo bet adkempennet. N'eo ket echu al labour c'hoazh met war an tu mat emañ.

Distreiñ a rejomp neuze d'ar manatti, hag e studijomp buhez ar genvreuriezh, dreist-holl oberennoù an hañvezh. Ul levraoueg a zo er manatti. M'ho peus ezhomm levrioù, pladennoù, kasedigoù e brezhoneg, skrivit da Job An Irien.

BUHEZ AR GENVREURIEZH.

1. BODADEG MIZ GWENGOLO : e presbital Mael-Karaz e vo dalc'het, d'al lun 18 a viz Gwengolo. Kaset e vo deoc'h ur gouviadenn en a-raok.

2. UL DEVEZH-STUDI a vo aozet d'ar Sadorn 7 a viz Here, evit ar familhoù, ar vugale, ar veleien hag al leaned.

Komzet e vo eus se diwezhatoc'h, pa vo bet graet ar c'hamp katekiz e miz Eost, rak komzet e vo gant ar gerent evit klask adsevel en ur stumm bennak Emglev an tiegezhioù.

3. LENDALC'H KELTIEK LESNEVEN.

N'ankounac'hait ket dont da Lesneven etre ar 24 hag an 29 a viz Gouhere. Ur genvreuriezh a vo aozet evit kristenñ ar broioù keltiek.

4. DAREMPREDOU ETREVROADEL :

Resevet hon eus un embannadur italianek " Atti del Convegno : Comunità religiose e minoranze linguistiche oggi in Italia", ur rentañ-kont eus al labourioù sevenet en Italia diwar-benn an Iliz hag an isdarnadoù-tud (minorelezhioù) ar vro-se. En Italia ez eus meur a vroadelezh hag a yezh, hag an Iliz a gemer preder start gant pep hini anezho. Se a ziskouez hon eus skouerioù da gemer er maez eus Stad Bro-C'hall.

5. KAMP KATEKIZ EVIT AR VUGALE : (2 - 5 a viz Eost, e Rostren).

Kresket eo bet c'hoazh niver ar vugale enskrivet : 21 a zo bremañ. Sebezus !! Ha c'hoazh n'hon eus ket graet bruderzh. Da vloaz e vo graet adarre na blij d'ar vugale, hag e vo div wech muic'h a berzhidi ; padout a raio ur sizhunvezh a-bezh. Setu perak hon eus ezhomm muic'h-mui eus ul levr katekiz garrion (CE1-CE2 evit kregiñ) hag eus kantikoù nevez evit ar vugale.

6. AL LEVR OFERENN.

Emañ al levr " Levrig ar c'hristen" e ti ar mouler e Speied. 170 pajennad a vo ennañ. Moulet e vo 2000 skouerenn. Gwerzhet e vo 60 lur gall. Distao 20% evit ouzhpenn 10 skouerenn, ha 25% evit 50. Hep mizoù kas. Dont a raio er-maez e deroù miz Gwengolo. Tu a zo da rakprenañ dija

A greiz kalon evit Doue ha Breizh.

Ar sekretour : Yann Talbot.

KENVREURIEZH SANT ERWAN.

Yann Talbot, Presbital, 22 110 Rostren.

Pg : 96 29 01 55.

Rostren 13. 8. 89.

KELC'HLIZHER niverenn 23.

Kenvreudeur vat,

Kas a ran deoc'h keleier diwar-benn darvoudoù an hañv-mañ hag obererezh hor c'henvreuriezh.

1° Kamp etrekeltiek ar vrezhonegerien :

Dalc'het eo bet e Skaer eus an 12 d'an 22 a viz Gouhere. 150 a dud a zo bet tremenet, un ugent bennak a tugale, 100 a dud bendeze evit ar c'hentelioù, un dek bennak a yerc'hed eus kembre o teskiñ hor yezh. 6 live kentelioù a oa, ur pemzek bennak a gelennerien. Me em eus graet war dro al live uhelañ, kentelioù a armerzhouriezh. Un nerzh nevez, souezhus, a zo gant an nevez-vrezhonegerien-mañ, start enno ar c'hoant da vont war-rack, ha stummet-mat war ar yezh hag ar sevenadur. Me a oa va-unan evel beleg eno, o klask reiñ un testeni a vuhez kristen. Pouezus-kenañ eo dimp bezañ e-mesk ar stourmerien-se, anez da se e vo an Iliz muioc'h-mui estren ouzh ar re a ra Istor Breizh da zont. Merzet em eus eo deuet tud an Emsav broadel estren kenañ (darn a-enep-kremn) ouzh ar feiz hag an Iliz. Dre hon faot eo. Ne voemp nemet 6 pe 7 en oferenn d'ar Sul war ar c'hamp ; arouezius eo. Poent-bras eo dimp adstagañ gant pobl Vreizh o stourm. Ar blijadur hon eus bet ivez da gaout devezh ar skrivagnerien, peogwir eo bet roet priz Langleiz d'hor mignon Job Lec'hvien evit e droidigezhioù diwar an hebreeg. Soñjal a reomp ivez e Pipi Gall en defe bet kement a blijadur o welout e labour enoret ha prizet.

2° Kendalc'h keltiek etrevroadel :

Dalc'het eo bet e Lesneven eus ar 24 d'an 29 a viz Gouhere. 300 pe 400 a dud moarvat a oa deuet eus ar 6 bro keltiek, dreist-holl eus Kembre, Iwerzhon, ha Skos. Breizhiz a oa ivez evel-just, ouzhpenn 100 sur-mat ; met kalz a ensaverien n'int ket deuet. Perak ? Diseblanted ? diouer a arc'hant ? Nebeut ivez a dud yaouank etre 16 ha 20 bloaz. Se n'eo ket mat. Plijus e oa an danvez : ar broioù keltiek dirak Europa da zont e 1992. Prezegennoù en holl yezhoù keltiek ; abadennoù da noz, lan, batzhoniezh, sonerezh. Nozhvezhioù keltiek en ostalerioù ; daremredoù etre keneiled eus ar 6 bro geltiek, diskouezadegoù levrioù, diskouezadegoù arz hag all. Klasket hon eus, evel kristenien, diskouez emaeomp ivez war an dachenn : oferenn hag ofis bendeze diouzh ar beure e brezhoneg, iwerzhoneg, kembraeg. Un ofis ekumenek d'ar Gwener 28, da 18 eur, evit echuiñ, gant 80 a dud. Pevar beleg a veze o kenferenniñ, an Tad S. O. Laoghaire, Jezuist iwerzhonat, an Tad E. Bleuzen breizhat, Yann Talbot, an Tad O Rian, Iwerzhonat, kembraeger, o kelenn e Kembre. Tremenet eo ivez Paol Kalvez, Youenn Troal, M. Ar C'hollo, Job an Irien, ha Y. Olier.

Un dra a zo sklaer : evit pezh a sell ouzh ar veleien, er maez eus eus ar veleien emskiantek (= stummet) n'eus mui a vreizhadelezh gant ar we all. O spered a zo aet gant paganiezh Bro-C'hall, ha mat pell 'zo ; gallaoued ha netra ken ; ne ouzont mui netra koulz lavarout.

Labour vat ' zo bet graet gant ar C'hendalc'h. Met an danevelloù gant ar c'helaouennoù (Quest-France, Telegramme), ha gant FR3 Breizh a zo bet nul. Nul penn-da-benn. An abeg : ar pezh a zo sevenadurel a vez lezet a gostez ganto. Dek gwech muioc'h a don o deus graet da Festival An Oriant peogwir n'eo ket awenet gant ar spered broadel.

Menegomp evelato labour kalonek paotred RBO Kemper (Sten Charbonneaux), Radio Arvorig Roazhon (Mikael Baudu) ha Radio Ereiz Breizh (H Ar Beg).

3° Marv an Ao. Per Bourdellez, beleg.

Marvet eo hor c'henvreur, priol a ener ar Vreuriezh, d'al Lun 24 a viz Gouhere, d'an oad a 82 bloaz, goude 3 bloavezh a boan gorf ña spered, war e wele, e Gwareg, skoazellet gant pedenn ha sikour kalonek al leanezed.

Ne roin ket amañ un danevell eus e vuhez ; ur pennad a skrivin evit "Al Liamm". Hor nestr e oa, hor blenier. Evidon-me eo bet, gant an A. E. Ar C'hlavez, an daou veleg o deus va c'ha set war-du ar velegiezh. Desket en doa din krediñ, kompren, gouzout, karout, hag ober. N'eus ket bet, da'm soñj, en hon eskopti, ur beleg eveltañ

en ugentved kantved.

D'e obidoù e chapel al leanezed e Gwareg, d'ar Merc'her 26 a viz Gouhere (Deiz Gouel Santez Anna), e oa deuet un 40 bennak a veleien, un toulladig tud ivez, hag emsaverien me a oa deuet eus Lesneven gant an Tad S. O. Laoghaire, an Dell I. Martin, ha Roisin O Shee. Ne oa ket deuet avat kals eus ar skolidi stummet gantañ. Disoñjet e vezer buan... Fiziet en devoa en I. Motreff hag ennon ar garg d'ober war-dro e obidoù. Braet evel m'en devoa goulennet. Kaer e oa a soñj din, ha don. Evel-just ne glote ket marteze hol lidoù gant "spered ar bed", met n'hon eus ket da blegañ da "spered ar bed". Ar re a fell dezho bezañ gallaoued a c'hell bezañ ; met an A0. Bourdellez ne oa ket ; me kennebeut.

4°. Kamp Katekiz ar vugale :

Ugent bugel etre 7 ha 13 bloaz o deus kemeret perzh en hor c'hamp katekiz kentañ, e Rostren. "Istorel e vimp" evel ma lavare unan eus ar vugale... 3 katekizer a oa, me, Tepot Gwilhemot ha Benead, 2 geginerez, Marie-Thérèse Rouxel hag Armande Biziou. Turiaw Ar Henteg a oa klafviki, n'en devoa ket gallet dont, met kaset en devoa dimp testennoù evit ar c'hentelioù. Diouzh ar beure goude ar bedenn, kentelioù, rannet e tri rummad hervez oad ar vugale. Goude merenn baleadennoù. Bet omp bet o kourenkañ e lenn Groñwel, hag o redek war reier traonienn ar C'horonk e Sant-Nigouldom-Duod. D'ar merc'her e oamp daou ugent ouzh taol gant ar gerent, ha d'ar sadorn un hanter kant bennak evit an aferenn e chapel Kampostal, kenlidet ganin ha B. Boterel. Tri bugel o deus graet o Fask kentañ. Laouen-tre e oa ar vugale, entanet, brezhoneg mat ganto, c'hoant dezho donaat o feiz. Gourc'hennoù da Skolioù Diwan, d'ar skolioù stad diwezhek, ha d'ar gerent brezhonegerien. Muioc'h a labour katekizañ a zo bet graet e tri devezh eget e daou viz katekiz a-hend-all. Beilhadegoù bep boz, kan, istorioù, kontadennoù, c'hoarioù, sketchoù, un tantad ar Gwener da noz. Un taol espar evit an taol kentañ. C'hoant o deus holl da zistreiñ da vloaz. Plijet-tre ivez ar gerent ; devezhioù all a vo aozet eta e kerz ar bleavezh 89-90 evit en en gavout a-gevret adarre. E miz Eost 90, mar plij gant Doue, e pado 6 devezh ar c'hamp katekiz, hag e vo tregont a vugale. Ret eo dimp mont war-raok ; echu eo bremañ mare ar giladenn hag an diskar evit ar yezh hag ar feiz. Mare an adsav eo ; emomp o vont da adc'hounit tachenn tamm-ha-tamm ; emañ an amzer da zont etre hon daouarn mar bez bolontez Doue. Eus lain an Neñvoù e lavar dimp hor c'henvreudeur aet da Anaon (Yann-Vari Perrot e penn kentañ) : "Kit war-raok, Doue ho skoazello"...

5. Bodadeg Miz Gwengolo :

E Mael-Karaez e vo dalc'het d'al Lun 18 a viz Gwengole. Kaset e vo deoc'h ur gouviadenn resisoc'h e derou ar miz.

A greiz kalon.

Yann Talbot.

G.S. : Dennozh Doue da A.Piriou da vezañ deuet da welout ar vugale er c'hamp katekiz. Konfortus eo evidomp gwelout ar genvreudeur ouzh hon harpañ en hol labour avielañ.

KELC'HLIZHER Niverenn 24.

Kenvreudeur vat,

Gant miz Gwengolo, ar skol oc'h adkregiñ, ar strolladoù a bep seurt o reif lañs adarre d'o oberennoù, e adkrogomp ivez gant hor bodadegoù.

Da gentañ e roin deoc'h un nebeut kelañer :

1°. KEMBRE. E miz Eost ez on bet e Kembre etre ar 16 hag an 31; heuliet em eus ar staj kembraeg e skol-veur Dewi Sant e Llanbedr Pont Steffan (e kontelezh Dyfed, 40 km eus Aberystwyth). Gwellaet em eus va barregezh war ar yezh, met merzet em eus ivez traoù pouezus evit an Emsav. 9 sizhunvezh e pad ar staj (16 a viz Gouhere - 9 a viz Gwengolo), 6 eurvezh kentelioù hag embregerezh bemdez, gant un eurvezh el "labordy iaith", ("labourva yezh"), ar "galacuerioù" war an divskouarn. Poelladennoù d'ober bep noz evit an deiz war-lerc'h. Ne oa ket vakafisoù !!! Skuizh-divi an devezh kentañ, darbet din mont kuit gant an digalonekaet ma oan. A-druga rez Doue on chomet. Rak desket em eus kalz : 40 ger nevez bemdez, 600 e-doug div sizhunvezh. Ar re a ra ar staj a-bezh a zesk war-dro 3000 ger ha tro-lavar.

Setu amañ ar gentel : an hini a fell dezhañ deskif ur yezh a rank kemer poan evit se, ha labourat a-lash-korf, a-lash-spered. E Breizh, 'm eus aon, n'omp c'hoazh nemet amatourien, dilettante. Kembreiz 'zo aet da studiañ en Israel an doare da gelenn ar yezhoù : e tri miz e tleer lakaat an dud nevez degouezhet er vro da gomz hebreeg mat a-walc'h evit en em zibab er gevredigezh/

Hor stajoù-ni e Breizh n'int ket hir a-walc'h ; ne vez ket lakaet ar stajidi da gomz a-walc'h diouzhtu, zoken ma reont faziou. Hag ouzhpenn-se ne vez ket graet a-walc'h a eurvezhioù en un devezh, nag implijet hentennoù modern (nemet e crash course skol-veur Roazhon), daoust ma z eus bet gwellaet an traoù war ar poent-se e KEAV.

Un dra all am eus merzet : dont a ra da vezhañ talvoudus deskif kembraeg : studierien ' zo a rank gouzout a-walc'h a gembraeg ma vennont en em enskrivañ e kevrennoù 'zo eus ar skolioù-meur, da skouer e Llanbedr, en Aberystwyth, e Bangor. Recù all a rank proufiñ e ouzont a-walc'h a gembraeg ma c'houlennont ur post-labour (implijidi-stad, implijidi ar c'hontelezhioù, ar c'hêrioù, zoken e la bouradegoù ' zo.) E Breizh pet a dud a rank gouzout brezhoneg evit kaout labour ? Aze emañ unan eus hor gwanderioù.

Hag ouzhpenn : er staj kembraeg e oa 2 Vreizhad all, yaouank, paotr ha plac'h, studierien, ar studierez ne ouie ket brezhoneg !! Met bez e oa ivez 2 japanez, tri alaman, un amerikanez, ur ganadianez, 5 pe 6 saoz, hag un israelad, war an 60 stajiad. Se a ziskouez eo anavezet Kembre en diavez.

Ar blijadur am eus bet ivez o lavarout bemdez an oferenn e brezhoneg hag e kembraeg en iliz Itron Varia ar Menez Karmel. N'eus ket kalz a gatoliged er vro, ur c'gant bennak, met 80% a zeu d'an iliz bep suñ !!. Emañ Katoliged Kembre o paouez kaout ul levr oferenn e kembraeg evit holl sulioù ar bloavezh. Graet eo bet a labour gant an Tad J. Fitzgerald, kelenner war ar brederouriezh e skol-veur Aberystwyth. Brav-kenañ eo an embannadur-se. Ma c'hellfemp-ni, Breizhis kaout unan evel-se...

2°. SKOLIOU DIWAN HA SKOLIOU PUBLIK DIVYEZHAK.

Ouzhpenn 800 bugel a zo bremañ er skolioù kentañ derez Diwan, pe er skolioù divyezhek publik. 588 a zo e Diwan, 15% muic'h eget warlene. Ur skolañ a zo e Brest, gant daou glas, ur pemvet (5vet) hag ur c'hwec'hvet (6vet), gant 18 skolañ en holl. Er skolioù divyezhek publik ez eus ouzhpenn 300 bugel, 20% muic'h eget warlene.

Setu ar gudenn : gant piv hag e peseurt yezh e vez katekizet ar vugale-se ? Eiv a gemer preder gant o stummadur kristen ? Hervez pezh a ouzon n'eus ket kalz anezho hag a vefe roet dezho ur stummadur kristen en o yezh...

Menegiñ a ran e kaver studiadennoù talvoudus diwar-benn ar "yezhoù rannvro" e niverenn diwezhañ "Le Monde de l'Education" ; gwelout a raer e-barzh penaos emañ kont e Bro-C'hall evit ar brezhoneg, an euskareg, an okitaneg, ar c'hatalaneg,

ar c'horsikeg, an elzaseg, ar flandrezeg, er skolioù. N'eo ket digor-tre politikeresh ar stad c'hall war ar "yezhoù rannvro", daoust da c'houlennoù an UNESCO ha Parlamant Europa.

3°. AL LEVR OFERENN.

Et ti; ar mouler emañ c'hoazh al levrig oferenn "Levrig ar C'hristen"; dale a zo bet gant ar vakafisoù. Serret e oa an ti a ra ar goloioù. Ur golo plastik a vo war al levrig, 170 pajenn ennañ, gant ordinal an oferenn, testennoù 'zo eus ar Skritur sakr, pedennoù hag e-leizh a gantikoù eus an tri askopti, kantikoù hengounel ha kantikoù nevez. Koustañ a raio 60 lur da brenañ. Dont a raio er-maez war-dro an 20 a viz Gwengolo.

BODADEG MIZ GWENGOLO.

En em vodañ a raimp en taol-mañ e presbital MAEL-KARAEZ, d'al LUN 18 a viz Gwengolo.

Er bloaz-mañ em eus kentelioù e Kampostal betek 12.20 bep Lun. Diaes e vo veuze evidon. En taol-mañ avat e lezan ar vodadeg d'al Lun evit chom hep direnkañ an traoù. Met kregiñ a raio an emvod da greisteiz hepken. Kanet e vo an ofis, ha warlerc'h-se e vo debret. Goude merenn e vo graet labour studi. Schuif a raimp gant an adverenn da 16.30.

Peogwir n'em eus kentel ebet d'ar Gwener, daoust ha g-ef e vije tu da lakaat an emvodoù er bloaz-skol-mañ bep eil Gwener eus ar miz ?

Sed amañ ara roll-labour :

A. Skaozeadenn ganin diwar-benn kelennadurezh an Iliz war ar gevredigezh hag an ekonomiezh. Gallout a rit adlenn trede pennad (Caput III) diskleriadur pastorel Vatikan II Gaudium et Spes (n° 63 betek 72)

B. Buhez ar genvreuriezh.

- al labour da seveniñ e 89-90.
- an emvodoù gant an tiegezhioù. Reifiñ lañs adarre da Englev an tiegezhioù.

Pellgomzit da FR. Tomaz a-benn ar Sadorn 16.9. m'emaoc'h e soñj dont d'an emvod. (96. 24.63.04..)

A greiz kalon ganeoc'h.

Yann Talbot.

Kenvreudeur vat,

Adkroget hon eus gant hor bodadegoù, e Mael-Karaez e voe, d'al Lun 18 aviz Gwengolo. Un deg bennak edomp, evel boaz. Kroget hon eus da greisteiz gant an ofis, ha war-lerc'h-se hon eus merennet a-gevret er presbital; ar pred a oa bet aozet a-zoare gant tud-kar ar person. Goude hor pred e weladennjomp un tamm iliz Mael-Karaez, a zo bet adsavet war-lerc'h an tangwall en devoa distrujet an doenn hag an diabarzh. Kalz a vrezhoneg a zo bet skrivet war ar gwerennoù-liv, a-drugarez da berson Mael d'ar c'houlz-se. Ra vo meulet ha ~~trugarekaet~~...

Goude-se hon eus studiet diazezoù an armerzhouriezh (ekonomiezh). Adc'hraet em eus al lodenn gentañ eus ar c'hentelioù uhel a ris hevlene e Skuer e Kamp KEAV. Un digarez da studiañ kudennoù ar bed a-vremañ ha da zeskiñ gerioù brezhonek nevez.

NUMER :1. Bodadeg ar re yaouank e Plouneour Menez.

Brohonegerien yaouank a zo aet da Goupostella e niz Nost évit kejañ gant ar Pab. Divizet o deus en em adwelout ha sevel ur strollad etrezo evit krefnvaat o nerzh ha soutañ o feiz. Ur vodadeg kentañ a zo bet dalc'het e Plouneour-Menez d'ar Sul 17 a viz Gwengolo. Splann ha tomm e oa an amzer. 6 a dud yaouank a oa deuet en taol-mañ; sur-mat e kresko an niver dre ma kresko an Emsav. Un oferenn a zo bet kenlidet gant Youenn Troal ha ganin en abatti ar Releg. Tud diwar-dro a oa deuet ivez, ha plijet int bet gant holl lidoù en hor yezh. Bremañ en em vodo ar re yaouank bep Sadorn diwezhañ eus ar niz, dres a-raok ma krogo bodadeg Kristenien Breizh, en doare ma c'hellho an holl emsaverion gristen kejañ un tamm a-gevret.

2. Dibenn sizhun ar yaouankizoù e Timadeug.

1600 a dud yaouank o tont eus Breizh hag ar rannvroioù tro-dro o deus tremenet an dibenn sizhun (30.9-1añ.10) en abatti Timadeug, e-kichen Roc'han (Bro-Wened)? Deuet e oa an tad Guy Gilbert, aluzenner al "loubarded"e Paris. Graet en deus berzh, a-hervez, ha darn a zo bet feuket gant e stum hag e gomzoù... Sur-mat he deus graet ar vodadeg vras-se nil vad d'ar re yaouank, dreist-holl d'ar re a zo stag enno ar feiz en o c'hreiz, pe d'ar re a zo o klask o hent. Kalz avat, asofij din, a oa deuet muioc'h gant ar c'hoant gouzout ha klevout traoù dreistordinal. Kuriusted... Petfa a chomo neuze enne, ma ne gemeront ket un engouestladenn wirion e buhez an Iliz ?

3. Kuzul Ar Brezhoneg. K.A.B. en deus dalc'het e emvod reoliek e Pondi d'ar Sul 1añ a viz Here. Un deg bennak a dud a oa deuet. Komzet ez eus bet eus buhez ar c'hevredigezhioù. Daoust hag-eñ ez eo reñs a-walc'h hentenoù ha doareoù-labour K.A.B. ? Pa vez gwilet penaos e vez renet an obererezhioù sevenadurel e Kembre, e kaver emañ pell Yann diouzh e gazeg en hor Breizh garet...

4. Gouel Keltiek e Kembre :

Eus an 27.10 d'an 3.11 e vo ur Gouel keltiek bras e Norz Kembre, e Canolfan Iath Genedlaethol Nant Gwrtheyrn (Kreizenn yezh vroadel bro-Gembre). Graet e vo kentelioù war ar yezhoù keltiek, Iwerzhoneg, kerneveureg, brezhoneg dreist-holl.

B O D A D E G N I Z H E R E .

Hevlene e vo dalc'het hor bodadegoù an eil gwener eus bep niz, rak me n'on ket dieub d'al lun.

Hon emvod kentañ a vo dalc'het e presbital MURCRIST-NOBLOU, d'ar Gwener 13 a viz Here.

Roll an devezh :

10.30 : engav. Pedenn digerif.

10.45 : kentel ganin war diazezoù an armerzhouriezh (kendalc'h).

11.30 : labour war testenn ar Sened meur (Gaudium et Spes, n° 63-72)

12.15 : Pedenn kreiz an deiz. 12.30 : Merenn.

14 : Daleadenn. 15 30 : Buhez ar genvreurezh. 16.15 : advercenn, pedenn, divezh.

Pellgouzit da Job Lec'hvien 96.36.50.38. a-raok ar Yaou 12.10. A galon. Yann Talbot.

Pellgomz 96. 29. 01. 55.

KELC'HLIZHER Niverenn 26.

Keneiled vat,

1. ENVOD MIZ HERE.

Ur rentañ-kont a gavot amañ da gentañ diwar-benn hon envod diwezhañ e Kergrist-Moelou. Dalc'het e oa bet d'ar Gwener 13 a viz Here e presbital Kergrist. Degas a ran deoc'h da soñj e vo dalc'het hon envodoù er bloaz-mañ an eil gwener eus bep miz. Plijadur hon eus bet o kaout en taol-mañ en hon touez Gwilherm Ar C'hamm, person Plesidi ha Per Bournot person Sant Nikolaz, o daou o keginañ evidomp...!! Diouzh ar beure e voe amzer ar studi : ur gentel ganin da gentañ war ziazesoù an armerzhouriezh, ha da c'houde studiadenñ M. Ar C'hollo war destennoù "Gaudium et Spes" (" de vita oeconomico-sociali"). Deskiñ a reomp kalz war ar brezhoneg ha war ar c'hudennoù kevredigezhel hag armerzhel.

Ur wech kanet ofis kreisteiz e voe servijet ar pred er presbital, ur gaoteriad meskl frêsk a oa bet aozet gant hor c'heginerien anpart evel neuz kentañ...

Da c'houde ez ejomp gant hor c'hirri betek lenn Kerne-Uhel, etre Tremargad, Peurit-Mintin ha Laruen, hag e valejomp un tamm war ribl al lenn, o heuliañ ar wenodenn, stanket avat gant drez ha brouskadoù, ken e rankjomp distreiñ buan a-walc'h war hor c'hiz, sirafignet un tamm hor c'hofoù-gar hag hon daouarn. Savet eo bet al lenn-se un dek bloaz bennak a zo evit degas dour da greiz Breizh. Dont a ra an dour diwar stêr bouezusañ ar c'horn-bro, ar Blañwezh. Tu a zo da vageal war al lenn savet-se, e-pad an hañv.

Distroet d'ar presbital e voe studiet ganimp kudennoù ar strollad, ha graet ur sell war buhez an Emsav. Echuet e voe evel boaz an envod gant ar lagnificat, hag ur banne kafe tomm da heul evit reiñ nerzh da vont gant an hent...

2. KELEIER HA BUHEZ AN EMSAV.

A. Kristenien Breizh. Degas a reomp da soñj e vez dalc'het ar bodadegoù d'ar pevare dibenn-sizhun eus pep miz. Bodadegoù ar re yaouankañ d'ar Sadorn ha d'ar Sul, ar re goshoc'h (ket ar re gozh evit c'hoazh !) d'ar Sul ha d'al lun. Ar wech diwezhañ e oa e Plouncour-Menez. Lavaret eo bet an oferenn da deir eur en iliz parrez, hag implijet evit ar wech kentañ "Levrig ar C'hristen". Mat e vefe d'al laiked kristen kemer perzh er strollad-se, d'an nebeutañ dre ar bedenn, ha dre skrid evit shoulmañ liammoù a gengred. N'eus nemet skrivañ da : Paol Kalvez, Lez Hinnog, Pempont (Paimpont) 35 380 Plelan-le-Grand.

B. LEVRIG AR C'HRISTEN.

Deuet eo al levrig er-maez a-benn ar fin. 2000 skouerenn a zo bet moulet gant ti-moulañ Keltia-Graphic e Speied. Gwerzhet e vez 60 lur ar skouerenn, gant un distaol evit ouzhpenn 10. Graet-mat eo bet al labour gant ar mouler.

N'eus ket bet graet kalz a vruderezh evit c'hoazh. Kaset ez eus bet avat keloù da holl gelaouennoù an Emsav. Bremañ e vo ret ivez kas keloù d'an holl strolladoù ha kevredigezhioù, hep disoñjal ar c'helaouennoù all evel Ouest-France hag an Telegramme (Ouest-torch hag an telebrann evel ma lavar tud 'zo...!!) Kaset em eus bet ul lizher da holl veleien ar rann brezhonek eus eskopti Sant-Brieg (ur 130 lizher bennak). Botek-hen n'eus nemet unan !! a gement en deus respontet evit goulenn ur skouerenn. Gant se n'eo ket sot-tre ar veleien dre amañ gant yezh o bro... Laiked dreist-holl, a-drugarez Doue, eo a c'houlenn al levr. Er maez eus hor strollad "Beleien e Breizh", n'eus bet nemet 6 beleg e Breizh o c'houlenn. War-dro 250 skouerenn a zo bet gwerzhet botek-hen. Un tamm bruderezh am eus graet evit al levrig e kreiz abadenn "Chadenn ar vro" war FR3 d'ar Sul 5.11. da greisteiz. Peñet e oan bet gant Mikael Baudu evit komz eus al levr e* skinwel ha divizout diwar-benn ar vuhez relijiel e Breizh gwechall ha bremañ. Marteze e teuo c'hoant bremañ da dud all da gaout al levrig p'o devo klevet komz diwar e benn en tele.

Ur skouerenn eus al levr an eus kaset ivez da gannad ar Pab e Paris,
o trugarekaat anezhañ evit an diskleriadur en deus nevez graet en UNESCO a-zivout
gwirioù ar is-darnadoù.

K. OFERENNOU BREZHONEK.

N'eus ket a-walc'h a oferennoù e brezhoneg en un doare
ingal. Koulskoude e vije tu, m'en em happfe muioc'h ar veleien war al laiked kristen a-du
gant ar yezh. Un oferenn bep miz da skouer e Kerne uhel a vije un dra vat. Ne vije ket
diaes da aozañ. Piv a grogo ? Kavet e vo tud evit sikour.

Me a zo bet goulennet diganin mont da lidañ un oferenn e brezhoneg e parrez
Sant Jos e Brussels, e miz Kerzu, evit ar vrezhonegerien a zo o chom eno hag an dud a zo
o tifenn hor yezh e bro-Velgia, desket brezhoneg ganto. Ur gevredigezh etrevroadel evit
difennerezh ar brezhoneg a zo bet savet e Brussels un nebeut bloavezhioù 'zo, ha labourat
a ra kalz. Sant Hos a zo ur sant breizhat (patron Lohueg eo) bet oc'h avielañ e Vallonia.

A-benn-ar-fin e vo aezetoc'h oferenniñ e brezhoneg e Botswana, e Malawi,
pe e Nepal eget e Breizh...!!

E. AR BREZHONEG E SKOL-VEUR ROAZHON.

Diwar ar gelaouenn "Bremañ" e tennan ar c'heleier-mañ : 42 studier a zo bet en-
skrivet betek-hen evit an DEUG brezhoneg e skol veur Keryann (Villejean) e Roazhon.
A-benn fin miz Du e vo 80. Tu a zo ivez da dremen an aotreegezh (al lisañs), ar vestro-
niezh, hag an doktorelezh.

Ar re a zo enskrivet evit an deug a zo yaouankoc'h (23 bloaz an oad keitat),
kalz anezho hachelourien nevez.

En DEUG e vez desket ar yezh da gentañ. Darn eus ar studierien n'ouzont ket anezhi
ervat en ur gregiñ. Da c'houde e vez desket dezho lennegezh, sevenadurezh, ha yezhoù
all (kerneveg, kembraeg, hag iwerzhoneg), hagoken un tamm galleg !! : evit an UV (unité
de valeur) anvet "lennegezh Vreizh e galleg" (littérature bretonne en langue française)
Kelennerien nevez a zo erru er bloaz-mañ er gevrenn : Gwennael An Dug, Frañsez Favereau,
Kenlabourat a raint gant ar gelennerien all : Per Denez evel just, ar patron, Kristian
Gwionvarc'h, ispisialour war an iwerzhoneg kozh, Yann-Ber Piriou ha Lukian Keggoad.
Kelennerien all a zeu ivez da reiñ un tamm skoazell ur wech an amzer : Alan Botrel hag
Herve ar Bihan, Gwendal Denez, mab-e-dad, Morwena Jenkin hag a oar kenkoulz kembraeg,
brezhoneg ha kerneveg, Gwennole Ar Menn eus ar CNRS, J.Y. Urien eus kevrenn ar yezhoniezh
(linguistics) bet skrivet gantañ nevez 'zo al levr pouezus : "La trame d'une langue"
diwar-benn ar brezhoneg, haneuze ur c'helenner iwerzhoneg nevez Diarmuid Jameson, hag a
zo barrek war ar brezhoneg ivez evel m'eo dleet.

Hetomp chañs vat eta da gevrenn geltieg skol-veur Roazhon.

B O D A D E G M I Z D U .

Dalc'het e vo emvod miz Du e presbital GWANAC'H
(Gomenec'h) etre Pontrev ha Lanvolon, e ti Aime Breton, d'ar Gwener 10 a viz Du. Kregiñ
a raio da 10 eur 30 evel boaz : pediñ, kentel armerzhouriezh, testenn Gaudium et Spes,
ofis da 12.15, ha pred. Goude se baleadenn.

Kasit keloù da Aime Breton, person Gwanac'h. Presbital.

22 290. Lanvolon. Dre skrid ! N'eus ket ar pellgomz en ti !

A greiz kalon. Ar sekretour.

Yann Talbot.

Kelc'hlizher niverenn 27.

Keneiled vat,

1. Rentañ-kont eus an emvod diwezhañ : Dalc'het eo bet ar vodadeg diwezhañ e presbital Gwanac'h (Goanac'h ?) e ti Aime Breton, e Bro-Dreger, d'ar Gwener 10 a viz Du. 11 a dud o deus kemeret perzh enni, en o zouez ar chaloni H. Le Dolloc'h o chom bremañ e Gwengamp.

Goude bezañ kanet unan eus kanaouennoù santel Job Lec'hvien, e voe graet ganin ur gentel armerzhouriezh ("science économique") diwar-benn ar marc'hadoù a gaver en armerzh ur vro gapitalour. Da heul-se e voe kendalc'het gant ar studiadenñ war "Gaudium et Spes" : ar vuhez ekonomikel ha kevredigezhel, gant an droidigezh graet gant N. Ar C'hollo.

Kanet ganimp ofis kreisteiz evel boaz, ez ejomp war droad betek an ti-devriñ er vourc'h e lec'h na voe servijet dimp hor merenn. Gweladenniñ a rejomp an tro-war-droioù goude ar pred : iliz Gwanac'h da gentañ, ha war-lerc'h, gant hor gweturioù, betek ar pontig war al Leñv, ma c'hoarvezas eno ur burzhud gant Sant Erwan, danevellet e levr prosez e santelezhadur. Un tamm bihan evel Moizez ("Moshe", gouez da Viti J. Lec'hvien !!) oc'h astenn e zorn war doureier mor ar c'horz (ar "Mor Ruz" sañset...) hag an doureier o tigeriñ a gleiz hag a zehou. Sant Erwan, heñvel ouzh Moshe, eta, o tremen er stêr ken didrabas ha tra, pa ne oa tu ebet da dreuziñ, gant an uhel ma oa deuet an dour da vezañ...

Gweladenniñ a rejomp ivez chapelig Sant Jakez, eus ar XVIvet kantved, stumm gotek flammennek dezhi, gant delwennoù e koad en diabarzh (serret e oa siwazh...), eus Sant Jili, sant Rok, ha Sant Nikolaz, hag ivez ur strollad kizelladurioù eus ar Skour-jezadur.

Gweladenniñ a rejomp ivez iliz Trevereg a-raok distreiñ d'ar presbital evit ur banne kafe, kanañ ar Magnificat, ha studiañ kudennoù ar genvreuriezh.

2. KELEIER. LEVRIG AR C'HRISTEN.

Kaset em eus ur miz 'zo 120 lizher bennak da veleien al lodenn vrezhonek eus eskopti Sant Brieg. Betek-hen em eus bet 2 respont. (Met lakaet eo bet an embann ivez war kannadig an eskopti ; marteze e teu o goulenn alese). Se a ra eta, er maez eus "Beleien e Breizh" evel-just, 1,66% eus ar veleien dedennet gant yezh istorel ar bobl ez int karget da avialañ...

Evit eskopti Kemper ha Leon em eus kaset 260 lizher. Bet em eus bet betek-hen 1 respont !!... Se a ra en eskopti-se 0,38% eus ar veleien troet gant yezh istorel ha sevenadur ar bobl ez int karget da heñchañ... !!

Evit eskopti Gwened em eus kaset er sizhun-mañ 134 lizher. Gwelout a rin er sizhun a zeu an c'fed eus ar gasadenn-se.

En holl eta em eus kaset 514 lizher evit reiñ da c'houzout embannadur al levr. Se en deus koustet din 1.130, 80 lur. Betek-hen n'em eus gounezet nemet 180 lur gant an holl lizheroù-se.

Niver ar veleien o deus bet al levr betek-hen : 26.

Niver al laiked o deus goulennet : 19.

Evel-just darn o deus prenet meur a skouerenn war-un-dro. En holl em eus gwerzhet 300 war an 2000 a zo bet moulet. Labour 'zo war ar stern evit dedennañ an dud gant teñzor o sevenadur !!

KRISTENIEN BREIZH : Dalc'het eo bet bodadeg ar re yaouank e Saint Brelade, e kumuniezh Leon Juda, d'ar sadorn ha sul 25-26 a viz Du. Bodadeg "an dud koshoc'h" a zo bet dalc'het e Kistinid, 26-27 a viz Du. 7 a dud o deus kemeret perzh enni.

BODADeg MIZ KERZU

Dalc'het e vo bodadeg miz Kerzu e presbital Rostren, d'ar Gwener 8 a viz Kerzu. Kregiñ a raio da 10.30 evel boaz.

10.30 : pediñ ; 10.45 : studiadenñ : armerzhouriezh, ha "Gaudium et Spes".

12.15 : Ofis kreisteiz. 12.30 : pred.

14 : Baleadenn en dro da Rostren.

15.30 : buhez ar genvreuriezh.

16 : pedenn echuiñ ; adverenn. Diwezh an emvod.

Pellgomzit din mar plij m'emaoc'h e-sonj kemer perzh er vodadeg.

KELC'HLIZHER Niverenn 28.

Kenvreudeur vat,

Derc'hel a ra hor c'henvreuriezh da labourat ha da gemer perzh e buhez an Emsav.

Hor bodadeg diwezhañ a zo bet dalc'het e presbital Rostren, d'ar Gwener 8 a viz Kerzu, deziz gouel engehentadur dinamm ar Werc'hez.

Kroget eo bet an traoù da 10 30 gant ur bedennig, ha war-lerc'h e voe graet ur gentel armerzhouriezh gant Yann Talbot diwar-benn an embregerezhioù hag o statud e keñver lezenn. Kanet ganimp ofis kreisteiz gant psalmoù Loeiz Ar Flaoc'h, ez ejomp betek maner Sant Pern (Sant Peran) war barrez Groñwel, ma predjomp eno, laouen an holl ha bev an divizoù...

Da heul hor merenn ez ejomp da weladenniñ maenhir (peulvan) Groñwel, a zo unan eus ar re uhelañ er rannvro. Neuze e rejomp un tamm tro war ribl ar "baraj", lenn Groñwel, stouvet etre an daou vrezel evit ingaliñ red-dour ar c'hanol ha reiñ dour da Germe uhel. Gwall izel e oa al lenn, gant ar sec'hor a zo bet. Echuiñ a rejomp hon troiad gant chapel Itron Varia Lannsalatin war barrez Paoul. Lec'hiñ en un endro blijus, ez eo ar chapel-se unan eus ar re gaerañ er c'horn-bro, savet e derou ar XVIIvet kantved, e stumm an azginivelezh vreizhek, delwennoù nevez enni, rak ar re a oa en a-raok a zo bet laeret nevez ' zo siwazh, hadreist-holl delwennoù ar stern aoter, a oa e-touez ar re zudiusañ. Marteze e vint adkavet e Belgia un deziz bennak...

Distroet da Rostren, goude bezañ kanet ar Magnificat e studijomp kudennoù ar vreuriezh, ha dreist-holl kudenn al liderezh hag hag ar c'hateiz e brezhonek. Muioc'h-mui a vrezhonegerien yaouank a zo o c'houlenn kelennadurezh kristen en o yezh, met betek hen n'eus bet aozet netra a-ratre evito. Kaoz a zo bet ivez diwar-benn ar skolioù kristen. Goulennoù a zo bet evit ma vije savet klasoù divyezhek er skolioù kristen, evel ma z eus dija er skolioù stad. Hervez kevret e vefe savet unan en eskopti Gwened evit derou ar bloavezh skol 90. Hag en eskoptioù all, pegoulz e vo kroget ?

"Levrig ar C'hristen" :

Sed amañ un nebeut stadegoù war niver ar veleien o deus prenet al levr betek-hen :

eskopti Sant Brieg ha Landreger	: 24
eskopti Kemper ha Leon	: 6
eskopti Gwened	: 5
beleien o chom er maez eus	: 4.

Breizh

En holl : 39.

Tu a zo da soñjal eta ez eus e Breizh betek-hen 39 beleg hag a zo dedennet gant buhez ar bobl ez int karget da avielañ.

BODADeg MIZ GENVER 90.

Dalc'het e vo emvod miz Genver e presbital BOULVRIAG d'ar Gwener 12 a viz Genver 90. Kregiñ a raio da 10.30 evel boaz.

10.30 : pedennig. Kentel armerzhouriezh.

damsell war destenn ar sened-meur, "Gaudium et Spes".

Gwelet e vo neuze peseurt danvez-studi a blijo ar muiañ d'ar berzhidi, ha penaos e vo labourer evit an emvodoù da zont : studi ar Bibl, pe studioù a feizoniezh (teologiezh), pe studi war an Istor, evel ma karer. Pep hini a roio e soñj.

12.15 : ofis kreisteiz. Pred er presbital.

14 30 : baleadenn er c'horn-bro. Adaozet eo bet ograoù iliz Boulvriag. H. Ar Bolloc'h a roio dimp da dañva ar sonerezh a c'heller tennañ eus ar benveg adnevesaet-se.

16 eur : buhez ar genvreuriezh.

16 30 : banne kafe. diwezh an emvod.

Kasit keloù da Varsel Derrien m'emaoc'h e soñj dont d'an emvod (pellgomz : 96 43 40 61.)

A greiz kalon : ar sekretour : Yann Talbot.

Yann Talbot, Presbital 22 110 Rostren.

96 29 01 55.

Kelc'hlizher niverenn 29.

Keneiled vat,

Kavout a reot amañ da gentañ ur rentañ-kont eus hon emvod diwezhañ a zo bet dalc'het e presbital Boulvriag e ti Marsel Derrien, d'ar Gwener 12 aviz Genver. Goude ar bedenn digerifi da 10.30, e voe graet ur gentel armerzhouriezh (ekonomiezh), diwar-benn ar moneiz hag an tiez-bank, o flas en armerzh ur vro. Da greisteiz-ha-kard e voe kanet pedenn kreiz an deiz ha goude-se debret a-gevret er presbital. Un daouzek bennak e oamp ouzh taol evel boaz, halaouen an holl o varvailhat. Echu hor pred ganimp ez ejomp betek an iliz parrez da welout an ograoù nevez a zo bet savet e kreiz ar savadur evit loner plas an ograoù kozh a oa aet da netra. En tu all da 60 milion alurioù kozh en deus koustet ar benveg, agredan, paeet gant ar stad, ar rannvro, an departamant, hag ivez ar gumun hag ar barrez evit un tamm. Un taol-esa a reas H. Ar Bolloc'h gantañ, ur son brav a zeu digantañ. Benniget e vo gant an Eskob en nevez-anzer.

Echuiñ a reas hor bodadeg gant un tamm sell war gudennoù an iliz e Breizh, buhez ar gengevredigezh, kudenn ar c'hatekizerezh e brezhoneg, hag al labour da seveniñ. Divodet e voe an dud da 16.30 goude ar Magnificat hag ar banne "doue du".

KELEGIER :

1. "Levrig ar C'hristen" : kenderc'hel a raer da werzhañ al levrig tamm-ha-tamm. Tu a vige bet d'ober muioc'h a vruderezh marteze, met kontet an boa dreist-holl war ar parrezioù. Er-maez eus ar strollad " Beleien e Breizh" avat, n'eus ket bet gwerzhet kalz er parrezioù. N'eo ket dedennet-tre ar veleien gant ar brezhoneg dre vras, ha nebeutoc'h c'hoazh gant al liderezh e yezh ar vro. Lizheroù trugarekaat an eus bet digant Eskibien Kemper ha Gwened.

2. Kristenien Breizh : Dalc'het eo bet ar vodadeg miziek e presbital Plouneour Menez d'ar Sadorn, Sul, ha Lun, 27, 28 ha 29 aviz Genver, ar re yaouank hag an dud en oad a-gevret d'ar Sul. Un daouzek bennak a oa eta, pezh a zo kalonekatis. Ret eo mont war-raok c'hoazh.

3. An niveradeg : E 1990 e vo graet un niveradeg evit kontañ an dud, o ziez, o ferc'hemiezh hag all. Goulennet ez eus bet gant strolladoù sevenadurel lakaat ivez ur goulenn e Breizh evit gouzout pet a dud a oar, agompren pe a gomz brezhoneg. Mac'het ez eus bet gant an INSEE betek-hen prientiñ an enklask-se, hep abeg gwirion. Strolladoù 'zo o deus gourdrouzet aozañ ur boikot eus an niveradeg. Meur a stumm a zo d'ober, da skouer respont n'eus forzh petra d'ar goulennoù.

4. BODADEGOU DA ZONT : gant Kristenien Breizh, Beleien e Breizh, Englev an Tiegezhioù :

Ur vodadeg evit ar familhoù a vo dalc'het e Rostren, d'ar Sul 8 aviz Ebrel, e skolaj Kampostal. An oferenn a vo lidet e diwezh an emvod. Graet e vo war dro ar vugale, hag an dud vras o devo ur brezegenn. Ur valeadenn a vo graet holl a-gevret.

Kamp Katekiz : Dalc'het e vo e Rostren eus al Lun 6 betek ar Sadorn 11 aviz Eost. Degemeret e vo bugale eus 7 bloaz betek 14. Ret e vo bezañ brezhoneger, barrek da gomz ar yezh en holl zegouezhioù, rak warlene e oa un nebeut gallegerien e touez ar vugale a lakae ar re all da c'hallegiñ d'o zro, pezh a laka hor pal da c'hwitañ evit un darn.

EMVOD MIZ C'HEVREER.

Dalc'het e vo emvod ar miz e presbital an Treou e Bro-Dreger (Trevou-Treguignec evit ar c'hallegerien), e ti Erwan Ar Sant, d'ar Gwener 9 a viz C'hwevrer. An eil gwech e vo dimp mont di, ur wech omp bet endeo e miz Kerzu 88.

- 10.30 : Engav. Pedenn digerifi.

- 10.45 : studiadenn Istor diwar-benn an Iliz e Breizh e-pad an Dispac'h gall (1789-1799). Studiet e vo ivez un destenn evit taolenniñ spisoc'h ar mare skrijus-se. Kavout a rit amañ daheul ur ganaouenn dastumet gant Jef Philippe (e levr " La Révolution dans le Tregor")

- 12.15 : pedenn kreiz an deiz. 12.30 : pred a-gevret.

- 14 : baleadenn en tro-war-droioù.

- 16 30 : banne kafe. Diwezh an emvod.

A galon : Yann Talbot.

Pellgomzit da E Ar Sant :
96 31 02 55, a-benn ar 7.2. m'emaoc'h
e soñj dont d'an emvod.

Kenvreudeur vat,

1. Kas a ran deoc'h keloù eus hon emvod diwezhañ a voe dalc'het e presbital an Treou, e Bro-Dreger, e ti Erwan Ar Sant, d'ar gwener 9 aviz C'hwevrer. Kaer e oa an amzer, dija un tamm tafva eus an nevez-amzer, tomder hag heol... Un dek bennak a dud a gemeras perzh evel boaz er vodadeg. Diouzh ar mintin e kasjomp war-raok ur studiadenn diwar-benn buhez an Iliz e Breizh e-pad an Dispac'h (89-99) Implijout a rejomp testennoù eus "La Révolution dans le Tregor" (ar pennad savet gant Jef Philippe diwar-benn ar c'hanaouennoù enep ar veleien "intru"), ha neuze div werz eus ar "Barzhaz Breizh" : "Ar beleg forbannet" hag "Ar Re C'hlas". Div werz hag a zo ganto un diazez istorel bennak hag a zo fromus. Plijet eo bet ar studiadenn-se d'ar berzhidi.

War-lerc'h pedenn krêisteiz hag hor merenn er presbital, ez ajomp betek ti Yann Derrien, kaner, muziker hag aozer kanaouennoù, o chom e Nantouar war barrez Louaneg. Anavezet eo evel kaner e "beilhadegoù Treger". Diskouezet en deus dimp ur film video eus derou ar bloavezhioù 80 diwar-benn ar strollad-se, en dro da Fañch Danno ha da Varia Prat, hag a reas berzh e-pad ouzhpenn 20 bloaz e Bro-Dreger a-bezh.

O vezañ ma oa berr an amzer gant lod eus ar berzhidi e voe echuet an emvod war ar prim e ti Yann Derrien war-dro peder eur.

2. Keleier

A. Bodadeg ar familhoù kristen. : E Rostren adalek 12 eur e skolaj Kampostal d'ar Sul 8 a viz Ebrel. Merenn e ti Mari C'hlaziou" (Piknik). Goude se e vo ur bourmenadennig ma vez brav an amzer. Ur brezegennig da 15 30. Ar vugale o devo diduamantoù. Hag an oferenn e diwez an emvod da 17 eur e chapel Kampostal.

B. Kamp Katekiz ar vugale : Dalc'het e vo e Rostren eus al Lun 6 betek ar Sadorn 11 a viz Eost. Degemeret e vo bugale etre 7 ha 14 vloaz, brezhonegerien hepken, barrek da gomz ar yezh e pep degouezh. Rak e brezhoneg penn-da-benn e vo ar c'hamp. Gallout a ra ar gerent kas dija anvioù o bugale o dije c'hoant kemer perzh. C'hoarvezout a raio d'an hevelep mare hag ur c'hamp brezhonek all gant Oaled Diwan e Treglonou, siwazh, met n'eus ket bet tu da ingaliñ gwelloc'h. Da vloaz e vo dav en em glevout gwelloc'h en a-raok.

K. Studioù keltiek : Sed amañ roll an danvezioù ("UVoù") a zo ret studiañ e skol-veur Roazhon evit an aotreegezh war ar brezhoneg (al lisañs)

- brezhoneg : groidigezh.
- brezhoneg : tēm.
- yezhadur ha kelennouriezh (pedagogiezh)
- lennegezh vrezhonek.
- Istor ha rannyezhoñiezh (dialectologie) ar yezhoù keltiek.
- sevenadur keltiek.
- Kudemoù arnevez ar broadoù keltiek.
- Yezh ha sevenadur predenek (brittonique)
- Krennvrezhoneg.

EMVOD MIZ MEURZH.

Dalc'het e vo e presbital Plouneour-Menez e ti Youenn Troal, d'ar Gwener 9 a viz Meurzh (dale a zo ganin gant va faperenn !!)

- 10.30 : pedenn digeriñ.
- 10.45 : studiadenn war an Iliz e Breizh e-pad an Dispac'h. Iennit en a-raok e-barzh ho "Barzhaz Breizh" : "Ar Re C'hlas" hag "Ar Chouanted".
- 12.15 : pedenn kreisteiz. 12 30 : merenn.
- 14 : baleadenn verr (war droad ma vez brav an amzer).
- 15 : Film video diwar-benn ar Barzhaz Breizh aozet gant "Chadenn Ar Vro" FR3.
- 16 : Banne kafe. Pedennig echuiñ. Diwez an emvod.

Pellgomzit diouzhtu da Youenn Troal (98 78 01 30) n'enaoc'h e soñj dont d'an emvod.

A greiz kalon evit Doue ha Breizh. Yann Talbot.

Keneiled vat, Kerent ha bugale,

Dleet e vije bet din adstagañ gant ar gelaouenn "HENTOU" evit ar familhoù, tud vras ha bugale ; met sammet on bet betek re gant va labour ha n'em eus ket kaset ar menoz da benn.

Koulskoude n'em eus ket lezet ar stourm a-gostez. Setu perak e kinnigan deoc'h tri zra evit ar mizioù da zont :

1. EMVOD AR FAMILHOU.

Dalc'het e vo un emvod evit ar familhoù, hag an holl dud dedennet gant hon obererezh, e skolaj Kampostal e ROSTREN, d'ar Sul 8 aviz Ebrel.

Roll an devezh :

- 12 eur : emgav e skolaj Kampostal.
- 12.30 : pred a-gevret "e ti Mari C'hlaziou" (pik-nik)
- 13.30 : pourmenadenn en dro da Rostren, mavez brav a-walc'h an amzer...
- 15.30 : Bodadeg evit an tiegezhioù, an dud vras :
 - petra ober evit ar familhoù ?
 - petra ober evit ar vugale ?
 - penaos aozañ kamp katekiz an hañv ?
 - peseurt ezhomm hon eus ?
 - ha mat e vefe sevel ur gelaouenn ?
 - ha tu a vije d'ober e lec'h-mañ-lec'h katekiz d'ar vugale e brezhoneg a-hed ar bloaz ?
 - ludennoù all.

Ar vugale diouzh o zu o devo diduamantoù e-pad keit-se:

- 16.30 : krogad-studiañ evit aozañ an oferenn.
- 17. : Oferenn er chapel.
- 18 : diwezh an emvod.

Evel-just ar familhoù a c'hell degouezhout pa gariñt ha pa c'hellint:

2. GOUEL AR BREZHONEG E KARAEZ. (Pantekost, 2-3 a viz Mezheven).

Bez e vo un oferenn en iliz-parrez Karaez da 14.15 evel boaz.

Kristenien Breizh, Beleien e Breizh hag Englev an Tiegezhioù o devo ur stand. Tu a vo deoc'h da dremen d'hor gwelout, ha goulenn diganimp levrioù pe geleier.

3. KAMP KATEKIZ AN HANV.

Dalc'het e vo e Rostren eus al Lun 6 a viz Eost da greisteiz betek ar Sadorn 11 da 6 eur.

Degemeret e vo bugale etre 7 ha 14 bloaz, brezhonegerien hepken, barrek da gomz ar yezh e pep deguezh. Rak e brezhoneg penn-da-benn e vo ar c'hamp. Warlene hon eus bet un nebeut ludennoù gant bugale na oant ket ampart a-walc'h war ar yezh, hag a lakae ar re all da c'hallegiñ.

Diouzh na vo ezhomm e vo aozet diwezhatoc'h kampoù all e galleg dreist-holl evit ar c'hallegerien, gant un tamm brezhoneg e-barzh.

Ar gerent a c'hell adalek bremañ kas anvioù o bugale o dije c'hoant kener perzh er c'hamp-se. C'hoarvezout a raeo, siwazh, d'an hevelep mare hag ur c'hamp brezhonek all aozet gant Oaled Diwan, e Treglonou, met n'eus ket bet tu da ingaliñ gwelloc'h. Da vloaz e vo dav en em glevout pishoc'h gant Oaled Diwan en a-taok.

Deuit eta niverus da emvod an 8 a viz Ebrel e Rostren, ha grit bruderezh en dro deoc'h. A greiz kalon ganeoc'h-holl : Yann Talbot.

MOUEZH SANT ERWAN

Kelc'h lizher niverenn 31.

Kenvreudeur vat, Keneiled vat,

• Adkemer a ran anv "Mouezh Sant Erwan" evit hor c'helc'h lizher, kement hag adstagan gant ar gelaouennig a zeuas er-maez er bloavezhioù 65 embannet gant "SKOL" hag a gloske tizhout ar yaouankizoù kristen. War un dro e raimp memor eus Armanñs Ar C'helvez. Doue d'c'hardono!

• Emvod miz Meurzh a ve dalc'het e presbital youenn Troal e Plouneour-Menez d'an 9 eus ar miz. Un dek bennek e oamp evel boaz, ha gant plijadur hon eus bet en hon touez evit ar wech kentañ Per Ar Saot, a 20 o paouez dont da chom da Venec'h, war e Per, goude bezañ bet e Karg eus Kumuniezhioù anglikan e Bro-Helvetia e-pad meur a vloavezh.

• Diouzh ar beure e voe kendalc'het gant ar studiaden diwar-benn an liz e Breizh e-pad an Dispac'h, ha tro hor boe da studien gant sikour ar gwenedour Turiaw Ar Menteg ar wech hollrudet eus ar Barzhaz Breizh: "Ar Chouantel". Goude lein ("merenn") gouez d'an tregeniad ma z eus ar hannon!) ez a jomp da weladenneñ ur pedra bihan a 20 bet savet en ur c'horn plijus, war ar maez, en enor da Werchez Medjugorje. Dont a ra tud, evel-se, en ur dremen, da lavarout o chepeled. Enskrivadurioù a 20 bet graet e galleg hag e brezhoneg ivez a-drugarez da youenn Troal.

• Distroet d'ar presbital e voe kendalc'het gant ar studiaden hag echuet gant un tomm sell war vuhez ar vreuriezh, ur bonne kafe neuze en ur sellont ouzha ar gasetenn video graet gant FR3 war ar Barzhaz Breizh, ha war-lerc'h ar bedenn an holl d'ar gêr, laouen, prest da adkregiñ gant ar stourm pemdeziek...

Keleier :

(A) Bodadeg an tiegezhioù kristen:

• Dalc'h et eo bet e Rostren, e skolaj kampostral, d'ar Sul 8 a viz Ebrel.

• En hevelep deiz e oa un emvod e Ploueg-ar-Mor evit enoriñ memor Armañs Ar c'holver a savas eno skol divyezhek Sant Erwan e dibenn ar bloavezhioù 50. Ur blakenn a zo bet lakeet en e envor war blasenn ar post. Ur 80 bennak a dud a oa gant o Fred hervez ar c'harzetenoù. Moarvat e oa det di un toullad skolidi bet gwechall er skol du-hont, tadoù a familh bremañ, hag o dije bet gallet bezañ ganimp e Rostren a-hend-all...

• Fresk a-walc'h e oa an amzer e Rostren, ha debret e voe neuze da greisteiz habter e fi aluzenner ar skolaj. Un dregont bennak a dud a oa, un ugent bennak a rugale; leun kouch an tiig. Goude merenn e teuas familhoù all da greskiñ ar baged, hag ez ejomp betek lenn Groñwel da welout ar stank-dour. Uhel-tre e oa ar dour, ken ne weled mui an draezhenn, hag ar gwez zoken hanter veuzet... Mont e rejomp ivez da welout ar peulvan, unan eus ar re uhelañ e Kerne uhel, ha war hent an distro e ehanjomp ur vanutenn da welout ar rann-dour war ar c'hanol a re an disparti etre ar red-dour a ya war-du an Atlantel hag an hini a ya war-du genou ar Stêr Aon.

• Un eurvezh studiedenn a voe graet da c'houde diwar-benn stad ar gristenien brezhonegerien en liz en emzer-vremañ, keit ha m'edo er rugale e karg daou skolaer eus Diwan hag an dud yaouank deuet eus o devezhioù-studi e Kistinid.

• Dont a reas neuze ke laouenner an Telegramme da gemer ul luc'hskendenn eus ar rugale. Un dregont bennak a oa a-benn neuze. Ur wech ouzhpenn e vimp "istorel"...

• An oferenn a grogas da bemp eur, gant prosezion ar rugale peogwir e oa Sul ar Beuz anezhi.

• Un hanter kont a Fille led a oa e chapel ar

skolaj, ha bev-tre e voe al liderezh, daou
veleg o kenofenniñ, daou all o kenañ ganimp, bugale
o lenn pedenn ar Fideled.

Barzh a-walc'h a veas an devezh-se ete.

Dar. e vo ken dero'hel.

Un nebeut disenteziou a zo bet kemeret:

- 1- ober un vodadeg all e miz Gwengolo
- 2- Kenderohel gent ar c'hennadig "HEWTOU" bep daou viz,
hag ober anezhon ur wir gelaouenn evit ar Familhoù.
- 3- Evit Kamp Kate Kiz an hañv (6-11 a viz Eost) e Rostren,
degemer bugale eus 7 da 15 bloaz. Graet e vo
strolladoù hervez an oad, unan evit ar re vrasañ, 14-15 bloaz.

③ ■ GOHEL BROADEL AR BREZHONEG. 1.2.3. a viz
Mezheven (Pantekost).

Lidet e vo un o ferenn en iliz parrez KARRAEZ d'er
Sul 3.6. da 14.15.

④ ■ KLASOÙ DIVYEZHAK PREVEZ?

Kaoz' 20 e vije savet ur c'hlas divyezhek
katolik e Gwened e miz Gwengolo 90. 2 skolaer '20 bet
Kavet endeo. E bro-Leon e vefe kaoz da sevel unan ivez.
keloù mat ete. Pegoulz e vo savet unan en eskopti Sant Brieg?
Notennig - Tennet e vez 70 skouerenn eus ar c'helichizha.
Kaset e vez da 35 beleg, d'un nebeut laiked, ha d'er
c'helaouennoù brezhoneg. Gallout a ra servijiñ evit kelaouiñ
ar c'helaouennoù breizhek evel-just evel ma kerer...

■ BODADEG MIZ EBREL. ■

Dalo'hel e vo e Kostell Santez Anna, e Tregastel, e-kichen
an aod, d'ar Gwener 20 a viz Ebrel -

10.30. degemer - pedenn.

10.45. Studiadennoù istor (An Iliz e Breizh 1789-1799). Lenn
en drouk "Ar Re c'hlas" e-barzh ar "Barzhaz Breizh"

12.15. pedenn kreisteiz ha menenn

13.30. baleadennoù war ti-bl ar mor.

15.30 Studiadennoù. Buhez ar strollad; pedenn echuiñ.

Kasit keloù din-me (pg 96-29 01 55) a-benn ar
merc'her 18 m'emaoc'h e soñj dont. A galon YANN TALBOT.

Keneiled Kêr.

NOUEZH SAINT ERWAN.

Kêac'hlizher niverenn 32.

I. BODADeg NIZ EBREL. E kastell Santez Anna e Tregastel eo e voe dalc'het hon emvod diwezhañ, d'ar gwener 20 a viz Ebrel ; brav a-walc'h e oa an amzer en endervezh, met frêsk rak avel greñv a c'hwezhe eus ar mor. Evel boaz edomp un dek bennak o labourat, o studiañ, o pediñ. Diouzh ar beure hon eus bet ar chañs da gaout ganimp Christian Brunel, un istorour yvouank, kelner bremañ e Pondi, hag en deus graet dinp - e galleg - ur gaozeadenn dudius-mourbet ha talvoudus war an iliz abaoe an dispac'h (Esibien, beleien) ha Hudenn Vreizh. Peseurt darempredoù a zo bet etre kargidi an iliz ha danvez Breizh ? Gwlet ez eus bet penaos eo bet rannat an iliz etre ar re en em laka sujidi ar stad c'hall ha netra ken, hag ar re a venn mirout personelezh o bro. Graet en deus Christian goulennoù pouezus ouzhip, a vo ret pleustrif a-zervri-kaer warno. Setu amañ unan anezho :

- Peogwir en iliz katolik n'eus ket plas evit "ilizoù broadel", petra a c'hell bezañ en hor bro "an iliz a zo e Breizh" ? Peseurt darempredoù a c'hell kaout gant " an iliz a zo e Bro-C'hall" ?

Studiet hon eus ivez stad an iliz e Breizh e-pad an dispac'h gant testenn "Ar re C'hlas" tennet eus ar "Barzaz Breiz". Kendalc'het e vo rak dedennus ha kentelius eo an destenn c-lea-ver yezh ha mennozioù.

Merenn hon eus bet gant kouvidi all ar c'hastell dalc'het gant kumuniezh an "Oaledoù a garitez", evel e Tressaint (Breizh uhel). Da heul ar pred hon eus gweladennet an tro-war-droioù : kreizenn diwall al lapoused-mor en Enez-Dur, an "Enez Aval" ma vije bet douaret warni ar Roue Arzhur hervez ar vojenn, un alez meintoet rakistorel nepell eus eno, hag Itron Varia Sklaerder gant ar mengleuzioù ramzel greunvaen ruzik a ro labour da galzig micherourien. Ur wech distroet d'ar c'hastell hon eus kaet an ofis ha studiet buhez ar genvreuriezh.

2. LEVRIG AR C'HRISTEN. Anavezet e vo un tamm al levrig er maez eus Breizh. Betek ur gumuniezh eus Leon Youda e kreisteiz Frañs ma z eus enni ul leanez eus bro-Rostren o vevañ. Ha betek ar stadoù Unanet peogwir eo bet goulennet gant Reun Ar c'halan a zo kelenner e skol-veur Wellesley er Massachussetts, hag anavezet evel skrivagner brezhonek.

3. GOUEL AR BREZHONEG. (2-3-4 a viz Mezheven) e KARAEZ. Lidet e vo an oferenn en iliz-parrez evel boaz da 14. 15. Mat e vefe d'ar veleien a vo dieub kemer perzh enni, ha d'ar muiañ posubl a ensaverien gristen. Graet e vo un embann er c'helaouennoù evit ma c'hello kristenien bro-Garaz dont ivez.

4. KAMP KAMPETIZ. Dalc'het e vo e Rostren, eus ar 5 d'an 11 a viz Eost, evit ar tugale, brezhonegerien ampart hepken, eus 7 da 15 vloaz. Tu a zo d'en em enskriviñ adalek bremañ. Spi hon eus da gaout un tregont bennak. Neur a vugel moarvat a gommio evit ar wech kentañ d'an oferenn a vo lidet e diwezh ar c'hamp.

5. Skolioù divyezhek. Kaos ' zo muioc'h-mui da sevel ar skol divyezhek kentañ e dalc'h ar skolioù katolik, e bro-Wened, marteze e Kêr-Wened end-eeun. Ur vodadeg a vo evit se e Gwened d'an 12 a viz Mae, da 17 e 30 e kleerdi bras Gwened, gant Tugdual Kalvez prezidant Unvaniezh ar gelennerien brezhoneg, Jean-Pierre Etcheberry, euskarad, rener ar skolioù prevez divyezhek euskarat (Iskastolas) hag an Itron Amestoy, kelennerez er skolioù euskarat divyezhek. Salv ma teuo o mennad da benn. Gourc'hemenoù da Yannig Baron !!

B O D A D E G N I Z M A E .

Dalc'het e vo d'ar Gwener 11 a viz Mae e PRESBITAL PRAT (Bro-Dreger) e ti Anton Ar Barzh, adalek 10 e 30.

- 10.30 : pedenn digerizñ. 10.45 : studi war testenn "Ar Re c'hlas".

- 12.15 : ofis kreisteiz. 12.30 : merenn.

- 13.30 : pourmenadenn en tro-war-droioù.

- 15.30 : un tamm sell war goulennoù Christian Brunel. Buhez ar genvreuriezh. Danvez-studi evit ar bodadegoù da zont.

- 16.30 : diwezh an emvod.

Pellgomzit da Anton Ar Barzh a-benn ar Merc'her 9 e maez c'h e soñj dont.

HEN TO Û « Me eo an Rent, ar wirionez, hag a- vuhéz... » ^{niverenn 3.}

Keneiled vat,

Kas a ran deoc'h ur rentañ-kont eus hon emvod e Rostren d'ar Sul 8 a viz Ebrel, e skolaj Kampostal.

Fresk a-walc'h e oa an amzer e Rostren er beure-se, hag avelaj da vat, ha p'en em gavas ar familhoù war porzh ar skol, ur wech evet ur banne digor-kalon ganimp, e tivizjomp mont da zebrifñ hor merenn en aluzennerdi ar skolaj. Un dregont bennak a dud a oa, un ugent bennak a vugale; leun-kouch e oa an tiig. Goude merenn e teuas tiegezhioù arall da greskiñ ar bagad, hag ez ejomp neuze betek lenn Groñvel, div lev alese, da welout ar stank-dour. Uhel-tre e oa an dour an deiz-se ken ne weled nui an draezhenn, hag ar gwez zoken a oa hanter veuzet... Warlene, e miz Eost, e-pad ar c'hamp katekiz, e oa bet tu da ebatifñ war an draezhenn ha da neuial war al lenn... Mont a rejomp ivez da sellout ouzh ar peulvan, unan eus ar re uhelañ e Kerne-uhel, ha war hent an distro ec'h e rejomp ur vunutenn da welout ar rann-dour war ar c'hanol a ra an disparti etre ar red dour a ya war-du an Atlantel hag an hini a ya war-du ar Stêr Aon.

Un eurvezh studiadenñ a voe graet da c'houde er skol diwar-benn stad ar gristenien brezhonegerien en iliz hag er bed a vremañ, ur saviad diaes a-walc'h dezho, pa z int div wech ur minorelezh : evel brezhonegerien e Breizh, hag evel kristenien en ur bed war zigristenaat. E-pad keit-se edo ar vugale e karg eus daou skolaer eus Diwan ha tud yaouank all deuet eus o devezhioù-studi e Kistinid.

Divizet ez eus bet :

1. Adkregiñ gant ar c'hamp katekiz e miz Eost.
2. Ober ur wir gelaouenn eus hor c'helc'hlizher "HENTOU". An niverenn 4, e miz Gwengolo, a vo savet gant pennadoù ar vugale. Goulenn a ran eta adalek bremañ ouzh ar vugale skrivañ pennadoùigoù diwar-benn ar pezh a blij dezho, hag o c'has din. Embannet e vezint, ha profoù a vo kaset dezho.
3. Aozañ an tiegezhioù en un doare urzhietoc'h evit ma vo efedusoc'h hor stourm. Evit se e vo dav dimp resisaat ar palioù. Petra hon eus c'hoant ober ? Peseurt ezhommoù hon eus ? Me ' zo prest da ober kement tra a c'hello rentañ servij d'an tiegezhioù evit o buhez speredel ha sevenadurel.

Dont a reas neuze kelenner an "Telegramme" (darn a lavar an tele-bramm !!!) da gener ul luc'hskeudenn eus ar vugale hag o zud. Un daou ugent bennak a oa a-benn neuze ur wech ouzhpenn, evel ma lavare ur c'hamper warlene, e vimp "istorel".

Kregiñ a reas an oferenn gant prosesion ar vugale peogwir e oa Sul ar beuz anezhi. Un hanter kant bennak a fideled a oa bodet e chapel ar skolaj, ha bev-tre e voe al liderezh, daou veleg o kenoferenniñ, vugale o lenn pedenn ar fideled. Fromus...

Berzh a-walc'h a reas eta an devezh-se eta,; e miz Gwengolo e vo graet ur voddeg all.

A wir galon. Yann Talbot.

Mañ ar follenn enskrivañ war an tu all.

000 / 000

Yann Talbot. Rostren.
96 29 01 55.

KAMP KATEKIZ.

" OBER HENT GANT JEZUZ."

Rostren, 6-11 a viz Eost 90.

Warlene en devoa graet berzh hor c'hampig-katekiz.
C'hoant bras o deus ar vugale da adkregiñ, hervez ar pezh hon eus klevet...
Klasket e vo eta er wech-mañ adarre kemmeskañ desavadurezh ha diduamantoù.

Dalc'het e vo ar c'hamp katekiz e Rostren, e skolaj Kampostal
hag e skol an Itron Varia, eus al lun 6 da greisteiz betek ar sadorn 11 da 6 eur.

Degemeret e vo bugale ha krennarded - brezhonegerien varrek
hepken - eus 7 bloaz da 15 bloaz. Rannet e vezint e strolladoù hervez o oad ; ur rummad
ispisial a vo graet evit ar re vrasañ, 14-15 bloaz. Lojet ha bevet e vo an dud er skol.

Setu amañ roll an devezh :

- 8 eur : sevel . 8.30 : lein.
- 9 eur : pedenn veure.
- 9.15 - 12. : div gentel katekiz, gant un ehan da 10.30.
- 12.15 : pred.
- 13.30 : baleadenn en tro-war-droioù.
- 16.30 : adverenn.
- 17 : kentel.
- 18 : amzer dieub.
- 19 : koan.
- 20 : beilhadeg - pedenn noz.
- 21.30 : an holl en hunvaoù ha kousket...

Graet e vo katekiz evel-just hervez an hentenoù a-vremañ, da lavarout eo
gant ur bedagogiezh digor, o lakaat ar vugale da zizoleiñ drezo o unan ar muiañ 'r gwellañ
a draoù, hervez ma vez graet er skolioù har er strolladoù yaouaniz.

Engav a vo d'al lun 6.8. da greisteiz dirak skolaj Kampostal e Rostren.
Tu a vo d'ar gerent da verennañ ganimp (20 lur ar pred).

D'ar Sadorn 11 e vo lidet an oferenn da 17 eur e chapel ar skolaj. Tu a
vo d'ar vugale da gomuniañ evit ar wech kentañ, pe zoken d'ober o "Fask kentañ", m'ô deus
war-dro 11-12 vloaz. Pediañ a reomp an holl gerent da gemer perzh en oferenn-se. War-lerc'h
an oferenn e vo ur seurt degeradeg evit an holl.

Priz ar c'hamp katekiz a vo : 300 lur dre vogel evit ar 6 devezh. Paet e
vo gant ar gerent e deroù ar c'hamp pa zeuint da gas o bugale.

Ur beleg ha 4 den yaouank a raio war dro ar vugale, ha div geginerez evit
ober ar boued. Div sal kousket a vo, unan evit ar baotred, unan evit ar merc'hed.

Wrasit en dro ar follenn enskrivañ da Yann Talbot. Presbital 22110 Rostren.
Pg : 96 29 01 55.

KAMP KATEKIZ : OBER HENT GANT JEZUZ. 6-11 a viz Eost 90.

Anv tiegozh ar bugel : Anv bihan :
Anv ha chonlec'h ar gerent :
.....

Pellgomz :

Oad ar bugel : gant d'ar : Paotr - Plac'h.
e peseurt klas emañ ? peseurt skol ?
brezhoneger : mat - mat a-walc'h.
blavezhioù katekiz graet dija :
Sinadur ar gerent :

Yann Talbot. Presbital Rostren. 96 29 01 55.

MOUEZH SANT ERWAN.

Kelc'hlizher niverenn 33.

Keneiled ker,

Enañ an hafv o tegouezhout hag a-benn nebeut amzer maread ar vakafisoù hag an douristed... Met a-raok-se en em vodimp c'hoazh ur wech.

BODADEG MIZ MAE. Dalc'het e oa bet hon emvod diwezhañ e presbital Prat, e ti Anton Ar Barzh, d'ar Gwener 11 a viz Mae. Brav-kemafi e oa an amzer, tomm-grizias zoken. Un dek bennak e c'amp en emvod evel kustum, darn a vanke avat, aet da bourmen o c'halite evel B. Boterel, e Turkia mar plij !! Traoù en devo da gontañ dimp...

Diouzh ar beure hon eus studiet testennoù ar Barzhaz Breizh, gwerz "Ar re C'hlas" dreist-holl hag a zo skrijus-meurbet. Ur wir oberenn lennegel. Meuleudi da Gervarker ha da bobl Vreizh evit an tefzorioù sevenadurel-se deuet betek ennomp.

Merenn a rejomp er presbital goude ofis kreisteiz, ha dont a reas un nebeut beleien all eus diwar-dro da greskiñ an niver a gouvidi. War-lerc'h ar pred aozet gant mignoned ar person e rejomp un tamm baleadenn, da gentañ betek chapel Sant Yann Trevoazan a zo bet adsavet gant izili "Breizh Santel." Warlene ne oa nag a vogerioù koulz lavarout nag a doenn war ar chapel. Bremañ eo saveteet sur-mat, ha kaer al labour graet eno. Tu a vo d'ober ur pardon eus ar bravaf ! Mont a rejomp ivez betek parrez vihan Kaadaskorn, ha diskleriañ a reas Aime Breton dimp e soñj war etimologiezh an anv-lec'h-se : "Koad ar skorn" (perak e vije skornetoc'h eget e lec'h all ?) ; pe "Koad (kalet evel) askorn ?" Piv a ziskoulmo ar gudenn ? En ostaleriig m'edomp oc'h evañ ur banne (arabat disoñjal e oa tomm-berv an amzer...) e tegouezhas d'hor c'haout ur mignon dimp ken hir gortozet, Fañch Kerrain, prederour meur Imbourc'h, barrek da ziskoulmañ kudemoù amjestr lec'hiadur hanezel hanvoud an Dassein e framm ar stuzegezh kevredigezhel (daoust hag ur ster bennak a zo gant ar rannfrazenn-se, a gav deoc'h ?...)

A-raok hor banne kafe e voe studiet un tamm ar goulennoù graet ouzhimp gant Christian Brunel en emvod Tregastell e miz Ebrel, war an darempredoù etre an Emsav hag an Iliz e Breizh.

KBLEIER 1. Gouel Broadel ar Brezhoneg e Karaez : Lidet e vo an oferenn en hor yezh en iliz-parrez, d'ar Sul 3 a viz Mezheven, Sul ar Pantekost, da 14 eur 15. Deuit niverus, meur a veleg a vo o kenofereññif.

2. Kamp Ka tekiz an hafv : E Rostren e vo dalc'het, eus ar 6 d'an 11 a viz Eost. Dont a ra tamm-ha-tamm an enskrivadurioù. Spi hon eus da gaout etre 25 ha 30 bugel hevlene. 4 den yaouank a vo evit ober war o zro, hz div geginerez evit ar boued. Mallus eo kaout ul levr katekiz evit ober kelennadurezh kristen en ur stumm dereat. Penaos e vo graet e klasoù divyezhek ar skolioù kristen ma n'eus levr kelenn ebet ?

3. Beaj da Gembre. Ur veaj da Gembre evit darempredif Kumuniezh karismatek Leou Youda a vo aozet gant Kristenien Breizh e miz Eost, eus ar 16 betek an 23.

4. Hor misionerien : Enañ an Tad F.A. PLEIBER, OMI, misioner, e Sri Lanka (enezenn Salan gwechall). E chomlec'h : Tad Pleiber OMI, St Benedicts Church, GALGANUWA, SRI LANKA. Deuet e oa d'unan pe ziv eus hor bodadegoù e dibenn ar bloaz 87, p'edo e kofje. Laouen e vefe o kacout keleier eus Breizh. Tu a vefe deoc'h skrivañ dezhañ e brezhoneg en ur implijout an "aerogramm".

BODADEG MIZ MEZHEVEN.

Dalc'het e vo e presbital KISTINID (Bro-Wened) e ti Marsel Blanchard, d'ar Gwener 8 a viz Mezheven. Bodadeg diwezhañ a-raok ar vakafisoù e vo.

Roll an devezh :

10.30 : emgav ; pedenn digerif.

10.45 : studiañ goulennoù Christian Brunel. Mar bez kavet amzer, kentel

2

gant Yann Talbot war skridoù kristen ar c'hantvedoù kentañ (an tadoù apostolek), ha dreist-holl an Didakè (kelennadurezh an daouzek abostol). Sellit ouzh "Notennoù a batrologiezh" savet gant Maodez Glanndour, embannet e "Imbourc'h", niverenn 134-135, 1981.

- 12.45 : ofis kreisteiz.
- 12.30 : pred er presbital.
- 13.45 : ba leadenn en tro-war-droioù.
- 15.30 : buhez ar genvreuriezh ; diwezh an emvod.

Pellgomzit da Varsel Blanchard a-benn ar 7.6 (dale am eus gant va faperenn evel kustum !) m'emaoc'h e soñj mont d'an emvod : niverenn 97 39 71 15

A greiz kalon ganeoc'h-holl e karantez ar C'Hrist

Yann Talbot.

Ur bajenn eus "Notennoù a batrologiezh"

- 18 -

vezer techet da hiraat. Ne seblant ket zoken ar stummoù kentañ bezañ bet savet gant an Ebestel o-unan, pe un abostol bennak met sellet eo bet ar simbol-se a-holl-viskoazh evel un diverradur eus ar feiz.

An Didac'hê pe Kelennadurezh an Daouzek Abostol a seblant bezañ bet skrivet e tro fin ar c'hantved kentañ ; met tabutet e vez kalz diwar-benn bloaziad ar skrid-se ha talvoudegezh resis an dielloù dastumet ennañ. Dianav e oberour, dianav ivez e lec'h a orin, eo talvoudus n'eus forzh penaos evit anavezout doare an Iliz ha stad al liderezh e kumuniezhoù 'zo, pa oa bet skrivet dija testennoù pennañ an Testamant Nevez ha ne oa ket maro c'hoazh an abostol sant Yann.

Sant Klemens Roma a seblant bezañ bet ar pevare Pab goude Petros (Per), Linos hag Anakletos. Lezet en deus dimp ul Lizher d'ar Gorintidi a zo, sur-mat, eus e zorn. Talvoudus eo evit anavezout renkador an urzhioù sakr e fin ar c'hantved kentañ dre ma tiskouez sklaer an tri derez : eskibion, beleion ha diagoned.

War ar poent-se end-eeun e ranker studiañ ivez sant Ignatios Antiokeia, maro e 107. Seizh lizher a zo deuet dimp dindan e ano : d'an Efezidi, d'ar vMagnezidi, d'an dTrallezidi, d'ar Romaned, d'ar Filadelfidi, d'ar Smirnidi, da Bolikarpos. Diforc'hañ a ra sklaer an eskibion (Episkoped), pennrenerion kumuniezhoù, diouzh ar veleion (Presbiterion), skoazellerion an Eskob, ha diskleriañ anat al lec'h kentañ a zo da Iliz Roma. Argas a ra daou seurt a zisivouderion : ar Yuzevelourion (ar gristenion a felle dezho derc'hel da lidoù ha lezennoù ar Yuzeviezh), hag an Doketourion (eus ar gresianeg : dokeō o talvezout : kavout a ra din) a gelenne ne oa korf ar C'hrist nemet ur seblant

- Englev an tiegezhioù.
- Beleien e Breizh.
- Kristenien Breizh.

H E N T O U niverenn 5.

Keneiled vat,

Poent-bras eo din reiñ keloù deoc'h eus oberiantizoù hor strolladoù e-kerz an hañv tremenet hag an traoù da zont er bloavezh-skol-mañ.

1. KAMP KATEKIZ E ROSTREN (6-11 a viz Eost 90)

Berzh en deus graet an eil gamp-mañ, ur bam... 29 a vugale o deus kemeret perzh ennañ, eus 7 da 13 bloaz, o tont eus Breizh a-bezh, an div drederenn skoliataet e skolioù Diwan, ha tost d'an hanter e skol Diwan Kemper.

Rannet e oa bet ar vugale e 5 strollad, hervez o oad hag o barregezh war anaoudegezh ar feiz. Brezhonegerien ampart e oant holl, pe a-vihanik, pe desket ganto er skol. N'eus bet kudenn c'hrevus ebet eta gant implij ar yezh hevlene. Ret e vo kenderc'hel e giz-se.

5 den yaouank (4 faotr, ur plac'h) a oa oc'h ober war-dro ar c'helenn, me ouzhpenn evel rener, un arboeller evit ar prenadioù hag an arc'hant, ha daou geginer. Lojet e gamp e skol kentañ derez an Itron Varia e Rostren ; siwazh e oa labourioù er skol evit he gwellaat, ha diaesaet eo bet un tamm hor c'hampig gant se. Bennozh bras avat da bourvezer Kampostal evit bezañ plaenaet pep tra evidomp.

Diouzh ar beure e veze ur bedennig da 9 eur evit kregiñ an devezh, ha skol betek kreisteiz, gant un troc'h e kreiz ar beurevezh. War-lerc'h merenn e veze graet ur gentel all betek 14.30. Ha neuze pourmenadenn gant ar c'harr-boutin. D'al Lun un droiad war droad en dro da Rostren ; d'ar Meurzh un dro-vale da Blevin (bez an Tad Maner), da chapel Lann Salaün e Paoul, hag echuif gant lenn Groñwel evit neuial. D'ar Merc'her ez ejomp da lenn Groñwel adarre ha sellout ouzh ar peulvan, d'ar yaou e voe tro lenn Gwerledan, d'ar Gwener e rejomp tro Kergrist-Moeloù (goulennataet e voemp gant Herve Ar Beg evit Radio Kreiz-Breizh), Tremargad, ha Toull Goulig ; d'ar Sadorn ez ejomp da lennig Mael-Karaez. Bemdez eta nemet d'ar Gwener e c'hellas ar vugale neuial. Ha c'hoazh d'ar Gwener e voe un abadenn eus ar blijusañ e kreiz ar stêrig, oc'h en em strinkañ an eil egile...

War-lerc'h koan e veze bemdez ur veilhadek betek 21.30-22 eur. A bep seurt abadennoù hon eus graet, gant kaniri, kontadennoù, pezhioùigoù-c'hoari, c'hoarioù a-stroll hag all. Echuët e veze gant ur bedennig, hag an holl da gousket... Pe klask hen ober ...

Kroget e oa bet ar c'hamp gant ar pred e predva ar skol ha chomet e oa an darnvrasañ eus ar gerent. Bez e gamp eta ur pevar ugent bennak a dud ouzh taol. D'ar Gwener e oa bet kouviet ivez al laiked hag ar veleien a zo tost d'hon Emsav, hag e oa eta un dek bennak ouzhpenn ouzh taol.

D'ar Sadorn ez eus bet lidet un oferenn war an ton bras e chapel skolaj Kampostal, hag ar gerent a oa deuet niverus. Un daouzek bennak a vugale o deus graet pe o diskleriadur a Feiz ("Pask kentañ" gwechall) pe komuniet evit ar wech kentañ ("Pask bihan"). War-lerc'h an oferenn kenlidet-se, ha fromus hervez lavar ar gerent o-unan, e chomas an dud kindan kledour ar porzh evit ur "gwin-ador" ha marvailhat kenetrezo.

Fellout a ra din trugarekaat ar sternataerien evit al labour tenn hag efedus o deus kaset da benn, Benead, Tepot, Visant, Muriel, Fulup, Yann-Erwan an arboellour, hag ivez ar geginerien evit ar boued lipous o deus aozet dimp : Eliza, Soaig he fried, hag Anna-Vari.

Un nebeut kentelioù da dennañ eus an eil gamp-mañ :

1. Un ezhomm a zo eus seurt kampoù. Kreskiñ a ra niver ar vugale (50% a gresk hevlene. En em glevet omp dija gant Oaled Diwan evit deiziadoù ar c'hamp er bloavezh da zont : eus al Lun 5 d'ar Sadorn 10 a viz Eost 91.
2. Ret eo degemer brezhonegerien ampart hepken. Ar re na gomzont ket ar yezh ingal-tre er gêr a vez ret pouezañ warno un tamm evit brezhonegañ. Live yezh ar vugale n'eo ket fall dre vras, met darn anezho a zo ganto ur pouezh-pouezh direizh a-walc'h ha dreist-holl kemmadioù eus ar skrijusañ. Peadra da reiñ un taol-infarktuz din...
3. Ret eo kaout binvioù modern. Sikouret omp bet gant ar magnetoskop. Gallet

hon eus tremen kasegigoù video e brezhoneg (Yakari, Barzhaz Breizh) ha kaout peoc'h un tamm... Ret e vefe avat kaout kasedigoù video all, ha liesseurt.

4 Diouer a ra dimp ur gwir levr katekizerezh e brezhoneg. Live ar vugale war anaoudegezh ar feiz n'eo ket izeloc'h eget hini ar vugale all hon eus er c'hatekiz a-hed ar bloaz ; en ur ober ur sizhunvezh hon eus graet kement hag e pevar mizvezh a-hend-all.

5.. Startijenn a zo gant ar vugale, hag intrudu... Bev e oant ken e oant... Ret eo d'ar sternataerien bezañ barrek da heuliañ !!!

6.. Ret e vo kenderc'hel gant ar c'hemmesk labour-katekizañ ha diduamant. Kenteliet ha stummet e vez ivez dre an oberennoù (ar c'hoarioù, ar skaotadeg, ar sevel hag ar menel kousket en hunva (start a-wechoù...)). Pouezus-kenañ eo stummañ ar vugale war ar pedif. Desket hon eus dezho pedennoù ha kantikoù. A-bouez bras eo evit o buhez speredel.

7. Buhez speredel don ar sternataerien o-unan a ra ul lodenn vat eus berzh ar c'hamp. Dre ar bedenn hag an oferenn bemdeziek e teu an nerzhioù hon eus ezhomm anezho evit mont war-raok.

8. Un aozadur resis ha sklaer a zo ezhomm evit ur c'hamp evel-se : implij-amzer, kargoù pep hini, palioù kumun. War wellaat ez omp aet war ar poent-se hevlene e-keñver arlene.

2.. BEAJ KRISTENIEN BREIZH DA GEMBRE.

14 a dud o deus kemeret perzh, gant tri c'harr, er veaj da Gembre, eus ar 16 d'ar 25 a viz Eost. Daou zevezh hon eus tremenet e Kerne-veur, o weladennif Lostwithiel, sez koshañ dug Kerne-veur, iliz-veur Truro, Sant Austell e-lec'h hon eus kenferennet en iliz katolik nevez-flamm savet, Falmouth e-lec'h hon eus gwelet ar rivinoù (ur vogerennig hepken a chom) eus ar manatti ha skolaj ma voe savet enno an testennoù kerneveurek (kernowek a vefe gwelloc'h) pouezusañ : an "Ordinalia". War an hent da Gembre ez ejomp da saludif, just war-lerc'h Bodmin, ar c'hampig-bugale e kernoweg savet gant ur gevredigezh nevez " Daleth", a ra ul labour damheñvel ouzh hon hini hag hini Diwan. Ne oa nemet 9 bugel d'ar poent-se, met spi a zo da greskiñ niver ar gernowegerien yaouank a-vihanik, rak mont a ra an Emsav sevenadurel war-raok. Kement-se a voe lavaret dimp ivez gant ar c'herveveurat Tim Saunders a gejjomp gantañ e Kerdiz war hent an distro.

E Kembre e chomjomp eta ur sizhunvezh e kumuniezh Leon Youda, e-kichen Aberteifi e kontelezh Dyfed. Diazezet eo bet ar gumuniezh-se eno daou vloaz ' zo gant ur breizhad eus bro-Wened, Brieg Ar Rouz dimezet gant ur gembreadez, Sianis, genidik dres eus korn-bro Aberteifi, desavet evel protestantez ha deuet da gatolik, hag evel evel he gwaz eus an emsav karismatek. (e-pad ur mare e oant bet en abatti Mortain, m'emañ ennañ kreizenn kumuniezh Leon Youda)

Gant sikour eskob Menevia, an A. D. Mullins, kembraeger ampart ha difenner start ar yezh vroadel, ez eo bet savet ar greizenn-se evit avielañ ar Gembreiz dre ar c'hembraeg ha diskouez un dremm disheñvel ha broadeloc'h eus ar gatologiezh dirak daoulagad protestantez Kembre. Siwazh izili ar gumuniezh lec'hel ne ouzont ket kembraeg c'hoazh er-maez eus Sianis ha Brieg evel just. (saozon ez int hag iwerzhoniz a orin). Setu perak e vez graet kazi pep tra e saozneg betek-hen. Met tamm-hantamm e tlefe ar c'hembraeg mont war greskiñ en o buhez kumun. Er mare-mañ ez eus un 8 bennak a dud vras er gumuniezh, gant tri bugel (2 da Vrieg Ar Rouz, o komz teir yezh ken aes ha tra, kembraeg, saozneg ha galleg, met ket a vrezhoneg siwazh). N'eo ket bras a-walc'h an ti ken, hag emaint o vont da zilojañ evit prenañ un ti ec'honoc'h war hent Castell Newydd Emlyn. Ret eo menegiñ ez eo perzhiek ar gumuniezh lec'hel-se e "Kumuniezh Leon Youda hag an Oan aberzhet", oc'h en em ledañ tamm-ha-tamm er bed a-bezh, gant he speredelezh karismatek ; bevañ a ra an holl laikel-se eta ur vuhez krefiv-meurbet a bedenn hag a labour, dindan lusk ar Spered. Sur-mat e raio mil vad da Gembre ma c'hell en em gembraekaat myioc'h-mui buan a-walc'h, rak ar rann-se eus kontelezh Dyfed a zo chomet bev ennañ ar c'hembraeg. Divyezhek eo an holl banelloù pe dost, ha kembraeg gant an holl dud er vuhez pemdeziek. Skaliataet eo bugale ar gumuniezh er skol gembraeg a zo e-kichen, hag ar iwerzhonadig a zo aze gant e dad a gembraega mat-kenañ tra na oar netra e dad koulz lavarout.

Menegiñ a rin ivez ez eus e Aberteifi (Cardigan e saozneg) un neved brudet evit ar gatoliked : hini Itron Varia ar Piled. (Ein Arglwyddes Mair Y Tapur). Lakaet eo bet da neveñ broadel evit Kembre gant an tri eskob (Kerdiz, Menevia, ha Wrecsam). Dont a ra katoliked eus Kembre a-bezh da birc'hirinañ eno. Ur gerig evit echuif : a-wechoù e vez start hor buhez, digalonekaet marteze gant enkadennoù a stourm. Berr hon amzer pe hor c'hoant da bedif. Kinnig a ran

BELEIEN E BREIZH:

Yann Talbot, Presbital, 22 110. ROSTREN.
96 29 01 55.

MOUEZH SANT ERWAN.

Kelc'h lizher niverenn 36.

Keneiled vat,

Berroc'h e vo hor c'hannadig en taol-mañ :

1. Rentañ-kont an emvod diwezhañ : Dalc'het eo bet d'ar Yaou 11 a viz Here e ti leanezed Sant Josef Cluny, e "Ti Mamm Doue", e Klegereg, Bro-Wened. Chafis hon eus bet gant an amzer a voe hecliek ha tomm, ha degemeret c'hwek gant al leanezed.

Diouzh ar beure hon eus kendalc'het gant studi an Didac'he hag echuet zoken an destenn. Kavet eo bet plijus ar studiadenn-se gant ar berzhidi, peogwir e weler en destenn pere a oa mennozhioù ar gristenien eus dibenn ar c'hantved kentañ, kost-tre ouzh an avieloù ha lizhiri Sant Paol.

Goude lein (merenn) e rejomp un tamm tro war droad er park bras hag er c'hoad a zo en dro d'an ti-degemer. Peurechuet e voe da c'houde neuze gant ar studiadenn hag eskemet en diwezh ar c'heleier hag an nevezentioù a-zivout buhez ar vro hag an iliz e Breizh.

2. KELEIER : DEVEZHIOU AN APEB. Frouezhus eo bet kendalc'h an APEB (kevredigezh ar gerent evit ar brezhoneg er skolioù publik) e Douarnenez war an divyezhegezh er skolioù publik. 200 bennak a dud a oa d'ar Sadorn 27.10., kerent, mistri-skol, emsaverien, en-dro d'ar brezegerien deuet eus ar minorelezhioù broadel eus Europa, hag eus servijoù ar marc'had kumun e Brussels. Tro o deus bet ivez ar berzhidi da brenañ levrioù kelenn, ha da sellout ouzh programmoù video er yezhoù minorelaet. D'ar Sul e voe dalc'het bodadegoù studi war meur a zanvez dudius. Deuet e oa ivez dileuridi eus Breizh (J.Y. Dozan ha P.Y. Tremel am eus gwelet-me, d'an nebeutañ). Ar pep frouezhusañ e seurt emvodoù eo an darempredoù a skoulmer gant emsaverien all, breizhiz pe broadelourien all, ar skiant-prenet a daper, hag an nerzh stourm a zeu diwar-se.

GOUEL AL LEVRIOU E BREIZH:

☞ Karaez e vo dalc'het eus an 2.11 d'ar 4.11, e sal "Omnisports" KARAEZ, adalek 10 eur beure betek 6 eur d'abardaez bemdez. Deuit niverus da welout ar stalioù ha da zispign ho kwenneien. Gwelloc'h e vo, forzh penaos, eget en em vreinnañ gant gallegachoù.

AR BREZHONEG ER SKOLIOU KRISTEN.

Ur vodadeg pouezus all a zo bet dalc'het e Kastellin d'al Lun 29.10, en dro da c'hoar Anna-Vari Arzur, kevredigezh "Dihun" ha Padrig An Habask evit studiañ penaos astenn an divyezhegezh er skolioù kristen. Santout a raer ez eus ul lañs bremañ gant ar stourm-se er skolioù, met ret e vo urzhiañ mat al labour war an tri eskopti a-gevret (Sant Brieg, Kemper, Gwened). Arabat e vefe da bep eskopti kemer un hent dresañ e-unan, anez da se e vo displeberet ar stourm brezhon.

B O D A D E G M I Z D U .

Dalc'het e vo hor bodadegoù bep Yaou kentañ eus ar miz. Met en taol-mañ c'hoazh e vo en eil, abalamour da C'houel an Hollsent.

Peget oc'h eta d'en em gavout diriaou, 8 a viz Du e presbital PRAT (Bro-Dreger) e ti Anton Ar Barzh (pellgomz : 96 47 00 93) YAOU 8 A VIZ DU da 10.30.

Roll an devezh :

- 10.30 : emgav ; prientadeg an oferenn.
 - 11 : oferenn en iliz parrez kenlidet ganimp-holl. Kemerit eta ho tilhad oferennañ. Lidet e vo an oferenn evit ar veleien eus an Emsav aet da Anaon abaoe un toullad bloavezhioù : Armañs Ar c'halvez ; Marsel Klerg ; Maodez Glandour ; Tad Medard ; Per Ar Gall ; G. Dubourg ; hag ar re all. Hep disañjal Anaon tud ar barrez.
 - 12.15 : pedenn krêisteiz ; 12.30 : merenn.
 - 14.30 : studi gant Yann Talbot war kevrin an Drinded.
 - 15 30 : keleier ; 16 : Banne kafe ; pedenn ; dibenn ar vodadeg.
- Pellgomzit da A.Ar Barzh m'emacc'h e soñj kemer perzh en emvod. A galez .Yann T.

Keneiled vat,

Deuet eo ar mizioù du, ha siwazh ne vo ket kelc'hiyer laouen-holl da reiñ gant marv Roger Nedelec hor c'henvreur beleg, ha hini Remont Delaporte, stourmer kristen ha broadelour.

BODADeg MIZ DU E PRESBITAL PRAT.

Dalc'het eo bet hon emvod diwezhañ e presbital Prat, e Bro-Dreger, e ti Anton Ar Barzh. Ar mennoz mat en devoa bet d'hor pediñ da genofennañ holl a-gevret evit Anaon tud ar barrez, hag evit ar veleien eus an Emsav aet da Anaon abaoe un toullad bloavezhioù. Un dek bennak e camp o kenofereññ, ha deuet e oa un dachu ugent bennak a dud eus ar barrez. War an hent-se, agredan, e ranker mont ha kenderc'hel gantañ evit kustumiñ ar gristenien ouzh an ofefennoù e yezh ar vro, ha reiñ esperañs dezho adarre er vuhez hag er feiz.

War-lerc'h h'ar merenn er presbital, (ur penzek bennak e camp ouzh taol) hon eus studiet penaos eo aet war spisaat ar gelennadurezh diwar-benn kevren an Drinded e-pad ar pevar kantved kentañ. Echuet e voe ar vodadeg war-dro 16 eur, ha divizet lakaat an emvodoù er bloaz-mañ bep eil Yaou eus ar miz.

KELEIER.

MARV ROGER NEDELEC.

Mantret omp bet o kaout kelou eus marv Roger Nedelec, person Kemper Gezenneg, oadet a 66 bloaz hepken. Klaf e oa gant klefved ar sukr abaoe un toullad bloavezhioù, met derc'hel a rae gant e labour person. Meur a wech en doa kemeret perzh en hor bodadegoù, dreist-holl e Kergrist, e ti e vignon Job. Ur c'henvreur mat e oa, tost ouzh ar bobl, ha karantez en devoa evit e yezh hag e vro. Ra gavo peoc'h e Levenez an Aotrou Doue.

Lidet e voe e obidoù en iliz Kemper Gezenneg, ur bagad bras a veleien o kenofereññ, d'ar Gwener 9 a viz Du. Da c'houde e voe douaret e bared o barrez, e-kichen e dud hag e gerent.

MARV HAG OBIDOU REMONT DELAPORTE.

Klaf da vat e oa abaoe bloaz hor c'heneil mat hag hor mestr Remont Delaporte, kristen feal, stourmer kalonek ha broadelour reizh. Rener ar PNB e oa bet e-pad ar brezel bed diwezhañ, ha ranket en devoa tremen pell amzer en harlu en Iwerzhon war-lerc'h ar brezel.

Warlene, e 89, am boa graet ur weladenn a-gevret gantañ ha Per Laurent eus Brest (war-dro miz Ebrel e oa a gredan) da abatti Kergonan, evit klask lakaat war-droad ur seurt "kenenglev ar Gristenien" evit ar Vrezhoned. An dachu stourmer kozh, disheñvel koulskoude, a oa en em gavet a-du war meur a dra, dreist-holl evit difenn gwir ar vrezhonegerien en Iliz. Merennet o doa e presbital Rostren ganin, goude-se e semp aet da abatti Kergonan, met ne oa deuet netra resis eus an emwel-se gant an Tad-abad. En ur vont hag en ur zont hor boa kemzet diwar-benn an dremenad, hag eus an dazont.

Abaoe bloavezhioù e ranne R. Delaporte e amzer etre Breizh hag Iwerzhon. Aet war e leve en devoa kendalc'het da stourm evit e yezh (bet e oa bet kelenner e skolveur Kork, war ar brezhoneg), dreist-holl en ur sevel ar geriadur bras brezhoneg-saozneg.

Evel kristen e keuzie dre ma vez dilezet muioc'h-mui sevenadur ar vro gant ar veleien hag ar strolladoù kristen. Klemm a-rae dre ma vez gallekaet muioc'h-mui pep tra. Skrivañ a rae din e oa dipitet ha poaniet-kaer dre ne veze ken kanet an disterañ kantik brezhonek en e barrez, Ar C'hastell-Nevez. Gwelout a rae pegen divlaz e oa evit kalz eus ar fideled al lideresh marv ha divuhez a vez kinniget dezho. Nec'het e oa ives a-hend-all gant ar c'heriaoueg re arnevez a vez implijet gant kristenien ' zo evit displegañ buhez ar feiz. Gerioueg Imbourc'h da skouer ne oa ket evit lonkañ... Plijet e oa bet avat gant embannadur "Levrig ar C'hristen" warlene.

Evit e obidoù e oa d'arredet er C'hastell-Nevez, d'ar 12 a viz

Du, un toullad mat a emsaverien, nebeut eus ar rummad yaouank, se ! zo sklaer a-walc'h da gompren. Evit kenferenniñ e camp pevar beleg. Div brezegenn a voe graet, unan e deroñ al lid gant an eskob Visant Fave, peogwir e voe R. Delaporte rener meur ar Bleun-Brug a-raok 1939, ha V. Fave e-unan evel aluzenner meur. Ur brezegenn don, entanet, leun a feiz, kalonekañs evit gwir, a voe displeget gant Youenn Troal, a oa ar pennoferenner. Graet e voe al lennadennoù gant mignoned ha kerent R. Delaporte, ar c'han a voe renet dreist gant Yann Desbordes. Ffomus ha doujus e voe al lid penn-da-benn, ar pezh a oa ret evit enoriñ ur c'hristen hag ur stourmer ken talvoudus ha R. Delaporte.

War-lerc'h an ofefenn en em gavomp ur bagadig keneiled tostañ c'hoazh er vered, en dro d'an Itron Delaporte ha d'he merc'h Anna. Unan a lavaras din : "n'em em welomp ken nemet e seurt degouezhioù glac'harus." Gwir eo evel-just, met ret eo soñjal eo deuet d'an oad a bevar ugent vloaz er memes blavezhioù an holl re a oa en o oad splannañ e-pad ar brezel diwezhañ ; ha setu perak e kollomp anezho koulz lavarout er memes bloavezhioù ivez. Se eo lezenn an amzer...

LEVRIOU.

Gouel al levrion e Karaez. Dalc'het hon eus ur stand e Karaez d'ar Sadorn 3 ha d'ar Sul 4 a viz Kerzu. Kejet hon eus gant kalsik emsaverien ha lennerien. Edomp dres e-kichen stand ar C'hoar Anna-Vari Arzur a labour kals diouzh he zu e Penn-Ar-Bed evit sevenadur Breizh. Seurt devezhioù avat n'int ket ffouezhus-kaer dimp evit ar c'henwerzh. N'em eus gwerzhet nemet evit 595-lur en holl, ha c'hoazh em eus bet ranket paeañ 160 lur evit feurmiñ ar stand. Met pezh a zo pouezus eo diskouez ez eus kristenien oberiant war dachenn ar stourm evit yezh ha sevenadur ar vro. Un doare abostolerezh em en ur stumm.

Yann Fañh Kereour Gwidel. O paouez dont er maez emañ levrig Erwan Ar Menga : "Yann Fañh Kereour Gwidel." Un embannadur e galleg a oa bet graet endeo, hag ivez unan e brezhoneg gant Imbourc'h, dindan stumm ur pezhig c'hoari avat. O vezañ m'en deus an oberour paeet an embannadur gant e arc'hant dezhañ (Bennozh Doue kenvreur mat !!!) e vo profet evit netra al levr d'ar vugale ha d'ar yaouankizoù a zo o teskiñ ar yezh. Met evit an dud en oad n'eo ket didalvoud kennebeut. An tiegezhioù o deus c'hoant da gaout al levr, hag ar skolioù (Diwan, klasoù publik divyezhek) a c'hell goulenn al levr diganin. Ne vo nemet paeañ ar mizoù-kas (50 lur evit 10 skouerenn, 10 lur evit unan.) Ul levr a 82 pajenn eo, a vent 14,5 X 21.

BODADEG MIZ KERZU.

Dalc'het e vo e presbital Kergrist-Moelou, e ti Job Lec'hvien d'ar Yaou 6 a viz Kerzu.

Evel e Prat e vo kenlidet an oferenn diouzh ar beure. Kasit eta ganeoc'h ho tilhad oferenn.

10.30 : prientadur an oferenn.

11 eur oferenn kenlidet en iliz parrez. Lavaret e vo evit R. Nedeleg, Remont Delaporte, an Ao. Per Bourdellez marvet warlene e Gwareg, hag evit an Pimezell Marc'harid Gourlaouen n'he devoa ket bet an oferenn e brezhoneg a oa dleet deshi kaout evit hec'h obidoù. An ofefenn-mañ eta a vo ur wir oferenn-gañv eviti, evit ma laouenaio e lein an Neñvoù.

12.15 : pedenn kreisteiz.

12.30 : pred a gevret.

14. : studiadenñ gant Yann Talbot diwar-benn Lizher kentañ Sant Paol d'an Dessalonikidi. Adlennit al lizher en a-raok mar gallit.

16 : diwezh an emvod hag adverenn.

Pellgomzit da Job Lec'hvien a-benn ar merc'her 5.12, m'emaoc'h e soñj dont d'an emvod. (Pg : 96.36.50.38.)

A greiz kalon evit Doue ha Breizh.

Yann Talbot.

MOUEZH SANT ERWAN.

Kelc'hlizher niverenn 39.

Keneiled vat,

Chom a ra bev hor c'henvreurezh, ha prest omp da zegemer izili nevez, beleien, leanezed, ha laiked. Gant gras Doue hag hol labour pennek e c'hellimp sevel ur c'hevredad a bado hag a servijo da Vreizh ha d'an iliz.

Hor bodadeg diwezhañ a voe dalc'het e parrez Lokarn, d'al Lun 7 a viz Genver. Diouzh ar beure e voe kenlidet un oferenn en iliz parrez en eñvor Per Ar Gall hag Erwan Ar Sant. Un nebeut beleien a oa deuet ouzhpenn, hag un toulladig fideled, met o vezañ ma oa un interamant vras war-lerc'h er barrez, ne oa nemet un ugent bennak a dud en oferenn. War-lerc'h ar pred en ti-debriñ, e voe graet ganin, er presbital kozh nevez addresset, un eil brezegenn diwar-benn lizher kentañ Sant Paol d'an Dessaloniñidi. Dreist-holl diwar-benn ar gelenadurezh a-zivout ar re varv, an dasorc'h hag ar parousiezh. Da 16 eur e voe echuet an emvod, rak mall e oa gant an dud distreiñ d'ar gêr. Divizet e oa bet e vefe miret al Lun evit un nebeut bodadegoù, rak ar Yaou n'eo ket aes, siwazh, (evidon e oa an aesañ) evit ul lodenn eus ar berzhidi.

Keleier :

1. Marv Roparzh Broudig : Aet eo da Anaon e Trebeurden hor c'henvroad mat Roparzh Broudig, oadet a 70 bloaz hepken. Martolod ha pesketour e oa bet a viher, broadelour a galon, ha skrivagner. Addesket gantañ brezhoneg e oa deuet da vezañ ur skrivagner anavezet, ken e komz-plaen hag e gwerzennoù, awenet gant ar mor, ar beajoù hir, difenn an endro. Kenlabouret en devoa bet d'ar c'helaouennoù Barr Heol, Al Liamm, hag embannet meur a levrig. E oberezh ziwezhañ, "Gwrez an trovanou" a oa o paouez dont er maez er miz diwezhañ, embannet gant "Hor Yezh". Moarvat n'en doa ket tu da welout an embannadur brav-se. Lidet eo bet e obidoù ganin, e brezhoneg hag e galleg, e Trebeurden, e barrez, d'ar Yaou 17 a viz Genver. Un nebeut mignoned eus an Emsav, dreist-holl eus Bro-Dreger, a oa deuet da enoriñ an eñvor anezhañ, en o zouez emsaverien eus an UDB rak er strollad se e oa bet e pad pell. Ra gavo hor c'henvroad kalonek peoc'h e levnez Doue.

2. Stourm an U.G.B. Derc'hel a ra strollad an UGB (unvaniezh ar gelennerien e brezhoneg) da stourm evit kelenneriezh hor yezh er skolioù bihan, skoloù ha liseoù. Manifestadegoù a zo bet dija. Fas koad a ra ar gouarnamant ouzh ar goulennadegoù hag ar raktresoù. Abaoe pemp bloaz ez eus bet ur giladenn war ar c'helenn brezhoneg : nebeutoc'h-nebeutañ a skolidi peogwir e vez diaesaet dezho a-ratozh-kaer heuliañ kentelioù. Yannig Baron en deus kroget gant un harz-debriñ e Gwened evit goulenn ma vo savet er Morbihan padoù kelenn nevez war ar brezhoneg.

3. Diskleriadur ar C'hardinal Casaroli e kendalc'h ar C.S.C.E. (20 a viz Du 90)

Lavarout a ra penaos ez eus tu da virout ar surentez hag ar peoc'h e broioù Europa. E-touez ar poentoù a ra meneg anezho, e pouez war hemañ : ret eo derc'hel start d'an doujañs evit ar minorelezhioù :

" Le droit des minorités : comme le disait le pape Jean-Paul II (Message pour la journée mondiale de la Paix, 1989, n.12) ce respect doit être considéré en quelque sorte, "comme la pierre de touche d'une convivialité harmonieuse et comme l'indice de la maturité civile atteinte par un pays et ses institutions."

Daoust hag-efi e soñj dimp ez eus doujañs e Breizh hag e Bro-C'hall evit ar minorelezhioù ? Petra a soñj hon eskibien ?

B O D A D E G M I Z C ' H W E V R E R .

Dalc'het e vo e presbital PLOUNECOUR-MENEZ e ti Youenn Troal, d'al Lun 10 a viz C'hwevrer, adalek 10.30. Ma vo diwezhat, kentelioù an eus betek 10.15. Krogit eta hepdon.

10.30 : emgav ; pedenn digeriñ.

10.45 : prezegenn gant Per Ar Saoz diwar-benn an anglikanelezh.

12.15 : ofis kreisteiz.

12.30 : pred.

14 : diviz diwar-benn an anglikanelezh, ha marteze e vefe tu ivez da weladenniñ skol Biwan Komana ?

16. : banne kafe. Diwezhan an emvod.

Pellgomzit da Youenn Troal, m'emapc'h e soñj dont d'an emvod

(pg : 98 78 01 30).

A greiz kalon evit Doue ha Breizh : Yann Talbot.

M O U E Z H S A N T E R W A N .

Niverenn 41.

BODADEG PLOUNEOUR-MENEZ :

Dalc'het e oa bet d'al Lun 11 a viz C'hwevrer e presbital Plouneour Menez e ti Youenn Troal. Un dek bennek e oamp evel kustum, en o zouez laiked eus Kristenien Breizh.

Diouzh ar beure hon eus klavet ur gaozeadenn blijus gant Per Ar Saoz diwar-benn an anglikanelezh, istor ar gumuniezh anglikan, he feiz, he reolennoù, he buhez. Kontet en deus dimp ivez peseurt stummadur en devoa bet e Kembre. Goude merenn hon eus kendalc'het gant an diviz, rak meur a c'houlenn a oa, a-zivout an ekumenegezh gant an anglikaned, kudenn talvoudegezh an urzhioù anglikan, kudenn belegiezh ar merc'hed en anglikanelezh hag all. Echuet e voe an emvod evel boas gant kan ar Magnificat hag ur banne kafe.

KELEIER :

I. HARZ DEBRIN : Paouezet en deus Yannig Baron d'ober harz-debrin e Gwened evit goulenn ppstoù kelenn brezhoneg er Morbihan. Pemzektez harz-debrin evit kaout 2 bost CAPES brezhoneg er bloaz-mañ e lec'h unan... Pet devezh harz-debrin a vefe ret ober neuze evit kaout kelennerezh ar yezh en holl skolioù e Breizh en holl liveoù ? En ur ober buan ar gont e jedan e vefe ret gant unan ober 500 sizhunvezh harz-debrin dibaouez, da lavarout eo 10 bloavezh !!! Setu demokratelezh Bro-C'hall...

War an hevelep lañs en deus kroget M. François eus an Naoned, kuzulier-kêr UDB en Naoned, da ober harz-debrin d'e dro evit ma vo gwellaet kelennerezh ar brezhoneg e Liger-Atlantel. Emañ hiziv gant e 12vet devezh. Marteze e c'hounezzo ef ivez un eurvezh kelennadurezh bennak ouzhpenn evel ma vez roet un aluzen d'ar c'halsker bara evit kaout peoc'h digantañ. Setu demokratelezh Bro-C'hall...

Dalc'homp soñj en deus nac'het Parlamant Bro-C'hall (16.6.90) sinañ ha gwiriekaat Diskleriadur etrevroadel gwirioù ar vugale savet gant an UNO (Aozadur ar broadoù unanet, ONU e galleg), rak en destenn ez eus ur c'hraf diwar-benn ar gwir evit ar re yaouank da vezañ kenteliet e yezh orin o c'henel, pa n'eo ket-hi hini ar stad ; ha se, war zigarez, emezo, n'eus ket a vinorelezh vroadel e Bro-C'hall hag ez omp holl kevatal dirak al lezenn. Pilpouserzh n'eo ken, ha strizhder spered. N'o deus ket troet kein pennoù bras ar c'hallaoued ouzh o impalouriezh sevenadurel ha politikel, kaer o deus lavarout, kaer o deus bout sosialisted e penn ar stad (safset...)

II. Marv an Itron de Rohan-Chabot : An Itron de Rohan-Chabot a zo aet da Anaon d'an oad a 81 bloaz. Douaret eo bet en Antrain (Bro-Roazhon), e lec'h m'edo o chom, d'an 19 a viz Genver. Ur skrivagnerez vrezhonek eo bet, desket ganti ar yezh, embannet ganti pennadoù e-barzh "Al Liamm", sikouret ganti kement emsav sevenadurel a oa e Breizh (Skol an Em-sav, "Bremañ", "Kamp ar vrezhonegerien" hag all). Ur gristenez start en he feiz e oa ivez, mantret e fin he buhez gant stad truezus ar brezhoneg en Iliz e Breizh a-vremañ. Daou vloaz ' zo he doa skrivet din evit va atizañ da sevel ur c'hevredad a laiked kristen kar-o-bro e Breizh evit ar pemp eskopti. Siwazh, gant al liesseurt m'eo mennoziou hag emzalc'hioù ar gristenien bremañ e Breizh evel e lec'h all (eus ar virourien bennekañ betek an araokourien daonetañ...) n'eus ket tu d'hen ober, evit bremañ bpred. Marteze un deiz... ?

III. Gwirioù ar minorelezhioù hag an Iliz :

Adarre e pouez ar Pap war wirioù ar minorelezhioù er vuhez foran hag en Iliz.

a) er c'hemenn evit devezh hollvedel ar peoc'h (1.1.91), er rannbennad 6 : ret eo d'ar stadoù kaout ur preder ispisial evit gwirioù ar minorelezhioù.

b) el lizher-meur "Redemptoris Missio" diwar-benn Mision an Iliz e pouez adarre war an doujafs e tle kaout an Iliz hag ar gristenien bodet enni evit sevenadur ha yezh ar pobloù da avielañ (rannbennad 35).

Met pet a gristenien, pet a veleien, e Breizh, a lenn hag a ra implij eus diskleriadurioù ar Pap, dreist-holl pa vez goulennet enno ur c'hemmadur spered hag emzalc'h ?

IV. Kendalc'h ar veleien iwerzhonegerien en Iwerzhon :

Beleien Iwerzhon bodet er

gevredigezh "An Sagart" (Ar beleg) a zalc'ho ur vodadeg hollek e Dullen, d'ar Lun 1an ha Meurzh 2 a viz Ebrel. Pedet omp bet da vont gant an tad D.O'Laoghaire S.J. Piv en deus c'hoant mont da Iwerzhon ? Paet e vo e veaj dezhañ...

V. Buhez an U.G.B. (Unvaniezh ar gelennerien brezhoneg).

Un emwel pouezus a vo e rektordi Roazhon d'an 20 a viz Meurzh etre rektor an Akademiezh ha dileuridi Unvaniezh ar gelennerien brezhoneg. Kaoz a vo eus astennidigezh kelennerezh ar yezh er skolajoù ha liseoù, eus ar c'hlasoù divyezhek er skolioù kentañ derez, eus stummadur ar vistri evit kelenn ar yezh, eus an arnodennoù er skol-veur (aotreegezh, CAPES hag all). Moarvat e vo tenn ar c'hendiviz.

VI. Ar Geriadur hollvrezhonek : (A.G.H)

Emeur o labourat war ar geriadur-se abaoe daou vloaz. Ingalet eo bet ar reolennoù. Dibabet ez eus bet termenñ 10.000 ger, gant ar gerioù diveret ouzhpenn. Pep tra a vo e brezhoneg evel just, pezh a raio eta ur geriadur gwirion a-benn ar fin, evel ma vez kavet en holl yezhoù. Servijout a raio da gentañ d'ar skolidi a ra gant ar brezhoneg en o skol (Diwan ; skolioù publik divyezhek). Met servijout a raio ivez d'an deskarded war ar yezh, ha d'an holl vrezhonegerien c'hoant ganto mestroniañ gwelloc'h o yezh. Ur benveg labour dispar e vo. Met pebezh labour ivez ! jedet ez eus bet e vefe ezhomm 25 325 eurvezh labour evit sevel pennadoù an AGH ; hep kontañ al labour skriverenzañ, adlenn hag all. O vezañ ma labour ul labourer gopret 1755 eurvezh en ur bloavezh, kement se a rafe 14,43 bloavezh labour klok evit un den na rafe nemet se... A-drugarez Doue omp un ugent bennak o labourat war an AGH, met memestra n'eo ket un diduamant...

VII. Breuriezh Sant Erwan - Emglev an tiegezhioù.

Bodadeg ar familhoù, kerent ha bugale a vo dalc'het e Rostren, d'ar Sul 21 a viz Ebrel, adalek 12 eur : pred a-gevret ; pourmenadenn ha c'hoarioù en endervezh ; hag oferenn da 5 eur e chapel Kampostal evit echuñ. Deuit niverus. Ar veleien a genoferenno.

Kamp Katekiz an hañv a vo dalc'het e Rostren, evit ar vugale har ar grennarded (7 vloaz, 14 bloaz) eus al Lun 5 a viz Eost betek ar Sadorn 10. Ne vo degemeret nemet brezhonegerien barrek da gomz ar yezh.

VIII. Kendalc'h Keltiek 91 : Dalc'het e vo e Dullen (Iwerzhon) e skol-veur vroadel 4, eus ar 27.7 d'an 3.8. Priz ar c'hendalc'h (boued ha lajañ) a savo da 140 lur iwerzhonat (war-dro 1300 lur gall). Danvez ar c'hendalc'h a vo : "Hon sonerezh-ni". Evit en em enskrivañ goulenn digant Ldk Chapel, 5 straed Berlioz, 29600 Plourin-Montroulez.

Un devezh emgav evit holl izili Skourr Breizh ar C'hendalc'h keltiek ha keneiled ar skourr a vo dalc'het d'ar Sul 16 a viz Mezheven, marteze e Kemperle, diwar-benn : "War roudoù Kervarker". Kaset e vo keloù d'an dud.

VIII. Gouel Broadel ar brezhoneg : Dalc'het e vo , evel boas, e Karaez, d'ar Gwener 17, Sadorn 18 ha Sul 19 a viz Mae hevlene (Pantekost). vel kustum e vo dalc'het ur stand ganimp a-gevret gant Kristenien Breizh. Ezhomm a vo tud evit derc'hel ar stand d'ar Sadorn ha d'ar Sul.

B O D A D E G M I Z M E U R Z H .

Dalc'het e vo hon emvod kentañ e presbital nevez BOULVRIAG e ti Marsel Derrien, d'ar Yaou 24 a viz Meurzh.

Roll an devezh :

- 10.30 : emgav ; pedenn digeriñ.
- 10.45 : prezegenn gant an tad Turiaw diwar-benn : "An Iliz hag an Ilizoù hervez ar gelennadurezh reizhvriek (ortodoks).
- 12.15 : ofis kristeiz ; 12.30 : pred er presbital.
- 14 : goulennoù ha respontoù diwar-benn prezegenn ar beure.
- 16 : keleier ; banne kafe ; pedenn echuñ ; diwezh an emvod .

Skrivit pe bellgomzit da Varsel Derrien m'emaoc'h e soñj kemer perzh er vodadeg (96 43 40 61)

A greiz kalon evit Doue ha Breizh.

Yann Talbot.

MOUEZH SANT ERWAN.

Niverenn 42.

Keneiled vat,

Evel boas e skrivan war ar prim ar c'hannadig-mañ. Dav e vefe din kaout ur sekretour a-benn ar fin...

Ha da gentañ e roan deoc'h ur rentañ-Mont eus hon emvod diwezhañ. Dalc'het e voe e presbital Boulvriag e ti Marsel Dervien d'ar Yaou 21 a viz Meurzh. Un daouzek bennak hon eus en em vodet en dro d'an daol evit selaou ur brezegenn gaer roet dimp gant an Tad Turiaw diwar-benn " an Iliz hag an ilizoù hervez ar gelennadurezh reizhvriek". Uhel ar mennozioù; awenet-kaer, ha skiantel, spis ha don ar yezh. Sur-mat n'hon eus ket intentet pep tra war an taol, met an eskemm mennozioù a zo bet frouezhus e-pad ha da heul an displegaden. A-drugarez Doue en deus an Tad Turiaw displeget dimp ar gerioù nevez ha diaes, ha kaset dimp ar skrid war-lerc'h se evit ma c'hellimp hen studiañ a-zevri-kaer. Ma kendalc'homp da labourat evel-se e teuimp a-benn da vezañ gouizieq dre ar brezhoneg, hag e c'hellimp tamm ha-tamm lezel ar galleg a-gostez evit hor buhez kefredel ha speredel.

Goude merenn (aozet gant ar person ; ur c'heginer a-zoare ez eus anezhañ) e voe kendalc'het gant an diviz. Rak c'hoant hor boa da c'houzout muioc'h diwar-benn an ilizoù reizhvriek, peseurt diforc'h a zo gant Iliz Roma (hon hini) ha peseurt spi a c'hellomp kaout e teufe an unvaniezh da wir etre kristenien ar c'hornog ha kristenien ar Reter.

Ar re o defe c'hoant kaout kaozeadenn an Tad Turiaw, talvoudus e pep keñver, a c'hell hen goulenn digantañ : Tad Turiaw Ar Menteg, 4 Alez ar Balan, 22 300. Lokmikael an Traezh. Lannuon.

BREURIEZH SANT ILTUD : Ur vreuriezh a kristenien yaouank brezhoneger a zo bet nevez savet evit krouiñ ul liamm speredel etrezo ha kemer perzh en avielerezh nevez e Breizh, evel m'hen goulenn H.T. S. ar Pab Yann Baol II. Ouzhpenn-se ez eus da sikour an tri c'hloareg yaouank a zo oc'h ober o studioù prederouriezh ha feizoniezh a-benn bezañ beleget (mar bez bolontez Doue), evit servijiñ an Aotrou hag hor pobl. Ar re o defe c'hoant kemer perzh en obererezh skoazell (en ur gas profoù arc'hant) a c'hell skrivañ da Visant de Coattarel, Breuriezh Sant Iltud, ZUP Ker Uhel, AC III. 22300 Lannuon.

Keleier :

Bodadeg ar familhoù : diaester hon eus bet evit mirout an deiz dibabet, e miz Ebrel. Dalc'het e vo eta d'ar Sul 12 a viz Mae e Rostren, e skol an Itron Varia. An emgav a vo da 12 eur, hag an oferenn a vo lidet da 1 eur e chapel Kampostral.

Dremmwel : Ur gevredigezh nevez eo, savet evit astenn kelennadurezh ar brezhoneg e Morbihan. Chomlec'h : Yannig Baron, Kergouarec, 56 400. BREC'H.

Gouel Broadel ar Brezhoneg : E Karaez e vo dalc'het d'an 18 ha 19 a viz Mae e Karaez. Un oferenn a vo lidet da 14.15 evel boas d'ar Sul.

B O D A D E G M I Z E B R E L .

Dalc'het e vo e ti al leanezed (Urzh sant Eosten) e skolaj an Itron Varia e Gwareg. (Kerne uhel), d'ar Yaou 18 a viz Ebrel.

Roll labour :

- 10. 30 : emgav ; pedenn digerif.
- 10 45 : prezegenn gant Yann Talbot : Ar Skriturioù, petra eo o awenadur, penaos eo bet savet ar roll kanonek anezho.
- 12 : ofis kreisteiz.
- 12 20 : pred e sal debrif ar gouvidi. Pep hini a baeo e bred.
- 14 : baleadenn verr.
- 14 30 : diviz war ar gomzadenn .
Labour war troidigezh ar bedenn-veur kentañ evit an adunvanidigezh. E galleg emañ an destenn orin.
- 16 : diwezh an emvod. Banne kafe ha pedenn echuif.

Pellgomzid din dimeurzh pe dimerc'her 17.4. m'emaoc'h e soñj kemer perzh en emvod.
(96 29 01 55). A galon. Yann Talbot.

Keneiled vat,

Setu an hevez- amzer o tont a-benn an diwezh, hag an devezhioù hir. N'eus ken nemet div vodadeg a-raok an hañv.

D'an 18 a viz Ebrel e voe dalc'het hor bodadeg diwezhañ. Nebeut a dud a oa deuet en taol-mañ, pepp hepken, rak meur a hini a oa dalc'het gant traoù all.

E Gwareg e ti al leanezed en em vodjamp eta, ha diouzh ar beure e voe studiet kudenñ an Diskuliadur, p'naos eo bet degemeret Lavar Doue gant pobl Israel hag ar Brofeded. Goude merenn ez ajomp war bez ar veleien a zo douaret el liorz, an Ao. Per Bourdellez da gentañ, anavezet mat, bet aluzenner en ti e-pad ugent vloaz pe dost, marvet e miz Gouhere 89, ha Mab Sulon, an Ao Lorinquer, douaret er chapel e-kichen, skrivet gantañ ivez meur a destenn en hor yezh.

War-lerc'h hor pourmenadennig el liorz, e krogjomp adarre gant al labour penn. Troet e voe al bodenn gentañ eus ar bedenn veur kentañ evit an adunvanif (diwar ar galleg). Amañ e kavot an destenn. Grit hoc'h evezhiadennoù warni. Pa vo prest an holl destennoù e vo adembannet Ordinal an Oferenn (hini Loeiz Ar floc'h) dindan stumm ur c'haier bras klok, mat evit lakaat war un aoter. Ret e vo treiñ ouzhpenn : an teir fedenn veur evit an oferennoù gant bugale, ar bedenn-veur evit an engroezioù tud, ar bedenn-veur all evit an adunvanif. E galleg pe an alamaneg emañ an testennoù orin.

Keleier :

Bodadeg an tiegezhioù kristen.

Nebeut a dud a zo deuet siwazh da Rostren, d'an 12 a viz Mae, un daouzek bennak a dud vras, 7 bugel, 5 tiegezh hepken. Urwir eo e oa kernes skol Diwanr e Kemper d'an deiz-se. War-lerc'h ar pred e skol an Itron Varia e rejomp ur valeadenn blijus-kenañ war vord ar c'hanol (Brest-Naoned), 6 pe 7 kilometrad, o weleadenñ chapel Itron Varia a Druez (truezus e gwirionez he stad). Kavout a rejomp zoken un ti-skluz e Pont Even a e-hellfe servijout d'ober stajoù evit ar grennarded (ma vije adrenket tout). En oferenn e chapel Kampostal e oamp war-dro 25 a dud. Lennet e voe al, lennadenn gentañ ganin ha daou, vogel, Lomig ha Neven. Un taol-esa evito. Daou veleg a oa o kenoferenniñ, F Tomaz ha me. War-dro 6 eur e voe echu an traoù.

Gouel Broadel ar Brezhoneg :

Un oferenn a vo lidet en iliz parrez d'ar Sul 19 a viz Mae da 14.15. Ar veleien a c'hello dont a zo pedet da genoferenniñ.

An nevez avieladur e Breizh.

D'an 19 a viz Mezheven e raio hor tri studier yaouank o gouestloù kentañ e kumuniezh Sant Yann evit an nevez avieladur e Breizh. Ar veleien a c'hello mont di en em renko evit mont a-gevret d'al lid-se. Urz goanag nevez eo evit dazont ar feiz kristen en hor bro. Ur gumuniezh speredel a zo bet savet evit o sikour. Kemerit perzh enni d'ho tro.

B O D A D E G M I Z M A E .

Dalc'het e vo e ti an Tad Turiaw ar Menteg, 4 alez ar Balan, e Lokmikael an traez (er bourk) d'ar Yaou 16 a viz Mezheven. Kemerit hent Plouzelambr evit mont di, ha goude klaskit...

Ar Yaou Bask e vo evit an iliz reizhvriek. Setu, ma fell deoc'h chom, e vo lidet oferenn Pignadenn hor Salver, da 6 eur war-lerc'h an emvod.

10.30 : degemeradeg, pedenn digeriñ.

10.45 : prezegennig diwar-benn Kanon ar skriturioù gant Yann Talbot.

12.15 : pedenn krizisteiz.

12.30 : pred a-gevret en ti.

14 : pourmenadenn en tro-war-droioù, pe labour spered. Ret e vo treiñ ar p'nennoù-meur all. Krogit ganto mar gellit.

16 eur : banne Kafe, diwezh an emvod.

18 eur : oferenn gouel emsav Krist hervez al liderezh reizhvriek.

Pellgomzit d'an Tad Turiaw ma soñjit kemer perzh en emvod (96 35 72 66).

A greiz kalon erit Doue ha Breizh. Yann Talbot.

M O U E Z H S A N T E R W A N .

Niverenn 44.

Keneiled vat,

Gant an hañv o tont ha dibenn ar bloavezh skol e vo hor bodadeg diwezhañ ivez kent ar vakañsoù bras. Met da gentañ lennit amañ rentañ-kont emvod miz Mae.

EMVOD LOKMIKAEL-an-TRAEZH. : 16 a viz Mae.

Evel ma ouzoc'h, oberour ar bajennad-mañ a zo eus ar re vleupañ. ("C'hwi 'zo bleup" eme Briec B'aterel din alies, hag ar wirionez gantañ...), hag gant se em boa skrivet gant an emvod, dre fazi, "Yaou 16 a viz Mezheven", pa oa "miz Mae" da lenn, evel just ! Ha setu an dud t'omp let ha chomet da ruzañ er gêr ! Met ma lennerien a zo ken bleup ha me peogwir ar 16 a viz Mezheven n'eo ket ur yaou met ur Sul... Neuze gant un tamm kompreneson o dije gwelet ar fazi. Ma Ma Ma Ma !... Ken ne oamp nemet 4 en emvod, ar 16 a viz Mae e ti Turiaw Ar Menteg e Lokmikael-an-traezh, tra m'en devoa prepart da zebriñ evit dek... "Tañpir", eme egile... Graet hon doa labour evelkent.

Diouzh ar beure hon eus kendalc'het da dreñf ar pedennoù eukaristiel. Adwelet hon eus an hini gentañ evit an adunvaniezh, ha graet un droidigezh prim-ha-prim eus an hini gentañ evit an oferennoù gant bugale. An div-se a zo troet diwar ar galleg (testenn orin).

Goude bezañ predet e ti Turiaw, ez ejomp da weladenniñ skol kentañ derez Diwan e bourk Logivi-Lannuon. Staliñt brav eo ar skol, ha plas dezhi, war vord ar stêr, al Leger. Komzet hon eus bet gant ar vistri hag ar vugale. Tri pe pevar c'hlas a zo bremañ, un hanter kant a vugale. Met, eme Gireg Konan, unan eus ar vistri, e gwirionez ne vez ket graet a-walc'h c'hoazh a vrezhoneg evito e-pad ar sizhunvezh, rak, o vezañ m'eo gallegerien an darnvuiañ eus an tiegezhioù, ha galleg a-hend-all e pep lec'h, er skinwel, er stalioù, war ar straedoù, eo digevatal, digempouez, an div yezh e spered ar vugale : tonket eo ar galleg da drec'hif n'eus forzh penaos. Marteze e vint divyezhek, met muñoc'h war ar galleg eget war ar brezhoneg. N'em eus ket kredet goulenn pet a vugale a zo katekizet er CE ha CM. Nebeut-tre moarvat, nemet unan d'an nebeutañ hag a zeu bep bloaz d'ar c'hamp katekiz e Rostren.

Goude adverenn, distroet tri mab Turiaw d'ar gêr, en em gavis va-unan evit selaou ouzh liderezh Yaou Bask hervez deziadur an iliz reizh-riek. Ne c'hellis ket chom betek ar fin, rak padout hir a ra liderezh ar Reter... Me a soñj din e kollfemp tout "hon c'hliañted" ma rafemp kement all bep Sul, gant ar preset ma vez "ar gristenien vat" aliesik da dennañ o skasoù eus o iliz farrez...

KELEIER BERR.

1. Gouel broadel ar Brezhoneg (Sul ar Pantekost, 17, 18, 19 a viz Mae) e Karaez.

Milieroù a dud a oa deuet evel boaz, evit difenn ar yezh, selaou ouzh a bep seurt sonerezh trouzus, diverglañ o divesker er festou-noz, ober tortadoù bep nez evit reoù all, hag ivez kejañ gant mignoned. Me n'em eus ket gallet na selaou na welout netra peogwir e oan dalc'het gant ar stand. Da ziv eur ha kard e voe lidet un oferenn en iliz Sant Trémour. Nebeutoc'h a dud a oa deuet en taol-mañ, a gredan, un daou ugent bennak. Dre ziouer a vruderezh marteze, hag ivez dre ma krog ar standoù da zigeriñ da ziv eur. Tri ez omp bet goude se evit derc'hel ar stand levrioù. N'em eus ket bet gounezet peadra da sevel ur greizenn nukleel (derc'hanel, eme an dud desket) : 700 lur bennak en holl, hag o vezañ m'em eus paeet 240 lur feurmif ar plas, ne chom ket kalz en hor godelloù. Ma ! Un tamm bruderezh a reomp evit an Emsav kristen. C'hoar Anna Vari Arzur a oa em c'hichen. Moarvat he deus bet an hevelep kudennoù evit gwerzhañ he zraoù.

2. Oberennoù a-bouez en hañv :

Kamp Etrekeltiek ar vrezhonegerien (KEAV) a vo dalc'het evel bep bloaz e Skaer (er skol Joliot-Curie) eus ar Sul 14 a viz Gouhere betek ar Sadorn 27. Evel warlene e vo moarvat meur a live. Ar rumadoù uhel a zo a live gant

studioù keltiek ar skol-veur.

2)

Kendalc'h keltiek e Dullen (Iwerzhon) : dalc'het e vo eus al lun 29/7 betek ar Sadorn 3 a viz Eost. Un dek bennak a vreizhiz a yelo du-hont, me en o zouez. Mont a reor gant ar vag eus Roskov betek Cork d'ar Gwener 27 da hanter noz. Danvez ar c'hendalc'h a vo hevlene : "Hon sonerezh-ni". Da'm soñj-me n'eo ket tre emsavus, met Iwerzhoniz ne fell ket dezho moarvat plediñ gant kudennoù pouezus ha risklus evel hini dazont ar yezhoù hag ar sevenadurioù keltiek en ur bed a ya muioc'h-mui war an danvezekaat. Tu a vo sur a-walc'h da gejañ gant katoliked eus Iwerzhon hag eus Kembre.

Kamp Katekiz evit ar vugale : (eus 7 da 15 bloaz) E Rostren, e skol an Itron Varia (kentañ derez ; rue de Metz) e vo dalc'het hor c'hamp evel warlene. Padout a raio eus al lun 5 a viz Eost da greisteiz betek ar Sadorn 10 da 18 eur. Bez e vo un oferenn e chapel Kampostal evit echuiñ ar c'hamp. Ar veleien hag al laiked a vo degemeret evel boas : d'ar Gwener 9 evit merenn. Ret e vo dezho lavarout dimp en a-raok evit ma vo un tamm boued da reiñ dezho. Evel-just, d'an oferenn d'ar Sadorn e vezint degemeret ivez a galon laouen.

Ur gerig c'hoazh evit pezh a sell ouzh ar c'hatekizañ e brezhoneg : e Lannuon er skolaj publik e vez graet katekiz divyezhek d'ar vugale a heuilh kentelioù brezhoneg er skol. Er bloaz-mañ eme Philippe Audinet, a ra war-dro, n'eus ket bet c'hoazh kalz a vrezhoneg er stroñladig bugale, rak he c'ant ket ampart-tre war ar yezh ; met da vloaz e vo muioc'h. Bet int bet o tremen un nebeut derezhioù e ti Hob an Irien e Treflevenez, ha plijet-kaer int bet o welout n'eo ket diamzeret ober traoù e brezhoneg.

B O D A D E G M I Z M E Z H E V E N .

Dalc'het e vo d'al Lun 24 a viz Mezheven (Gouel Sant Yann !) e ti Tadoù Sant Jakez Haiti (Maison des Pères de St Jacques) war barrez Gwiklan, e-kichen Landivizio.

Emañ an ti war an hent a gas eus Gwimilio pe Lambaol-Gwimilio war du an hent bras nenn 1^{er} (ar gourhent). Merket-sklaer eo war ar gartenn hentoù Michelin.

Kregiñ a raio an emvod da 10 eur 30 evel kustum.

10.30 : emgav ; pedenn digeriñ.

10.45 : prezegennig gant Yann war Kanon ar Skriturioù (ar pezh n'am boa ket gallet ober e Lukmikael-an-traezh e miz Mae)

12 : Ofis kreisteiz.

12.15 : merenn e ti Tadoù Sant Jakez.

14 : Pourmenadenn. Mar bez tu ez aimp da weladenniñ skolaj Diwan Roparz Hemon er Releg-Kerhuon (Brest).

Ma n'eus ket tu e labourimp un tamm etre 15 ha 16 eur war ar pedennoù eukaristiel all.

16.30 : pedenn diwezhañ ; banne kafe ; diwezh an emvod.

Repontit din-me (96 29 01 55) m'emaoc'h e soñj kemer perzh en emvod. Ar gwellañ d'ober eo pellgomz din ar sadorn beure 22/6.

A greiz kalon ganeoc'h-holl e karantez Doue hag hor pobl.

Yann Talbot.

KUMUNIEZH SANT ERWAN.
BELEIEN E BREIZH.
Yann Talbot, Presbital.
22 110. ROSTREN.
96 29 01 55.

Rostren, 11 7.91.

MOUEZH SANT ERWAN.

Niverenn 46.

Keneiled vat,

Meur a geloù am eus da reif deoc'h en niverenn-mañ eus "Mouezh Sant Erwan".

1. HOR BEAJ DA SANT JODARD.

En em gavet omp dek breizhat en dro d'an tri studier yaouank e kumuniezh Sant Yann, savet gant an Tad M.D. Philippe O.P, e Saint Jodard (Sant Weltaz e vefe, hervez an hengoun, tremenet dre eno mencec'h Sant Weltaz da vare aloubadegoù an Normaned ?) e-kichen Roanne, en arc'heskopti Lyon. Darn a oa deuet gant an trefi (Kemper-Naoned-Lyon), darn gant o gweturioù, unan gant ar c'harr-nij eus Brest betek aerborzh Lyon-Satolas.

Tri devezh hon eus tremenet eno e-touez ar venec'h yaouank (relijiuzed kentoc'h, rak o galvidigezh a zo mont e-mesk an dud da avêlafi). Souezhus pegen yaouank eo ar relijiuzed-se, tregont vloaz pe war-dro an oad keitat. En o c'hichen ez eus ivez ur prioldi evit al leaned apostolek eus Sant Yann (seurezed ken yaouank all). Un daou ugent bennak a leaned yaouank a zo e prioldi Saint Jodard, darn oc'h en em stummañ war ar brederouriezh hag an doueoniezh (awenet gant Aristotelez ha Sant Tomaz Akwino dreist-holl), darn all stummet eija. Savet eo bet ar gumuniezh er skol-veur katolik a zoueoniezh e Fribourg (Bro-Helvetia) e 1975. E Bro-C'hall ez eus bremañ 8 prioldi. An ti stummañ evit an doueoniezh a zo e Rimont (ur c'hloerdi bihan gwechall, evel hini Saint Jodard...), e-kichen Chalon-sur-Saone, en eskopti Autun. Er-maez eus Bro-C'hall ez eus 6 prioldi : e Geneva e Suis, e Maastricht en Izelvroioù, e Poponguine e Senegal, e Bertoua e Kameroun, e Laredo e Teksas, Stadoù-unanet, hag e Taiwan, Formoza.

D'ar merc'her 19 a viz Mezheven, war-lerc'h an oferenn, edomp 6 den en oad en-dro d'an tri studier yaouank oc'h en em ouestlañ en obladlezh ledan e kumuniezh Sant Yann. Hag e brezhoneg evel just e lavarjomp hon leoù dirak an holl. Evidomp-ni holl, Breizhiz a oa eno, e oa un darvoud fromus hag arouezius evit ar vuhez kristen e Breizh. An Tad M.D Philippe en deus degemeret hor skridoù engouestlañ e brezhoneg hag o lakaet e dihellou ar gumuniezh. Eus Jeneva e oa deuet ivez an Tad H. de Cambourg, a zo beleg, ezel eus ar gumuniezh, ha brezoneger ampart (eus eskopti Roazhon eo genidik)

D'ar merc'her-se goude merenn e rejomp un droiad vale a-gevret betek un iliz roman e-kichen Sant Hodard, war an tu all eus al Liger. Gwir eo n'eo ket ar vro eus an dudiusañ a-hend-all, met kavout a raer evelato un nebeudig savadurioù relijiel a dalvoudegezh, roman-aovergnat o stumm.

D'ar yaou beure e kemerjomp an trefi adarre war-zu Breizh, tra ma chomas ar re all, yaouankoc'h, un devezh ouzhpenn o touristañ er c'horn-bro.

Ur gerig c'hoazh : lavaret e vez an ofis e galleg penn-da-benn gant al leaned. Met war un ton hag a zo displijus a-walc'h evidon, ha diheson zoken. E Breizh, e kerz emvodoù "Kristenien Breizh" pe "Beleien e Breizh" e kanomp gwelloc'h ar Psalmoù war tonioù M. Ar C'hollo. Dav e vo dimp kenderc'hel da labourat evit sevel ur wir vuhez speredel ha kumuniezhel en hor yezh.

2. Bodadeg "Beleien e Breizh" e ti Tadoù Sant Jakez Haiti.

Dalc'het e voe hor bodadeg miziek, d'al lun 24 a viz Mezheven - Gouel Sant Yann - e ti Tadoù Sant Jakez, war barrez Gwiklan (Gwiglann ?) e-kichen Lambaol-Gwimilio evit gwir. Un ti-retred eo deuet da vezañ evit an tadoù peogwir n'eus mui a nevezianted. Nebeut a visionerien a zo c'hoazh e Haiti peogwir int bet kaset kuit manu militari gant an Duvalliered. Met misionoù arall o deus digoret e Brazil. I'remañ e vez ret dezho deskiñ portugaleg... goude ar c'hreoleg... Un dregont bennak a dadoù kozh war o leve a zo o vevañ asambles eno. Met ur greizenn evit ar misionoù eo ivez, ha kalzik a vugale (eus Bro-Dreger dreist-holl) a ya eno evit o retredoù Pask kentañ pe goñfirmasion.

Ne oamp nemet pemp en hor bodadeg diwezhañ eus ar bloavezh skol. Moarvat ne oa aes an deiz evit ar veleien. Ouzhpenn-se e oa aet daou eus hon izili da birc'hirinañ da Itron-Varia ar Salette.

Diouzh ar beure e voe studiet kudenn kanon ar Skriturioù. Penaos ez eur tremenet eus kanon juzev ar Skriturioù da ganon kristen ar Bibl etre an eil hag ar pevare kantved.

1
Studiet e voe ivez pere eo levrioù apokrufek an Testamant kozh hag an Testamant nevez, ha perak n'int ket bet degemeret a-benn ar fin e kanon al levrioù awenet.

Goude merenn e voe divodet an dud. E soñj edomp da vont da weladenniñ skolaj Diwan Roparz-Hemon er Releg-Kerhuon e-kichenik Brest. Tri c'hlas a zo bremañ er skolaj (6vet, 5vet ha 4re) ha da vloaz e krogo ar re vrasañ gant an trede klas. Aze e vo da stourm c'hoazh pa vo ret d'ar vugale tremen arnodenn ar breved : e brezhoneg e raint evel just peogwir eo yezh o deskadurezh. Petra'raio an "Education nationale"?

Siwazh, ne voe ket tu da weladenniñ ar skolaj. Me am boa obidoù da lidañ e Rostren. Klasket e vo mont da weladenniñ ar skolaj e kerz miz Gwengolo pe Here.

3. Keleier a bep seurt :

1500 a dud a zo bet o vanifestif e Kemper d'an 22 a viz Mezheven evit difenn ar skolioù Diwan. Ar blijadur o deus bet ar vugale da resev warno aezhenn vougañ ar boliserien.

D'ar 3 ul 14 a viz Gouhere e vo ur pik-nik bras aozet gant Stourm ar Brezhoneg e-kichen ar Roc'h Tredudon, er Menezioù Arre, evit goulenn ur chadenn vrezhonek war FR3. Goad e vez graet ouzh ar vrezhonegerien. War fallaat ez a an abadennoù brezhonek, diaesoc'h-diaesañ o c'hlevent ; war an disterañ abeg pe zigarez toull e vezont lamet kuit ; ha n'eus ket arc'hant da sevel abadennoù dereat.

K .E.A.V. (Kamp etrekeltiek ar vrezhonegerien a vo dalc'het hevlene c'hoazh e Skaer (e skol-stad Joliot-Curie) eus ar Sul 14 d'ar Sadorn 27 a viz Gouhere. 5 live kelenn a vo, eus ar re a grog gant studi ar yezh betek ar re a zo barrek-tre. Me a gelenno an armerzhouriezh, douaroniezh ha kudennoù kevredigezhel ar broioù keltiek, hag istor Breizh kempred eus 1945 da 1990.

Kendalc'h etrekeltiek e Dullen (28/7 betek ar 4/8) : Un dek bennak a vrezhoned a vo er c'hendalc'h en Iwerzhon, darn evit kemer perzh er sonadegoù noz (kan ha diskan, sonerezh hengounel), darn all evit prezegenniñ.

4. KAMP KATEKIZ.

Dalc'het e vo e skol kentañ derez an Itron Varia e Rostren (rue de Metz) eus al lun 5 betek ar sadorn 10 a viz Eost. 32 bugel a zo enskrivet, 15 plac'h, 17 paotr, eus 7 bloaz betek 14. Rannet e vezint e pevar rummad hervez o oad. Teir survezh katekiz a vo bemdez, ha tourmenadennoù en endervezh. Ur veilhadez a vo bemdez goude koan.

Evel warlene e vo pedet ar veleien hag al laiked da zont da verennañ ganimp d'ar gwener 9 da greisteiz, ha kejañ gant ar vugale. 30 lur e kousto ar pred. Ret e vo lavarout din en a-raok piv a zeuio.

D'ar sadorn e vo un oferenn e chapel skolaj Kampostal da 17 eur. Darn eus ar vugale a gomunio evit ar wech kentañ. Ar veleien a zeuio a vo pedet da genofereenniñ.

Lakaet em eus izel-tre priz ar c'hamp evit ma vo aezetoc'h d'an tiegezhioù (350 lur evit ur bugel, 600 evit daou, ha 750 evit tri). Gant ar priz-se ne c'hellin ket evel-just paeañ pep tra (boued, lojeiz, karr-boutin, frejoù liesseurt). Un tamm eus arc'hant va c'hampoù gwechall er broioù estren a yelo e-barzh ar c'hef, met ma c'hellfe lennerien : zo eus "Mouezh Sant Erwan" hor skoazellañ ivez gant ur profig bennak, en anv ar vugale, o ziegezhioù, hag en anv Breizh, e lavaran bennozh Doue dezho.

N.B : ne vo ket un niverenn all eus M S E en hafv. An niverenn gentañ a vo e miz Gwengolo, hag an emvod moarvat e dibenn ar miz. Kaset e vo keloù d'an holl evel kustum.

A greiz kalon ganeoc'h evit Doue ha pobl Vreizh.

Yann Talbot.

Keneiled vat,

Skrivañ a raen en niverenn ziwezhañ (46, eus an 11.7.) ne vefe niverenn all ebet en hañv. A-benn an diwezh ez on diwezhat zoken evit kas niverenn gentañ ar bloavezh-skol-mañ. Met dalc'het on bet gant ur bern traoùigoù e miz Gwengolo. Sed amañ eta, da gentañ, keleier an hañv tremenet.

1. K.E.A.V e SKAER. (14-27 a viz Gouhere 91).

Evit an eil bloavezh eo bet dalc'het KEAV e Skol Joliot-Curie, prestet dimp gant an ti-kêr. C'hwezek bloaz bennak 'zo, a gredan, e vez dalc'het Kamp etrekeltiek ar vrezhonegerien e Skaer, met skol brevez Sant Alan ne oa ken kempenn a-walc'h evit degemer ur c'hampad a dud evel hon hini.

Hevlene ez eus bet nebeutoc'h a berzhidi er c'hamp, dre na oa bet degaset stajiad ebet gant Diwan. Memestra ez eus bet 58 a dud er sizhunvezh gentañ, ha 63 en eil. O vezañ ma oa chomet an tri c'hard eus an dud evit an div sizhunvezh ez eo bet tremenet 84 den disheñvel er c'hamp. Pemp rummad kentelioù a oa er bloaz-mañ, unan nebeutoc'h eget warlene. Je 'zo kaoz e oa re a zeskarded er rummoù 3 ha 4. Graet em eus stadegoù war ar c'hamp. Darn anezho a zo arouezius a-walc'h :

Oad keitat : 33 bloaz, ar merc'hed o vezañ un tamm yaouankoc'h (32 bloaz).
o tont eus Breizh : 63%

- Breizh uhel : 24%

- Breizh izel : 41%.

Notomp evit Breizh izel niver izel Gwenediz : 3 den er sizhunvezh gentañ, 3 ivez en eil. Perak se ?

Niver an "estrenien" (o tont a ziavaez Breizh)

- eus Kembre : 8 (studierien Rita Williams dreist-holl, eus skol-veur Aberystwyth).

- Iwerzhon : 1

- Bro-Japan : 1

- Kanada : 1 (ur c'helenner war ar yezhoù keltiek e skol-veur Skos-nevez)

Hervez ar reizh : paotred : 52%
merc'hed : 48%.

Hervez o micher :

- tud gopret : 45%

- tud hep gopr pe war o leve : 55%

E-touez an dud gopret :

- labourerien-douar : 0%

- eil gennad : 12%

- trede gennad : 33%

Kement-se ne glot ket evel-just gant dasparzhadur ar boblañs-labour e Breizh. Ur striv a vefe d'ober war-du ar gouerien hag ar vicherourien. A-hend-all ne vo ket "poblek" an emsav sevenadurel. Chom a raio betek re un emsav evit tud a renk etre. Met penaos ober evit dedennañ kouerien ha micherourien ?

Dregantad uhel an dud dic'hopr a zo ur gudenn ivez : studierien ha skolidi ez int dreist-holl : 39,5% eus ar c'hampad en eil sizhunvezh. Un abeg ouzhpenn evit goulenn yalc'hadoù arc'hant digant ar servijoù ofisiel (kuzulioù-meur peurgetket).

Mat eo bet al labour-kelenn a gredan, met evit pezh a sell ouzh al live 5 (an hini uhelañ) e rin un nebeut evezhiadennoù :

- re a brezegenoù a zo bet. N'eus ket bet tu diap, ar gelennerien, da glozaf war ar rummoù kentelioù bet prientet ganimp, dreist-holl en eil sizhunvezh (7 prezegenn en ur ober 4 devezh !). Daoust dezho bezañ bet dudius, ur muzul 'zo...
- re zisheñvel eo an deskidi hervez o oad, o live yezh, o stummadur, o gouiziegezh a-hend-all. Se 'zo ur skoilh bras pa venner ober traoù all estreget deskid

ur yezh.

- Ar re yaouank (etre 14 ha 18 bloaz) ne gavont lec'h dereat ebet : pe ez int brezhonegerien a-vihanik, pe o deus ezhomm da vestroniañ gwelloc'h ar yezh skrivet, pe o deus ezhomm da binvidikaat o geriaoueg ha da zeskiñ danveziou nevez. Ur strollad a-ratozh a vefe ezhomm sevel evito.

- A-hend-all c'hoazh ez eo ken diaes bepred lakaat ar vugale da vrezhonegañ kenetrezo er-maez eus ar c'hentelioù, zoken ar vrezhonegerien a-vihanik.
Ur ger a zo da lavarout diwar-benn ar prezegennoù hag a zo bet dadius memestra dre-vras.

- Makoto Noguchi : Breizh ha Bro-Japan.
- Fañch Broudig : An enklask war implij ar brezhoneg.
- Daniel Karre : labourizion Fluigner o labourat e Norz Bro-C'hall.
- Erwan Evenou : Ar brezhoneg en deskadurezh.

En eil sizhunvezh :

- ← Y. Jardin : An Islam.
- Erwan Evenou : Breizh hag Algeria (a-zivout e levr nevez embannet)
- Paskal Ar Marc'hég : Ar gelaouenn "Evit ar Brezhoneg".
- F. Franjeul : Penaos pareañ en ur zegas soñj eus an amzer dremenet.
- F. Faverau : Al lennegezh vrezhonek abaoe 1945.
- Erwan Evenou : Urzh ar renadennoù er frazenn.

J.Y Lagadeg (kenurzhier ar Geriadur hollvrezhonek) a reas ivez ur rummad a 4 c'hentel d'al liveoù 4 ha 5 diwar-benn ar yezhadur ha frammadur ar yezh. Tenn a-walc'h da heuliañ met kentelius-meurbet.

Div abadenn-noz a voe aozet e kêr, (en tu all d'an daou biknik d'ar Yaou, e Santez Barba Ar Faoued, hag e Kerien), unan gant A. Maisonneuve, eben gant Per-Vari Kerloc'h. Nebeut a dud eus Skaer a oa deuet da selaou, ret eo anzav. Plijet e oa bet ar selaouerien koulskoude, rak ampartz a oa gant ar ganerien.

D'ar Sadorn 20 e oa bet dalc'het devezh ar skrivagnerien ha deuet e oa un ugent bennak a dud, dindan renerezh Ronan Huon. Eñvor a voe graet eus labour hag engouestladenn Langleiz. Da vloaz e vo graet ur brezegenn ganin diwar-benn stourm beleien Bro-Dreger (1935-1985) en-dro da Vaodez Glandour, M. Klerg, A Ar C'halvez, P. Bourdellez, ha G. Dubourg. Doue d'o fardono.

2. KENDALC'H KELTIK E DULLEN. (29/7 - 3/8)

Ur pemzek bennak a vrezhoned o deus kemeret perzh e kendalc'h keltiek 91 a skol-veur Belfield e Dullen, en o zouez Per Denez hag e wreg, an Dell I. Martin, Bob Helloko hag e wreg Jermena, Yann Gwilhamot, kadoriad etrevroadel, hag e diegezh, Riwanon Kervella-Ar C'horr, renerez Skourr Breizh, hag he mab Brendan, Per Ar Saoz ha me, hag ur skipailh kanerien ha muzikerien (Jañ-Do Robin, R Chapalain, L.J. Suignard, Gweltaz Moal, ha Silvi Ar Moal).

Lojet brav-tre e oamp er skol-veur, pep a ranndi dimp, ha maget dereat (evit Iwerzhon, arabat bezañ re figus) ; koustus a-walc'h ar sizhunvezh avat a-hend-all : 140 lur iwerzhonat. Hep kontañ ar veaj gant ar vag evit daou zen hag ur wetur : en tu all da 4000 lur gall.

Deuet e oa dreist-holl Iwerzhoniz evel-just, nebeut-tre a dud yaouank a-hend-all, tud en oad dreist-holl ha leveidi an darn vuiañ anezho. An danvez ne oa ket eus ar re emsavusañ : "Hor sonerezh-ni." Met darn eus ar prezegennoù a zo bet dadius, hini Breizh dreist-holl roet dant Riwanon Kervella, ha taolennet gant ar trolled kanerien.

Goude koan ne veze ket kalz a draoù aozet a-hend-all, nemet ur veilhadeg vras e dibenn ar c'hendalc'h, a echuas gant ur seurt fest-noz da c'houde, a-drugarez d'ar Vrezhoned.

Gwir eo ne oa ket bet graet kalz a vruderezh gant Skourr Iwerzhon, skritell ebet neblec'h, kelaouenner ebet, hag ar skingomz nag ar skinwel n'int deuet. Kollet e oamp en ur skol-veur divent, e-mesk kantadoù studierien eus Europa o hañviñ en Iwerzhon. Darempred ebet gant ar boblañs a-ziavaez da dachenn ar skol-veur. Div bourmenadenn a voe aozet, en hini gentañ e oa sañset dimp gweladenniñ Gaeltachet bihan Meath e kornog Dullen, met re ziwezhat e oamp en endervezh ; en eil e voe gweladennet Kêr Dullen, hag ar c'hastell a servije da zeumeurañs d'ar gouarnour saoz a-raok an dieubidigezh. D'ar Merc'her e voe lidet ur servij relijiel ekumenek ha liesyezhek e sal-vras ar prezegennoù, renet gant an Tad D. O' Laoghaire, S.J. Me a lennas ur psalm e brezhoneg hag hor sonerien a sonas ur c'hantik.

Bemdez e veze lavaret an oferenn en ur ranndi, en iwerzhoneg evel-just, met ivez ur wech e brezhoneg hag ur wech e kembraeg gant un tad jezuist saoz, kelenner war

Yann Talbot
Presbital - 22110 Rostren
Pgz : 96 29 0155.

MOUEZH SANT ERWAN.
Niverenn 48.

Kenefiled vat,

Kregiñ a rin gant un danevellig diwar-benn hon emvod diwezhañ.

BODADeg MIL HERE E TI AN SEUREZED E LANNURVAN. (24 a viz Here 91).

Un dek bennak a veleien a zo er em gavet e ti-degemer leanezed ar Spered Santel e Lannurvan, nepell eus Brest. Diouzh ar beure e voe kendalc'het gant troidigezh ar pedennoù-meur. Job an Irien a oa deuet ivez d'an emvod, tost-tre eo Minic'hi Levenez eus Lannurvan, ha kenlabouret er deus etad d'al labour treiñ. Troet hon eus bet an hanter eus ar bedenn-veur evit an emvodoù bras (an ilizadoù bras), an destenn orin o vezañ en alamaneg (met e galleg hag en italianeg ivez peogwir e teu eus Bro-Helvetia). Grom a ra c'hoazh war ar stern ar bedenn-veur III evit an oferenn gant bugale, da dreiñ diwar an alamaneg ivez.

War-lorc'h pred kreisteiz aozet dimp gant al leanezed e kemerjomp an hent da vont da Vrest evit gweladenniñ skolaj eil derez Diwan Roparz Hemon er RELEG (straed Gay Lussac ; an ti-embann "An Here" a zo just e-kichen). Evit ar mare ez eus pevar c'hlas er skolaj, ha 64 skoliad en holl : 8 en trede klas, 10 er pevare, 20 er pempvet, ha 26 er c'hwechvet. 13 kelennar a zo evit 8 post a-bezh ; 17 implijad a zo o labourat en holl ; un danvez (skiantoù an natur) a vez kelennet e saozneg (gant Gireg Konan) en trede klas. Ur gudenn a vo er bloaz-mañ : penaos e raio ar skolidi evit trenen o breved ? E brezhoneg pe e galleg ? War ar poent-se e vo goulet al li an Euskariz o deus skiant-prenet gant o skolioù euskarek (Iskastolas) war ar poent-se. A-benn bremañ emeur ivez o soñjal prientiñ al lise Diwan, eus an eil klas betek ar vachelouriezh. Ezhomm e vo arc'hant ha tud ha sikour evit kas an traoù war-raok. Gneur e soñj digeriñ al lise mar bez posubl e miz Gwengolo 93. Ur c'huzul skoazell a zo bet savet : skrivit da "Komite skoazell Lise Diwan, straed Gay Lussac, 29 480. Ar Releg Kerhuon. Pgz : 98 79 47 73.

M'eo ket bet disofijet kennebeut ar deskadurezh kristen evit bugale ar skolaj : Job an Irien a ya bep sizhun d'ober kentelioù d'ar re o deus bet lak et o anv.

Strollad Beleien e Breizh en deus bet ar chañs en deiz-se (24 a viz Here) da gemer perzh en ur gentel " komz hag eskemm" gant skolidi ar 4re klas, renet gant Fulup Kloareg, ar c'helennar brezhoneg. Elijadur dreist hon eus bet o tivizout gant ar skolajidi, ha n'emañ ket o zeed oc'h ober harz-labour !...

Evel just, e-pad ar weladeg, hon eus bet tro da gejañ gant meur a skolajiad bet kemeret perzh ganto en hor c'hamp katekiz e-kerz miz Eost diwezhañ e Rostren. Un tamm souezhet e oant ouzh hon gwelout o gweladenniñ o skolaj....

KELEIRR A BEP SEURT :

A) Gouel en enor da Anjela Duval :

Tri devezh gouel a zo bet aozet en enor da Anjela Duval d'ar Gwener 8, Sadorn 9 ha Sul 10 a viz Du er C'houerc'had evit 10vet deiz-ha-bloaz he marv.

Diskouezadegoù, filmoù, prezegennoù (gant Roje Laouenan, Yann-Ber Piriou), abadennoù kan ha sonerezh, fest-noz, enrollerezh video, a bep seurt traoù a vo kaset da benn evit enoriñ hor barzhez kristen hag hor stourmerez.

D'ar Sul 10 e voe lidet un oferenn en iliz ar C'houerc'had, gant al lennadennoù en div yezh, ar peurrest e brezhoneg hepken. Brav ar c'hantikoù gant strollad an Tregeriz ha beñhadegoù Treger, Soazig Laouenan en o zouez gant he zelenn. Pennoferenner e oan-me, hag ar person Aleks Lopez, em c'hichen. Ar brezegenn am eus graet am eus kaset da "Al Liamm". Marteze e vo embannet.

Er bloaz a zeu (e miz C'hwevrer 92) e vefe dav ivez lidat e Kemper-Gwezenneg ugent deiz-ha-bloaz marv Armañs ar C'halvez, ha war-un-dro e vo kounaet Roje Nedeleg, bet person ar barrez.

B) Radio an eskoptioù :

Enañ eskoptioù Kemper ha Sant Brieg o prientiñ o radio lec'hel. Pezeurt plas a vo roet d'hor yezh warno ? Mat e vefe en em ginnig evit aozañ abadennoù e brezhoneg warno. He a zo prest d'ober peogwir e ran dija skingasadennoù

war RKB (Radio Kreiz Breizh e Sant Nigouden). Piv a zeuio da sikour c'hoazh ?

K.) Ar skolioù brezhonek :

1. Er skolioù publik divyezhek ez eus, e 91-92, 545 bugel enskrivet, 486 anezho e 27 klas er skolioù-mamm pe kentaf derez.

Setu amañ o lec'hiadur hervez an departamantoù :

- Aodoù an Arvor : Lannuon, Kawan, Tregastell, Pabu, Rostren.
- Penn Ar Bed : Landerne, Sant Riwal, Douarnenez.
- Morbihan : Pondi, Lanester, Brec'h, Gwidel.
- Il ha Gwilun : Roazhon.
- Liger Atlantel : netra.

2. Er skolioù katolik :

- e Morbihan : e skol Sant Gwenn e Gwened : 3 c'hlas.
- e Penn Ar Bed : e skolioù Kleder, Brest, Karaez, Flabenneg, (2), en holl 5 klas. Met n'on ket sur hag-efi ez int bet digoret e gwirionez. (gwelout niverenn 139, "Evit ar Brezhoneg", un diviz gant c'hoar Anna-Vari Arzur).
- e Aodoù an Arvor : netra. An DDEC 22 ne ra netra, kaer ' zo bet goulenn ober un enklask evit gouzout peseurt kerent a vefe dedennet.

3. Skolioù Diwan :

832 skoliad a zo enskrivet hevlene e 23 skol. Setu ar roll anezho (ma ne fazian ket, rak n'eo ket klok va roll marteze) :

- e Penn Ar Bed : Kastell-Paol, Montroulez, Lanniliz, Gwitalmeze, Lesneven, Brest, Landerne, Kemper, Karaez, Kastellin, Tregoù, Banleg.
- e Aodoù an Arvor : Lannuon, Gwengamp, Pempoull, Sant Brieg.
- e Morbihan : Baod, An Omiant, An Alre (?)
- en Il-ha-Gwilun : Roazhon.
- e Liger Atlantel : Naoned, Sant Nazer.

En holl : 468 bugel er skolioù-mamm, ha 300 er c'hlasoù kentaf derez. Er bloaz-mañ ez eus bet digoret ur skol-vamm e Baod, hag unan all e Sant Nazer. Ha neuze evel-just arabat ankounac'haat 64 skolajiad skolaj eil derez Roparz Hemon er Releg.

D.) an embannadurioù relijiel :

Deuet ' zo er-maez nevez ' zo :

Gant Imbourc'h : " Lennadennoù evit an Azvent" troet gant an Ao Klerg.
" Gourbannoù Sant Eosten" troet gant Per Even. Bourrus eo, met startik dalenn.

Amañ Job an Irien o vont da echuiñ :

- Levr katekiz evit an eil bloavezh (CM)
- levr oferenn ar Sul evit an tri bloavezh gant al lennadennoù A.B.K.

Deuet ' zo er maez niverenn 10 "Minic'hi Levenez" diwar-benn " Sent Lannoù ha Flouioù Bro-Leon. Dudius ha kentelius da lenn.

Ar Fulenn (niverenn 43) : "Un emdennig gant Mikael an Nobletz", peadra da vegañ ar spered hag an ene.

E.) Ofis ar skinwel brezhonek :

Amañ Alan Bienvenu (bet diskarget eus e bost rener Chadenn ar vro) e soñj sevel un ofis distag evit ur chadenn skinwel breizhat ha brezhonek. chomlec'h ar gevredigezh : A. C.O.R.T BREIZH : 4 straed Porion de la Barbinais, 35 000 Roazhon.

Emezelit, nar fell deoc'h kaout ur wir chadenn skinwel e Breizh.

F.) TEZENN GEMBRAEK : Amañ ur gembreadez Beti-Wyn-Holmes, o chom e Llanbedr o prientif un dezenn gembraek diwar-benn ar c'hantikoù brezhonek etre 1870 ha 1970. Goulennet he deus diskleriadurioù diganimp evit he labour.

G.) BODADEG KRISTENION BREIZH.

Dalc'het e vo e Kergeraveg, Gwipavaz, e ti Youenn Souffez Despre, d'ar Sul 24 a viz Du.

H.) BODADEG AN TIEGEZHIOU KRISTEN.

Da heul kamp katekiz an haf e vo dalc'het bodadeg an tiegezhioù, kerent ha bugale, e skol an Itron Varia, straed Metz, e Rostren, d'ar Sul 22 a viz Kerzu (ha n'eo ket an 20 evel ma 'm eus merket dre fazi war niverenn 9 "LENTOU", bleup ma z on...) adalek kreisteiz.

J.) BELEIEN BREIZH.

Bodadeg beleien Breizh evit miz Kerzu a vo dalc'het d'al Lun 23.12. evit cheñch, hag evit nezetat d'ar re a vez dalc'het d'ar yaou. Lavaret e vo diwezhatoc'h pelec'h e vo graet.

L.) BREURIEZH SANT ILTUD :

Ar vodadeg veur a zo bet dalc'het e Kistinid d'ar sadorn 21 a viz Gwengolo. Kenderc'hel a ra ar vreuriezh gant ar pediñ hag ar c'henlabour. Embannet ez eus bet ur follennig "Ar Rozera", evit sikour pediñ (3 lur ar skouerenn). Skrivit da "Breuriezh Sant Iltud", tiegezh Santez Anna", 9 straed ar Rezistants (!) 56 320 Kistinid. Ar re yaouank a zo war o studi prederouriezh ha feizoniezh a gont war hor pedennoù hag hor sikour danvezel. Bennozh Doue evito en a-raok.

Ur pennad diwar-benn delwenn Santez Anna hag an nevez-avielerezh e Breizh a zo bet embannet e niverenn miz Du ar gelaouenn "Bremañ", skrivet gant Tepot Gwilhmod. Kement-se a ziskouez ez eus un hent aze, digor evidomp, evit avielañ an Emsav. Hor c'harg a-berzh Doue an hini eo moarvat. Piv a rafe a-hend-all ?

E KOUN ANJELA DUVAL.

KER AVEL

Ar wiblenn a dro
— Faltazi an avel —
Avel Gornog izel
Avel Atlantel
Avel sall a C'hoanag
Hiziv a c'hwezh
War gribenn Keravel
O tegas fraezh d'am skouarn
sonerezh dic'hortoz :
Muzik ar morzholioù
O talmiñ stank-stank
'Vel kalon ur bugel.
Un dasorc'hidigezh, un adginivelezh,
Adsavadur ur feurm aet da ouelec'h.
Un arnevezelezh.
Ur burzhud Karantez. Buhez o kellidañ,
Ar Ouenn oc'h advleuniañ,
Ar Ouenn o tihun
Da seveniñ he huñvre.
... Va c'halon a drid !

Gouel Yann 1962.

B O D A D E G M I Z D U .

Dalc'het e vo emvod miz Du d'ar

YAOU 28 A VIZ DU

e presbital P R A D (Bro-Dreger)

e ti Anton Ar Barzh. (emañ parrez Prad etre Bear ha Lanuon, 4 km eus Kawan).

10.30 : emgav ar berzhidi er presbital ; pedenn digeriñ.

10.45 : prezegenn gant Alan Bienvenu (bet rener abadennoù brezhonek chadenn ar Vro war FR3), diwar-benn ar "ghadenn skinwel breizhek" hag ar gevredigezh savet a-ratozh evit se : A.C.O.R. T. Breizh.

12.15 : pedenn kreisteiz. 12.30 : merenn.

14.30 : labour studi : troidigezh ar pedennoù meur da beurechuiñ.

16 : banne kafe. Pedenn echuiñ. Diwezh an emvod.

Pell-omzit da Anton Ar Barzh (Person Prad, 22 140, Bear,
Pgz : 96 47 00 93) m'emaoc'h e soñj kemer perzh en emvod.

In caritate Domini.

Yann Talbot.

Mignoned vat,

Degouezhet ganimp ar mizioù du, n'eo ket un abeg a-walc'h evit bout du hor pennoù, savomp eta, ha bec'h dezhi !! Me 'zo o vont avat da zuffi paper ur wezh (ur wech) ouzhpenn.

Bodadeg Prad : 28 a viz Du 91.

Biskoazh n'omp bet ken niverus a gredan en dro d'an daol evit merennaf : 19. Gwir eo e oa bet kouviet un nebeut mignoned, beleien ar parrezioù tro-dro, hag emsaverien gant Anton Ar Barzh, person ar barrez.

Met da gentañ e voe graet labour. Alan Bienvenu, bet rener an abadennoù brezhonek war FR3, ha roet e sac'h gentañ da servij gall ar skinwel e dibenn an haf, en deus bet graet ur gaozeadenn dimp diwar-benn an ofis evit ur skinwel breizhek emañ e-sell da sevel, a-benn pourchas abadennoù en div yezh d'ar Vrezhonek, war wagennoù dishevel, da werzhaf zoken abadennoù d'an estrenvro, ha da dreif abadennoù estren (gall, amerikan, iwerzhonat, kembreat, hag all) e brezhoneg.

Er vodadeg kentañ graet e Kewen (Morbihan) e oa deuet un 70 bennak a dud, tud prevez hag embregerezhioù dedennet gant ar mennad. Ur raktres arc'hant a zo bet graet gant Alan hag e skipailh. Gant sikour ar c'huzul rannvro, an embregerezhioù ha Brussels Marteze, e vije tu da sevel ur seurt ofis. Ezhomm bras hon defe anezhaff en Europa a-vremañ, rak pa weler pegen dister eo plas ar brezhoneg war FR3 Breizh, ha pegen dilufr danvez chadenn ar vro, pa verzer ouzhpenn emañ ar stadoù kreizemet o vont da goll (an Unvaniezh soviadel, Yougoslavia, dismantret, diframmet) ez eo un dra a-bouez diskouez a-wel d'an holl e fell d'ar Vrezhonek bout ur vroad evel ar reoù all er c'henvarc'had. Ur vroad evel Slovenia, Kroatia pe Lituania. Hep ar reuz a zo emmar bez posubl. Perak an tri c'hant mil a Luksembourgiz o deus ur vouezh e kumuniezh armerzhel Europa, (ar CEE, gouez d'ar c'hallaoued, pe an EEC, gouez d'ar saozon), hag an tri milion a Vrezhonek hini ebet ? Arabat dimp bout ken mevelien dindan mistri dinatur.

M'hoc'h eus c'hoant enskrivañ da gevredigezh Alan Bienvenu (bet eo bet skoliad e Kampostal, ur paotr mat e rank bout neuze, sur). : ACORT.Breizh : 4 straed Porron de la Barbinais, 35000. ROAZHON.

N'eo ket hepken selaou prezegennoù eo a rejomp avat. Merennaf a-gevret da zigentañ ne lavaran ket, ha goude ar pred e voe kaset al labour war-raok en ur echuif troidigezh an bedenn-veur helvetiat evit ar bodadegoù (ilizadoù) bras. Start a-walc'h e voe echuif rak pa vez dek den asambles o lavarout o soñj war ar yezh en ur vurutellat an destenn ouzhpenn-se war dachenn ar feizoniezh, e vez dek ali dishevel, hag ar c'henurzhier (me, safset...) ne oar ken gant peseurt hent mont....

Keleier :

A.. Bouel al levrioù e Karaez : Dalc'het am eus bet ur stand e-pad div endervezh (2 ha 3 a viz Du). Tud 'zo bet o tremen, o sellout, un nebeudig o komz (tud anavezet peurliesañ), met nebeut am eus gwerzhet. Gwir eo n'eus ket ganimp traoù moulet-brav evel "Al Liamm" pe "Hor Yezh", ha tenn ar yezh alies en hon testennoù. Gwerzhet am eus bet evit war-dro 400 lur, ha dreist-holl "kantigoù eskopti Sant Brieg ha Landreger" (embannadur 1934). Met bremañ eo diviet. Edon e-kichen Andreu Ar Merzer a oa o kinnig diouzh e du traoù "Brud nevez" hag "Emgleo Breiz". Evel-se hon eus graet kaoz war buhez an Emsav ha war bro-Rostren peogwir eo bet skolaer e Brofiwel meur a vloavezh.

B. Skol(veur Roazhon : Rann ar studioù keltiek.

Peogwir am bez digarez hevlene da vont da skol-veur Roazhon II evit heuliañ kentelioù e rann ar studioù keltiek, am eus bet tro da gaout digant L. Kergoat, rener ar gevrenn, sifroù a-zivout niver ar studierien enskrivet e 91-92 evit deskif brezhoneg pe ar yezhoù keltiek all (kembraeg, iwerzhoneg, kerneveureg)

Evit an DEUG I : 72 studier. Met sevel a rae ar sifr c'hoazh.

Evit an DEUG II 62 studier.

Evit an aotreegezh : 48 studier.

Evit ar vestroniezh : 20 studier.

Evit an DEC (Diplôme d'études celtiques) : 16
Evit an DEA (Diplôme d'études approfondies) : 3
Evit an doktorelezh : 3.

En holl : 224 studier.

Gant se emañ eta ar gevrenn geltiek er pevare plas er skol-veur evit ar yezhoù (war-lerc'h ar saozneg, ar spagnoleg, an alamaneg), hag an trede renk evit ar pellgelennerzh (enseignement à distance).

Well-wazh e chom niver an enskrividi war an hevelep live a vloaz da vloaz.

K.) Ar skolioù kristen.

Reuz a ra bremañ ar skolioù kristen evit o arc'hant. Met ur gudenn all a zo, hini ar brezhoneg enno. Diaesterioù a zo gant DDEC 56 evit digerif klasoù divyezhek daoust d'ar pezh a oa bet prometet, daoust da c'houlenn ar gerent, daoust da gomzoù ar Pap a-du gant difenn ar minorelezhioù, ar sevenadurioù en arvar ha gwirioù ar broioù suj. Yannig Baron, eus Brec'h, en devoa dija graet harz-debrif evit se. Prest eo da adkregif c'hoazh peogwir ne responte ket zoken DDEC 56 d'e lizheroù. Un emgav e oa da gaout etrezafi ha Tugdual Kalvez, kadoriad UGB (unvaniezh ar gelennerien brezhoneg) gant eskob nevez Gwened, E.M. Gourves. Ne ouzon ket c'hoazh, an deiz ma skriverezan an destenn-mañ, peseurt disoc'h a zo bet pe a vo d'an emwel.

E gwirionez e weler mat ez eo aet a-du krenn ar skolioù kristen e Breizh gant politikerezh gallekaat ha mougafi ar stad c'hall. "Francophonie" me hoc'h ador, c'hwi eo ma Doue da virviken! N'eo ket ganto e vo savet bepred Europa ar pebloù, met Europa ar waskerien. Gwir eo, ar pezh a gont ar muiañ evit ar skolioù kristen e Breizh n'eo ket lakaat an aviel da dalvezout met stummañ tud a-du gant ar gevredigezh a-vremañ. Diouzh e du DDEC 22 ne fiñv ket. Gortoz a ra ma vo marv ar brezhoneg evit ober ar brezegenn gafv war an ton bras.

D.) Skolioù Diwan : Disofijet am boa e roll ar skolioù Diwan hini Komana er menezioù Are. N'eo ket an hini vrasañ sur-mat, met unan galonek bepred, hag unan eus ar re gentañ savet.

Un devezh "Dorioù digor" a vo e skolaj Roparz Heñon er Releg, d'ar Sadorn 11 a viz Genver 92.

E.) Bodadeg UGB : Unvaniezh ar gelennerien brezhoneg en deus bet dalc'het ur vodadeg veur ispisial e Rostren d'ar Sadorn 14 a viz Kerzu e sal ar Souelioù, goude merenn, evit prientif an abererezhioù a vo kaset da benn e miz Genver ha C'hwevrer 92, en doare da c'hounit ul lañs nevez da gelennerzh ar yezh, rak fas koad a ra rektordi Roazhon ha ministr an deskadurezh-stad ouzh kement goulenn a vez graet outo. Memestra evel er skolioù kristen.

F.) Bodadeg an tiegezhioù : En em vodañ a raio an tiegezhioù, kerent ha bugale, e Rostren, d'ar Sul 22 a viz Kerzu, adalek krêsteiz, e skol kentañ derez an Itron Varia, straed Metz. An oferenn a vo lidet e chapel Kampostal da 16 eur 30. Erru mat e vo an holl dud hag ar veleien evit kenoferennañ.

G.) Levrioù katekiz : Ul levr katekiz nevez evit bugale ar CE2 ha CM1, anvet "Dremm an Aotrou", a zeuio er maez e derou ar bloaz nevez. Savet eo bet gant Job an Irien hag e strollad. Gant al levr (54 pajenn ennañ) e vo ur gasetennig a 15 kantik nevez evit ar vugale. Da rakprenañ eo araok ar 31 a viz Genver (70 lur + 15 lur mizoù kas) (Job an Irien Minic'hi Levenez, Treflevenez, 29 800, Landerne).

BODADEG MIZ KERZU.

Dalc'het e vo e presbital Plouneour Menez, e ti Youenn Troal d'al Lun 23 a viz Kerzu. Preparit eta, Aotrounez personed, ho traoù Nedeleg e koulz en a-raok evit bout dieub an deiz-se....

10 30 : emgav er presbital ; pedenn veure.

10 45 : kaozeadennoù :

- rentañ-kont tezenn Klaoda an Du : " Le Breton et l'école".

- an embannadurioù : Lennadennoù an Azvent (Ao. Klerg) ha "Gourbannoù" Sant Eosten troet gant Per Even.

- ur gentelig : Piv eo Sant Eosten ? (gwelout notennoù a batrologiezh gant Maodez Glanndour.

12.15 : ofis kreisteiz ha merenn.

14. : labour treif. Chom a ra da dreif trede pedenn veur evit an oferennoù gant bugale (testenn orin en alamaneg).

16 : banne kafe ; diwezh an emvod.

Pellgomzit da Youenn Troal (98 78 01 30) a-raok ar Sadorn 21.12 m'emaoc'h e soñj kemer perzh er vodadeg.

A greiz kalon evit Breizh. Levenez Doue gant an holl evit Nedeleg. Yann Talbot.

Yann Talbot. Presbital. 22110 ROSTREN.
96 29 01 55..

Keneiled vat,

E kreiz ar goañv emamp, ha koulskoude e santer dija an devezhioù
o hiraat tamm-ha-tamm :

Nedeleg, paz ar c'hefeleg,

Deiz kentañ ' r bloaz, paz ar waz... !!

Deomp en dro war ar vodadeg diwezhañ.

BODADEG PLOUNEOUR MENEZ. 23.12.91.

Ne c'amp nemet pemp en emvod e Plouneour-Menez, e ti
Youenn Troal. Gwir eo e oa tost an deiziad eus Gouel bras an Nedeleg hag e oa
dalc'het personed.' zo gant o labour.

Kaset e voe labour war-raok evelato. Diouzh ar mântin e voe studiet daou bennad
plijus : un destenn eus Sant Hippolitoz a Roma war enkorfidigezh ar Verb, hag ur
pennad eus Gourbannoù Sant Eosten troet gant Jil Ewan. (an daou levrig-se a zo bet
embannet gant Imbourc'h nevez ' zo)

Goude merenn e voe echuet labour treiñ ar pedennoù eukaristiel. Chom a rae war
ar stern ar bedenn veur III evit an oferenoù gant bugale. Bremañ n'eus mui nemet
peurlipat an testennoù d'ober, ha prest e vo an traoù evit an embann.

KELEIER :

1. MARV ESKOB SANT BRIEG HA LANDREGER : PER KERVENNIC.

Aet eo trumm da anaon Ao'n eskob Sant Brieg ha Landreger d'ar sadorn 21
a viz Kerzu 91 en e di eskobel e Sant Brieg. Klafvidik e oa abaoe meur a vloavezh,
kudennoù gant e galon hag e wazhied. Met ne c'amp ket en gortoz eus ur marv ken
souden evelato. Gwir eo, ne gemere ket kalz a amzer da ziskuizhañ kennebeut ; buhez
un eskob a zo un dra da lazhañ n'eus forzh piv bremañ.

Ganet e oa bet hon eskob e Sant Per Kibignon, nepell eus Brest, e 1922.. Brezhone-
ger e oa, met ne oa ket eus an ampartañ, rak digustumet e oa bet da gomz. Beleget
e voe e 1945, aotreet war ar feizoniezh, kaset da gure e Kastell Paol e 1946 ; kelen-
ner e voe da c'houde c'kloerdi bras Kemper e 48, (arc'heskob Roazhon J. Jullien a voe
studier gantañ) ; anvet e voe aluzenner ar JACF (YKAM e brezhoneg) evit an eskopti e
56, isaluzenner evit Bro-C'hall e 57, aluzenner meur ar JACF e 60 ; vikel vras
eskopti Kemper e 63, ha person Landivizio e 1975.

Anvet e voe eskob Sant Brieg ha Landreger dre ul lizher a-berzh ar Pap d'an 2 a
viz Here 76, ha kemer a reas e garg d'ar 4 a viz Du. Eskobet e voe an 28 a viz Du en
iliz veur Sant Brieg. Pedomp Doue evitañ. Labouret en deus bet dibaouez en hon touez
evit astenn rouantelezh Doue ha santelaat ar bobl kristen. Anvet eo bet Yves Bonniec
(genidik eus Rospez, Bro-Dreger) da verour an eskopti da c'hortoz un eskob nevez.

2. EMVOD AN TIEGEZHIOU.

Dalc'het eo bet bodadeg an tiegezhioù e Rostren d'ar Sul 22 a viz Kerzu.
Marteze e oa bet dibabet fallik an dâziad, e kreiz ar goañv, re dost ouzh Nedeleg.
Un ugent bennak a dud a oa deuet memestra gant un dek bugel bennak. Goude ar pred e
voe aozet c'hoarioù : evit an dud vras ur gloued gerioù kroaz, re denn eme ar
berzhidi ; hag evit ar vugale fôllennoù bras da livañ warno, Implijet e voent da
c'houde e-kerz an oferenn a voe lidet e chapel Kampostal ; meur a veleg a oa o
kenoferenniñ. Un dregont bennak a dud e c'amp. Ur vodadeg all a vo e miz Ebrel.

3. BREURIEZH SANT ILTUD.

E dibenn miz Kerzu eo bet prenet war anv Breuriez Sant Iltud un domani
bras a-walc'h (meur a di, unan prest-ha-tout evit lojañ, gant kalzig douar tro-dro)
e kreiz bourc'h Kistinid (Bro-Wened). Servijiñ a rāio da annez d'ar baotred yaouank
o deus divizet ren ur vuhez relijiel kristen e brezhoneg, krouiñ eno ur greizenn
speredel ha sevenadurel, ha degemer tud all, laiked, beleien, a dremeno d'ober retre-
doù, a chomo da bediñ ganto, ha zoken da vevañ mar fell dezho. Evel-just ez eus

kalz a labour d'ober evit kempenn pep tra, met tamm-ha-tamm, gant sikour ar vignoned, e vo graet. Tu a vo ivez, ma teu ar c'halvidigezh dimp, (piv oar ?) da adkempenn an ti-krampouezh stag ouzh an domani ha da werzhaf krampouezh d'an douristed ha da dud ar vro evit dastum un tamm gwenneien. Un arouez a esperañs e dazont ar feiz kristen hag an Iliz e Breizh an hini eo. Dimp-ni holl d'en em unanif evit ma yelo an traoù da vat mar bez bolontez Doue.

4. U.G.B. Unvaniezh ar gelennerien brezhoneg a aozo gant skoazell an APEEB (kevredigezh ar gerent evit an deskadurezh e brezhoneg er skolioù publik), hini ar gevredigezh studierien "Dazont", ha sindikad CFDT skolaerien Diwan ur sizhunvezh stourm evit kelennerezh ar brezhoneg er skolioù, etre an 10 hag ar 15 a viz C'hwevrer.

Pouezet e vo dreist-holl war al lezenn war ar "yezhoù rannvro" emañ Yves Dollo, dileuriad evit Sant Brieg, o klask lakaat war burev ar Vodadeg Riezel (Assemblée nationale). Ezhomm hon eus dizale eus ur statud gwirion evit hor yezh (evel maz eus unan e Kembre abaoe 25 bloaz); anez da se ne servijo da netra ar bruzhunachoù hon eus gallet gounit amañ hag ahont. Gwashoc'h eget se, e riskl emañ zoken an araokadennoù gounezet ganimp da vezaf pulluc'het e ludu gant an danvez-lezenn nevez emañ L. Jospin o prientiñ war kelennerezh ar yezhoù : rasklet e vefe an eil yezh eus ar c'hentelioù iet er skoloù ; ne chomfe mui nemet ar saozneg neuze, mestr nemetañ war an dachenn ; hag ar brezhoneg er bidouf !

5. KELOU DIGANT TADIG TURIAN.

Kemenn a ra dimp e vo oberataet d'an 22 a viz Genver e klinikenn Lannuon evit gwellaat e lez dezhañ. Pedif a reomp evitañ. Salv ma vo a-benn berr amzer yac'h-pesk adarre ha start war e gilhorou !

6. OFERENN E KOUN ARMAÑS AR C'HLIVEZ, E KEMPER-GWEZENNEG.

Un oferenn a vo lidet ganin d'ar Sul 23 a viz C'hwevrer 92 evit ugentvet deiz-ha-bloaz marv hor c'henvreur mat Armañs ar C'halvez, marvet yaouank c'hoazh, diwar ur c'hleñved diremed hag ur gofad relabour d'an oad a 51 bloaz. Ur stourmer dibleg e oa bet, un diazezer, un den youlek ha desket, ur beleg aketus da seveniñ e gefridi. Pedif a ran ar veleien a vo dieub d'en em gavout e Kemper-Gezenneg d'an 23 a viz C'hwevrer da 11 eur evit kenoferenñ. War an hevelep tro e vo graet eñvor eus Roger Nedelec, bet person e Kemper-Gezenneg, hag eus Erwan Ar Sant, ganet er barrez-se, kenderv Armañs, stourmerien o daou, izili ar genvreuriezh Belcion e Breizh, hag aet da anaon n'eus ket pell. Goude merenn e vo tu d'ober ur vodadeg etre vignoned, ha marteze ur brezegenn pe un diskouezadeg bennak. Kaset e vo keloù d'an dud e koulz.

B O D A D E G M I Z G E N V E R .

Dalè'het e vo bodadeg miz Genver d'ar Yaou 23 • presbital KERGRIST-MOELOU, e ti Hob Lec'hvien (Marcel Derrien nevez dilojet e draoù gantañ d'e di nevez n'eo ket prest c'hoazh d'hon degemer. Hen ober a raio ar wech a zeu, e miz C'hwevrer).

Roll an devezh :

- 10.30 : emgav e presbital Kergrist-Moelou. pedenn digerif.
- 10.45 : studiadenn gant Yann Talbot : da gefver ar sizhunvezh evit unvaniezh ar gristenien, taolomp ur sell war an ilizoù er broioù keltiek : Iwerzhon, Skos, Kembre, Kerne-veur.
- 12.15 : ofis kreisteiz.
- 12.30 : merenn a-gevret.
- 14 : pourmenadenn, pe labour studi, pe emgav gant brezhonegerien, hervez ma troio an traoù.
- 16 eur : diwezh an emvod.

Pellgomzit da Hob Lec'hvien a-benn ar merc'her
23.1. m'emaoc'h e soñj kemer pouzh en emvod. (Pg : 96 36 50 38).

A greiz kalon. Yann Talbot.

Yann Talbot, Presbital, 22 110, Rostren.
96 29 01 55..

MOUEZH SANT ERWAN .

Niverenn 51.

Keneiled vat,

Krog an devezhioù da hiraat gant miz C'hwevrer, hag ivez ar C'hozaiz o tigerif a-benn pemzektez (ar 4 a viz Meurzh, Merc'her al ludu). Emañ ar skolioù e Breizh e kofje, hag un tamm muioc'h a amzer ganimp marteze.

BODADeg KERGRIST-MOELOU.

En vodet hon eus (6 e oamp a gredan) e presbital Kergrist-Moelou, e ti Job Lec'hvien, d'ar yaou 23 a viz Genver. Diouzh ar beure hon eus studiet kudennoù relijiel ar broioù keltiek, draist-holl diazezidigezh ar brotestantelezh e Kembre hag e Bro-Skos, ha penaos e oa chomet Iwerzhon katolik er c'hontrol. Dedennet-tre e voe ar berzhidi gant an displegadenn-se, ken e voe kendalc'het ganti goude merenn. N'hon devoa ket bet da gemm plas peogwir e voe servijet merenn er presbital, pezh ' zo plijus ivez. Displeget e voe ivez en endervezh penaos eo rannet ar gristenien bremañ e Kembre (ilizoù protestant a bep seurt, anvet " y capeli" e kembraeg), hag ivez an iliz " aglikan" e Kembre anvet e kembraeg "Yr eglwys yng Nghymru", erfin an iliz katolik (etre 5 ha 10% hepken eus an dud), anvet gant ar brotestanted " Yr Eglwys babyddol", da lavarout eo " an iliz pabel"...

KELEIER :

MARV FRANSEZ KERVELLA, lesanvet KENAN KONGAR.

Met eo da anaon d'al lun beure 10 a viz C'hwevrer ar yezhour meur ha skrivagner Fransez Kervella, o chom e Lannuon.

Ganet e oa bet d'an 31 a viz Genver 1913. e Dirinonn (e ledenez Plougastell en un tiegezh paour. Emzivadet e voe ez yaouank, ha kalet ar vuhez evit an intañvez, e vamm. Skoliataet e voe e lise Brest, ha skoliad e teuas da vezañ da Roparz Hemon. Kregif a reas da skrivañ adalek e c'hwezek vloaz, e kelaouenn ar "Bleun Brug, hag e "Gwalarn" da c'houde. Graet e studioù douarouriezh gantañ e skol-veur Roazhon eus 31 da 35-36, e voe e-pad daou vloavezh da labourat en Afrika, e Gabon, evel geologour. Distroet da Vreizh e voe e-pad tregont vloaz o kantren dre Vro-C'hall a-bezh evit tennañ pinvidigezhioù eus an douar. Met e-pad keit-se ne baouezas ket da studiañ ar yezh, da skrivañ, ha da stourm. Dimezet gant ur plac'h eus Bro-Dreger, Vetig an Dret, en em ziazezas evit mat e Lannuon. Pevar bugel o deus bet, holl emsaverien. Ar mab henañ, Erwan, a varvas, siwazh, yaouank, e 85, diwar ur gwallzarvoud c'hoarvezet gantañ un nebeut sizhunvezhioù a-raok.

Kenan Kongar a zo bet unan eus ar yezhourien wellañ en hon amzer. An holl emsaverien o deus tennet o mad eus e labour ramzel : "Yezhadur bras ar Brezhoneg" deuet er maez evit ar wech kentañ, gant "Skridoù Breizh", e 1947.

E-touez e oberennoù all e ranker menegiñ :

- "Krennlavarioù", embannet gant "Skol" e 1955.
- "Evezhiadennoù war c'heriadur Roparz Hemon", embannet gant "Skol" e 62-63.
- "Diazezoù ar sevel gwerzioù", Al Liamm, 1965.
- "Hent nevez d'ar brezhoneg", Hor Yezh, 71-72.
- "An Den etre an anken hag an Ankoù", Hor Yezh, 1981. Ur studiadenenn dudius-tre war ar c'hantikoù brezhonek o tennañ d'ar vuhez ha d'ar marv.
- "Barzhonegoù", Al Liamm, 1982. (Ar varzhoneg koshañ a zo deiziadet d'ar 24-25 a viz Du 1928, n'en devoa ket 16 vloaz c'hoazh, ur souezh !)
- "Dindan gouriz ar bed", Hor Yezh, 1985. Reifañ a ra en un doare saourus e eñvorennoù beaj ha labour e Gabon etre 36 ha 37.
- "An ti e traon ar c'hoad", Hor Yezh, 1990 (ennañ e eñvorennoù bugaleaj e Mesnot, Dirinonn, etre 1913 ha 1925 ; ur yezh pinvidik ha skouerius.)

N'en deus ket gallet, siwazh, echuif e eñvorennoù, tapet ma oa abaoe tri pe bevar bloaz gant ur c'hleñved a denne digantañ tamm-ha-tamm e spered hag e nerzh. Plijus e vije bet gouzout penaos e troas e zarempredoù gant Roparz Hemon e lise Brest etre 1925 ha 1930.

Lidet e voe obidoù Kenan Kongar gant Youenn Troal en iliz Brelevenez d'ar

meurzh 14 a viz c'hwevrer. Deredet e oa e vignoned eus an Emsav, hag un nebeut parrezianiz. Pep tra e brezhoneg evel just. Gant Yann Ber Piriou, unan eus e ziskibled, e vo lennet un darn eus testamant speredel K.Kongar, bet skrivet gantañ e miz Du 81, hag ur varzhoneg kaer bet savet gantañ d'an 21 a viz Mezheven 1929 : " Pa vo nijet va ene". Setu hi amañ :

IV. — PA VO NIJET VA ENE

Pa vo nijet va ene da Wenva ar C'hornog,
Da ved speredoù glan ha blin ar c'hevren,
Ha pa chomi da-unan en da di da zifronkañ,
Ouzhin ra zalc'hi ar c'houn en da spered.
Dalc'h bev tan sakr an eñvor en da galon,
Evel war un aoter bepred bleuniet ez ti.
Neuze en da huñvreoù kanus e liviri :
Hennezh eo an hini a garas hag a vagas
Sklaerder ar vuhez hag amc'houlou ar maro,
Teñvalijenn ar bed ha sklerijenn an neñv.

Goude al lid relijiel e voe douaret Frañsez Kervella e bered Langoat, 17a kousk ennañ ivez e vab Erwan, o c'hortoz o-daou an adsav e Tir Na Nog ar Gelted vat.

Lavarout a rin ouzhpenn e oa liesdoare awen Kenan Kongar : barzhoniezh, eñvorennoù, studiadennoù a yezhadurezh, studiadennoù a werinoniezh, studiadennoù skiantel. N'eus nemet romantoù ha danevelloù, din da c'houzout bepred, ha n'en deus ket bet pledet ganto. Awenet e oa gant ar garantez-bro, ar garantez-douar a lavarfen muioc'h, ar garantez-yezh, hag ar stourm broadel. Feal d'e vennoziou, feal da emglev 1941 evit peurunvanidigezh ar brezhoneg, feal d'e genstourmerien, en e destamant e venege dreist-holl Roparz Hemon, e vestr kentañ war ar yezh, hag e geneiled, Remont ha Herve Delaporte, Frañsez Debeauvais, Kerlann, Marc'harid Gourlaouen, Vefa de Bellaing. Ar re-se, er maez eus e diegezh, a oa ar re dostañ ouzh e galon.

Ana yezet em eus anezhañ e-pad tost da dregont bloaz. Evidon ivez e vo bet un digorer hentoù, ur blenier hag ur c'helenner. Ne oa ket e-touez ar chaokerien komzou goull ha trenk. Un oberer ne lavaran ket. E spered a save a-us da laoskentez ar bed da nvezelour-mañ. Ra gavo bremañ levez e Ti an Tad.

Kendalc'h keltiek.

Dalc'het e vo kendalc'h keltiek 92 e Douglas, en enez Vanav, eus al lun 20 a viz Ebrel d'ar Sadorn 25.

Evit skrivañ : R. Kervella, Gwaremm Leurven, 22 130. Plufur.

Kamp Katekiz miz Ebrel :

Tu a vo ma z eus bugale ha kerent dedennet d'ober ur c'hamp katekiz berr da vare Pask, e Rostren, eus an 13 d'ar 15 a viz Ebrel. Neuze e vo graet bodadeg an tiegezhioù d'ar Sul 12. Sul ar bleunioù e vo.

Oferenn^e koun A. Ar C'halvez : Un oferenn evit ugentvet dez-ha-bloaz mary hor c'henvreur beleg Armañs Ar C'halvez a vo lidet e Kemper-Gezenneg, d'ar Sul 23 a viz C'hwevrer da 14 eur. Pediañ a reomp an holl emsaverien o deus e anavezet da gemer perzh el lid. Goude an oferenn e vo tu d'en em welout en ur sal bennak er bourk. War an hevelep tro e vo graet eñvor eus Erwan ar Sant ha Roger Nedelec, marvet o-daou n'eus ket pell.

BODADEG MIZ C'HWEVRER.

Dalc'het e vo e presbital nevez

Marsel Derrien e Boulvriag (15 rue du télégraphe..., war hent Kallag, Mousteruz) d'ar MEURZH 25 A VIZ C'HWEVRER.

Roll an devezh :

10.30 : emgav ha pedenn digerifi.

10.45 : kentel gembraeg gant Yann Talbot. Diazez ar yezh.

Peadra da gefiveriañ un tamm brezhoneg ha kembraeg.

12.15 : pedenn kreisteiz.

12.30 : pred. Bodadeg beleien ar c'hanton a vo war ar memes tro.

14 : pourmenade nnig, hag ur gentel all da c'houde.

16 : banne kafe ; diwezh an emvod.

Pellgomzit da Varsel Derrien a-benn ar 24.2 m'emaoc'h e soñj kemer perzh er vodadeg (pg : 96 43 40 61). A greiz kalon : Yann Talbot.

MOUEZH SANT ERWAN.

Niverenn 52.

Keneiled vat,

Abred e vo moarvat an nevez-amzer hevlene gant an amzer sec'h ha klouar a zo o ren ; dija e weler bleunioù ' zo oc'h en em zispakañ. Met da gentañ e roan deoc'h ur rentañ-kont eus hon emvod diwezhañ.

Emvod Boulvriag. E ti Marsel Derrien, en e bresbital nevez, an ti-post gwechall, bras, ec'hon, met diaes mont e-barzh gant ar skalieroù mein uhel a zo dirak, eo e voe dalc'het an emvod diwezhañ, e Boulvriag, d'ar meurzh 25 a viz C'hwevrer. 6 e oamp o labourat. Diouzh ar beure hon eus studiet un tamm kembraeg, diazazoù ar yezh, peadra da welout ar gerentiezh hag an digorc'h gant ar brezhoneg. Ouzh taol evit merenn avat e oamp kalz muiloc'h, ur pemzek, bennak rak bodadeg beleien ar c'hanton e oa ivez, ha bev eo bet an traoù etrezomp. Goude merenn ez eas darn ac'hanomp da weladenniñ tosen-nig-douar (tumulus) Boulvriag, e kreiz ur park, un arouez eus buhez ar rak-keltes e Breizh, savet moarvat etre 5000 ha 1000 kent hor Salver. Distro eus hon baleadenn e voe kendalc'het gant ar gentel kembraeg. Fent a voe un tamm e gwirionez, o klask distripañ un nebeut pozioù e yezh hon amezeien keltiek.

KELEIER :

1. Eskob nevez Sant Brieg ha Landreger.

Ne ouezer ket c'hoazh piv e vo, met sur-mat emañ kannad ar Pab e Paris o labourat war an dra-se. Un enklask a zo bet lakaet war droad en eskopti evit gouzout resisoc'h pere eo ezhommoù pastorel pennañ an eskopti, ha peseurt doare eskob e vije mat kaout evit ober al labour. Mat e vije d'ar vrezhonegerien ha d'ar vrogarourien lavarout ivez o soñj ha sevel un destenn evit goulenn ma vo sevenet a-benn ar fin en eskopti komzoù ar Pab diwar-benn gwirioù a minorelezhioù. Betek-hen n'omp ket aet war-rack war ar poent-se, pa ouezer n'eus diskleriadur ofisiel ebet amañ war implij ar yezhoù e buhez an iliz. E Kembre ez eus diskleriadurioù graezh a-berzh an eskibien. Da skouer hini an Tad D. Mullins, eskob Menevia. Perak n'eus ket e Breizh ? Moarvat dre ma sell an eskibien outo o-unan evel saurt prefeded an iliz c'hall e Breizh ha setu holl, ha n'eo ket evel Breizhiz.

2. Kendalc'h keltiek : Hevlene e vo dalc'het ar c'hendalc'h keltiek en Enez Vanav, e Douglas, ar gêrbenn (ostel Ascot, 7 Empire Terrace), eus al lun 20 a viz Ebrel d'ar Sadorn 25. Danvez ar c'hendalc'h a vo : " A living culture" (ur sevenadur bev). Me a zo bet karget d'ober ar brezegenn en anv Breizh, e saozneg evel-just. Moarvat e vo lidet ur servij ekumenek e-pad ar sizhunvezh. E 93 e vo graet ar c'hendalc'h e Bro-Skos, a soñj din. E 95 e tlefe bezañ dalc'het e Breizh adarre, marteze en Orient.

3. Kamp katekiz an nevez-amzer. Ur c'hamp katekiz berr a vo aozet e Rostren, evit ar vugale (7-14 bloaz) eus al lun 13 a viz Ebrel d'ar merc'her 15. E dibenn ar c'hamp e vo lidet an oferenn e chapel Kampostal d'ar merc'her 15 da 5 eur.

Bodadeg ar gerent hag an tiegezhioù a vo dalc'het d'ar Sul 12 e skol an Itron Varia, e Rostren, hag an oferenn a vo lidet da 17 e chapel Kampostal. Sul ar bleunioù e vo. Goude se ar vugale a chomo ganimp evit ar c'hamp a grogo d'al lun beure.

Notomp : kamp katekiz miz Eost a bado eus al lun 3 d'ar sadorn 8 e Rostren.

4 Gouel ar Brezhoneg : Er bloaz-mañ ne vo ket graet gouel ar Brezhoneg e Karaez evel boaz met e Spezed (Speied mar fell deoc'h) da vare ar Pantekost, d'ar 6 ha d'ar 7 a viz Mezheven. Un oferenn a vo lidet er chapel, e kichen ar bourk, ar Sul-se da 14 eur. Pedif a ran an holl veleien a vo dieub da genoferenñ ganin. Ar person (hag a zo o chom e Landelo) a zo ur misioner deuet en-dro da Vreizh hag a gar e vro.

5. Diskleriadurioù war ar broioù-suj, ar minorelezhioù, ar sevenadurezhioù.

Er mizioù-mañ ez eus bet embannet un toullad mañ a ziskleriadurioù ofisiel pe damofisiel, a-berzh pennadurezhioù ' zo eus an iliz war gwirioù ar

pobloù suj. Siwazh, peurvuiañ an testennoù-se ne vezont ket lennet gant ar gristenien e Breizh, na sevenet gant ar veleien. Ne brederiont ket warno. E gwirionez, ar re a zo e penn ar mennozioù en iliz e Breizh ne daolont evezh nemet ouzh ar pezh a blij dezho hag a gadarna o ideologiezh. N'em eus gwelet teologour ofisiel ebet e Breizh dedennet gant kudennoù ar broioù suj. Soñjal a ra dezho e talvez komzoù an Iliz evit an holl vinorelezhioù er bed (evel Bro-Gebek da skouer), met evit Breizh ne ra ket, rak ar c'hatekiz politikel gall desket ganto er skol hag er c'hloerdioù en deus o c'henteliet ervat : Bro-C'hall a zo a-us da bep tra, unwan ha dizisrannus, da lavarout eo perzhioù an Aotrou Doue e-unan. Azeulerezh ar stad c'hall, idolenn nevez e plas al leue aour...

Sed amañ evlato roll ar pennadoù-se :

Diskleriadur ar c'homisionoù " Justis ha Peoc'h" eus Europa, embannet à Dullen, Here 91 (rannbennad 2) :

Minorités

Il n'est pas facile de définir ce que sont les minorités. D'une part, il y a des groupes ethniques qui vivent en minorité dans un pays avec leur propre langue, culture et religion. D'autre part, nous avons des populations récemment immigrées dans un pays pour des raisons économiques. Bien que ce soient deux catégories distinctes, les mêmes droits doivent leur être accordés : le droit de jouir de leur propre culture, le droit de pratiquer leur propre religion, le droit à la participation politique, et le droit à l'égalité de traitement. Il arrive que ces droits soient prévus dans les législations nationales, mais que les personnes concernées n'aient pas la possibilité de les exercer.

La communauté catholique, donc l'Eglise, est appelée à protéger les minorités de la destruction physique, de l'assimilation forcée, de la haine raciale et de la propagande hostile à leur existence. En outre, l'Eglise doit encourager la « discrimination positive », tant dans ses propres rangs qu'au sein de la société dans son ensemble. Cela signifie, plus particulièrement, la protection du droit de conserver la langue de son pays, le soutien financier du développement culturel et la mise à disposition de l'infrastructure de l'Eglise. Avant tout, la communauté catholique doit défendre avec force l'égalité de traitement de toutes les minorités dans tous les secteurs de la société.

Diskleriadur klozañ sunod eskibien Europa (15 a viz Kerzu 91), rannbennad 10 :

"Il faut refuser le mépris du droit des minorités. Au contraire, les traditions de chaque peuple doivent être respectées et promues..."

Diskleriadur eskibien an DOM-Tom, dindan beli Bro-C'hall :

U'est cela le principe de subsidiarité : donner aux communautés de base le pouvoir de gérer tout ce qui peut l'être par elles-mêmes, sans recourir systématiquement aux instances supérieures. En politique, cela commande de ne pas transférer à la collectivité nationale ou internationale ce qui peut être réglé par une collectivité départementale ou régionale..."

B O D A D E G M I Z M E U R Z H .

Dalc'het e vo bodadeg miz Meurzh d'al LUN 23, e ti François-Paul Laurent, (kalenner e Kampostal, ha mignon dimp) e Kerbargain, war barrez PEURIT-KINTIN (Kerne-uhel).

Ret eo kemer hent Kergrist-Moelou - Bulat (D 31), hag en ur zont eus Kergrist, treiñ war an tu dehou, ur panell bihan a weloc'h, o verkañ " Kerbargain". Emañ an ti nepell diouzh chapel al Loc'h. Me a vo er c'hroazhent da 10 eur 30 evit heñchañ an dud.

Roll an devezh :

10.30 - 10.45 : emgav e ti François-Paul ha Francine, e wreg. pedenn digeriñ.

10.45 : kentel gembraeg : studi ar bedenn veur II e kembraeg, keñveriet gant an destenn vrezhonek.

12.15 : ofis kreisteiz.

12.30 : merenn.

14 : gweladennig da chapel al Loc'h.

14 30 : kentel all : kudennoù a-vremañ ar broioù keltiek : Kembre ha Skos.

16 eur : diwezh an emvod.

sadorn 21 da greisteiz, m'emaoc'h e Pellgomzit din (96 29 01 55) a-benn ar soñj kemer perzh en emvod.

A grêiz kalon evit Doue ha Breizh. Yann Talbot.

M-OUEZH SANT ERWAN.

Niverenn 53.

Keneiled vat,

Kalz a labour evit pep hini ac'hanomp gant ar sizhunvezh santel. Spi am eus e kavfet amzer da lenn ar follennig vizeiek evelato. Ha da gentañ ar rentañ-kont eus an emvod diwezhañ.

A. EMVOD PEURIT-KINTIN.

En em vodañ a rejomp d'al lun 23 a viz Meurzh e ti François-Paul ha Francine Laurent e Peurit-Kintin, e Kerbargain, nepell eus chapel al Loc'h. Un dek bennak a oa deuet da labourat ha da dremen un tamm amzer vat a-gevret.

Diouzh ar beure e ris ur gentel war ar c'hembraeg en ur implijout an eilvet pedenn eukaristiel, hag o keñveriañ an div yezh. Deskiñ a rejomp un tamm mat er stumm-se. Servijet e voe dimp ul lein saourus war-lerc'h afis kriesteiz e ti hor mignoned, ha goude ar pred ez eas an dud da weladenniñ chapel al Loc'h, hanter adsavet gant Breizh Santel ha tud diwar-dro; met chom a ra c'hoazh kalz a labour d'ober a-benn he c'hempenn ervat. Ur wech distroet ar berzhidi e voe graet ur gentel all war dibenn ar bedenn veur II e kembraeg. Merzet ez eus bet pegen reñs ha pervezh eo an destenn gembraek e-kichen an hini vrezhonek, laoskoc'h.

Echuif a rejomp an emvod gant ur banne kafe tro peder eur hanter.

B. KELEIER.

1. Un tamm istor eus ar Vreuriezh :

Ganet e voe "Beleien e Breizh" e miz Gwengolo 87 war-lerc'h marv Marc'harid Gourlaouen, pa voe nac'het gant person Douarnenez lidañ eviti un oferenn gant e brezhoneg. Santout a ris neuze pegement a ezhomme oa eus ur strollad beleien evit sikour ar vrezhonegerien gristen ha difenn o gwirioù en Iliz. Kas a ris un eizh kant bennak a sinadurioù enep an hini a oa person Douarnenez d'ar c'houlz-se. C'hoazh e chom ganin un tri c'hant bennak n'am boa ket daset dezhañ. Hen ober a ris marteze un deiz bennak. War-lerc'h se e voe dalc'het ar vodadeg kentañ e Rostren. Abaoe Gwengolo 87 hon eus dalc'het ur vodadeg vizeiek er barrez-mañ-parrez, embannet 2 levr ("Levrig ar C'hristen", ha "Fañch Kereñv Gwidel"), skoulmet darempredoù gant "Kristenien Breizh" ha gant "Breuriezh Sant Iltud", kemeret perzh bep bloaz e Gouel ar Brezhoneg, ha neuze aozet ur c'hamp hañv abaoe 89. E 92 e vo bet aozet daou zoken. Ur pemzek bennak a veleien a vez ingal a-walc'h tro-dro d'ar vreuriezh, hag un nebeut laiked ivez. Un tregont bennak a veleien a zo bet tizhet e stumm pe stumm. Ar c'hannadig "Mouezh Sant Erwan" a vez kaset d'un 60 bennak a dud pe gevredigezhioù. Alies-tre e vez adkemmet pñnadou 'zo er c'helaouennoù evel "Bremañ". Menegomp ivez eo bet ganet ar follennig "HENTOU", erru gant he niverenn 12, diwar labour "Beleien e Breizh"; un tregont bennak a diegezhioù a vez kelaouet evel-se. Menegomp erfin an oferenoù brezhonek a vez lidet ganeomp : e "Gouel ar Brezhoneg", e-pad ar c'hampoù, da geñver obidoù 'zo, hep kontañ ar badeziantoù er parrezioù, hag an diskleriadurioù a feiz e dibenn ar c'hamp-hañv. Ur seurt gwir gumuniezh a vrezhonegerien ez omp deut da vezañ etre beleien, laiked ha tiegezhioù. Mankout a ra leanezed ganimp avat.

2. Beaj hon eskibien a Vreizh da Roma.

Graet o deus hon eskibien a Vreizh (merour an eskopti evit Sant Brieg), mesket gant eskibien all ar "rannvro abostolek" anvet "Kornog" (Quest) o gweladenn ad limina apostolorum da Roma e miz Meurzh. Graet o deus d'ar Pap un danevell eus stad an traoù en o eskopti, ar pezh a ya war-raok (roll al laiked e buhez an iliz da skouer, hag o stummadur), hag ar pezh a ya war washaat (digresk ar bleustrerien, digresk aiver ar veleien, nebeut a c'halvidigezhioù). Hervez kelaouennoù 'zo en dije goulennet ar Pap penaos emañ kont gant ar yezh hag ar sevenadurezh ha peseurt preder pastorel a vez diskouezet evit ar brezhoneg hag evit gwirioù ar minorelezhioù sevenadurel.

3. Breuriezh Sant Iltud.

Bev-tre ez a war-raok Breuriezh Sant Iltud. Ur gelaouennig a vez embannet bep ar mare evit reiñ keleier : "Mouezh Sant Iltud", hag a zo erru gant he niverenn 7. Mar fell deoc'h koumanantiñ ha kemer perzh en obererezh-se evit

nevez avielerezh Breizh, skrivit da "Breuriezh Sant Iltud", Lann Anna, Bourc'h 2
56 310. KISTINID.

Gant ar vreuriezh eo bet prenet an domani bras e bourc'h Kistinid, a c'hello
servijifi n'eo ket hepken da vanatti, met ivez evit ober retredoù ha degemer strolladoù.
Tu a zo deoc'h d'ober profoù evit sikour echuñ paeañ an ti hag an douar tro-dro.
Ezhomm ez eus 180.000 lur e dibenn miz Ebrel, ha 180.000 lur all e dibenn miz Eost. Th
a zo deoc'h ivez da brestañ 10.000 pe 5000 lur evit ur bloaz pe ouzhpenn da 0% a gampi.
N'eus forzh penaos e vo eus ho perzh un akt a feiz e dazont ar gristeniezh brezhonek e
Breizh.

4. Kampig miz Ebrel : Dalc'het eo bet ar c'hampig katekiz eus al lun 13 d'ar
merc'her 15. D'ar sul e oa degouezhet un nebeut familhoù ; goude merenn e rejomp ur vale-
adenn sportel e koad Kerbeskont, hag an b'frenn a voe lidet e chapel Kampostal da 17 eur.
Neuze e chomas ar vugale ganimp, seizh hepken. Gwir eo em boa kaset diwezhat ar follen-
noù, hag e vez diaes a-wechoù d'an tiegezhioù kas o bugale e-pad vakañsoù Pask ; re verr
ez int. Ouzhpenn-se ne oa ket tomm-tre an amzer, ha n'eo ket tommet ar skol. Da vloaz e
vo graet a-hend-all. Koulskoude ez eus bet plijadur ha frouezh. Muriel ha Gael a oa evit
ober ar boued, Tepot ha Benaed evit ober katekiz, ur stro lad a 4 hag ur strollad a 3.
Da Lun en endervezh ez ejomp da welout iliz Lokarn hag an teñzor (brec'h ha penn arc'hant
Sant Hernin), ha war hent an distro e rejomp un tamm poz e Toull-Goullig. D'ar Meurzh ez
ejomp da Wareg da bediñ war bez an Ao. P. Bourdellez ha Mab Sulon, ha d'an noz e voe ur
veilhadez pediñ e chapel Lokmaria. D'ar merc'her ez ejomp da welout iliz Sant Jermen e
Groñwel, hag ar person Y. Motreff a gontas dimp istor patron ar barrez. Da 5 eur e voe
lidet an oferenn e chapel Kampostal, me ha A. Piriou o kenoferenniñ. E vakañsoù Pask 93
e vo klasket un ti bihanoc'h, des da domañ, evit ar c'hampig.

5. Gouel ar Brezhoneg. Dalc'het e vo hevlene e Spezed (Speied) d'ar Sadorn ha d'ar
Sul 6-7 a viz Mezheven (Pantekost). Abadennoù liesseurt a vo hag evel just ivez un dis-
kouezhadeg hag ur werzhadeg levrioù. "Kristenien Breizh" a vo eno gant ur stand evel
kustum. Un oferenn a vo lidet e chapel an Dreinded, e kichenik ar vourc'h d'ar Sul 7 da
14 eur. Pedet eo an holl veleien a vo dieub da zont da genoferenniñ.

6. Kamp ar vugale e miz Eost. Dalc'het e vo ar c'hamp katekiz bras e Rostren e skol an
Itron Varia, evit ar vugale eus 7 da 14 vloaz, eus al Lun 3 a viz Eost, d'ar sadorn 8.
Evel kustum e vo bodadeg ar veleien hag al laiked d'ar gwener (7 a viz Eost).

E M V O D M I Z E B R E L .

Dalc'het e vo emvod miz Ebrel d'ar
YACU 30 A VIZ EBREL, e
presbital KISTINID, bro-Wened, e ti M. Blanchard.

- 10 eur 30 : degemer an dud ; pedenn digeriñ.
- 10 45 : kentel gant Turiaw Ar Menteg war brezhoneg bro-Wened, en ur implijout
testenn J.M. Heneu "Gueladenn Tondal" (mouladurioù Dihunamb 1932)
- 12. 15 : ofis kreisteiz.
- 12. 30 : merenn er vourc'h.
- 14 : baleadennig.
- 14. 30 : ur gentel all. Pe heuliadenn kentel ar beure ma n'eo ket echu ; pe unan
all ganin war stad ar gouezeleg e bro-Skos.
- 16. : banne kafe. Diwezhat an emvod.

Pellgomzit da berson Kistinid (97 39 71 15) a-raok ar merc'her
29.4; m'emaoc'h e soñj kemer perzh en emvod.

A greiz kalon evit Doue ha Breizh.

Yann Talbot.

Keneiled vat,

Deuet an amzer vray, an tomader zoken, ha mare ar Pask kentañ ha retredoù ar vugale evit ar bersoned. Labour war ar stern... Ni ivez, Beleien Breizh, ne zisterniomp ket...

BODADEG KISTINID. (d'ar Yaou 30 a viz Ebrel).

Un daouzek bennak e c'amp ouzh taol e Kistinid, evit an emvod miziek, deuet ur c'heneñl nevez ouzhpenn, Joig Orhand, ul lañk, eus Lokrist (Morbihan), d'hor gwelout ha da skoulmañ darempredoù, ha neuze, Youenn Olier, eus Kistreberzh a oa degouezhet ivez.

Lakaet e oa bet war ar stern ur studiadenn war brezhoneg bro-Wened. Prientet e oa bet pep tra, aketus, gant hor mignon Turiaw. Ur studiadenn ampart, spis ha don en devoa graet war destenn " Gueladenn Tondal", gant Y.V. an Heneu, o reiñ dimp e-leizh a notennoù pouezus ha skiantel. Despetus eo n'en devoa ket gallet bout en emvod. Lenn a ris eta e notennoù, ha deskiñ a rejomp kalz a draoù war defzorioù rannyezh bro-Wened.

Goude hol lein (merenn e Treger) er presbital ez ajomp da welout domani Breuriezha Sant Iltud er vourc'h. Kalz a labour a zo d'ober c'hoazh hag ezhomm arc'hant a zo, met gant gras Doue e vo tu da gempenn an traoù. Dija ez eus tu da lojañ en ti, ur pedva a zo bet aozet evit an ofisoù ; met kambreier a zo da gempenn ervat evit degemer tud. Douaroù ouzhpenn, gant ur c'head, a zo bet fiziet er vreuriezh.

M'hoc'h eus c'hoant skoazellañ an obererezh speredel-se, kasit ho profoù da " Breuriezha Sant Iltud", Presbital, 56 310. Kistinid.

War-lerc'h ar weladenn-se e voe kendalc'het gant ar studiadenn war rannyezh bro-Wened en ur implijout testenn an Aotroù Heneu. Ur skrid talvoudus e pep keñver war al live lennegel, met pell a-walc'h, war a seblant, evelkent, diouzh ar gwenedeg poblek. Neuze, evit echuiñ e voe eskemmet kentrezomp keleier a bep seurt. Joig Orhand a roas dimp da c'houzout ar pezh a ra e diabarzh ar CMLIB bremañ evit difenn Breizh war an dachenn armerzhel ha kevredigezhel. Goude ar banne kafz e kimiadjomp an eil diouzh egile.

KENDALC'H KELTIEK ENEZ VANAV.

Dalc'het eo bet e Doolish (Douglas), kêrbenn Enez Vanav, eus al lun 20 a viz Ebrel d'ar sadorn 25. Ur c'hant bennak a golted a oa deuet, dek o tont eus Breizh. Danvez ar c'hendalc'h a oa : "A living culture" (ur sevenadur bev). Ur brezegenn a zo bet graet gant un dileuriad eus pep bro. Ar bodadegoù a zo bet dalc'het en " Ascott Hotel", nepell eus kreiz kêr. Me a reas ar brezegenn en anv Breizh, e saozneg evel just.

Diouzh an andervezh e veze pourmenadennoù plijus ha kentelius (Laxey Valley gant ar rod bras, mirdi broa del enez Vanav e Doolish, mirdi al labour douar e Cregneash, kastell istorel Gastletown) hag abadennoù kan ha sonerezh goude koan.

Muñoc'h a berzhidi a oa er wech-mañ eget er c'hendalc'hioù all en enezenn. Aozet mat-tre e oa bet pep tra gant skourr Enez Vanav, dreist-holl gant ar sekretourez. Bep beure e lavaren an oferenn e brezhoneg evit an Iwerzhoniz, a gane kantikoù en iwerzhoneg... Ekumenegezh a yezh...

Degemeret omp bet gant maer Doolish, ha gant kadoriad ar Parlamant (an Tynwald), Sir Charles Kerruish. N'emañ ket Enez Vanav e diabarzh ar Rouantelezh Unanet (United Kingdom) - ur vro dizalc'h eo - nag er c'henvarc'had europat kennebeut. Setu perak ez eo ur baradoz evit ar bankoù hag ar c'hoapagnuezhioù etrevroadel.

Unan eus an traoù pouezusañ a vez graet e seurt kendalc'hioù eo an darempredoù donoc'h a vez skoulmet gant Kelteñ all evit kas war-raok ar stourm sevenadurel, dreist-holl gant Skosiz ha Kerneveuriz a zo an tostañ ouzhip war an dachenn-se. Gant Manaviz

ivez ez eo pouezus kenlabourat : en ur ober ugent vloaz o deus lieskementet dre bevar niver ar vanavegerien : 600 a zo bremañ barrek da gomz ar yezh. Tamn-ha-tamn e vez desket e skolioù ' zo. Labourat kalonek a ra ivez ar strollad politikel broadel "Mec Vannin" (mibien enez Vanav).

Da vloaz e vo dalc'het ar C'hendalc'h keltiek en Inverness (hanternoz Bro Skos), e beg al Loc'h Ness, eus an 26 a viz Gouere d'an 31. War an danvez-mañ e vo : "Celtic youth participation" (Perzh ar yaouankiz keltiek). Emeur e sell da gas meur a vreizhad yaouank du-hont.

GOUEL AR BREZHONEG.

Dalc'het e vo e Karac'h hag e Spezed (Speied) da vare ar Pantekost, eus ar Gwener 5 d'ar Sul 7 a viz Mezheven.

D'ar Sul 7 da 14 eur e vo lidet un oferenn e brezhoneg e chapel an Drinded, e Spezed, nepell eus ar vourc'h.

Pedif a ran an holl veleien a vo dieub da zont da genoferenniñ ganin, ha d'al laiked kristen da kemer perzh enni.

Ur stand a vo dalc'het gant Beleien Breizh ha Kristenien Breizh. Ezhomm an dije eus unan bennak evit dere'hel ar stand ar sadorn goude kemerenn rak me ne vezin ket dieub.

KAMP KATEKIZ AR VUGALE : (Miz Eost)

Dalc'het e vo e Rostren (Skol kentañ derez an Itron Varia) eus ar Sul 2 a viz Eost betek ar sadorn 8.

- d'ar sul 2, da 17 eur, oferenn e chapel Kampostal.
- d'ar Gwener 7, da greisteiz, pred hag emvod ar veleien hag al laiked.
- d'ar sadorn 8, da 17 eur, oferenn an dibenn kamp e chapel Kampostal.

BODADEG MIZ MAE.

Dalc'het e vo e presbital Rostren, d'ar Yaou 21

a viz Mae.

- 10.30 : emgav an dud; pedenn digeriñ.
- 10.45 : kentel gant Yann Talbot : kudennoù a-vremañ ar broioù keltiek : Kerne-veur ha Kembre.
- 12.15 : Ofis kreisteiz.
- 12.30 : merenn er presbital.
- 14 : baleadenn betek chapel Itron Varia a Druéz (Melioneg).
- 15 : ur gentel all : Enez Vanav ha Bro-Skos.
- 16 : ur banne kafe.
- 16 30 : dibenn an emvod.

Pellgomzit din (96 29 01 55), a-benn ar merc'her 20, m'emaoc'h e soñj kemer perzh en emvod.

A greiz kalon evit Doue ha pobl Vreizh.

Yann Talbot.

MOUEZH SANT ERWAN.

Niverenn 55.

Keneiled vat,

Emaomp gant devezhioù hirañ ar bloavezh, Gouel Sant Yann Vadezour, (va sant-paeron) hiziv, ha prestik ar vakafisoù... N'eo ket un abeg avat evit disterniañ. Krogomp e-barzh eta !

BODADEG ROSTREN. (d'ar Yaou 21 a viz Mae).

Evel boaz e camp un dek bennak en-dro d'an daol, e presbital Rostren, evit studiañ ha breutaat a-gevret. Diouzh ar mintin e ris ur gentel war ar yezhoù keltiek, an diforc'hoù etre ar yezhoù goidelek (iwerzhoneg, skoseg, manaveg) hag ar yezhoù predenek (brèzhoneg, kerneveureg, kembraeg), ar pezh a vez anvet gant an dud a skiant ar c'heltiek "p" hag ar c'heltiek "K". War a gredan e plijas a-walc'h ar studi-se a yezhoniezh d'ar berzhidi. Tu a voe da gompren gwelloc'h perzhioù dibar ar brezhoneg ha penaos eo kar ivez d'ar yezhoù keltiek bev all koulz ha d'ar galianeg marv.

Goude hol lein e rejomp ur bourmenadenn betek chapel Itron Varia a Druez, war vord ar ganol, war barrez Melioneg. Deuet e oa person ar barrez da welout ivez penaos emañ kont bremañ eno. Dreset eo bet ar savadur gant an Arzoù-Kaer, adc'hraet an diabarzh, ar c'hoadañ a-bezh. Bremañ ne gouezh ken ar glav e-barzh, ne ruilh ken an dour dre zindan ; met c'hoazh ez eus un nor da lakaat, hag a vo tu da brennañ, ha neuze gwerennoù-liv da staliañ war ar prenestri. Pa vo bet graet se e vo tu da adlakaat en o flas an delwenoù a zo bet renket, da c'hortoz gwell, en iliz Melioneg, ha da sevel un aoter evit lidañ an oferenn. Ur soñj mat e vije neuze adsevel ar pardon, rak abace meur a vloavezh n'eus bet mui netra er chapel-se hag a zo hollgaer koulskoude, lec'hiet en ur baradozig, gronnet a wez hag a zour.

Pa voemp distroet eus hor baleadenn e ris ur gentelig all a-zivout kudennoù a-vremañ ar broioù keltiek, ha dreist-holl diwar-benn enez Vanav, ma voe dalc'het enni Kendalc'h Keltiek 92. Mat eo gouzout ez eo gant Iwerzhon unan eus an div stad keltiek dieub. Rak n'emañ ket an enezenn e-diabarzh an "United Kingdom", ur gouarnamant dezhi hec'h-unan a zo evit he ren, gant ur parlamant hag ur seurt kentañ Ministr.

Goude ar banne kafe e lavarjomp Kenavo an eil d'egile, ha d'ar c'hentañ gwel.

KELEIER :

Obererezhioù Beleien e Breizh.

Abace miz Mae hon eus kemeret perzh en

obererezhioù-mañ :

- d'ar Sadorn 9 a viz Mae : lidet e voe ganin an oferenn evit 50 vet deiz-ha-bloaz Kelc'h keltiek Roazhon, e chapel Sant Varzhin. Un hanter kant a fideled a zo deut da ganañ ha da bediñ. Laz-kanañ ar c'helc'h a ganas war an ton bras kanennoù kâzh ha nevez, heuliet gant an ograoù.

- d'ar Sadorn 6 a viz Mezheven, en iliz Sant Albin e Roazhon, e voe lidet gant an Tad Kalvar ha ganin eured merc'h diwezhañ Alan ha Nouela Al Louarn. Un oferenn divyezhek e voe rak ar pried nevez a zo genidik eus Gwitreg evel e holl diegezh. Hon hetoù a levenez a gasomp d'ar priedoù nevez.

- Sadorn 6 ha Sul 7 a viz Mezheven : Gouel ar Brezhoneg e Speied.

Un oferenn a oa bet goulennet gant ar strollad lec'hel a rae war-dro ar Gouel, Yann Puillandre peurgetket. Prientet e oa bet pep tra gant laz-kanañ ar barrez, al lennadennoù, ar c'hantikoù. Ne oa bet oferenn all ebet e Speied ar Sul-se. Setu perak e oa kazi leun chapel Itron Varia ar C'hrrann, ar Sul 7, pa grogas an oferenn da ziv eur, lidet ganin ha Job Lec'hvien. Daoust na oa ket bet kemennet an oferenn war baper ofisiel ebet eus ar Gouel. Ha koulskoude e oa bet kemennet d'an aozerien. War un nebeut kelacuennoù e oa bet tu avat da silañ ur c'hemennig. Kaer e voe an traoù a gredan, en ur chapel ken dispar, rouez bremañ gwelout un ilizad tud o kanañ gant kalon e yezh ar vro. (n'eo ket hini ar Republik gall evel m'o deus divizet ar parlamantourien e

Versailhez, dec'h, d'an 23 a viz Mezheven...) - Ober a ris an homelienn war danvez 2) ar Pantekost, hag e pouezis war burhud ar yezhoù a zle bezañ sevenet e Breizh ivez. Pantekost evit Breizh en deiz a hiziv : pa vo meulet Doue e yezh ar vro.

War-lerc'h an oferenn e vo dalc'het hon stand kumun (Beleien e Breizh, Kristenien Breizh, Breuriez Sant Iltud, Imbourc'h) e sal ar sportoù. N'eo ket ar gounid arc'hant ar pep pouezusañ, met an darempredoù gant an dud, hag an abostolerezh. Un nebeut levrioù a vo gwerzhet memestra, ha paet an traoù gant moneiz broadel breizhat. Peadra d'ober avi da "Bank -kreiz Europa" a vo savet hepdale... N'hor bo ken ezhomm eta eus al lurioù gall. Gwerzhet ez eus bet evit ur mil ljr bennak, a gredan, ha Breuriez Sant Iltud a c'hellas dastum ur berniadig profoù evit hec'h obererezh.

Eus ar peurrest eus ar Gouel (festoù-noz, sonadegoù, prezegennoù, divizoù), ne lavarinn netra rak n'em eus ket bet tu da gemer perzh enno.

A-benn bloaz e vije tu avat da wellaat hor bruderezh evit hon oberennoù. Met ezhomm e vije eus muioù a gristenien emsavek.

KELEIER AR VRO.

Buhez Diwan :

Emañ war ar stern raktres al lise. Pegoulz e vo savet ? Ha pelc'h, ha penaos ? Un emvod a zo bet dalc'het evit se e skolaj Roparz Hemon, er Releg, d'ar sadorn 20 a viz Mezheven. Kalz a guennoù a zo : peseurt hentenn bedagogel dibab, peseurt diplomoù prientiñ, sevel dornlevrioù, klokaat ar gerioùegi, studiañ an darempredoù gant ar stad c'hall, ar "rannvro", an departamantoù. An dregont a berzhidi a oa eno a zo mennet avat da gas an traoù war-raok, ha da zigerifi al lise an abretañ 'r gwellañ. Ur c'homite skoazell a zo bet savet evit sikour digerifi al lise. En e benn emañ Andreu Roparz, Milin ar Vern, 29 410, Gwignann (Guiclan). Tu a zo deoc'h da gas profoù arc'hant evit harpañ ar groudigezh-se.

"Ar Galleg, yezh ar Republik".

Divizet eo bet gant ar parlamantourien c'hall lakaat ar mennad-se er c'hepreizhadur (bonreizh), pe lezenn-diazez ar stad. Setu ur skoilh ouzhpenn, hag unan bras er wech-mañ, evit gounit ur statud evit ar brezhoneg e Breizh.

Ouzhpenn se e savo kudennoù gant lezennoù Europa. Rak penaos lakaat da glotañ reolennoù strizh Bro-C'hall (ar galleg hepken) gant reolennoù Europa war ar "yezhoù bihan" pe "yezhoù rannvro" ?

Pe neuze e ranker kompren, ni Briezhiz, peogwir ne reomp ket gant ar galleg hepken, n'emaomp ket mui er Republik gall. Neuze ez omp estrenien da Vro-C'hall, ha gant gwir abeg e c'houlennomp bezañ anavezet evel un 13vet ezel eus ar c'henvarc'had. Muioù a bouez armerzhel hon eus eget Iwerzhon, ha ñek gwech muioù a boblañs eget Luksembourg.

K.E..A.V. e Skaer.

Kamp etrekeltiek ar vrezhonegerien a vo dalc'het e Skaer eus ar Sul 19 a viz Gouhere d'ar Sadorn 1af a viz Eost.

D'ar sadorn 25 e vo dalc'het devezh ar skrivagnerien. Ober a rin ur brezegenn diwar-benn "Beleien Bro-Dreger hag an Emsav" : Ao. Klerg, Ar Floc'h, Ar C'halvez, Bourdellez.

Kamp katekiz miz Eost : Dalc'het e vo e Rostren eus an 3 a viz Eost d'ar sadorn 8. D'ar sul 2 e vo bodadeg an tiegezhioù. D'ar gwener 7 e vo degemeret evel boaz, e skol kentañ derez an Itron Varia, ar veleien hag al laiked evit pred kreisteiz. Echuiñ a raio ar c'hamp gant an oferenn e chapel Kampostal ar sadorn da 5 eur. Degemeret e vo bugale eus 7 da 13 bloaz, badezet pe get. Ret eo gouzout komz brezhoneg, evel just. Koustañ a raio ar c'hamp 350 lur evit ur bugel. Un distaol a vo evit meur a vugel eus an hevelep familh. Skrivañ din an abretañ 'r gwellañ evit enskrivañ ar vugale.

BODADeg MIZ MEZHEVEN. : Lun 29 a viz Even.

Dalc'het e vo e ti Tad Turiaw Ar Menteg, 4 alez ar balap, e bourc'h Lokmikael-an-Traezh (Bro-Dreger). Er vourc'h, kemer hent Plouzelam, ha treiñ diouzhtu a zehou, ha goude klask... Sevel a ra serzh, forzh penaos.

Roll an devezh :

10.30 : emgav, pedenn digerifi.

10.45 : studi war al liderezh e brezhoneg : deskif kanañ Ordinal an Oferenn (Kirie, Gloria, Kredo, Sanktus, Pater, Agnus).

12.15 : Ofis kreisteiz.

12 30 : pred.

14 : baleadenn diouzh ma vo an amzer

16 : banne kafe ; diwezh an emvod.

Pellgomzit da dad Turiaw (96 35 72 66) a-benn ar sadorn 27, m'emaoc'h e soñj kemer perzh. A galon evit Breizh. Yann Talbot.

MOUEZH SANT ERWAN.

Niverenn 56.

Keneiled vat,

Dibacuez e labouromp, zoken e-pad an hafv, evit kas keleier d'an dud...

I. BODADEG LOKMIKAEL-AN-TRAEZH.

En em vodet hon eus e ti Turiaw Ar Menteg d'al lun 29 a viz Mezheven. Diouzh ar beure hon eus studiet komzoù ha tonioù Ordinal an Oferenn, evit bezañ barrekoc'h da genlidañ un oferenn war gan dirak ar fideled.

Meur a Girie, a C'hloria, a Gredo, a Bater hon eus desket.

Pezh a zo dipitus eo an diforc'houigoù a zo etre testennoù Kemper ha reoù Sant Brieg (hep kontañ reoù Wened) war draoù 'zo. Diaesaat a ra an traoù evit kaout ul liderezh unvan a c'hellfe bezañ desket gwelloc'h gant ar fideled.

Gaude ar pred saourus aozet gant mibien an ti, e voe kendalc'het gant ar studi rak an amzer ne oa ket gwall vat. Graet hon eus ivez war-dro kanennoù nevez savet gant hen-mañ-hen (Job An Irien, Hob Lec'hvien, Per Even, tud all c'hoazh) en doare da binvidikaat un tamm hol liderezh e brezhoneg.

Kimidiñ a rejomp war-lerc'h banne kafe peder eur, gant ar soñj d'en em adwelout, darn ac'hanomp d'an nebeutañ, da gefiver ar c'hamp katekiz.

II. "DREMM AN AOTROU."

Deuet eo er-maez eil levrenn katekiz ar vugale, war-lerc'h "Klask a ran", savet gant Job An Irien hag e strollad.

"Dremm an Aotrou" a zo bet savet evit bugale ar CE2. Mez ez eus er pakad ur c'haier bras skeudennaouet kaer-tre, war baper lufr, evit ar vugale, 25 kentel ennañ, gant testennoù ha kanennoù ; ur c'haierig ennañ 15 kantik nevez gant ar sonerezh, hag a glot gant ar c'hentelioù ; ul levr evit an animatour, ma tispleger ennañ petra ober e pep kentel ; hag erfin ur c'hasedig warnañ enrollet holl gantikoù al levr gant muzikerien, kanerien ha bugale.

Setu aze ul labour hag a rento kalz servij d'ar gatekizerien vrezhonek. Ar stumm a zo nevez a-walc'h hep bezañ dispac'hel. Dre vras eo mat ar yezh implijet, eeun a-walc'h evit klotañ gant live bugale an oad-se. Pep tra a zo displeget en div yezh (galleg, brezhoneg) evit ar gerent na ouifent ket mat brezhoneg.

Bonaj eo, avat, ez eus bet chomet, en taol-mañ c'hoazh, kalzig fazioù war reizhskrivadur ar brezhoneg peurunvan. Komprenus eo evel just pa raer gant un doare-krivañ n'eur ket boas outañ. Met tu a vije da c'hwennañ gwelloc'h an testennoù en ur c'houlenn skoazell meur a hini.

Evit prenañ "Dremm An Aotrou", goulennit digant Job An Irien, Manatti Minic'hi Levenez, 29 800 Treflevenez. Priz ar pakad : 100 lur (84 evit an dafar pedagogel, ha 14 lur ar mizoù kas).

III. ROG'H TREDUDON. 14 a viz Gouhere.

Evit an eil gwech ez eus bet aozet e Roc'h Tredudon, e-kichen peulvan meur ar skinwel, ur pik-nik gant "Stourm Ar Brezhoneg" evit goulenn ur chadenn skinwel e brezhoneg.

Un daou c'hant bennak a emsaverien o doa en em vodet, en o zouez kalzig tiegezhioù. Standoù a oa evit displegañ stourm an aozadurioù broadel, difennerien an endro, harperien an doullbac'hidi vreizhat, harperien an Euskariz. Ur seurt fest deiz a oa war ar park gant kanerien ha sonerien ; ha displegadennoù gant renerien "Stourm ar Brezhoneg", Herve Kerrain peurgetket. Tamm-ha-tamm en em sil evel-se er speredoù mennoz ar chadenn skinwel brezhonek. An dileuridi a zo krog d'emellout en afer.

Dleout a rafemp bezañ niverusoc'h evit seurt emvodoù, rak aze, er stourm, emañ da zont ar yezh. Hag e meur a gefiver an abostolerezh kristen ha difenn ar sevenadurioù en arvar a zo kenstag, "Mens sana in corpore sano" a dalvez ivez evit ur vro : un

ene yac'h en ur gevredigezh yac'h.

IV. OBIDOU ITRON AR MENN.

D'al lun 13 a viz Gouhere eo bet lidet en iliz Hafveg obidou Itron Ar Menn, marvet en he 78vet bloavezh. Gwreg e oa da Herve^Ar Menn, emsaver anavezet mat, soner ha skrivagner, marvet ur pemzek bloaz 'zo bennak, ha mamm Gwennole hag Erwan Ar Menn, o daou emsaverien galonek, anavezet mat ivez. Ganet e oa bet Itron Ar Menn e Toulon ma labourer he zad eno d'ar c'houlz-se, met evel ma lavar ar barzh : "ma c'halon 'zo e Breizh izel, ma c'halon n'emafi ket amañ". Ur vreizhadez a zoare e oa hi eta, ha degemerus en he zi e Pariz.

Lidet eo bet an oferenn-gañv gant person ar barrez ha ganin, e brezhoneg, gant un tamm galleg evit an nannvrezhonegerien.

Ra gavo peoc'h ha levenez e Rouantelezh an Tad. Hor gourc'hemennou a gengañv a gasomp da holl dud an tiegezh.

V. KAMP ETREKELTIEK AR VREZHONEGERIEN.

Dalc'het e vo hevlene c'hoazh er skol publik Joliot-Curie e SKAER, eus ar Sul 19/7 betek ar Sadorn 1afñ a viz Eost.

Pemp rummad kentelioù a vo hervez live ar berzhidi.

D'ar Sadorn 25/7 evo dalc'het devezh ar skrivagnerien. Danvez ar brezegenn a vo er bloaz-mañ : "Beleien Bro-Dreger hag an emsav broadel". Karget on bet d'ober ar brezegenn. Komz a rin eus ar veleien o deus labourer evit ar yezh hag ar vro e bro-Dreger etre 1930 ha bremañ : Ao P.M. Lec'hvien person Kemper-Gezeneg, Ao P. Bourdellez, Maodez Glandour person Louaneg, Ao. M. Klerg, person Bulien, Ao A. Ar C'halvez, aluzenner e Lannuon, dreist-holl. Eus tud all e vije da gomz ivez : Gw. Dubourg, Per Ar Gall, troour ar Bibl. Kals a zo da lavarout a-zivout o labour ken war an dachenn relijiel, emsavel, ha sevenadurel. Ni a zo o diskennidi a spered, met n'eus ket mui ar seurt aergelc'h a fiziañs, a zasorc'h hag a ziñun a oa ganto a-raok brezel 39.

Gwir eo ne vevomp ket mui en hevelep bed, pa z eo aet war ziskar war an hevelep taol, gant an hevelep lusk, ar vuhez sevenadurel ha kevredigezhel e brezhoneg hag ar vuhez kristen.

Ken emeur, e kelc'hiou 'zo, oc'h en em c'houlenn : penaos reññ lañs d'an adsav : gant ar "feiz noazh", diwriziennet, gallekaet, jakobinekaet, pe gant ar "yezh noazh", digristenaet, paganaet ? Ni, kristenien an emsav a soñj dimp e tleer chom en hon sav war an daou droad : hini ar feiz wirion, hag hini ar sevenadur yac'h. Ne c'heller ket adsevel an eil hep eben.

VI. KAMP KATEKIZ. (2 - 8 a viz Eost).

Evel kustum e tremeno an traoù e Rostren, e skol kentañ derez an Itron Varia (straed Metz).

D'ar Sul 2 a viz Eost : bez e vo emgav ar vugale hag ar familhoù da greisteiz. Ar pred a vo servijet da 12.30 (30 lur evit an dud vras). Digor e vo d'an holl. N'eus nemet lavarout din en a-raok. Goude-se ez aimp da vale.

Distreiñ a raimp evit an oferenn a vo lidet e chapel Kampostal da 17.30.

An holl a zo pedet d'an devezh degemer-se, hag ar veleien da genoferennif.

D'ar Gwener 7 a viz Eost : degemeret e vo al laiked hag ar veleien evit kemer pred kraigisteiz a-gevret gant ar vugale (30 lur e kousto). Lavarit din en a-raok pet den a vo ouzh taol.

D'ar Sadorn 8 a viz Eost : an Oferenn dibenn kamp a vo lidet e chapel Kampostal da 16.30. Ar veleien a vo aze a genlido. Goude an oferenn e vo ur "gwin a enor" e porzh ar skol. Degemeret mat e vo an holl dud d'an oferenn-se ivez evel-just.

Ar dud vat a lenno al linennoù-mañ a c'hello sikour ar c'hamp mar fell dezho en ur gas un nebeut gwenneien evit aezetaat an traoù. Bennozh Doue deoc'h en anv an holl vugale. Ezhomm 'zo eus kenlabour an holl evit astenn Rouantelezh Doue en dro dimp.

A greiz kalon evit Doue hag ar vro.

Yann Talbot.

Yann Talbot. Presbital. 22 110. ROSTREN.
96 29 01 55.

MOUEZH SANT ERWAN.

Niverenn 57.

Keneiled vat,

Chomet e oa mut " Mouezh Sant Erwan" abaoe miz Gouhere diwezhañ (gant an niverenn 56 deziadet d'ar 16.7). Evel-just, bez ez eus bet ar vakañsoù bras, met dleet e oa din evelato kas deoc'h un niverenn e miz Gwengolo gant an distro-skol.

En em gavet an avat skuizh-meurbet gant al labour-skol, ha hanter glañv evit gwir e-pad un tri mizvezh bennak, ken ne oan ket evit kas tra ebet war-raok.

Santout a ran bremañ an nerzh hag ar youl o tont din en dro, ha setu ma kasan deoc'h evit ar gouelioù ur c'helc'hlizher all, ken hir gortozet marteze gant darn ac'hanoc'h...

Met ret eo lavarout ivez, an dra-se ne vije ket c'hoarvezet mar bije bet tu da aozañ ha da urzhiañ ar genvreuriezh en ur stumm gwelloc'h, lakaomp gant ur sekretour, ur rener hag un teñzorer (evel er c'hevredigezhioù all...) ; evel-se ne chomfe ket an traoù en arvar, pa zegouezfe tra pe dra gant unan eus ar gargidi. Ar re all a rafe al labour neuze. N'eo ket mat e vefe tout ar samm war gein ar memes hini.

Bremañ e c'hellomp kontañ war un nebeudig a dud yaouankoc'h, en o zouez tiegezhioù nevez pe diegezhioù da zont, e-touez hor c'heneiled. Ganto eo e rankomp kenlabourat, anez da se ne c'hellimp, ni beleien, nemet dizeriañ...

Er bloaz-mañ e vije mat eta, a gav din, klask aozañ kreñvoc'h ar genvreuriezh ma vennomp padout ha mont war-raok.

KELEIER :

Re a draoù a vije da gontañ war ar pezh a zo bet tremenet e Breizh abaoe an hañv e-keñver ar Feiz hag ar sevenadurezh. Setu perak ne lavarin nemet un toulladig traoù, rak berr eo an amzer ganin.

K .E.A.V. (Kamp etrekeltiek ar vrezhonegerien) e Skaer (19.7/ 1.8).

Nebeutoc'h a dud a zo bet o teskiñ ar yezh er bloaz-mañ, met frouezhus eo bet al labour, dudioz ar prezegennoù, ha laouen an diduamantoù. Keve zerezh a zo un tamm bremañ etre an holl aozadurioù kelenn (Skol-veur, Stumdi, Diwan, kentelioù noz, Kendalc'h, Skol Vreizh hag all). Pezh ' zo mat evel-just, rak gant ar c'hevezerezh-se e teu buhez hag intrudñ, met kompren a raer ivez ne c'hell ket an nen mont d'an holl gampoù. Ret dibab.

Un oferenn a oa bet lidet war ar c'hamp ganin d'ar sul beure. An hevelep dregantad a berzhidi hag en darnvuiañ eus rannbarzhioù Breizh (war-dro 5% ; da lavarout eo 5 den war gant stajiad.)

KAMP KATEKIZ (miz Eost, 2.8 / 8.8).

Nebeutoc'h a vugale ivez hevlene, un ugent bennak, hag a-drugarez Doue e oa evel-se, rak ne oamp nemet daou, Yann Erwan Haspot ha me, evit ar c'helenn. Evit ar gegin e oa peder flac'h.

Yann Erwan a oa gant bugale ar CP, CE1, CE2 ha CM1, ha me gant ar re vrasoc'h, eus ar CM2 betek ar pevare klas ; Re skuizhus, ha re ziaes evidomp. Re a ziforc'h oad etre ar vugale en hevelep rummad, ha re niverus pep strollad (ouzhpenn 10). Da vloaz e vo ret ober e mod all.

Aze avat e kejer gant unan eus kudennoù ar c'hatekiziañ hag an avtelañ e Breizh :

2)
Ne vez ket stummet tud da gatekizañ e brezhoneg. Ha koulskoude e kresk niver ar skolidi skellataet e brezhoneg. N'eo ket aes dimp eta kavout tud a volonteiz vat, yaouank a-walc'h evit ober war-dro bugale, kristenien, desket a-walc'h war o feiz, brezhonegerien ha barrek a-walc'h war ar brezhoneg. Hep kontañ bezañ libr gant o amzer. Evel a weler e sammomp diaesterioù an eil war egile.

Tud a zo bet ouzh hor gwelout e-pad ar sizhunvezh evel kustum, kelaouennerien, beleien, laiked. Beilhadegoù bep noz, ha kalz a blijadur e-pad ar baleadennoù. D'ar Sadorn 8 e voe kenlidet an oferenn e chapel Kampostal, an holl wugale o kanañ hag o pediñ, gant kalz a gerent ivez ha tud eus an tro-war-droioù. Meur a vugel o deus komunket evit ar wech kentañ pe graet o diskleriadur a Feiz.

Evit ar wech kentañ hon eus graet gant eil levrenn katekiz Minic'hi Levenez "Dremm an Aotrou", hag a zo savet mat ha plijus da implijout. Graet eo (safset) evit bugale ar CE2. Me am eus graet gantañ eus ar CM2 betek ar 4re klas. Ne oa ket re izel evito. Se 'zo afer ar c'hatekizer evel just, da c'houñ tennañ implij eus e draoù.

Embannadurioù !

Ret eo menegiñ an eil levrenn eus "Gourbannoù" (Kofesadurioù) Sant Eosten (pe "Aoustin") troet diwar al latin gant Jil Ewan (Per E ven). Pebezh labour ramzel ha labour ki, a lavarfen, treiñ ur seurt latin postklasel. Un destenn a-bouez evel-just evit neb a fell dezhañ splujañ e kelennadurezh Tadoù an Iliz, krenvaat e anaoudegezh eus ar feiz, ha deskiñ brezhoneg don war un dro.

Evit koumanantiñ da "Imbourc'h" :

Youenn Olier, 8 leurger ar Marchiz 56 230 Kistreberzh (Questembert). 250 lur ar c'houmanant bloaz.

En niverenn diwezhañ (275) eus ar gelaouenn ez eus ur pennad prederouriezh talvoudus gant hor mignon Fañh Kerrain : "Petra eo soñjal" ?

E-touez an embannadurioù ne c'heller ket tevel evel-just war ar c'hatekiz nevez hollvedel embannet gant Roma, ha deuet er maez e galleg e miz Du diwezhañ. Un dra vat e vije ma c'hellfemp ober an droidigezh e brezhoneg eus an destenn latin. Met labour 10 den e vefe, ha penaos embann ul levr a 600 pajennad ?

LANN ANNA.

Derc'hel a ra Tiegezh Santez Anna da labourat e Kistinid. Ar c'hannadig "Mouezh Sant Iltud" a zeu ingal er-maez. Labourioù 'zo bet graet e Lann Anna, e bourk Kistinid, e-pad an hañv evit kempenn gwelloc'h ar savadurioù. 7 a dud a zo er gumuniezh, o klask en em vodañ ar muiañ 'r gwellañ. Spi hon eus holl (ha pedomp an Aotrou Doue evit se) e c'hellint sevel ur wir gumuniezh a studi, a bedenn, hag a ober a servijo da vad an holl Vretoned, ha pelloc'h c'hoazh. Ma fell deoc'h sikour Lann Anna, kasit ho profoù da : Lann Anna - Breuriezh Sant Iltud, Bourk, Kistinid, Bubri, 56 310.

OBEREREZHIOU AR BLOAVEZH 92-93 :

Er-maez eus hor bodadegoù reoliek notit :

- Emgav ar familhoù kristen (Emglev an tiegezhioù) : d'ar Sul 25 a viz Ebrel.
- Beaj da Vro-Skos evit ar c'hendalc'h ketliek en Inverness, gant ur strollad krennarded : e dikenn miz gouhere.
- Kamp katekiz : eus ar sul 22 a viz Eost d'ar sadorn 29.

BODADEG MIZ KERZU BELEIEN E BREZH.

Dalc'het e vo e presbital ROSTREN, d'ar Merc'her 30 a viz Kerzu, eus 10.30 da 16 eur.

10.30 : emgav. 10.45 : kentel gant Yann Talbot war ar brezhoneg krenn.

12.15 : pedenn greisteiz. 12.30 : pred er presbital.

14. : amzer vak. 14.30 : eil gentel pe bourmenadenn.

16 : banne kafe ; diwezh an emvod.

Pellgomzit din (dilun 28 pe dimeurzh 29) m'emaoc'h e soñj

dont. (96 29 01 55)

A greiz kalon evit Doue hag ar vro.

Yann Talbot.

Yann Talbot. Presbital.

22 110 ROSTREN.

96 29 01 55.

MOUEZH SANT ERWAN.

Niverenn 58.

Keneiled vat,

Bremañ eo krog adarre ar genvreuriezh hag ar c'hannadig "Mouezh Sant Erwan gant o hent. Spi am eus e vo tu da ganderc'hel ingal ur wezh ar miz.

EMVOD ROSTREN. 20.12.92.

Non emvod diwezhañ a voe dalc'het e presbital Rostren, d'ar merc'her 30 a viz Kerzu. Eizh a oa deuet da labourat diouzh ar beure ha goude merenn war ar c'hrennvrezhoneg. Ur gentela ris diouzh ar beure, hag unan all en endervez diwar-benn an oberennoù pouezusañ e brezhoneg krenn, adalek ar 14^{vet} kantved (Ivonet Omnes) betek 1659 : embannadur ar "Sacré Collège de Jésus" gant an Tad Maner, a verk derou ar brezhoneg modern.

War-lerc'h an displegadenn dre-vras e voe studiet un nebeut gwerzennoù eus "Buhez Mab Den", un destenn bet savet war-dro ar bloavezhioù 1530, ha dizanv an oberour. Ur yezh diaes a-walc'h eo da intent, dreist-holl pa ne vezer ket ur mailh war ar yezhoniezh hag istor ar yezh.

A drugarez Doue e oa un droidigezh c'hallek ganimp. Implijet hor boa an embannadur graet gant Roparz Hemon e 1962, "Trois poèmes en moyen breton", deuet er maez dindan paeroniezh "The Dublin Institute for advanced studies".

Ouzhpenn ar pezh a zegas dimp seurt studioù evit anavezout gwelloc'h stummadur hag emdroadur ar yezh, e kaver e "Buhez Mab Den" un daolenn gentelius war mennozhioù Brezhoned 'zo (beleien, leaned dreist-holl) e derou ar 16^{vet} kantved. N'eus ket spered an Azginivelezh gant an testennoù-se, met kentoc'h hini ar Grennamzer, pa soñjer, da skouer, e "Koroll an Ankou", e chapel Kervaria an Iskuit, hag e barzhoneg brudet François Villon :

Frères humains qui après nous vivrez,
N'ayez les coeurs contre nous endurcis,
Car si pitié de nous, pauvres, avez,
Dieu en aura plus tôt de vous merci...

Speredelezh "Buhez Mab Den" a ziskouez un emzalc'h kristen hollwashaour a-walc'h, levezonet muioc'h gant Koheleth, "Vanitas vanitatum et omnia vanitas", ha soñj ar Basion (maread ar misterioù bras eo) eget gant hini an Dasorc'h ha trec'h ar C'hrist. Ret eo soñjal ivez e oa trubuilhet da vat ar mare-se (derou ar XVI^{vet}), ne oa ket pell c'hoazh an eñvor eus ar wosenn vras ; goude-se e oa bet kleñved tagus an naplez gant brezelioù aloubiñ Italia, ha krog e oa ar brotestantelezh d'en em ledañ (M. Luther oc'h embann e dezennoù war-lerc'h 1520).

M'hoc'h eus c'hoant kaout un tamm tañva eus stumm ar brezhoneg krenn, sed amañ klozadur "Buhez Mab Den" :

Testenn orin :

Ma-z sonche den certain e-n maru
Hac ouz pep baru peguenn garu eu
Bizhuyquen en lech ne peche
Na ne hoarzhe her ve beu

Brezhoneg a-vremañ :

Mar soñje 'n den serten er marv
Hag ouzh pep barv pegen garv eo,
Bizviken e lec'h ne bec'he(fe)
Na ne c'hoarzhfe herr dre ve bev.

Peadra da brederiañ war an tonkadur hon eus aze memestra : "memento, homo, quia pulvis es, et in pulverem revertiris". (Merc'her al ludu).

KELEIER :

Embannadurioù Minic'hi Levenez :

Embannet ez eus bet nevez 'zo "Meditasionou war an Aviel", troet diwar galleg Charlez de Foucault gant Job Bougaran. Peadra da vagan mat hor buhez speredel.

E niverenn 17 (Kerzu) Minic'hi Levenez ez eus ur studiadenn blijus diwar-benn speredelezh kristen Bro-Iwerzhon gant Sean O Suinn, OLB, manac'h beneadat o tivizout gant Job an Irien.

Minic'hi Levenez, 29 800. Trelevenez.

GWERZH.

Ur gevelouri (ur c'hoperativ) a zo bet savet evit gwerzhañ dre

lizher a bep seurt traoù eus ar vro, ha dre ar brezhoneg m'hoc'h eus c'hoant.
Tu ' zo da brenañ levrioù evit ar vugale, pladennoù, kasedigoù, c'hoarioù, dilhajoù,
spilhennoù (e galleg : pin's !!!!), kartennoù, bandennoù treset, hag all.

Tu a zo deoc'h da c'houlenn ar roll-marc'hadourezh digant ar gevredigezh :
GWERZH DRE LIZHER , 29 52 0. LAZ.

REOLENNOU NEVEZ EVIT AR BREZHONEG ER SKOLIOU ?

Brud a ra Jack Lang, ministr an deskadurezh "broadel" evit ar "yezhoù rannvro". Daou viz a-raok ar mouezhiadegoù evit an dilennidi en deus c'hoant moarvat da c'hounit un nebeut mouezhioù ouzhpenn evit e gostezenn, pa n'e deus graet nemet mougaf ar yezh e pep lec'h abaoe "lezens Savary". Digresket eo bet lod ar brezhoneg er skoloù ha liseoù abaoe 8 vloaz. Neuze penaos kredif enno ?

Neuze gortozomp. Arabat fiziout re en o c'homzoù. N'eus forzh penaos, daoust ha ne raio ket ar ministr da zont, goude an dilennadegoù, ar c'hontrol-mik eus e ziaraoger ?

Evit kas war-raok ar stourm war dachenn ar yezh e vo aozet oberadegoù gant Unvaniezh ar gelennerien brezhoneg (UGB) ha gant Stourm ar Brezhoneg : ur vanifestadeg vras a vo e Sant Brieg d'an 30 a viz Genver evit goulenn ur wir chadenn vrezhonek war skinwel FR3 Breizh (emgav war Tachenn Veurzh).

Moarvat e raio traoù ivez diouzh o zu Skolioù Diwan, hag ar skolioù publik divyezhek. Ar skolioù kristen divyezhek n'eus ket kalz anezho, daoust da gomzoù ar Pab Yann Baol II a-du gant gwarioù sevenadurel ar broioù-suj. En eskopti Sant Brieg n'eus hini ebet zoken. Rener an deskadurezh, J.Y. Savidan, en devoa lavaret din daou vloaz ' zo en dije graet un enklask evit gouzout an ezhommoù a oa hag ar gerent dedennet, met n'eus bet graet netra war a seblant. Daoust ha ne vije ket kerent a-du evit krouif klasoù divyezhek e Bro-Dreger pe e bro-Gerne. ?

Ar radioù kristen.

Teir radio gristen a zo er brezhonegva, unan en eskopti Gwened, unan en eskopti Kemper (radio rivages), unan e Sant Brieg : Radio Clarté. E Penn-ar-Bed e vez skignet un nebeut abadennoù e brezhoneg. War hini Sant Brieg e vije mat hen ober ivez evit reiñ ul liv katolik kreñvoc'h d'ar skingomz-se, da lavarout eo hollvedel, digor d'an holl, d'ar brezhoneg evel d'ar galleg, ha graet evit an holl, evit ar vrezhonegerien ivez, hag a zo tud, n'eo ket tasmantoù int...

BODADEG

MIZ

GENVER.

Dalc'het e vo emvod miz Genver e presbital PLOUNEOUR MENEZ,
e ti Youenn Troal, d'al Lun 18 a viz Genver, eus 10 eur 30 betek 16 eur.

Roll an devezh :

- 10. 30 : emgav ; pedenn digerif.
- 10.45 : kentel gant Yann Talbot war ar c'hrennvrezhoneg : "Buhez Mab Den".
- 12. 15 : pedenn greisteiz.
- 12. 30 : merenn.
- 14. 30 : eil gentel ha kendiviz : ur sell war ar c'hatekiz hollvedel nevez.
- 16 : banne kafe. Pedenn echuif. Diwezh an emvod.

Pellgomzit da Youenn Troal a-benn ar sadorn 16 : Pg 98 78 01 30.

A greiz kalon evit Doue ha Breizh.

Yann Talbot.

Yann Talbot. 22 110. Presbital. Rostren.
96 29 01 55.

MOUEZH SANT ERWAN.

Niverenn 59.

Keneiled vat,

Emañ tamm-ha-tamm ar goañv yen o vont war e dalaroù... Pa vez dousik an amzer e weler endeo broñsigoù o tiwan...

BODADeg MIZ GENVER E PLOUNEOUR-MENEZ.

D'al Lun 18 a viz Genver ne oamp nemet pevar (just a-walc'h evit ober ur parti c'hartoù) e presbital Plouneour. Biskoazh ken nebeut. Gwir eo e oa e kreiz ar goañv, tud 'zo fallik o yec'hed, darn all en estrenvro, darn all sammet gant e labour. Ha Maoris Ar C'helle, hag a oa war an hent evit dont, freget e wetur gantañ, gweget, difofset gant ur c'harr all deuet da skeif ennañ p'edo o kuitaat kêr-Vrest. N'eo ket bet gloazet Maoris a-drugarez Doue, met e garr e ti ar "mezeg kirri" evit meur a zevezh...

Diouzh ar beure e kendalc'hjomp gant studi testenn krennvrezhoneg "Buhez Mab Den", sikouret gant notennoù Roparz Hemon en e embannadur eus an "Dublin Institute for advanced studies".

Daoust maz eo diaes a-walc'h intent ar pezh en deus bet c'hoant lavarout oberour dizanv an destenn e tesker gant ur seurt studi un tamm mat a draoù ken war ar yezh, hec'h istor, hec'h emdroadur, ken war spered kristen an dud eus ar XVIvet kantved. Prederiet e oant kalz muioc'h eget an darnvuiañ eus Kornogiz a-vremañ gant kudenn ster ar vuhez, hag ar Finveziou diwezhañ. Evito, ar gudenn bouezusañ a oa gouzout peseurt tonkadur a zo d'an Anaon goude troc'h ar marv.

Sellit ouzh ar werzenn 285 da skouer, kaer-meurbet :

Krennvrezhoneg :

Acc an gracc mañ hep huanat
Bezef autreet guelhet stat
Deomp-ny haznat hep laquat sy
Goude hon respet e-n bet man
Dre lign ma-z pynhomp entromp glan
Guytebunan da-n letany

Brezhoneg a-vremañ :

Hag ar c'hras-mañ hep huanad
Bezef aotreet, gwellat stad !,
Deomp-ni, anat hep lakaat si,
Goude hon respet er bed-mañ
Dre lign ma pignimp etrezomp, glan,
Gwitibunan, d'al letani.

War-lerc'h pedenn kreisteiz hag hor merenn er presbital e rejomp ur bourmenadennig tro-dro d'ar vourc'h sioul dindan bannoù gwan un heol a viz Genver... Adstagañ a rejomp neuze ur wech distroet gant "Buhez Mab Den", rak gant an niver bihan ma oamp, ne gaven ket frouezhus komz diwar-benn ar c'hatekiz hollvedel nevez. Evit ur wech all bennak e vo.

KELEIER :

STOURM AR BREZHONEG :

D'ar Sadorn 30 a viz Genver en em vodas meur a gantad a emsaverien e Sant Brieg da heul galvadenn S.A.B. evit goulenn ur wir chadenn skinwel brezhonek ha breizhek e Breizh. Mont a reas ar dibunerien da lakaat un tamm reuz e burevioù "France 3 Ouest" e Sant Brieg, peogwir ne vez ket klevet abadenn bemdeziek "An taol lagad" e Breizh uhel. E Kembre e oa bet graet dibunadegoù kamzel gant miliadoù ha miliadoù a dud, e-pad meur a vloav ezh, harz-debrif, nac'hañ paeañ an taosoù, bruderezh er vro a-bezh, galvadegoù a bep seurt, a-benn gounit ar "sianel pedwar" (ar chadenn 4) hollgembraek. Pell emañ Yann diouzh e gazeg e Breizh...

KUZUL AR BREZHONEG.

En em vodañ a reas izilli ar C'huzul e Pondi d'ar Sul 7 a viz C'hwevrer. Un daouzek bennak e oamp. Rannet eo bet gwelloc'h al labour er gevredigezh, hag adrenket un tamm evit ma vo efedusoc'h. Tri emvod a vo bep bloaz, Sul kentañ miz Here, C'hwevrer, ha Mezheven, hag ur rentañ-kont kaset bewech d'ar c'helaouennoù gallek ha brezhonek.

Kemer a raio perzh K.A.B. er stourmoù evit difennerzh ar yezh (Kengorioù lec'hel

evit ma vo sinet gant Bro-C'hall ar garta war ar "yezhoù bihan"), goulenn a reio bezañ lakaet e-barzh ar c'huzul aliañ war gelennerzh ar yezh er rektordi ; degemeret eo bet "Breuriez Sant Erwan - Beleien e Breizh" e K.A.B. Meur a strollad a vefe mat dezhe dont ivez. Ul labour efedus a vo tu dimp ober a-gevret ma c'hellomp urzhiat an traoù ha dibab an tuoù mat da vont war-du ar pal.

AR GARTA EUROPAT EVIT AR YEZHOU BIHAN.

Betek-hen n'he deus ket asantet ar stad c'hall sinañ, peogwir e oar mat ne vez ket doujet e Bro-C'hall ouzh ar "yezhoù rannvro", ha n'emañ ket e-sell ar stad d'hen ober, pa nac'h abaoe kantvedoù anzav ez eus anezho e gwirionez, dallet ma z eo gant hec'h ideologiezh digristen ha dizenel abaoe he c'hrouidigezh. Ne bleg ar stad c'hall nemet dirak an nerzh en diabarzh, hag ar brud fall a vez lakaet warni en diavaez, ha c'hoazh...

Evit rediañ ar stad c'hall da sinañ (en hevelep sac'h emañ gant Turkia, Bro-C'hres, anavezet-kaer evit o dizoujañs e keñver gwirioù Mab-Den, sellit ouzh kudennoù Armenia, Kurdistan, ha Makedonia...) e vo ret ren ur stourm kalet ha pennek. Komiteoù lec'hel a zo bet savet dija, ha sinadegoù o vont en dro evit pouezañ war Fafich Mitt hag e genseurted. Ar pep efedusañ moarvat a vefe lakaat ar stad c'hall da vezañ kondaonet dirak al lezioù barn etrevroadel evit he folitikerezh gwaskañ, met penaos kas ur c'hlemm da vezañ degemeret dirak lez-varn ar c'huzul europat pa nac'h Bro-C'hall anavezout beli an destenn etrevroadel-se ?

KENDALC'H KELTIEK BRO-SKOS : Dalc'het e vo en Inverness eus al Lun 26 a viz Gouhere betek ar Sadorn 31. Hervez klevet e vije ur c'harr-nij o vont div pe deir gwech ar sizhun eus an Oriant da Inverness. A-hend all e c'heller mont gant ar Brittany Ferries, ha gant an tren pe ar c'harr da c'houde. Evit en em enskrivañ, e c'heller goulenn titourañ digant Loik Chapel, 8 straed Berlioz, Plourin Montroulez. Danvez ar c'hendalc'h a vo : "Celtic youth participation". Setu perak e c'hortozer kalzig tud yaouank da zont.

BEAJ AR RE YAOUANK : Ur veaj a aozan evit ar grennarded hag ar c'hrennardezed eus 13 da 17 vloaz. Loc'hañ a raimp d'ar merc'her 21 a viz Gouhere da 23.30 eus Roskov evit distreiñ d'ar Yaou 5 a viz Eost.

Ne gemerin nemet 15 paotr ha plac'h, ar re a zo dedennet ra hastint eta da gas din o anv evit en em enskrivañ. Plijus e vo an abadenn, gant an danvez hoalus a zo bet dibabet. Ha ni a vo o turistañ un tamm tro-war-dro da Inverness a-raok ha goude ar C'hendalc'h. Ne ouzon ket c'hoazh pegement e kousto, moarvat war-dro 2400 lur gall gant an holl frejoù, met tu a vo da gaout distaolioù ha yalc'hadoù. Neuze e teuo da welloc'h marc'had d'ar gerent.

Dija e ouzer e teuo ivez yaouankizoù eus Kembre. Hag e-leizh a skosiz yaouank a vo. Evel-just evit kemer perzh ez eo ret bezañ brezhoneger. Lojet e vimp du-hont e teir c'haravanenn gant peadra enno da geginañ.

War an hent da vont ha da zont en dro e kouskimp un nozvezh war harzoù Bro-Skos. Spi am eus e kavo dimp ur repu bennak hor mignon skosat brezhoneger Georges Thompson, bet kannad e Westminster a-berzh ar S.N.P, hag a zo beleg katolik bremañ, o chom e Dumfries. Ober a ra kaozadennoù a-wechoù, a skriv din sekretour Skourr Alba ar c'hendalc'h, Murdo MacLeod, war wagennoù skingomz Bro-Skos.

BELBIEN E BREIZH. BODADEG MIZ C'HWEVRER.

Dalc'het e vo e presbital Kergrist-Moelou d'al lun 15 eus ar miz, adalek 10.30.

Roll an devezh : 10.30 : emgav ; pedenn digerifi.

10.45 : kentel diwezhañ war destenn "Bhhez Mab Den".

12.15 : pedenn kraisteiz.

22.30 : merenn ;

14.30 : gweladenn da skol divyezhek publik Rostren ha diviz gant ar skolidi hag ar vistri.

16. Banne kafe. Biwezh an emvod.

Pellgomzit da Job Lec'hvien a-benn ar Sadorn 23 m'emaoc'h e soñj kemer perzh er vodadeg. (pellgomz : 96 38 50 38.)

A greiz kalon d'an holl evit Doue hag ar bobl.

Yann Talbot.

(ezel eus KUZUL AR BREZHONEG.)

Yann Talbot, Presbital 22 110. ROSTREN.
96 29 01 55.

MOUEZH SANT ERWAN.

Niverenn 60.

Keneiled vat,

Bremañ e weler an nevez-amzer e gor, an devezhioù o hiraat, an aer glouar o c'hronnañ pep tra. Disofjet an erc'h bet kouezhet pemzektez ' zo...

A. EMVOD MIZ C'HWEVRER.

En em vodet hon eus bet d'al Lun 15 a viz C'hwevrer e presbital Kergrist-Moelou e ti Hob Lec'hvien. 6 e oamp en-dro d'an daol evit studiañ hag en em ziduiñ.

Diouzh ar beure e ris ur gentel ouzhpenn war " Buhez Mañ Den", testenn krennvrezhonek eus derou ar 16vet kantved. Dre ar studi-se e teskomp kalz war ar yezh hag ivez war mennozioù an dud eus an amzer-se.

Setu amañ un tañva eus an destenn-se, gant ar c'hempenn e brezhoneg a-vremañ :

- | | | |
|-------|--|--|
| 227 : | Goude da stat ha pompadou
Guyscamant ha pamantou
Ez duy an anquou ez louen
Pan troy enhaf da lazaff mic
Ma-z duy da neuz da bout euzic
Ha tristidic da bizhuyquen. | Goude da stad ha pompadou
Gwiskamant ha paramantou,
E teuy an Ankou ez louen
Pa droy ennaf d'az lazaff mik,
Ma teuy da neuz da vout euzhik
Ha tristidik da virviken. |
| 230 : | Goude se e-n douar oar da huen
E-z laquaher pan duy an termen
Mar cazr na quen oas a quenet
Eno coff ha quenyn ez breiny
Treyt ha penn hac ez dispenny
Lagat ha fry ha goaziet. | Goude-se en douar war da c'hwen
Ez laker pa deuy an termen ;
Mar kaer na ken oas a gened,
Eno korf ha kein e vreini
Troid ha penn, hag e tispenni
Lagad ha fri ha gwazhied. |
| 231 : | Dou pe try glyzen tremenet
Treyt ha penn ez vyzy tennet
Certes ne ves quet leset muy
Ha ne goffe styn a-n lynez
Euyt da sellet a-het dez
Pa-e-z lamher a-n bez pyou vezy. | Daou pe dri blizhenn tremenet
Troid ha penn e vezi tennet ;
Sertez ne ves ket lezet mui ;
Ha ne c'houfe stign az lignez,
Evit da sellet a-hed dez.
P'az lammer a'r bez, piv vezi. |

War-lerc'h hor merenn debret ganimp er presbital, hag ur valeadennig el liozsh, ec'h adkemerjomp ar studiadennoù gant un destenn e rannyezh Gwened, tennet eus "Yann Ar Baluc'henn", gant Jôb Jaffre. Kalz a blijadur hor boe o lenn istorioù farsus ar gwenedour-se. Ha war un dro e vez gwelet penaos lakaat un destenn e rannyezh Gwened er yezh peurunvan. Echuet e voe an emvod gant ar bedenn hag ar banne kafe da beder eur.

B. KELEIER.

1). Ar Garta evit ar yezhoù bihan.

Kenderc'hel a ra ar stourm evit ar yezhoù bihan, e ser lakaat ar gouarnamant gall da sinañ ar garta europat. Bez e oa 1500 a dud e Kemper d'ar Sadorn 6 a viz Meurzh evit goulenn ma vo roet ur statud ofisiel d'ar brezhoneg e Breizh, ha d'ar "yezhoù rannvro" all : Euskareg, Okitaneg, Korsikeg, Katalaneg, Flandrezeg, Elzaseg.

E Kembre an iliz katolik a gemer perzh er stourm evit gwirioù sevenadurel ar Gembreiz ; ha n'eus nemet war dro 10% a gatoliked er vro. E Breizh ne vez ket klevet kalz mouezh hor renerien relijiel war ar poent-se, daoust da gomzoù sklaer ar Pap war gwirioù ar broioù bihan suj.

2. An Iliz e Breizh. En eskopti Sant Brieg ha Landreger emeur o lakaat war droad " Kuzul pastorel an eskopti," ennaf laiked dileuriet pe anvet. Ur skoazell e vo evit buhezekaat ar vuhez kristen hag ar parrezioù. Met ur gudenn a sav ivez : en doare ma vez anvet an dud, ne vo plas ebet koulz lavarout evit ar bihanniveron (sevenadurel, yezhel, pe gevredigezhel). Da lavaret eo e vo ar galloud etre daouarn ar

renkadoù etre, anezho bourc'hizien etre, ar muiañ gallekaet ha stag dre o mennoziou, o interestou, o liammoù, ouzh ar galloud gall krsiz hag ar reizhad kapitalour.

Un dañjer a zo evel-se e vefe muñoc'h-mui an Iliz ur strollad a dud etre, gant mennoziou strizh o renkad orin. N'eo ket ret bezañ marksour evit gwelout se. Ur fed anat eo.

3. AR C'HENDALC'H KELTIK. Dalc'het e vo hevlene en Inverness, e Norz Bro-Skos, war ribl al Loc'h Ness, eus ar 26 a viz Gouhere betek an 31, war an danvez-mañ : "Celtic youth participation". An dud dedennet a zo pedet da skrivañ d'ar sekretour, Loik Chapel, 8 straed Berlioz, Flourin-Montroulez.

Ur veaj evit ar re yaouank a vo aozet ganin, evit brezhonegerien, paotred ha merc'hed, eus 13 da 17 vloaz. Kuitaat a raimp Roskov d'an 21.7 evit distreiñ d'ar 5 a viz Eost. Dont a raio ivez bagadoù tud yaouank all eus Kembre, Kerne-veur, Iwerzhon. Hag ur skipailh vat a skosiz, emichañs...

Da vloaz, e 94, e vo dalc'het ar c'hendalc'h e Kerne-veur war an danvez-mañ : "Gwareg Atlantel (Arc atlantique) ha broioù keltiek".

E 95, e-pad an hañv, e vo ar c'hendalc'h e Breizh, marteze en Oriant.

En Inverness, en hañv-mañ, e vo lidet ur servij relijiel ekumenek etre Katoliked, anglikaned ha protestanted. En Enez Vanav (Pask 92) ne oa ket bet graet.

4. AR PAB. Mont a raio ar Pab Yann-Baol II d'ober ur weladenn war ar prim en Albania d'ar 25 a viz Ebrel. Ar stad albaniat, da vare Enver Hodja, a felle dezhi diazezañ ar vro dizoue a-grenn kentañ, en ur argas kuit pep relijion. Koulskoude o deus dreistpadet ar relijionoù (Islam ha kristeniezh) daoust d'an heskinerezh.

Bremañ e vezer dieub adarre da ren ur vuhez relijiel. N'eus nemet 10% a gatoliked, e-kichen 70% a vuzulmaned, ha 20% a ortodoksed. Ar veleien hag an eskibien toullbac'het a zo bet nevez lezeñ da vont. Ar Pap a gensakro 4 eskob, unan evit Dorres-Tirana, unan evit Scutari gant unan all da skoazeller, hag unan evit Albaniz Montenegro ha Serbia.

5. EMBANNADURIOU. Imbourc'h : Hoc'h aliañ a ran da lenn e niverenn 274 (Here 92) ar pennad troet diwar ar galleg gant Paol Kalvez : "An Iliz hag ar sevenadurioù" : anezhañ ur brezhegenn graet gant ar c'hardinal Paol Loupard. Peadra da vagañ ho spered a galemanadurezh kristen reizh, ha da wellaat ho prezhoneg uhel.

Minic'hi Levenez : En niverenn 18 e lenner ur pennad kentelius ha plijus war enez Aran en Iwerzhon (diviz etre an Tad O Dulaine ha Job an Irien). Fulorin a ra Job a-hend-all enep darn eus ar panelloù-hent divyezhek, a zo troet fall d'e soñj. Gwir eo ez eus tu da wellaat an traoù. Met en doare m'emañ bremañ al live brezhoneg komzet gant an darnvuiañ eus an dud ez eo gwelloc'h skrivañ e galleg hepken evit bezañ sur da vezañ komprenet gant an holl. Da skouer evit "aérodrome", an doare surañ da vezañ komprenet a zo skrivañ "aérodrome". Ha mat pell 'zo.

Embannadurioù Sant Erwan : Emaon o vont da embann ul levrig, e galleg, 36 pajennad ennañ, skrivet gant hor c'henvreur Erwan Ar Menga (an A. M. Auffret) : "Précis d'Histoire de Bretagne", "Istor Breizh berr-ha-berr". Lakaet em eus ouzhpenn 3 fajennad aozet ganin war istor Breizh kempred abaoe 1914.

6. GOUEL BROADEL AR BREZHONEG. Lidet e vo e SPEIED (SPEZED) d'an 29 ha 30 a viz Mae (Pantekost).

B O D A D E G M I Z M E U R Z H .

Dalc'het e vo emvod ar miz-mañ d'al LUN 22 A VIZ MEURZH, e presbital PRAT (Bro-Dreger) eus 10.30 da 16 eur.

Roll an devezh :

- 10.30 : emgav ; pedenn digerif.
- 10.45 : kentel gant Yann : "Mister an Iliz" hervez ar C'hatekiz hollvedel nevez.
- 12.15 : pedenn kreisteiz.
- 12.30 : pred.
- 14. : baleadennig.
- 14.30 : kentel : un destenn e rannyezh Gwened da studiañ.
- 16 : diwezh an emvod.

Pellgomzit da Anton Ar Barzh (96 47 00 93) a-benn ar Sadorn 20.3 m'emaoc'h e-sell da gemer perzh en emvod.

A greiz kalon ganeoc'h-holl evit Doue ha Breizh.

Yann Talbot.

Keneiled vat,

Setu deuet ahanoù-skol Pask, pe reoù an nevez-amzer, ganimp-ni mistri-skol, hag un tamm amzer diub a'zo ganinavit kas deoc'h ar c'helc'hlizher miziek. Met, evel kustum, ez eus dale, ha mall, ganin, peogwir emañ hon emvod kentañ B. e B. da vezañ a-benn digwener 30.4. e presbital Boulvrigag.

A. EMVOD PRAT.

Un dek bennaket e c'amp en-dro d'an daol e presbital bras Prat, ti Anton Ar Barzh, d'al Lun 22 a viz meurzh, evit studiañ, prederiañ ha pedañ.

Diouzh ar beure e voe studiet ur pennad eus levr Kristof Jezegou "Kelennadurez diwar-benn ar sakramanchou", embannet e 1935 gant embannadurioù an Arvor, e Gwangamp. Al lodenn ziwedhañ "sakramant au Urz", eo a ris un tamm displegadenn diwar he fenn, evit diskouez pehini e oa doare-soñjal ar veleien e Breizh diwar-benn ar velegiezh ha sakramant au urzh hag aozadur an Iliz war-dro ar bloavezhioù 30.

Kristof Jezegou (1864-1953) a oa ur beleg eus Bro-Leon, oberour brudet "E korn an oaled" (1923). Ur skrivagner foncus ha donezonet (sellit ouzh e vuhezskrid e Geriadur ar skrivagnerien gant L. Raoul, p. 159-160) eo bet skrivet gantañ oberennoù a-bouez, faltazi, devosiñ, relijion, istor, pezhioù-c'horari. E-touez e oberennoù pouezusañ e c'heller menegiñ, er-maez eus "E korn an oaled", hollvrudet evel-just, "Levr ar prijoù" (1936), "Prezegenoù diwar-benn ar binijenn hag ar briedelez" (1936). Embann a reas kalz pennadoù ivez e "Feiz ha Breiz", "Ar Vrap", ha "Le courrier du Finistère". Talvezout a ra ar boan lenn e draoù, ken yaoc'h eo ar yezh en e skridoù, ha bev e vennoziou.

Adlakaat a ran amañ ur pennadig eus dibenn "deverioù ar gristenien e keñver ar veleien". Petra a soñjit eus e zoare da welout an traoù ?

Pempet dever : ar gristenien a dlefe selaou ar veleien ha senti outo, evit holl traoù ar bed all.

Pa gozeo ar beleg d'eoc'h eus traoù ar baradoz hag eus an hent a ranker da gemer evit mont d'i, ne c'hell ket en em fazia. Rag Jezuz, her gwelet hon deus, dija, kerkouls, Jezuz a lavaras d'ezo : « *Ite, docete omnes gentes.... ecce vobiscum sum usque ad consummationem seculi* : It, kelennit an holl, me vo ganeoc'h betek fin ar bed ». Da lavaret eo, me viro ne lavarfec'h netra nemet *quæcumque mandavi vobis* : netra nemet ar pes am eus gourc'hemennet d'eoc'h.

Abalamour da se, selaou mat ha senti.

Lod tud 'zo hag a lavar : senti ? Me zentfe awalc'h. Met abalamour da betra ar veleien ne chenchont ket ho lezennou. Ar bed n'ema mui evel gwechall, e tlefe ar veleien souplaat ho lezennou. Neuze e ve eas senti outo.

Siouas ! Ar bed a c'hell ober ar ruilhou a garo. Evitar e vo gwir atao, ar ger-ma eus eur skrivagner kos : « *Trahit sua quemque voluptas* : an den a yel da heul e blijadur. »

War-lerc'h pedenn kreisteiz ha merenn (deuet e oa beleien ouzhpenn, o c'hallegiñ siwazh ar bras anezho, da gemer o fred ganimp) e rejomp un tamm tro betek chapel Sant Yann Trevoazan, hag a zo bet adsavet gant meur a skipailh tud a volonteiz vat, "Breiz Santel", eo e zouez, adtoet penn-da-benn, ha savet enni a-nevez gwerenoù liv eus ar c'haerañ. Ur gwir teñzor relijiel eo bremañ, sur-mat e tle bezañ lorc'h enno marc'hegerien an Templ, ha marc'hegerien Sant Yann Jeruzalem gant ar pezh a zo bet graet eus o feniti, hag a oa dismantret penn-da-benn pemzek vloaz 'zo. Skaouted eus Polonia o deus sikouret ivez adsevel.

War-lerc'h a r-bourmenadenn-se e tistrojomp d'ar prezbital evit studiañ c'hoazh un tamm er wech-mañ ar pennadoù diwar-benn ar Iliz hag ar veleien e "Levr Katekis eskopti Sant Brieg ha Landreger", embannet e 1940.

Piv en deus soñj c'hoazh eus e gatekiz ?

- "Petra eo an Iliz ?"
- Ar bobl kristen, unanet dre ar memes Feiz hag ar memes sakramantoù, ha gouarnet gant ar Lab hag an eskibien."
- Perak eo anvet an Iliz " Santel" ?
- Abalamour ma eo santel he fenn, Jezuz Krist, santel he lezenn, santel he sakramantoù ha n'eus gwir santelezh nemet enni".

B. KELEIER.

1. Bek vloaz Radio Kreiz Breizh. Ur bern tud a zo bet e Sant Nigouden evit dekvet deiz-ha-bloaz R.K.B. : ur veilhaded e Ti Pikouz d'ar Gwener da noz, gant kanerien ha konterien, ur goan vras ("ragout prun") hag ur fest-noz ramzel (700 a dud a-hervez) d'ar sadorn da noz, ha d'ar Sul goude merenn ur ganaded ha sonaded dindan an deltenn vras, gant kalzig arzourien liesseurt hag ur fest-deiz war blasenn ar vourc'h. En deiz-se e vo lidet zoken e Sant Nigouden div oferenn e brezhoneg : unan diouzh ar mintin da unnek eur gant Job Lec'hvien hag A. Piriou, dirak ur c'hant bennak a dud, unan all ganin, da 5.30, gant un ugent bennak a dud, peogwir e oa emvod an tiegezhioù.

2. Istor Breizh Berr-ha-berr. Embannet ez eus bet ganin, nevez 'zo, ul levrig a 32 pajennad bihan, " Précis d'histoire de Bretagne", e galleg, savet gant Erwan Ar Menga, gant ur goudeskrid ganin. Koustañ a ra 15 lur pep skouerenn. (10 lur pa vez prenet 10). Mat eo evit ar skolioù hag an deraouidi.

3. GOUEL BROADEL AR BREZHONEG. Lidet e vo e Speied (Spezed) evel warlene, d'ar sadorn 29 ha Sul 30 a viz Mae (Pantekost). Evel warlene e vo un oferenn e chapel I.V. Ar C'hrann, da 14 eur. Spi am eus e teuo un toulladig heleien da genoferenniñ ganin. Warlene e oa bet un daou c'hant bennak a dud en oferenn-se, lidet penn-da-benn e yezh ar vro, yezh an dud.

4. Beaj da Vro-Skos : Mont a rin gant 15 krennard ha krennardez da Vro-Skos evit ar C'hendlaoc'h keltiek en Inverness, eus ar merc'her 21/7 d'ar yaou 5/8. Chom a ra c'hoazh pevar flas. Ma anavezit krennard(ez)ed dedennet, lavarit dezho hastañ en em enskrivañ.

Evit sikour paeañ ar veaj-se em eus ezhomm un tamm mat a arc'hant. Ar familhoù a baso, met ne vo ket a-walc'h. Mar gellet ma sikour, e vo degemeret ho profoù a greiz kalon. Ur rentañ-kont eus ar veaj a vo kaset d'an holl brofourien. Bennozh Doue dezho a-ziarok.

5. Bro-Buskadi.

Le terrorisme de l'ETA, et autres, existe hélas, tout comme les abus de la répression. Mais la réalité basque a aussi bien d'autres visages... celui-ci par exemple : le diocèse de Bayonne, qui comprend Pays Basque et Béarn, bouclé tout juste son synode. Parmi les revendications des catholiques basques, est apparue en évidence une très forte demande de respect de leur spécificité : liturgie en basque, catéchisme en basque, publications en basque, etc. Les Béarnais, pourtant attachés à leur langue, d'origine gasconne, n'ont pas exprimé les mêmes exigences et en restent tout pantois, voire indignés, quand ils entendent, dans le cadre de rencontres diocésaines, prier en basque et... en français, oubliant qu'ils n'ont pas émis le désir de prier en béarnais.

Lenñ a ran kement-mañ e kelaouenn an ACAT (Action des chrétiens pour l'abolition de la torture), miz Ebrel 93. Ul lizher eo, skrivet gant ul lennerez, euskarat moarvat, Daoust ha ne soñj ket deoc'h e vez graet ouzhimp an hevelep dismegañs e Breizh, dimp-ni brezhonegerien, pa vez ret dimp gallegiñ bewech m'en em gav ur galleger e mesk dek brezhoneger ?

EMVOD MIZ EBREL.

Dalc'het e vo e presbital BOUVRIAG, (Pg, 96 43 40 61) e ti Marsel Derrien, d'ar GWENER 30 A VIZ EBREL. Hastit buan eta pellgomz dezhañ ma vennit kemer perzh.

10 30 : epgav, pedenn digeriñ.

10.45 : kentel gant Yann : "An Iliz" hervez katakiz nevez an iliz katolik.

12.15 : pedenn gwaisteiz ; merenn.

13. baleadennig. 14. 30 : kentel ; diwar-benn " Religion et cultures en Bretagne", levr nevez deuet er-maez gant Michel Lagrée.

16 : diwezh an emvod.

A greiz kalon ganeoc'h evit Doue ha Breizh. Yann Talbot.

Keneiled vat,

Moarvat emañ deuet get kalz a veleion mare ar Pask kentañ er parrezioù, ha kalz a labour genomp. Neozh, arabat dimp lezel hon emvodoù da gouezhañ hag kon obererezhioù da zizeriañ. Kendalc'homp enta gant nerzh-kalon.

A. Emvod Boulvriag.

D'ar Gwener 30 a viz Ebrel eo e voe dalc'het hon emvod diwezhañ, e presbital bras Boulvriag, e ti Marsel Derrien. Un dek bennak e oamp, beleien ha laiked. Diouzh ar beure e voe graet ganin un displegadenn diwar-benn an Iliz hervez ar c'hatekiz hollvedel nevez. Goude pedenn kreisteiz hag hor merenn e rajomp ur bourmenadenn tro-dro da Voulvriag, o klask gweladennif meur a chapel war ar maez, an darnvuiañ anezho prenet an nor, siwazh, warno, ha ne c'helljomp ket gwelout an diabarzh. Tro peder eur hanter e voe echu hon troiad, ha divodet an dud goude bezañ kanet "Magnificat ar Sulon" (an Ao. Loringuer, Doue d'e bardono !).

B. KELEIER :1. Marv Alan Al Louarn :

Aet eo da Anaon d'ar Sul 16 a viz Mae hor c'heneil feal Alan Al Louarn, emsaver kalonek, brezhoneger, tad a familh, (desavet gantaf hag e wreg 9 bugel), ha kristen a-zoare. Kemeret en deus perzh en holl stourmoù evit ar vro abaoe ar brezel diwezhañ, gouzafvet en deus bet kalz, bevet alies en dienez, er baourentez, met levez en deus bet ivez o welout traoù o tiwan a-nevez.

Er strolladoù kristen en deus bet roet e sikour, e galonegezh, hag e skiant-prenet. Aberzhet en doa e vuhez a-bezh d'e vro ha d'e feiz.

Pemzek vloaz ha tri-ugent e oa, ha klafiv abaoe meur a vloavezh ; gant izele-gezh e veve faezhidigezh e gorf hag e spered, skoazellet gant karantez nerzhus e bried, Nouela An Olier.

Lidet eo bet e oferenn ganiv en iliz Sant Stefan e Roazhon, d'ar Merr'her 19 a viz Mae da 11 eur, e brezhoneg hag e latin, dirak un engroez a dud, emsaverien ha mignoned. Pevar beleg o deus kenoferennet, me evel pennoferenner, an tad J. Chardronnet DMI, an Ao. Letertre beleg eus eskopti Roazhon, bet rener "Bretagne-Dimanche, ha mignon da Alan a bell' zo, ha person ar barrez. War-lerc'h kanadeg ar Vro Gozh war blasenn an iliz eo bet kaset korf hor breur Alan da vezaf douaret e bered Gwaien, m'emañ o renoz ivez Anaon e diegezh. Lidet eo bet e obidoù deiz gouel Sant Erwan. Peseurt arouez speredel aze : Alvokad ar re baour, Sant Erwan a zegemro Alan e baradoz ar sent. Ra gavo Alan e baradoz an Ao. Doue an digoll eus e holl strivoù ha poanioù er bed-mañ.

2. Gouel Ar Brezhoneg.

Da geñver Gouel broadel ar brezhoneg, e Speied, (Spezed) e vo lidet un oferenn e brezhoneg penn-da-benn, e chapel Itron Varia ar C'hrann, nepell diouzh ar vourc'h, d'ar SUL 30 A VIZ MAE, da 2 eur goude kreisteiz. Sul ar Pantekost e vo, evel boaz. Aozet e vo bet al lennadenoù hag ar c'han gant laiked kristen eus ar barrez evel warlene. Pedif a ran ar veleien a vefe dieub da zont da genoferennif ganin. Peadra a vo aze da ziskouez d'ar bobl kristen ez eus c'hoazh e Breizh beleien ha n'o deus ket troet kein d'o fobl ha d'o yezh, hag a chom feal da gelennadurezh an Iliz hag ar Pab gar gwirioù ar broioù bihan hag ar sevenadurioù en arvar.

3. Kristenien Breizh.

Roet e vo buhez adarre d'ar strollad Kristenien Breizh, a oa kousket abaoe un tamm amzer. Un emvod a vo dalc'het e Plouneour Menez, e ti Youenn Troal, d'al lun 7 a viz Mezheven. Digor e vo d'an holl laiked ha beleien a gemer preder gant o buhez kristen e brezhoneg.

4. Beal da Vro-Skos.

Da geñver ar c'hendalc'h keltiek en Inverness, Bro-Skos, e vo aozet ur veaj evit ar vrezhonegerien yaouank eus ar merc'her 21 a viz Gouhere betek ar yaou 4 a viz Eost. Gweladennif a raimp ar vro tro-dro da Inverness, ha kejañ gant kelted yaouank all, Skosiz, Kembreiz, Iwerzhoniz. Priz ar veaj : 2400 lur. Tu a zo da gaout yalc'hadoù : 4 a 500 lur kinniget gant Kuzul Ar brezhoneg, 4 all kinniget gant

Breuriezh Sant Erwan. Skrivañ da Yann Talbot, ar buanañ 'r gwellañ. Chom a ra c'hoazh pevar flas da gemer.

5. Emglev an tiegezhioù.

Da gefiver 10vet deiz-ha-bloaz Radio Kreiz-Breizh, e Sant Nigouden, d'ar 25 a viz Ebrel (Sant Nigouden a zo ur barrez vihan, etre Rostren ha Kallag), e oa bet bodet an tiegezhioù kristen. Ne oamp ket kalz, un dek bennak a dud hepken, met leun e oa ar vourc'h gant mignoned RKB, ha plijadur hon eus bet o selaou kanerien hag o kejañ gant mignoned. Lavaret em eus d'an dud a oa deuet en em soñjal evit sevel ur gevredigezh hervez lezenn, evit stummañ ar re yaouank ha derc'hel kampoù. Un afer a arc'hant, a yalc'hadoù, a asurafisoù eo. Ne c'hellomp ket kenderc'hel da vezañ e-maez al lezenn. Ma vennomp derc'hel ha kas an traoù war-raok e rankomp lakaat ur gevredigezh wirion war-sav, gant ur c'hadoriad, sekretour, ha teñzorer.

6. Damp Katekiz :

Dalc'het e vo eus ar sul 22 a viz Eost betek ar sadorn 28. Degemeret e vo bugale, brezhonegerien, etre 7 ha 13 vloaz, badezet pe get. E dibenn ar c'hamp e vo lidet un oferenn evit ar vugale hag ar gerent, ha meur a vugel o c'hello ober o " diskleriadur a feiz" ("Pask kentañ" gwezhall) pe gomuniañ evit ar wezh kentañ. Hastit buan eta da enskrivañ ho pugale.

7. Embannadurioù:

" Précis d'Histoire de Bretagne" (Istor Breizh berr-ha-berr), gant Erwan Ar Menga, 32 pajennad bihan, e galleg, mat evit ar skolidi hag an deraouidi. Koustañ a ra 15 lur bep skouerenn, 10 lur pa vez prenet 10. Skrivañ din evit kaout al levrig.

8. Ordinal an Oferenn .

Aozañ a ran un " Ordinal an oferenn" nevez, evit servijañ d'ar veleien ha d'al laiked, rak hini Maodez Glandour, embannet gant Studi hag Ober, n'eo ket klok, ha diamzeret eo, ha diviet ouzhpenn-se. Lakaet e vo en embannadur nevez an holl brefasoù a zo ezhom, hag ar pedennoù eukaristiel nevez a vez implijet e degouezhioù ' zo (bodadegoù bras, evit an oferenoù gant bugale, evit lid ar binijenn). Ma c'hellfer ober un embannadur unvan da c'houde evit an tri eskopti brezhoneger e vefe ur c'hras kaer evidomp-holl.

9. Imbourc'h. Gant Imbourc'h eo bet embannet eil levrenn Marsel Klerg, "Lennadennoù kristen", diwar an tadoù latin ha gresian. Ur misi eo evidomp kaout seurt testennoù troet en ur yezh yac'h ha dibistig.

K. B O D A D E G M I Z M A E .

Dalc'het e vo hon emvod ,kentañ e presbital Kistinid, e ti Marsel Blanchard, d'al LUN 24 a viz Mae.

Pellgomzit raktal da Varsel Blanchard ma vennit kemer perzh ennañ. (pg : 97 39 71 15).

Roll an devezh :

- 10 30 : emgav, pedenn digerif.
- 10.45 : kentel ganin : an iliz hervez ar c'hatekiz hollvedel nevez (lodenn ziwezhañ)
- 12.15 : pedenn kreisteiz, ha merenn.
- 14.30 : kentel ganin war ar brezhoneg.
- 16 : banne kafe, pedennig, ha diwezh an emvod.

A greiz kalon ganeoc'h-holl e karantez Doue ha Breizh.

Yann Talbot.

BELEIEN E BREIZH.

Yann Talbot, presbital, 22 110. ROSTREN.

MOUEZH SANT ERWAN.

96 29 01 55.

niverenn 63.

Keneiled vat,

N'em eus ket kaset un niverenn eus M.S.E deoc'h e miz Mezheven, ha n'eus bet emvod ebet kennebeut. Dalc'het on bet gant armodennoù ar vachelouriezh. Adkregiñ a ran gant va labour kelaouenner en niverenn-mañ, ar 63vet, eus Mouezh Sant Erwan.

I. Emvod Kistinid. Ne oamp ket kalz en emvod e Kistinid d'al lun 24 a viz Mae, 6 hepken a gredan. Pell eo Kistinid marteze evit meur a hini. Labourer hon eus evelato evel kustum : diouzh ar mintin ur gentel ganin war verkoù an iliz hollvedel hervez ar c'hatekiz katolik nevez embannet gant Roma. War-lerc'h ar bedenn hag ar pred er presbital e rejomp ur bourmenadenn gaer en endervezh, bleniet gant an Ao. M. Blanchard, betek chapel Lokmaria, dalc'het gwezhall gant an Drindourion, ha betek chapel Sant Adrian, war zouar parrez Berteje, sevet er XVIvet kantved (gwezhall marteze Sant Derrian) hag a oa ivez ur chapel dalc'het gant ospitalourien Sant Yann Jeruzalem. E stad fall emañ-hi. Poent ober labourioù bras en diabarzh. Lod a lavar e oa dediet da Sant Gweltaz, da gentañ, pe Sant Drian ? Delwennoù koad kaer-meurbet a zo bet berniet er sekretari ; met o vreinañ tamm-ha-tamm emaint. Mirour ar chapel, hag a zo labourat en abatti Kergonan evel fac totum, en deus spi e vo graet a-benn ar fin un dra bennak evit e chapel. Plijadur hon eus bet o komz brezhoneg Gwened reizh gentañ. Tro-war-dro avat eo bet prenet hag adrenket an holl diez gant saozon. Ne vez gwelet nemet an anv " cottage " e pep lec'h. Aet kuit ar Vretoned. An drevadennerien saoz a gemero lec'h ar re c'hall. Petra a c'hounezimp muioc'h ?

War-lerc'h Sant Adrian, e weladennjomp ivez, war ur grec'hienn, chapelig Sant Izidor, gwezhall chapel Sant Yann Vadezour, hag a oa ivez d'an Demplourion.

Distroet d'ar presbital e voe graet ganin ur gentel yezh war brezhoneg bro-Wened. War-lerc'h ar banne kafe e kimiadjomp, da c'hortoz an emvod kentañ.

II. KELEIER.

1. Beaj da Vro-Skos : Mont a ran, d'ar merc'her 21/7 gant 15 a grennard(ez)ed, 13-17 vloaz, da Vro-Skos evit ar c'hendalc'h keltiek en Inverness, war an danvez-mañ : perzh ar yaouankizoù er broioù keltiek". Kejañ a raimp gant Kembreiz, Skosiz, Iwerzhonis yaouank. Ur servij relijiel ekumenek a vo lidet e-pad ar sizhunvezh. Distreiñ a raimp d'ar yaou 5/8.

2. KAMP KATEKIZ : Dalc'het e vo er skol gristen, skol kentañ derez an Itron Varia, rue de Metz, e Rostren, eus ar sul 22 d'ar sadorn 28 a viz Eost. Digor e vo d'an holl vugale bfezhonegerien etre 7 ha 13 vloaz. E dibenn ar c'hamp, en oferenn a vo lidet e chapel Kampostal, e c'hello ar vugale ober o "diskleriadur a Feiz" (Pask kentañ gwechall) pe gomuniañ evit ar wech kentañ. D'ar Sadorn 28/8 da 17 eur e vo.

Un oferenn all a vo lidet evit kregiñ gant ar c'hamp d'ar Sul 22 da 17 eur e chapel Kampostal ivez. Peditañ a ran ar veleien a vo dieub da zont da genoferenniñ ganin.

TAOLIT EVEZH : d'ar merc'her 25 a viz Eost e pedan da greisteiz al laiked hag ar veleien da zont d'ar skol d'hon gweladenniñ ha da zebriñ ganimp (30 lur ar pred). Coude ar pred e vo graet un emvod reoliek eus "Beleien e Breizh." Pellgomzit din en a-raok ma vennit kemer perzh er pred (Pg 96 29 01 55 er presbital, ha 96 29 01 54 er skol.)

3. Gouel ar Brezhoneg.

Miliadoù a emsaverien en em vodas e Speied (Spezed), Sul ar Pantekost d'an 30 a viz Mae. chapel gaer Itron Varia ar C'hrañn eo e voe lidet an oferenn da 14 eur. Nebeutoc'h a dud a oa, a gredan, er bloaz-mañ eget warlene, ha falloc'h evit ar c'han rak ne oa follenn ebet gant an dud evit kanañ. Da vloaz e vo graet gwelloc'h. Ret eo lavarout ivez ne oa ket kemennet e koulz an oferenn-se gant ar mediaoù kelaouiñ, daoust din bezañ kaset en a-raok ar c'hemenn d'ar c'helaouennoù, kreizennoù skingomz, ha FR3 Breizh. Santout a raer ur seurt enebiezh soutil ouzh an traoù kristen e-barzh un darn mat eus ar strolladoù breizhek. Coude an oferenn e voe

Gwerzhed ganimp levrioù, niverennoù, ha traoù bruderezh ; daou stand a oa ganimp, unan ganin, unan gant Tepot. Gwerzhed hon eus muioù e get warlene, dreist-holl ar Bibl. Met ar pezh a gont ar muiañ eo bezañ war an dachenn evel kristenien.

4. Stourm ar Brehoneg. Etre daou h'hant ha tri c'hant emsaver en em vodas en ur park er Roc'h Tredudon (Plouneour Menez) d'ar 14 a viz Gouhere, evit goulenn ur chadenn skinwel e brezhoneg. Pell emañ Yann diouzh e gazeg, pa weler penaos eo bet kilet, gwanaet, berraet ha disteraet an abadennoù brezhonek war FR3 Breizh abaoe warlene, ha rasklet hor yezh en hañv evel boaz. An hañvourien : setu ar vistri hag an idolennoù nevez.

5. DIHUN BREIZH. Kevredet eo bet en un aozadur kumun an tiegezhioù a stourm evit kreskiñ ar c'helenn brezhoneg er skolioù kristen. "Dihun Breizh" eo anv ar gengevredigezh, gant ur strollad e Penn-ar-Bed, hag unan all er Morbihan. Kinnig a ran sevel unan ivez en Aodoù an Arvor. Ar gerent dedennet gant ar stourm-se a c'hell mont e darnpred ganin. Daou dra a c'heller ober : kelenn un tamm brezhoneg bep sizhun en holl skolioù, ha neuze sevel klasoù divyezhek e skolioù 'zo.
Prezidant Dihun Breizh eo Jean-Michel Branellec, Keraniou; 29 233 KLEDER.

6. DIWAN : Evel ma ouzer emañ Diwan en ur saviad diaes evit pezh a sell ouzh an arc'hant : 6 milion a lurioù nevez da baeañ ! Dija ez eus bet dastumet 1,5 milion. Ma fell deoc'h sikour Diwan, kasit ho prof d'ar chomlec'h nevez : DIWAN, ZA Sant Ernel, BP 156. 29 411 Landerne.

7. Embannadurioù : Nevez deuet er-maez :
- "Précis d'Histoire de Bretagne, Istor Breizh berr-ha-berr, 32 pajennad, gant Erwan Ar Menga ; 15 lur ar skouerenn. (10 lur nemetken dre zek). Skrivit din evit goulenn al levrig. Mat eo evit an deraouidi war zanvez Breizh.
- "Koad Maloen : abati sistersiat", testenn an tad Dom Aleksï Presse, abad Tamié, lakaet e brezhoneg gant Job Lec'hvien. 32 pajennad, hag ar skrid orin e galleg ouzhpenn. 30 lur ar skouerenn. Goulennit digant Job Lec'hvien, embannadurioù an Tour tan, 22 110, Kergrist Moelou.

- Imbourc'h : trede levrenn "Gourbannoù Sant Eosten", troet gant Jil Ewan.
: Deizlevr Youenn Olier : "ur bloavezh e Lannuon" Plijadur am eus bet o lenn an eñvorennoù-se, pa oan-me, ur bugelig 9 vloaz, o chom e Lannuon ivez d'ar c'houlz-se. Sofij am eus mat eus al lec'hioù hag an dud deskrivet gant Youenn.
- Hor Yezh : "Dictionnaire élémentaire de la langue bretonne" : 5000 ger brezhonek ha 6000 ger gallek troet, gant an distagadur, hag an troioù-lavar. Mat-tre evit ar skolioù, skolidi ha kelennerien. 288 pajennad. Priz : 56 lur. Skrivañ da Hor Yezh, 1 plussenn Charles Peguy, 29 260. Lesneven.

8. Kristenien Breizh. Adsavet eo bet strollad "Kristenion Breizh", evit ren ur vuhez speredel e brezhoneg. War-lerc'h ar vodadeg adsevel dalc'het e Plouneour d'al Lun 7 a viz Mezheven, e vo dalc'het un emvod all e Plouneour c'hoazh, er presbital, e ti Youenn Troal, d'ar Sul ha d'al lun 18-19 a viz Gouhere. D'ar sul e vo lidet pardon Santez Anna e brezhoneg penn-da-benn en abatti ar Releg. Emvod miz Eost a vo e ti ar seurezed eostenad, e Kêrpad, Gwengamp, d'an 21 ha 22 a viz Eost. D'an 21, da 7 eur noz e vo lidet an oferenn e brezhoneg en iliz Itron Varia Wir Sikour.
Merkomp eo bet anvet Youenn Troal da berson e Trogad, ur barrez vihan eus e vro Vigouden genidik.

Lann Anna e Kistinid : Gant an enahou skol eo'h adkrogo al labour evit kempenn Lann Anna e Kistinid, en doare ma vo ur greizenn speredel brezhoneger digor d'an holl a zo o klask ar wirionez. Pedomp Doue da skuilh e vennozh war an oberenn-se ivez.

8. Levenezioù Gant levenez e kemennomp eo bet eureudet Soazig Ar Saoz, merc'h da Ber Ar Saoz, d'ar sadorn 10/7 e Lok Envel. Hi a zo kelennerez war ar sazneg e skol-veur Lausanne, ha Neil, he fried, a zo kelenner ivez, e skol-veur Durham (Bro-Saoz).

- D'ar sadorn 28 a viz Eost, e-pad an oferenn dibenn kamp e vo lidet eured Yann Erwan Haspot, skolaer Diwan e Sant Nazer, unan eus hor c'hatekizerien, gant Geneviève Baudry, emsaverz ivez, o daou o chom er Poullig gwenn (44).

- E miz Gwengolo e vo lidet e Kêr Wened, eured Muriel Bittan-Morvan, katekizerz er c'hamp, gant Gael, he danvez pried.

Doue da skuilho e c'hrasoù fonnus war an dud nevez hag an danvez priedoù.

EMVOD BELEIEN BREIZH : MIZ EOST. BELEIEN HA LAIKED.

Skol kentañ derez an Itron Varia, rue de Metz, merc'her 25 a viz Eost, da 12 eur. Skrivañ din pe bellgomz a-benn ar 24/8 ma vennit kemer perzh e pred kreisteiz. Emvod a vo goude merenn

Keneiled vat,

Er mare-mañ eo keleier eus an hañv am eus da reiñ deoc'h.

I. KENDALC'H KELTIEK.

Dalc'het eo bet ar c'hendalc'h keltiek en INBHIR-NIS (Inverness) en hanternoz Bro-Skos eus al lun 26 a viz Gouhere d'ar sadorn 3. Deuet e oa un tregont a Vretoned, gant an daouzek a re yaouank a oa ganimp. Siwazh ne oa ket kalz a dud yaouank eus ar broioù keltiek all, daoust d'an danvez bezañ bet : "Perzh ar re yaouank er broioù keltiek" ("Celtic youth participation").

Prezegennoù a zo bet diouzh ar beure. Evit Breizh e komzas, e saozneg evel just, David Ar Gall, ur studier anezhañ, 21 bloaz, gwenedour. Bep mintin kent ar prezegennoù e veze graet ur gentelig evit deskiñ un tamm gouezeleg. Pezh a blijas kalz d'an darn-vuiañ eus ar berzhidi.

Evel just ez eus bet baleadegoù ivez en tro-war-droioù, ur servij relijiel ekumenek en unan eus ilizoù "Church of Scotland" eus Inbhir-Nis (un tregont bennak a ilizoù disheñvel a zo er gêr-se, war a hañval, evit tregont mil a dud... !!), abadennoù sonerezh ha koroll bep noz, ur veilhadez etrezomp d'ar meurzh ha d'ar merc'her e skol Dalneigh ma veze kaset al labour war-raok, hag abadennoù digor d'ar yaou (e Dingwall) ha d'ar gwener en Eden Court theatre en Inverness evit klozañ ar c'hendalc'h. Evit Breizh e oa daou soner binkou ha bombard, Ifig Poho ha Mikael Ar Goffig, hag ar re yaouank a ganas ivez diouzh o zu, un tamm kan-ha-diskan e Dingwall, ha kenoù a boz gant Brendan Ar C'horr hag Ivona Konan d'ar gwener.

Degemeret e oamp bet e derou ar c'hendalc'h gant renerien ar "Highland regional Council" a ra war-dro an diorreadur armerzhel ha sevenadurel en uheldirioù.

Burev Skourr Breizh en e bezh en deus kemeret perzh er c'hendalc'h : Riwanon Kervella, renerez, Loik Chapel, sekretour, ha Yann Talbot, teñzor. Per Manac'h a oa deuet ivez gant e verc'h, ha komz a reas en anv an UFCE, a zikenn ar broioù bihan en Europa.

E-pad ar vodadeg beur, d'ar Gwener beure, ez eus bet kemmet ar burev etrevroadel. Leiz Gwilhamot echu gantañ e dri bloavezh evel kadoriad etrevroadel en deus lezet e blas gant un dileuriad eus Enez Vanav, Brian Stowell, a zo karget eus politikerezh ar manaveg en enezenn. An teñzor, ur skosat, a zo bet lakaet ar c'hembread en e lec'h ; hag an iskadoriad, goude m'ilez ar manavañ Jack Irving, a zo bremañ ur c'herneveurad. Breizh ha Bro-Skos n'o deus mui dileuriad ebet eta er burev etrevroadel.

Skourr Kerne-veur en deus hor pedet d'ar c'hendalc'h 94 a vo dalc'het e Falmouth, Kernow, eus al lun 4 a viz Ebrel (Lun Fask) d'ar sadorn 9. Ne glot ket gant hor vakañsoù skol. An dud o deus c'hoant da vont a c'hello goulenñ titouroù digant Loik Chapel, 5 rue Berlioz, 29 600 Plourin-Montroulez.

Danvez ar c'hendalc'h 94 e Kerne-veur a vo : "Ar broioù keltiek hag ar wareg atlantel" ; un danvez armerzhel ha kevredigezhel eta. Talvoudus n'eus forzh penaos.

Div izet ez eus bet a-hend-all gant ar c'hendalc'h pouezañ war perzh ar re yaouank evit ma vo roet lañs nevez d'an ensavadur etrekeltiek-se. Met labour a vo da gas ar mennad da benn, rak eus broioù 'zo ne vez gwelet den yaouank ebet o tont, Kembre ha Iwerzhon dreist-holl.

Menegomp e vo dalc'het ar c'hendalc'h e Breizh e 1995, e kêr An Oriant, ar sizhun diwezhañ eus miz Gouhere, dres a-raok ar Festival.

Bennozhpoue da V/Murdo MacLeod, sekretour Skourr Bro-Skos evit bezañ aozet gant e strollad ur seurt kendalc'h, ken reizh ha ken frouezhus, gant tust da 200 a dud ennañ.

II. BEAJ AR RE YAOUANK DA VRO-SKOS.

D'ar merc'her 21 a viz Gouhere, tro 22 eur 30, en em gave an 12 a dud yaouank, gant darn eus o zud, war borzh ferry Roskov, ambrouget ganin, Yann Erwan Haspot, skolaer Diwan e Sant Nazer, ha Deneza Mager, skolaerez Diwan e Karaez. Hag en holl er bus bihan bleniet gant Jean-Yves. D'idrabas-kaer an dreuzadenn noz betek Plymouth. An deiz war-lerc'h, tizh war ar gourhent M5-M6 betek Annan (war harzoù Bro-Skos), hag an deiz war-lerc'h eus Annan da Inbhir-Nis (Inverness). Lojet e oamp en

herberc'hdi yaouankiz Inverness, darempredet gant tud a bep seurt bro, a bep seurt yezh, a bep seurt emd. Anaoudegezh hon eus graet gant ar c'horn-se ken kaer eus ar Highlands, gweladennet al Loc'h Ness (n'hon eus ket gallet luc'hskeudennif Nessie...), Kastell Urquart, kastell Cawdor, ul labouradeg whisky (Tamdhu), daou di-feurm gant a bep seurt loened eus ar vro pe eus a bell, al labouradeg " gwin" e Moniak (gwin diwar frouezh a bep seurt), tachenn emgann Culloden ma voe faezhet Bonnie Prince Charlie hag e armead skosat gant ar saozon e 1746, priodi kozh Beaully hag all. Kemeret hon eus perzh er c'hendalc'h e-pad ar sizhunvezh, er c'henteliou gouezeleg hag en abadennoù noz. Brendan A* C'horr hag Ivona Konan o deus kanet zoken er sonadeg veur d'ar gwezer en Eden Court theatre e kreiz kêr.

Frouezhus ha plijus, a gredan, eo bet ar veaj evit ar re yaouank, met siwazh n'o deus ket gallet kejañ gant kalz a gelted yaouank all. Ne oa deuet hini ebet eus Kembre nag eus Iwerzhon. Ar re all a oa pe re vihan pe re vras evit hor re-ni.

A-hend-all e verzan ivez ez eo diaes lakaat ar re yaouank da vrezhonegañ a-gevret. Unan eus ar merc'hed ne ouie ket mañ ar yezh, ne strive ket evit komz, ha kakaat a rae an holl da c'hallegañ ganti, pezh a oa displijus a-walc'h; ouzhpenn ar blenier hag a rae alies gant ar galleg ivez daoust dezhañ bout brezoneger a-walc'h a-vihanik. Ret eo lavarout ivez e vank kalz a c'heriou brezhonek da lod eus ar re yaouank, ha techet int neuze da vont war ar galleg, pe da implijout gerioù ha troioù-lavar gallek e lec'h ar re vrezhonek; gwashoc'h 'zo, gant darn ez eus un doare-komz fallik, un ereadurezh eus ar gwashañ, frazennoù goveliet a-dreuz, evel ma soñjfont e galleg ar pezh a zistagont e brezhoneg. Zoken ar re a zo brezhonegerien a-vihanik: ar galleg a zo trec'h warno pa c'hoariont pe pa lavaront gerioù gros. Se a ziskouez eo donoc'h enno al levezon hag an anaoudegezh eus ar galleg eget eus ar brezhoneg. Ar galleg a zeu muic'h naturel hag ar mediaoù a lennomp pe a selaouomp. Neuze komz brezhoneg ne c'hell mui bezañ nemet un afer a youl, un emzalc'h emsavel, politikel evit gwir. Met daoust hag-eñ e c'hell ur yezh vev treuzvevañ hepken evel ur yezh emsavel? Ni Brezhoned a zo en ur saviad yezhel hanter hent etre hini Kembre hag hini Kerne-Veur. War be du ez aimp?

Notit evelato: ar re yaouank o deus roet mennozhioù dija evit ur veaj all da vloaz: Iwerzhon, Kerne-Veur, Katalonia, Kembre pe Euskadi? Gwelet e vo.

III. KAMP KATEKIZ. Dalc'het e vo e Rostren, Skol an Itron Varia, straed Metz, eus ar Sul 22 a viz Eost, betek ar sadorn 29, evit ar vugale etre 7 vloaz ha 13.

Engav a roan d'ar gerent ha d'o bugale, er skol, d'ar sul 22 a-benn kreisteiz; pep tiegezh a gaso e voued gantañ. Goude ar valeadenn e vo lidet an oferenn e chapel skolaj K ampostal da 5 eur. Goude-se ar vugale a chomo ganimp. D'ar sadorn 28 e vo lidet an oferenn dibenn kamp e Kampostal adarre, da 5 eur, ha darn eus ar bugale a gomunio evit ar wezh kentañ pe a raio o diskleriadur a Feiz? Lidet e vo ivez eured Yann Erwan gant Geneviève. Ar priedoù nevez a bedo ac'hanomp da chom evit ar "gwin a enor gant toastoù" e porzh ar skolaj.

Priz ar c'hamp: 400 lur evit unan, 700 evit daou, 900 evit tri bugel. Petra kas ganeoc'h? ur sac'h-kousket, dilhad evit ur sizhunvezh, peadra da skrivañ, da droc'hañ, da livañ, ur c'haier, ur vantell c'hlav, daou re votoù, traoù da lenn, c'hoarielloù bihan m'hoc'h eus c'hoant, ul lampig godell, Arabat disofjal peadra d'en em walc'hif, ar bragoù da gourc'hañ ha serviedennoù.

Notit mat: d'ar merc'her 25 a viz Eost, e vo pedet da greisteiz al laiked hag ar veleien evit kejañ gant ar vugale ha debrif a-gevret. Pellgomzit din er presbital pe er skol (96 29 01 54) ma vennit kemer perzh er pred.

Ar vugale a gaso war-raok ur veilhadek kan ha pedenn e chapelig Lokmaria d'ar Yaou 26, da 20 eur 30. An holl dud tro-dro da Rostren a zo pedet da zont.

IV. Embannadurioù:

" Précis d'Histoire de Bretagne" (Istor Breizh berr-ha-berr) gant Erwan Ar Menga, 32 pajennad, 15 lur ar skouerenn, 10 lur dre zek. Goulennit diganin. Mizoù kas ouzhpenn.

A greiz kalon evit Feiz ha Breizh.

Yann Talbot.

BREURIEZH. SANT ERWAN.
EMGLEV AN TIEGEZHIOU.
Yann Talbot.
Presbital Rostren. 22 110.
96 29 01 55.

Rostren. 17 6 94.

H E N T O U Niverenn 18.
M O U E Z H S A N T E R W A N .
niverenn 65.

Mignoned vat,

Er bloaz-mañ em eus dale evit pep tra. Dleet e oa din kas keleier ha paperennoù d'ar gerent kalz abretoc'h evit ar c'hamp katekiz.

Met sammet on bet hevlene gant labourioù a bep seurt, studioù er skol-veur, ha dreist-holl em eus ma dilojadeg da brientif rak anvet on bet da berson e Plounevez-Kintin.

N'on ket bet evit aozafi bodadegoù kennebeut er bloaz-mañ, nag evit kas ingal an daou gannadig "Mouezh Sant Erwan" ha "Hentoù". Sac'het eo bet eta hon oberennoù.

Kerent 'zo o deus goulennet diganin endeo penaos e tremeno an traoù evit ar c'hamp katekiz er bloaz-mañ.

Setu amañ ar poentoù brasañ. A-benn pemzektez e kasin d'ar gerent ul lizher all gant muioc'h a resisadurioù.

KAMP KATEKIZ :

Deiziad : eus ar Sul 10 a viz Gouhere d'ar Sadorn 16.

Lec'h : Skol Itron Varia e Rostren. (rue de Metz).

Evit piv ? : bugale brezhonegerien eus 7 da 13 vloaz.

Priz : 420 lur evit ur bugel. 740 evit daou ; ha 960 lur evit tri.

Bugale 'zo a raio o diskleriadur a Feiz (Pask kentaf gwechall), pe a gomunfo evit ar wezh kentaf d'an oferenn a vo lidet ar Sadorn 16 da 16 30 e chapel Kampostal. Henn skrivit war ar follenn enskrivañ mar plij.

D'ar Sul 10/7 : Emgav da 12 eur evit ar gerent, ar vugale, hag ar vignoned (laiked, beleien) o deus c'hoant da gejañ ganimp.

- 12 : emgav e porzh ar skol.

12 30 : pred a-gevret.

14 30 : baleadenn.

17 30 : oferenn e chapel Kampostal. Goude-se e chomo ar vugale ganimp.

Pred kreisteiz a gousto 30 lur evit an dud vras, 15 lur evit ar vugale. Skrivit eta war ar follenn enskrivañ pet den a vo ouzh taol da greisteiz, pe bellgomzit din a-raok an 8/7.

War ar follenn da zont e tisplegin petra a vo da gas evit ar c'hamp.

A greiz kalon. Yann Talbot.

DIDROC'HIT AMAN..... DIDROC'HIT AMAN.....

KAMP KATEKIZ. GOUHÈRE . 94.

ANV AN TIEGEZH : Anv bihan ar bugel :

Ganet d'an Paotr. Plac'h.

Choklec'h resis ar gerent : Pellgomz :

E peseurt klas e 93_94 : peseurt skol :

Brezhoneger(ez) : mat - mat a-walc'h.

Gouzout a ra lenn ha skrivañ brezhoneg : Mat-tre. Mat. Madig. Un tamm?

Badezet : Ya. Nann. A gomunfo evit ar wech kentaf : Ya. Nann.

A raio e ziskleriadur a Feiz : Ya. Nann.

Kampoù katekiz graet dija :

Niver a dud a vo e pred kreisteiz d'ar Sul 10/7 :

Sinadur ar gerent :

Ar Follenn-enskrivañ zo da vezafi kaset din en-dro a-raok fin miz Mezheven.